



Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour

Ʒil danevell hollek
war stad ar brezhoneg

Arsellva ar brezhoneg

2 0 0 2 - 2 0 0 7

Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour

Ëil danevell hollek
war stad ar brezhoneg

Arsellva ar brezhoneg

2 0 0 2 - 2 0 0 7



Oberourien ha trugarekadennoù

Bodad skridaozañ an danevell

Catherine Bouroulleg - Meriadeg Vallerie

Elen Rubin - Luc Toutous

Bodad adlenn diabarzh war an danvez

Fulup Jakez - Olier ar Mogn - Visant Roue

(hag implijidi all eus Ofis ar Brezhoneg diouzh o zachenn labour)

Bodad adlenn war ar yezh

Iwan Kadored (brezhoneg) - Marie Mahieu (galleg)

Trugarekaat a-greiz kalon a ra ar skridaozerien an dud dave o deus degaset o sell arbennik d'al lodennoù roet da adlenn dezho

Herve ar Bihan (Deskadurezh uhel)

Alan ar Gal (Bed an armerzh)

Morwena Audic (C'hoariva)

Philippe Basciano-Le Gall (Teknologiezhoù nevez)

Katell Chantreau (Buhez sokial ha prevez)

Gwendal Denez (Deskadurezh uhel)

Hubert Donval (Skingomz)

Jañ-Mai Drapier (Teknologiezhoù nevez)

Francis Favereau (Deskadurezh uhel)

Herri Gourmelen (Skingomz)

Samuel Julien (Kleweled, Mediaoù)

Annaig Kervella (Skinwel)

Riwanon Kervella (Embann)

Ronan L'Hourre (Kelenn divyezhek, Kelenn brezhoneg er skol)

Yannig Menguy (Galloudoù foran lec'hel)

Michel Nicolas (Ar vrezhonegerien, Galloudoù foran broadel hag etrebroadel)

Frederig Ollivier (Kelenn d'an oadourien)

Olier Riaudel (Buhez speredel)

Diviz Ofis ar Brezhoneg a ya d'ober danvez an danevell-mañ atav.

ISBN : 978-2-914841-18-4

© Ofis ar Brezhoneg, 2007

Digoradur

E miz Here 2002 e oa deuet er-maez an danevell hollek kentañ war stad ar brezhoneg. Buan ec'h emdro an traoù avat ha talvoudus eo kaout ingal ur studiadenn dave nevesaet da c'houzout ervat petra eo stad wirion ar yezh war an dachenn.

Laouen on eta o kinnig an eil danevell, savet en div yezh an taol-mañ. E-pad tost tri bloaz eo bet Arsella ar brezhoneg o labourat da sevel an danevell hollek-mañ. D'en ober, sokioyezhoniourien an Ofis o deus tennet ar brasañ splot eus ar skiant bet prenet ganto abaoe an danevell gentañ. Klোকoc'h, donoc'h ha pishoc'h eo ar stumm nevesaet-mañ a-benn bezañ ur benveg efedusoc'h evit kas ar yezh war-raok.

An enklaskoù sokioyezhoniel eo alc'hwez kement politikerezh yezh zo. Siwazh, e Frañs (en enep da vroioù all Europa), ne bled ket an niveradeg gant ar yezhoù komzet gant ar geodedourien. Ar roadennoù klokañ a gaver evit Breizh eo re an enklask "Étude de l'histoire familiale" kaset da benn gant an EBSSA* e 1999 (dielfennet pizh eo ar sifroù-se en danevell-mañ). Kerse eo n'eo ket bet adkaset an enklask-se ha ne vez savet goulenn ebet war ar yezhoù en niveradeg nevez c'hoazh. Ur skoilh bras-tre eo hag a vir ouzhimp a anavezout pizh a-walc'h stad ar yezh. A bouez-kenañ eo dont a-benn war an dachenn-se hep gortoz.

Unan eus an araokadennoù kalonekausañ zo bet er bloavezhioù diwezhañ eo ar steuñv Politikerezh yezh degemeret a-unvouezh gant Bodadenn rannvroel Breizh e dibenn 2004. Ha da-heul ar Rannvro eo ar c'humunioù en em ouestl d'o zro dre ar c'houlzad Ya d'ar brezhoneg kaset war-raok gant an Ofis. E-pad re bell n'eus bet nemet ar bed kevredigezhel o reiñ fed d'ar brezhoneg ; gwelet ar galloud politikel o sammañ tonkad ar yezh zo un emdroadur eus ar re bouezusañ evit he dazont.

Met petra eo ur politikerezh yezh e gwirionez ? Pe e vefe disklêriet pe ne vefe ket ez eus dre ret gant n'eus forzh peseurt galloud foran ur politikerezh a denn d'an ober gant ar yezh pe ar yezhoù. Politikerezhioù yezh nann-disklêriet a dalvez dre ziouer da greñvaat ar yezh(où) ofisiel diwar-goust ar yezhoù bihanniver. Gallet a reer komz ivez eus politikerezhioù diskar pe eus politikerezhioù difenn pa stourmer evit ur yezh a-enep da yezhoù all. Gouzañv a ra c'hoazh ar brezhoneg diwar an doareoù politikerezhioù-se.

An doare politikerezh a venn gwellaat stad ar yezh vinorelaet hag an elfennoù a c'hoari warni eo a ranker kas war-raok bremañ. E-se, estreget arc'hantaouiñ oberoù ar bed kevredigezhel (un dra ret hag a vez graet abaoe dekvedoù), emañ d'ar galloudoù foran embann palioù uhelek da suraat dazont ar yezh. Aze emañ an nevezenti e Breizh moarvat. A-benn tizhout ar palioù-se e rank ar galloudoù foran lakaat o holl varregezhioù da c'hoari (e-ser implijout ar yezh o-unan) ha skoulmañ kenemglevioù fetis gant an ensavadurioù all pa vez re strizh o barregezhioù war dachenn pe dachenn.

Lena Louarn,
Prezidantez Ofis ar Brezhoneg

Notenn ginnig an danevell

Kavet e vo en danevell-mañ danvez da anavezout ar pezh a vez graet war bep tachenn evit ar brezhoneg. Lakaet e vo war wel an oberoù mat ha dielfennet ar mankoù evit pouezañ war ar pezh a c'hellfe bezañ graet. Taolet hon eus ar brasañ evezh ouzh an emdroadurioù diwezhañ a-benn reiñ ur soñj fetis eus an tuadurioù a vremañ ha displegañ evel-se war peseurt tu e c'hellfe treiñ ar yezh en dazont tost, diouzh petra e ranker diwall ha war petra e c'heller c'hoari.

Evit ma vefe aes da lenn eo harpet ar skrid gant skeudennoù (kartennoù ha grafikoù) kement ha ma'z eus tu. A-hend-all, abeg bezañ un danevell a seurt-se eo plediñ gant pep tachenn ; c'hoarvezet ez eus bet deomp neuze ober gant gerioù arbennik nebeut anavezet a-wechoù. Talvoudus hon eus kavet termenañ ar gerioù-se (merket er skrid gant un steredennig) er c'heriaoueg a gaver pajenn 10¹. Ur steredennig zo bet lakaet ivez d'an teskanvioù a zo displeget en ur roll pajenn 8. Evel m'eo dleet e vo kavet ul levr lennadur e fin an danevell-mañ koulz hag ar mammennoù liesseurt hon eus darempredet d'he sevel.

¹ Ma c'hoarvezfe d'al lenner chom boud war ur ger bennak e c'hello atav gwelet ha n'emañ ket e diaz TermOfis war lec'hienn an Ofis: www.ofis-bzh.org/bzh/ressources_linguistiques/index.php.

Tonket eo an danevell-mañ da vezañ diamzeret buan dre ma pled gant un dodenn a emdro dizehan. Mat eo gouzout neuze e vez savet ingal gant an Arsellva studiadennoù tematek a c'heller pellgargañ war: www.ofis-bzh.org/bzh/services/observatoire/index.php.

Taolenn

| | |
|---|------------|
| Digoradur | 5 |
| Notenn ginnig an danevell | 6 |
| Roll an teskanvioù implijet er skrid | 8 |
| Geriaoueg | 10 |
| Ar vrezhonegerien | 12 |
| Implij ar yezh : ar brezhoneg, an eil yezh komzet ar muiañ e Breizh | 12 |
| Splann eo ez a an treuzkas er familhoù war-gil | 17 |
| Ar galloudoù foran | 20 |
| UNESCO* : un aozadur etrebroadel a zifenn al liesseurted yezhel | 21 |
| Europa : ur framm evit gwareziñ ha brudañ ar yezhoù bihanniver | 22 |
| Yezhoù Frañs war-lerc'h ar galleg | 24 |
| Politikerezh yezh ar rannvroioù | 26 |
| Politikerezh yezh en departamantoù : diforc'hioù bras zo hervez ar C'huzulioù-departamant | 33 |
| C'hoantoù ar broioù hag ar c'humuniezhoù kumunioù | 38 |
| Ar brezhoneg er vuhez pemdez a-drugarez d'ar c'humunioù | 40 |
| Kelenn | 49 |
| N'eo ket rannet ingal kresk ar c'helenn diyezhek | 50 |
| Ar c'helenn brezhoneg er skol : un tañva d'ar brezhoneg | 67 |
| Deskadurezh uhel : studioù war ar brezhoneg | 75 |
| Ar c'helenn d'an oadourien : penn kentañ ul lañs nevez ? | 79 |
| Buhez sokial ha prevez | 87 |
| Servijoù d'an dud : dister eo plas ar yezh c'hoazh | 87 |
| Ur vuhez sevenadurel vreizhek liammet strizh gant ar brezhoneg | 89 |
| Ur yezh da gaout dudi | 94 |
| Bed ar Sport | 97 |
| Buhez speredel | 98 |
| Embann | 100 |
| Al levrioù | 100 |
| Ar c'hazetennoù | 103 |
| Piv a embann e brezhoneg ? | 104 |
| Politikerezh skoazell ar strollegezhioù foran | 104 |
| Mediaoù | 106 |
| Produiñ kleweled e brezhoneg | 106 |
| Ar skinwel e brezhoneg | 109 |
| Ar skingomz e brezhoneg : araokadennoù ha diaesterioù | 112 |
| Teknologiezhioù nevez | 117 |
| Meziantoù e brezhoneg evit un endro diouzh ezhommoù ar vrezhonegerien | 117 |
| Ar genrouedad, ur benveg evit diorren plas ar brezhoneg er gevredigezh | 118 |
| CDROM*où, DVD*où kinniget e brezhoneg | 120 |
| Bed an armerzh | 122 |
| Ar brezhoneg e marc'had al labour | 122 |
| Ar brezhoneg er staloù hag en embregerezhioù | 124 |
| Bilañs hollek | 128 |
| Imbourc'herezh | 129 |
| Klozadur hollek | 131 |
| Levrlennadur | 133 |
| Mammennoù liesseurt | 135 |

Roll an teskanvioù implijet er skrid

- ABU : Aozadur ar Broadoù Unanet
- ADMR : Aide à Domicile en Milieu Rural
- ADSL : Asymmetric Digital Subscriber Line
- AEK : Alfabetatze Euskalduntze Koordinakundea
- AFOBAT : Association pour la Formation Professionnelle dans le Bâtiment et les Travaux Publics
- AMF : Association des Maires de France
- ARH : Agence Régionale de l'Hospitalisation
- ATOS : Agents Techniques et Ouvriers Spécialisés
- ATSEM : Agents Territoriaux Spécialisés des Écoles Maternelles
- AVAL : Ajañs Vroadel evit Al Labour (ANPE e galleg)
- CAEC : Comité Académique de l'Enseignement Catholique
- CAER : Concours d'Accès à l'Echelle de Rémunération de professeur des établissements d'enseignement privé du second degré sous contrat
- CAPES : Certificat d'Aptitude au Professorat de l'Enseignement Secondaire public
- CAF : Caisse d'Allocations Familiales
- CAFEP : Certificat d'Aptitude aux Fonctions d'Enseignement dans les Établissements Privés du second degré sous contrat
- CCI : Chambre de Commerce et d'Industrie
- CDROM : Compact Disc Read Only Memory
- CE : Cours Élémentaire
- CFDT : Confédération Française Démocratique du Travail
- CFP : Centre de Formation Pédagogique
- CFTC : Confédération Française des Travailleurs Chrétiens
- CIAS : Centre Intercommunal d'Action Sociale
- CIEMEN : Centre Internacional Escarré per a les Minorities Ètniques i les Nacions
- CM : Cours Moyen
- CMB : Crédit Mutuel de Bretagne
- CNC : Centre National de la Cinématographie
- CNL : Centre National du Livre
- CNFPT : Centre National de la Fonction Publique Territoriale
- CNGA : Conseil National des Groupes Académiques de l'Enseignement Public
- CNRS : Centre National de la Recherche Scientifique
- COCOPAQ : Communauté de Communes du Pays de Quimperlé
- COSIP : Compte de Soutien à l'Industrie des Programmes audiovisuels
- CP : Cours Préparatoire
- CPGE : Classes Préparatoires aux Grandes Écoles
- CSA : Conseil Supérieur de l'Audiovisuel
- DABU : Diplom Aotren war ar Buheziñ (BAFA e galleg)
- DAO : Deskiñ d'an Oadourien
- DARE : Diplom Aotren war ar Renerezh (BAFD e galleg)
- DDEC : Direction Diocésaine de l'Enseignement Catholique
- DDEN : Fédération des Délégués Départementaux de l'Education Nationale
- DEA : Diplôme d'Etudes Approfondies
- DEUG : Diplôme d'Etudes Universitaires Générales
- DFKS : Diazadur Foran a Genlabour Sevenadurel (EPCC e galleg)
- DGLFLF : Délégation Générale à la Langue Française et aux Langues de France
- DRAC : Direction Régionale des Affaires Culturelles
- DVD : Digital Video Disc
- EBSSA : Ensavadur Broadel ar Stadegoù hag ar Studioù Armerzhel (INSEE e galleg)
- ESSM : Ensavadur Skol-veur ar Stummañ Mistri (IUFM e galleg)
- FACCA : Fonds d'Aide à la Création Cinématographique et Audiovisuelle
- FAIL : Fédération des Amis de l'Instruction Laïque
- FALB : Fonds d'Aide à l'expression Audiovisuelle en Langue Bretonne
- FALSAB : Fédération des Amis des Luttet et Sports Athlétiques Bretons
- FCPE : Fédération des Conseils des Parents d'Elèves
- FDSEA : Fédération Départementale des Syndicats d'Exploitants Agricoles
- FEA : Formation Education Animation
- FM : Frequency Modulation
- FSER : Fonds de Soutien à l'Expression Radiophonique
- GRETA : Groupe d'Établissements pour la Formation Continue
- IFREMER : Institut Français de Recherche pour l'Exploitation de la Mer
- IGN : Institut Géographique National

- INA : Institut National de l'Audiovisuel
- IUT : Institut Universitaire de Technologie
- KEAV : Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion
- KEBK : Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek (CRBC e galleg)
- KILA : Kevatal da Implijoù Leunamzer (ETP e galleg)
- KIMINEK : Kevredigezh evit an Implij en Industriezh hag er c'henwerzh (ASSEDIC e galleg)
- KLT : Kernev Leon Treger
- KRLB : Kreizenn-rannvro al Levrioù e Breizh
- KSDS : Kreizenn Stummañ an Danvez Skolaerien
- LEADER+ : Liaisons Entre les Actions de Développement de l'Économie Rurale
- PASER : Projet d'Action Stratégique de l'Etat en Région
- PC : Parti Communiste
- PE1 : Professorat des Ecoles 1ère année
- PE2 : Professorat des Ecoles 2ème année
- PLC1 : Professorat des Lycées et des Collèges 1ère année
- PLC2 : Professorat des Lycées et des Collèges 2ème année
- PS : Parti Socialiste
- RCF : Radios Chrésiennes Francophones
- S4C : Sianel Pedwar Cymru (Channel Four Wales e saozneg)
- SMS : Skiantoù Mezegel ha Sokial
- SNCF : Société Nationale des Chemins de Fer
- SND : Skinwel Niverel Douarel (TNT e galleg)
- SNETAP : Syndicat National de l'Enseignement Technique Agricole Public
- SSD : Servij Stummadur Dibaouez (SFC e galleg)
- STS : Sections de Techniciens Supérieurs
- TDF : TéléDiffusion de France
- TER : Train Express Régional
- TES : Ti-Embann ar Skolioù brezhonek
- UBAPAR : Union Bretonne pour l'Animation des Pays Ruraux
- UDARPA : Union Départementale des Associations de Retraités et Personnes Agées
- UDB : Unvaniezh Demokratel Breizh
- UGB : Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg
- UMP : Union pour un Mouvement Populaire
- UNESCO : United Nations Educational, Scientific and Cultural Organization
- UNSA : Union Nationale des Syndicats Autonomes
- VHS : Video Home System

Geriaoueg

- Aotreegad : Den zo aotreet da gemer perzh e kenstrivadegoù ar c'hevreadoù sport.
- Avedur foran : Framm pe diazezadur ret d'ar vuhez sokial ha sevenadurel.
- Bedelaat : Dont da vezañ bedel, en em ledañ er bed-holl.
- Bevliesseurted : Liesseurted ar spesadoù (loened, plant, mikrobevedegoù).
- Brezhoneger (pe yezher) oberiant : Den gouest da zerc'hel ur gaozeadenn e brezhoneg.
- Brudfollenn : Kemennadenn vrudañ embannet war ur follenn-nij.
- Devarnadurezh : Hollad ar reolennoù gwir a zeu eus divizoù al lezioù-barn.
- Diferad : Diviz kemeret gant ur veli velestradurel (ministr, prefed, maer,...) evit embann ha seveniñ al lezennoù.
- Doaretaer : Den enfredet gant ur gazetenn pe un ajañs-kelaouiñ evit kas keloù eus ul lec'h resis.
- Emeller diavaez : (amañ) Kelenner eus an diavaez a zeu er skol da ginnig un tañva d'ar brezhoneg.
- Erbed a-ratozh : (amañ) Erbed a lakaer da dalvezout evit divizout e peseurt degouezh e c'heller tremen hebiou ur reolenn.
- Etrefas : (amañ) Hollad an elfennoù a weler war skramm un urzhiataer hag a ro an tu d'an implijer d'ober gantañ.
- Etreoberiat : A denn d'ur mekanik pe d'ur meziant a c'hell an implijer lakaat kemm war e red.
- Ezoteregezh : Kelennadurezh war ar pezh a zo diaes da gompren pe kevrinus, ar pezh ez eus ur ster kuzh dezhañ.
- Filmoù bevaat : Doare filmoù a vez sevenet en ur luc'hskeudenniñ skeudenn ha skeudenn tresadennoù pe margodennoù a-benn krouiñ touell ar fiñval; ober a reer muioc'h-mui gant skeudennoù niverel.
- Fun : (dre astenn-ster) Rouedad skignañ chadennoù skinwel dre hanterouriezh ur fun (er c'hêrioù bras pe tro-dro ar c'hêrioù-se peurliesañ).
- Gennad kentañ : Hollad an obererezhioù a denn da c'hounit danvezioù naturel.
- Gladroll : Marilh foran a veneg lec'hiadur, gorread, hag anv ar perc'hennadurioù douar war diriad ur gumun.
- Gousezadelezh : Pennaenn a vevenn galloudoù Kumuniezh Europa tremenet da eil renk e-keñver re ar Stadoù ezel hag ar Rannvroioù.
- Gwelgelenn : Kentelioù roet dre hanterouriezh rouedad ar pellgehentiñ.
- Gwiader : (amañ) Den a ya war ar gwiad, ar Genrouedad.
- Haikou : Barzhoniezh klasel Japan seitek silabenn dezhi rannet e teir gwerzenn (5, 7, 5).
- Kod keodedel : Lezenn hollek a vod an erbedoù diazez da verañ ar vuhez sokial.
- Koulzad kabaliñ : Maread ma klask ar bolitikerien mouezhioù da vezañ dilennet.
- Lezskol : E-maez ar skol.
- Liesklinikenn : Savadur-ospital a vod meur a servij arbennikaet da brederiañ kleñvedoù liesseurt.
- Loarell : (dre astenn-ster) Doare skignañ chadennoù skinwel dre hanterouriezh un ardivink bannet en egor.
- Maltuzat : A ra gant ur politikerezh strishaat a-youl, en deus un emzalc'h strishaat (levezonet gant kelennadurezh Malthus).
- Mentel naturel : An diforc'h etre an niver a c'hanedigezhioù hag an niver a varvioù marilhet e-kerzh ur mare.
- Mentel enbroañ-divroañ : An diforc'h etre an niver a dud deuet da anezhañ en takad hag an niver a dud o deus kuitaet anezhañ en ur ober ur bloavezh.
- Merdeer : (amañ) Meziant a ro an tu da vont eus un eil lec'hienn Genrouedad d'eben.
- Normalaat : (amañ) Lakaat ur yezh vihanniver da vezañ implijet en un doare reizh.
- Ordinal an oferenn : Hollad ar pedennoù a gaver heñvel o zestenn en oferennoù a-hed ar bloavezh.
- Penngefridiour : Den e karg eus ur gefridi resis.
- Pennospital : Reiñ servijoù diagnostik ha prederioù mezegel hollek pe arbennikaet eo kefridioù ar pennospitalioù. Kement-se a reont pe war dachenn yec'hed ar c'horf pe war dachenn yec'hed ar spered.
- Podskignañ : Doare skignañ abadennoù klewelet (abadennoù skingomz ha/pe abadennoù skinwel) d'ar re goumanantet (evit netra a-wechoù) dre jubenn ar Genrouedad.
- Posteler : Programm evit degemer ha kas posteloù, da lavaret eo kemennadennoù elektronek.
- Pourvezadenn : Sammad arc'hant roet d'ur servij pe d'ur savadur foran.
- Programm politikel : Testenn a vez skignet gant ar c'hostezennoù da vare an dilennadegoù da embann peseurt politikerezh emaint e soñj kas da benn.

- Purlec'h : Hollad ar savadurioù hag an doareoù ret da buraat dour lous an tiez hag an embregerezhioù ha da zistrujañ ar fank dilaviñ.
- Reolad : {amañ} Hollad ar reolennoù a ziazez an ober dereat gant ur yezh.
- Skridtreterezh : Meziant evit sevel, reizhañ hag embann skridoù.
- Steuñv kas-da-benn : Steuñv a bouez war an termenoù da zoujañ.
- Sturabadenn : Rakskouerenn un abadenn skinwel.
- Sturiad : Kemenn, linenn stur roet gant ur pennadurezh.
- Sturfilm : Rakskouerenn un heuliad filmoù skinwel.
- Troskol : A zeu da glokaat ar c'helenn-skol.

A r v r e z h o n e g e r i e n

Piv a gomz brezhoneg hiziv an deiz ?

Pelec'h, pegoulz ha gant piv e vez komzet brezhoneg ?

Implij ar yezh : ar brezhoneg, an eil yezh komzet ar muiañ e Breizh

An enklask “Étude de l’histoire familiale”

Dont a ra ar roadennoù yezhel zo kinniget amañ da-heul eus an enklask “Étude de l’histoire familiale” kaset da benn gant an EBSSA* e-kerzh niveradeg 1999. Kenlabouret en doa Ofis ar Brezhoneg gant EBSSA* Breizh a-benn dielfennañ an disc’hoù eus an enklask-se a denn d’ar brezhoneg. Evit ar wezh kentañ e oa bet kaset da benn un enklask war an implij eus ar yezhoù ha war an treuzkas anezho gant ur standilhon ken ledan e Frañs a-bezh. Un dreiststandilhon a oa bet roet da dachennoù douaroniel zo a-benn studiañ ar yezhoù rannvroel. E Breizh e oa bet implijet an dreiststandilhonse e tri departamant (Aodoù-an-Arvor, Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan). Roadennoù yezhel zo bet dastumet en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel ivez, hogen gant ur standilhon bihanoc’h.

Ezhomm groñs zo atav koulskoude da gaout roadennoù kalz resisoc’h dre vro, dre gumuniezh kumunioù ha dre gumun zoken¹. Enklask 1999 a ro an niver a vrezhonegrien dre zepartamant hepken. Ne c’haller ket da skouer lavaret resis pet brezhoneger zo e Naoned, e Roazhon, e Brest pe e Kemper.


¹ Da-geñver an niveradeg aozet e 2004 war tiriad ar gumun en doa ti-kêr Sant-Hern (29) ouzhpennet goulennoù a denne d’an ober gant ar brezhoneg ha da gompren ar yezh. An EBSSA* en doa rediet anezhañ da baouez ganti dre ma ne oa ket bet goulennet e asant en a-raok.

Meur a studiadenn pe a sontadeg a oa bet kaset da benn diwar-benn implij ar brezhoneg e-kerzh ar c’hantved diwezhañ. Diskouez a rae splann an holl studiadennoù-se e oa un digresk en niver a yezherien. An tu gwan gant an enklaskoù-se eo ne oant ket bet savet gant an hevelep pennaennoù, na gant an hevelep doare. Ha ne veze studiet nemet yezherien Breizh-lzel ganto.

Enklask an EBSSA* en deus degaset **roadennoù fizius ha nevez** a dalvez evit **Breizh a-bezh**, war an implij eus ar brezhoneg diouzh al lec’h-anez, diouzh an oad (ar boblañs **en tu-hont da 18 vloaz** zo bet studiet), diouzh ar reizh, ha diouzh ar rumm sokiomicherel.

Implij ar yezhoù e Breizh e 1999 : an niver a yezherien en tu all da 18 vloaz

Ober a reer muioc’h gant ar brezhoneg eget gant ar saozneg e Breizh e-touez ar re a zo en tu all da 18 vloaz : ar brezhoneg eo an eil yezh muiañ komzet e Breizh goude ar galleg.




Ma ouzhpenner poblañs ar skolioù divyezhek hag ar yezherien en tu all da 18 vloaz niveret en enklask an EBSSA* e save an niver a **vrezhonegerien oberiant*** e 1999 da **270 000** well-wazh e Breizh, da lavaret eo e rae 6,7% eus poblañs Breizh gant ar brezhoneg gant o nesañ

(priedoù, kerent, mignoned, kenlabourerien, kenwerzhourien, kelennerien...). Renablet e oa bet **31 000 brezhoneger** gant an EBSSA* er peurrest eus Frañs, e Bro-Bariz peurgetket, ar pezh n'eo ket dister pell a se.

Implij ar yezh zo disheñvel-bras hervez al lec'h-anez, met e Breizh a-bezh e reer ganti


Dregantad ar vrezhonegerien er boblañs en tu all da 18 vloaz e 1999

Penn-ar-Bed eo an departamant ma kaver ar muiañ a vrezhonegerien er boblañs en tu all da 18 vloaz : 20% eus annezidi Penn-ar-Bed a c'hoarvez ganto komz brezhoneg gant tud nes. Ur bihanniver eo ar vrezhonegerien en holl zepartamantoù Breizh avat.



Dasparzh ar vrezhonegerien dre zepartamant e 1999

Un digempouez a zo e dasparzh ar vrezhonegerien : bras eo levezon an istor c'hoazh e-keñver implij ar brezhoneg, met e Breizh a-bezh e kaver tud a ra gantañ.



Notenn :
niver a vrezhonegerien = sifroù enklask an EBSSA (>18 vloaz)
+ poblañs ar skolioù divyezhek (<18 vloaz) e 1999

Penn-ar-Bed, an departamant brezhonekañ


An departamant m'emañ implij ar brezhoneg en e greñvañ eo Penn-ar-Bed. Dek gwezh brasoc'h eo an niver a vrezhonegerien e Penn-ar-Bed eget en Il-ha-Gwilen da skouer. An hanter eus ar vrezhonegerien en tu all da 18 vloaz zo o chom en departamant-mañ. E-touez ar vrezhonegerien zo dindan 18 vloaz e kaver tamm pe damm an hevelep dasparzh : 45,6% eus ar skolidi divyezhek, a c'haller degemer evel brezhonegerien, a oa skoliataet e Penn-ar-Bed e 1999, ar bloavezh ma oa bet kaset an enklask da benn.

Stankoc'h eo an ober gant ar yezh e broioù kornôg Aodoù-an-Arvor

Oc'h anavezout gwirvoud an dachenn hon eus gellet brasjediñ an niver a vrezhonegerien dre vro diwar roadennoù an EBSSA* ha sifroù ar c'helenn divyezhek.

Dasparzh ar vrezhonegerien dre vro e 1999

Evit a sell an implij eus ar brezhoneg ez eo e broioù kornôg Aodoù-an-Arvor e kaver ar sifroù uhelañ : tost un drederen eus poblañs bro Treger ha Goueloù, hini bro Wengamp hag hini bro Kornôg Kreiz-Breizh a zo brezhoneger.



Start eo an traoù el Liger-Atlantel

E-touez an dud en oad gour ez eo izel kenfeur ar vrezhonegerien en Il-ha-Gwilen hag izeloc'h c'hoazh el Liger-Atlantel. Startoc'h eo an traoù en departamant-se abalamour d'an troc'h melestradurel ha ne aesa ket an ober gant ar brezhoneg. Plas ar brezhoneg er gevredigezh zo c'hoazh bihanoc'h eget en departamantoù all : ne vez ket skignet ken abadennoù France 3 Ouest. Ne skign ket France Bleu Loire-Océan, ur skingomz digreizennet foran, abadenn skingomz ebet e brezhoneg abaoe he c'hrouidigezh. N'he deus ket Skol-veur Naoned diorroet studioù war ar brezhoneg morse, a-hend-all, ha lamet he deus ar brezhoneg evel danvez dibab nevez zo, ouzhpenn-se. N'emañ ket ar brezhoneg e skol-veur ebet el Liger-Atlantel ken neuze.


Kenderc'hel a ra Rannvro Broioù-al-Liger gant he folitikerezh da sevel un identelezh vartezeüs, ar pezh a ziaesa buhez ar vrezhonegerien hag a sparl lañs ar yezh. Diaesoc'h eo diorren klasoù ha skolioù divyezhek en departamant-se c'hoazh eget e Breizh velestradurel ma ne vez ket gwall aes dija.

Betek-henn, ne vez ket skoazellet kalz bed ar c'hevredigezhioù yezhel gant strollegezhioù foran al Liger-Atlantel; dale zo en tiriad-se e-skoaz d'ar pezh a c'hoarvez e Breizh velestradurel. Divizet en deus Kuzul-rannvro Breizh lakaat e bolitikerezh yezh e pleustr er pemp departamant avat. Pouezus-kenañ eo a-benn diorren plas ar brezhoneg en departamant-se. Met ret e vo gwelet penaos e teuo an dra-se da wir.

War goshaat ez a ar vrezhonegerien

Dregantad ar vrezhonegerien dre rummad oad en departamantoù e 1999

War zigreskiñ ez a an implij eus ar brezhoneg e-touez ar rummadoù yaouankañ, kilet en deus ar brezhoneg kalz e Penn-ar-Bed hag er Mor-Bihan.



Ar vrezhonegerien zo tud war an oad : tri brezhoneger diwar bevar a oa en tu all da 50 vloaz e 1999 hag unan diwar zaou a oa en tu-hont da 65 bloaz. Nebeutoc'h eget unan diwar zek a oa dindan 30 vloaz. An implij eus ar brezhoneg e-touez ar rummadoù yaouank ganet goude 1980 a zeu da vezañ tamm pe damm ar memes hini e pep lec'h e Breizh : kenfeur ar yezherien oberiant* a dremen dindan bevenn ar 5% en holl zepartamantoù.


Seul bouezusoc'h eo strivoù an dud o deus savet skolioù divyezhek abaoe un tregont vloaz bennak bremañ : gant tremen 11 000 skoliad divyezhek e 2006 emañ krommenn ar vrezhonegerien oc'h adsevel e-touez ar re yaouankañ.

Yezherien yaouank : Aodoù-an-Arvor er penn a-raok

En Aodoù-an-Arvor e kaver an dregantad uhelañ a vrezhonegerien e-touez ar re yaouank (etre 18 ha 30 vloaz) : 7,5%. E Penn-ar-Bed avat e weler un diskar grevus eus an dregantad-se er mare-mañ : 5,9% eus ar rummad 18-30 vloaz hepken a gomz brezhoneg pa sav ar feur-se da 20% e poblañs a-bezh an dud deuet. Er Mor-Bihan e tremener eus 10% a vrezhonegerien er boblañs a-bezh da 2,8% hepken e-touez ar re a zo etre 18 ha 30 vloaz. Diskennet eo bet kalz abretoc'h an implij eus ar yezh en departamant-se eget e Penn-ar-Bed pe en Aodoù-an-Arvor.

Dregantad ar vrezhonegerien er rummad oad etre 18 ha 30 vloaz dre zepartamant e 1999

3,1% eus ar re a zo etre 18 ha 30 vloaz a zo brezhonegerien e Breizh.




An traoù o tont da vezañ unvanoc'h e Breizh a-bezh

Rannadur keñveriet ar vrezhonegerien dre zepartamant e 1999

Kempouesoc'h e teu da vezañ dasparzh ar vrezhonegerien yaouank etre an departamantoù.

An holl vrezhonegerien : 263 251 yezher

| | |
|----------------|-----------------|
| Aodoù-an-Arvor | : 67 101 (25%) |
| Mor-Bihan | : 48 151 (18%) |
| Liger-Atlantel | : 6 870 (3%) |
| Il-ha-Gwilen | : 8 787 (4%) |
| Penn-ar-Bed | : 132 342 (50%) |



Ar vrezhonegerien etre 18 ha 30 vloaz : 20 184 yezher

| | | | |
|----------------|---------------|----------------|---------------|
| Mor-Bihan | : 2 695 (13%) | Aodoù-an-Arvor | : 5 501 (27%) |
| Liger-Atlantel | : 1 683 (9%) | Penn-ar-Bed | : 7 739 (38%) |
| Il-ha-Gwilen | : 2 566 (13%) | | |



E Penn-ar-Bed emañ o chom an hanter eus an holl vrezhonegerien deuet d'o oad, padal n'eus nemet 38% eus an dud yaouank (etre 18 ha 30 vloaz) a zo o chom en departamant-se. En enep, pouez ar vrezhonegerien zo o chom en Il-ha-Gwilen ne ra nemet kreskiñ pa'z eer war-raok gant ar rummadoù yaouank : 3% eus hollad ar vrezhonegerien en tu all da 18 vloaz zo o chom en Il-ha-Gwilen pa'z eo 28% eus ar vrezhonegerien oadet a 18 vloaz e 1999 a oa o chom en Il-ha-Gwilen, hervez an EBSSA*. Merzout a reer aze moarvat nerzh dedennañ

Roazhon evit ar studieren ha pouez ar studieren war ar brezhoneg enskrivet er Skol-veur e Roazhon (Skol-veur Breizh-Uhel a stumm ar muiañ a studieren war ar brezhoneg).

Izel eo dregantad ar vrezhonegerien e-touez ar re yaouank dindan 18 vloaz.

An implij eus ar brezhoneg e-touez ar re zo dindan 18 vloaz n'eo ket bet studiet gant enklask an EBSSA*. Roadennoù resis a zo ganeomp e-keñver an tem-se met tennañ a reont d'an implij er skol hepken (gw. p. 52). Ar merk pennañ eus yec'hed ar yezhoù eo an niver a yezherien yaouank, dres. Splann eo neuze ez eus ezhomm da niveriñ ar vrezhonegerien yaouank ha da vuzuliañ o fleustr. Hervez an UNESCO* e rank kenfeur ar yezherien yaouank sevel da 30% a-benn ma c'hallfe bezañ chañsoù gant ur yezh da dreuzvevañ. Padal n'eus nemet 1,3% eus holl skolidi Breizh zo skoliataet en un hentad divyezhek e 2006/2007. Ne vez ket kemeret e kont aze ar vugale desavet e brezhoneg gant o zud hep bezañ skoliataet er c'helenn divyezhek. Met pa seller ouzh roadennoù an treuzkas er familhoù e teu war wel ez eo tost dre ar skol hepken e vez treuzkaset ar brezhoneg hiziv an deiz. E Breizh a-bezh n'eus nemet etre 1 ha 2% eus ar re dindan 18 vloaz a ra gant ar brezhoneg hiziv an deiz.

An holl rummoù sokiomicherel a ra gant ar brezhoneg daoust da bouez dreist al labour-douar


E-touez al labourerien-douar emañ an implij eus ar brezhoneg en e vleuñv : **tost un drederenn eus al labourerien-douar e Breizh velestradurel a ra gant ar brezhoneg.** En holl rummadoù oad e teu rumm al labourerien-douar da gentañ evit kenfeur ar vrezhonegerien dre rumm sokiomicherel. 15,4% eus al labourerien-douar etre 35 ha 50 vloaz zo brezhonegerien ha 8,3% eus al labourerien-douar a zo etre 18 ha 30 vloaz zo brezhonegerien c'hoazh. Daoust ma vez graet gant ar brezhoneg war ar maez dreist-holl eo aet ar pleustr-se war gêriekaat, oc'h heuliañ kemmadennoù all ar gevredigezh vreizhat. Diskouezet e vez splann gant an implij eus ar yezh e rummadoù sokiomicherel an artizaned-kenwerzherien, ar vicherourien hag an implijidi. Ar rummadoù sokiomicherel-se eo a gomz ar muiañ brezhoneg war-lerc'h hini al labourerien-douar, dres. 10% eus an implijidi a zisklêr komz brezhoneg war ar pemdez ivez. **N'eo ket dister kennebeut an dregantad a dud a ra gant ar brezhoneg e-touez ar micherioù kefredel :** 7,6% eus ar sternerien pe ar micherioù frank zo brezhonegerien.

Evit dazont ar brezhoneg eo un dra vat-kenañ e vefe graet gant ar yezh en holl rummadoù sokiomicherel. Ret eo teurel evezh ouzh an elfenn-se, dreist-holl pa vez keñveriet da skouer gant implij ar gallaoueg a chom stag muioù ouzh ar gennad kentañ*, hervez roadennoù an EBSSA* (gw. p. 17).

Er rummadoù oad yaouankañ e weler, memes tra, un digresk hollek eus implij ar brezhoneg en holl rummadoù sokiomicherel, ar pezh a zo diouzh an tuadur hollek.

Dregantad ar vrezhonegerien er boblañs en tu all da 18 vloaz diouzh ar vicher e Breizh velestradurel e 1999

Pleustr ar yezh a gemm kalz eus an eil rummad sokiomicherel d'egile, daoust ma vez graet gant ar brezhoneg e kement rummad sokiomicherel zo e-touez ar vrezhonegerien deuet d'o oad.




Keñveriadenn gant stad ar gallaoueg

Ober gant ar yezh

Prizius eo bet niveradeg 1999 ivez evit anavezout, evit ar wezh kentañ, pet a dud a ra gant ar gallaoueg ha pelec'h emaint o chom. Ispriziet e c'hall bezañ bet an niver a yezherien avat rak ne vez ket emskiantek ar c'hallaouegerien atav ez eo gallaoueg a gomzont. Niveret ez eus bet ouzhpenn 32 000 gallaoueger, e-keñver tost da 264 000 brezhoneger e-touez an dud deuet d'o oad.

An niver a yezherien er boblañs a-us da 18 vloaz e Breizh e 1999

Eizh gwezh muioc'h a vrezhonegerien eget a c'hallaouegerien zo e Breizh hiziv an deiz.



Dasparzh ar yezherien dre zepartamant

En Il-ha-Gwilen eo e kaver ar muiañ a c'hallaouegerien, ouzhpenn an hanter anezho. Bihan-kenañ eo an niver anezho e Penn-ar-Bed e-keñver an hollad: 1,1% eus ar yezherien-se a zo o chom e Penn-ar-Bed.

Rannadur ar yezherien diouzh an departamant

| | Brezhonegerien | | | | Gallaouegerien | | | |
|----------------|-----------------|-------------------|---------------------|-------------------|-----------------|-------------------|---------------------|-------------------|
| | Tremen 18 vloaz | % dre zepartamant | Etre 18 ha 30 vloaz | % dre zepartamant | Tremen 18 vloaz | % dre zepartamant | Etre 18 ha 30 vloaz | % dre zepartamant |
| Aodoù-an-Arvor | 67701 | 15,4% | 5501 | 7,5% | 8042 | 1,8% | 1136 | 1,5% |
| Il-ha-Gwilen | 8787 | 1,3% | 2566 | 1,6% | 16884 | 2,5% | 1289 | 0,8% |
| Liger-Atlantel | 6870 | 0,8% | 1683 | 0,9% | 4443 | 0,5% | 491 | 0,2% |
| Mor-Bihan | 48151 | 9,5% | 2695 | 2,8% | 2977 | 0,6% | 206 | 0,2% |
| Penn-ar-Bed | 132342 | 19,6% | 7739 | 5,9% | 359 | 0,1% | 0 | 0% |
| Breizh | 263851 | 8,3% | 20184 | 3,1% | 32705 | 1,0% | 3122 | 0,5% |

N'eus nemet en Il-ha-Gwilen eo uheloc'h an niver a c'hallaouegerien eget an niver a vrezhonegerien. En departamant-se avat ez eo niverusoc'h ar vrezhonegerien e-touez an dud dindan 30 vloaz. Niverusoc'h eo ar vrezhonegerien eget ar c'hallaouegerien el Liger-Atlantel en holl rummadoù oad. E Reter Breizh emañ ar gallaouegva hepken, pa vez kavet brezhoneg, dizingal met dizehan, en holl departamantoù Breizh.

Rannadur ar yezherien dre oad

Rannadur ar yezherien diouzh an oad

| | Brezhonegerien | Gallaouegerien |
|-----------------------|----------------|----------------|
| En tu all da 65 bloaz | 133 102 | 15 228 |
| Etre 50 ha 65 bloaz | 66 779 | 8 362 |
| Etre 30 ha 49 bloaz | 43 289 | 6 025 |
| Etre 18 ha 29 bloaz | 20 681 | 3 090 |
| Hollad | 263 851 | 32 705 |

War goshaat ez a ar c'hallaouegerien ivez. An tri c'hard zo en tu all da 50 vloaz ha tost an hanter zo en tu all da 65 bloaz. 10% dindan 30 vloaz.

Rannadur ar yezherien dre rummad sokiomicherel

Pleustr ar brezhoneg hag ar gallaoueg diouzh ar rummad sokiomicherel (roadennoù e Breizh velestradurel)

| | Brezhonegerien | Dregantad ar vrezhonegerien er rummad | Gallaouegerien | Dregantad ar c'hallaouegerien er rummad |
|------------------------------------|----------------|---------------------------------------|----------------|---|
| Labourerien-douar | 51 219 | 30,6% | 8 410 | 5% |
| Artizaned, kenwerzherien | 18 959 | 14,4% | 1 380 | 1,1% |
| Sternerien, micherioù frank | 11 095 | 7,6% | 998 | 0,7% |
| Micherioù etre | 25 130 | 7,8% | 3 299 | 1% |
| Implijidi | 46 347 | 9,3% | 5 124 | 1% |
| Micherourien | 67 262 | 13,9% | 4 069 | 0,8% |
| Tud n'o deus ket labouret biskoazh | 33 960 | 9,8% | 4 771 | 1,4% |
| N'eo ket bet embannet | 3 008 | 6,8% | 213 | 0,5% |
| Hollad | 256 980 | 12% | 28 264 | 1,3% |

Digempouezetoc'h eo rannadur ar c'hallaouegerien dre rummad sokiomicherel eget hini ar vrezhonegerien. Liammet strishoc'h ouzh ar gennad kentañ* eo implij ar gallaoueg pa vez implijet ar brezhoneg en holl rummadoù sokiomicherel.

Splann he deus diskouezet enklask an EBSSA* emañ ar gallaoueg en arvar bras da vont da get hiziv an deiz. Disklêriañ a ra 1% eus ar Vretoned hepken e komzont gallaoueg. Ha kouezhet eo dregantad ar yezherien dindan 1% e-touez ar re dindan 50 vloaz. O vervel emañ er Mor-Bihan (0,66% a yezherien en departamant a-bezh). En departamant-se ne vefe mui den ebet dindan 20 vloaz o komz gallaoueg. En Il-ha-Gwilen emañ an implij eus ar gallaoueg en e uhelañ (3% a yezherien er boblañs en tu all da 18 vloaz).

Splann eo ez a an treuzkas er familhoù war-gil

Ul lamm war-raok en deus graet enklask 1999 an EBSSA* e-keñver studiañ an treuzkas: roadennoù a oa bet dastumet war ar yezh bet desket gant an oadourien pa oant yaouank, an implij a rae ar re-se gant ar yezh da vare an enklask hag ar yezh treuzkaset ganto d'o bugale da 5 bloaz. An enklask a zegas an tu da heuliañ an implij eus ar yezh war tri rummad koulz ha roadennoù spletus diwar-benn ar yezh komzet ouzh ar re vihan.


Ar roadennoù-se o deus kadarnaet ar giladenn a weler er gevredigezh evit treuzkas ar brezhoneg er familhoù.

Un torr e chadenn deskiñ ar yezh etre ar vugale hag o zud zo kaoz ez eo aet an implij eus ar brezhoneg war zigreskiñ a-hed ar c'hantved diwezhañ, e gwirionez. Abaoe ar bloavezhioù 1980 e vez komzet galleg ouzh ar vugale gant an holl gerent pe dost. E 1999 ne oa nemet 3% eus tud Aodoù-an-Arvor, Penn-ar-Bed pe ar Mor-Bihan, ganto bugale 5 bloaz, a gomze brezhoneg outo.

Dregantad an dud zo bet komzet brezhoneg outo gant o zud, da gustum pe a-frapadoù, diouzh an oad e-touez poblañs tri departamant kornôg Breizh

Lennadenn : 2% eus ar re a oa 30 vloaz e 1999 o deus bet ar brezhoneg gant o zud.

War zigresk ez a an treuzkas er familhoù : hiziv an deiz eo ral-kenañ e vefe treuzkaset ar brezhoneg, ha pa vez graet ez eo dizingal.



Er bloavezhioù 1920 e oa tost an hanter eus ar vrezhonegerien o komz brezhoneg ouzh o bugale. Er bloavezhioù 1980 ne oant mui nemet 5% (e Breizh velestradurel)². War zigreskiñ ez a an treuzkas er familhoù en holl zepartamantoù. Un tammig kreñvoc'h eo chomet memes tra en Aodoù-an-Arvor hag e Penn-ar-Bed ma'z eus 12% eus an oadourien dindan 30 vloaz o deus desket brezhoneg gant o zud. Un tamm izeloc'h eo ar c'henfeur-se er Mor-Bihan : 7% eus an oadourien dindan 30 vloaz a veze komzet brezhoneg outo gant o zud pa oant 5 bloaz.

² Gant ar standilhon dibabet (un dreiststandilhon evit departamantoù ar c'hornôg) e teu da vezañ diaes dielfennañ roadennoù a denn d'an treuzkas evit Il-ha-Gwilen hag evit al Liger-Atlantel. Ret eo sellet ouzh ar roadennoù-mañ gant evezh neuze.

Adalek ar bloavezhioù 1950, ne vez ket mui treuzkaset ar brezhoneg e-unan koulz lavaret : komzet e vez ar yezh e-kichen ar galleg hervez an dud zo tro-dro. N'eo ket trawalc'h evit ma teufe un den da vezañ brezhoneger ampart ha gouest da gomz brezhoneg ouzh e vugale d'e dro. E-touez an dud dindan 50 vloaz o doa desket brezhoneg gant o zud, n'eus nemet 22% anezho a oa ar brezhoneg evito ar yezh voas, tra ma sav an dregantad-se da 60% e-touez an dud zo ouzhpenn 50 vloaz. Dister-kenañ eo al lodenn eus an oadourien dindan 30 vloaz zo bet komzet brezhoneg ingal dezho : n'eo nemet 1,9% en Aodoù-an-Arvor, 0,5% e Penn-ar-Bed ha 0,7% er Mor-Bihan.

Efedusoc'h eo an treuzkas gant an tad hag ar vamm evit kenderc'hel an treuzkas d'ar rummad war-lerc'h : 19% eus an dud o deus desket brezhoneg digant o zad hag o mamm a-gevret a dreuzkas ar yezh en-dro d'o bugale, 8% hepken evit ar re o deus klevet ar yezh gant unan anezho hepken.

Nec'hus-kenañ eo gwelet pegen nebeut e treuzkaser ar yezh er familhoù e-touez ar remziadoù yaouankañ hiziv an deiz : nebeutoc'h eget 3% eus ar gerent a gomz brezhoneg ouzh o bugale yaouank. Rannet eo bet dregantad ar gerent a dreuzkas ar brezhoneg d'o bugale dre zek eus ar rummadoù oad kentañ (1920) d'ar re ziwezhañ (1980). Nec'hetoc'h e vezer c'hoazh pa ouzer petra eo ar c'holl etre ar re o deus resevet ar brezhoneg hag ar re a dreuzkas anezhañ d'o bugale d'o zro. Brezhoneg a ranker kaout en endro pemdeziek, er vuhez foran hag er c'helenn, kalz muioc'h ma fell d'ar gevredigezh gallout kempouezañ ar c'holl-se.

Ne reer ket kalz a draoù war dachenn an treuzkas er familhoù e Breizh. Un araokadenn zo bet e miz Du 2005 gant krouidigezh ar gevredigezh **Divskouarn** a bled gant an dra-se. Aozañ a ra bodadoù labour evit broudañ ar gerent d'ober gant ar brezhoneg er gêr. Oberiant eo ar gevredigezh-se e bro Vrest betek-henn. Gant ar memes pal, diorren ar brezhoneg er familhoù, e oa bet aozet gant Skol an Emsav e 2006 un devezh stummañ evit ar gerent o deus c'hoant desevel o bugale e brezhoneg. Dibaot e chom an oberoù-se memes tra evit ar mare.

Ar sokioyezhiourien o deus diskouezet anat eo e-kreiz ar familh e teu ar bugel da zeskiñ e yezh da gentañ. Un elfenn hollbouezus eo an treuzkas er familhoù evit ma c'hallfe ar yezhoù chom bev eta. **Gant se, diazezañ oberoù da adlañsañ an treuzkas er familhoù a vo unan eus an obererezhioù pennañ da lakaat war-sav a-benn sevel un dazont evit ar brezhoneg.**

Tommoù-h-tommañ ouzh ar brezhoneg eo ar Vretoned

Sontadegoù bet graet ingal gant TMO diwar atiz Fañch Broudig war soñjoù ar Vretoned diwar-benn ar brezhoneg hag o emzalc'h ouzh ar yezh-se a ziskouez splann int tomm-kenañ outi. Mont a ra ar santimant-se evit ar yezh war gresk zoken.

Soñjal a rae da 76% eus ar Vreizhizeliz³ e oa ret mirout ar brezhoneg e 1991. Met ne oant nemet 46% o soñjal e vefe posupl mirout ar brezhoneg. E 1997 e oa savet kenfeur ar Vreizhizeliz a oa a-du gant ar yezh da 88%, ha 72% eus an dud a grede dezho e chomfe bev ar brezhoneg. Diskouez a ra an disoc'hoù-se eo deuet Breizhizeliz da gaout muioc'h a fiziañs e dazont o yezh.

3 Sontadegoù 1991 ha 1997 a oa bet kaset da benn e Breizh-lzel hepken.

Enebrezh ouzh ar brezhoneg ne oa ket ken, koulz lavaret, e 2001 : 92% eus an holl Vretoned⁴ a soñje dezho e oa ret mirout ar brezhoneg ha 82% eus ar Vretoned a gave dezho e oa ar brezhoneg o yezh rannvro. En Aodoù-an-Arvor e asanted ar muiañ d'ar

mennozh-se (92%). Uhel-mat e oa an dregantad el Liger-Atlantel ivez, ma sell 67% eus an dud ouzh ar brezhoneg evel o yezh rannvro.

4 Kaset e oa bet ar sontadeg da benn war ar pemp departamant.

Unan eus elfennoù pennañ identelezh Breizh e teu ar brezhoneg da vezañ muioc'h-mui evit an darn vrasañ eus ar Vretoned neuze.

Kavout a ra da 41% eus ar Vretoned eo talvoudus gouzout brezhoneg ivez. Uhel-kenañ eo ar sifr-mañ pa ouzer n'eus nemet war-dro 8% eus **an dud deuet a gomz ar yezh e gwirionez** ha pa weler pegen gwan eo he statud lezennel hag he zalvoudegezh armerzhel c'hoazh. Hiziv, ouzhpenn an hanter eus ar Vretoned a soñj dezho ez eo a-bouez-bras kas ar brezhoneg war-raok. **Prest eo an darn vrasañ eus an dud da harpañ politikerezhioù foran a-du gant diorren ar yezh.**

Ar vrezhonegerien Klozadur

270 000 brezhoneger a oa e Breizh e 1999.

Kadarnaet en deus enklask an EBSSA* poltred Yann vrezhoneger : un den zo o chom kentoc'h e **Penn-ar-Bed**, kentoc'h **ouzhpenn 50 vloaz**, ha **labourer-douar** dre-vras. Resisaet eo bet ar poltred-se gant an enklask ivez : brezhonegerien zo en holl rummadoù sokiomicherel, da skouer, hag er rummadoù sokiomicherel «uhel» zoken.

Dont a ra an implij eus ar brezhoneg **e-touez ar rummadoù yaouankañ** da vezañ **heñvel a-walc'h e pep lec'h e Breizh, forzh pelec'h emeur o chom**.

Ar brezhoneg eo an **eil yezh komzet ar muiañ e Breizh**, goude ar galleg met a-raok ar saozneg.

Kilet en deus ar brezhoneg dre-vras e-kerzh an XX^{vet} kantved. Kilet o deus an holl yezhoù bihanniver e Frañs : kenfeur ar yezherien zo bet rannet dre dri evit an elzaseg ha dre zaou evit an euskareg pa'z eo bet rannet dre zek evit ar brezhoneg a zo, gant se, unan eus ar yezhoù o deus kilet ar muiañ.

War goshaat ez a ar vrezhonegerien : e 1999 e oa tri brezhoneger diwar bevar en tu all da 50 vloaz hag unan diwar zaou a oa en tu all da 65 bloaz. Nebeutoc'h eget unan diwar zek a oa dindan 30 vloaz.

Ne c'hoari ket ar familh he roll ken evit treuzkas ar yezh, koulz lavaret. Evit lakaat un harz d'an digresk e niver ar vrezhonegerien (a zo liammet ouzh an dra-se) e rank ar galloudoù foran, ar strollegezhioù lec'hel ha kevredigezh Breizh dre-vras sachañ ganti buan : ezhomm zo da gizidikaat ha da vroudañ an 92% eus ar Vretoned a soñj dezho eo ret mirout ar brezhoneg a-benn lakaat anezho da adperc'hennañ o yezh da vat. Emouestl pep hini evit reiñ lañs en-dro d'an treuzkas eo diazez kendalc'h ar brezhoneg ha savidigezh e zazont.

Diouzh fiziusted ar roadennoù a denn da emdroadur ar brezhoneg eo **efedusted ar steuñvoù diorren hag ar politikerezhioù yezh** lakaet da dalvezout. En abeg d'an dra-se eo ret bezañ gouest da heuliañ an implij eus ar brezhoneg diouzh an holl dezverkoù talvoudus (rummad oad, lec'h-anez, reizh, rummad sokiomicherel). D'en ober, **ar pal pennañ ha mallusañ eo ebarzhiñ bep tro goulennoù yezhel da vare niveradegoù ar boblañs. Ar pezh a dalvez e ranker sevel un emglev etre an EBSSA* ha Rannvro Breizh.**

A r g a l l o u d o ù f o r a n

Peseurt frankiz ober zo gant ar galloudoù foran, anezho oberourien ret evit kas ar yezh war-raok ?


Talvoudegezh ur statud ofisiel evit ar brezhoneg

Hep testenn lezennel ebet eo diaes kas ur gwir bolitikerezh yezh war-raok. Degas a ra ar statud ofisiel ur framm lezennel a-benn normalaat* implij ur yezh vihanniver. Termenañ a ra gwirioù yezhel ar geodedourien ha resisaat a ra dleadoù ar galloudoù foran. Embann a ra ar youl da lakaat un harz da ziskar ar yezh vihanniver evit dont a-benn da eilpennañ an argerzh.

Skouer Euskadi a ziskouez splann an ezhomm da gaout ur statud ofisiel. Meur a statud a zo evit ar memes yezh. E Kumuniezh Emren Euskadi ez eo an euskareg yezh ofisiel ar vro abaoe m'en deus bet e Statud Emrenerezh e 1979. En em ziazezañ a ra politikerezh yezh ar gumuniezh emren war al lezenn diazez eus 1982 da normalaat* implij an euskareg. An enklaskoù sokioyezhoniezh kaset da benn e 1991, 1996 ha 2001 a ziskouez splann e ra berzh argerzh normalaat* an euskareg er gumuniezh emren. Eilpennet eo bet an tuadur d'an diskar ha dregantad an euskaregerien zo uheloc'h bremañ e-touez ar re yaouank eget e-touez ar rummadoù koshoc'h. E Norzheuskadi, avat, ma n'eus statud ofisiel ebet gant an euskareg, en deus kendalc'het ar varregezh war ar yezh da ziskenn kalz hag en un doare ingal etre 1991 ha 2001 ; war danavaat ez a an implij foran eus an euskareg eno dre ziouer a anaoudegezh ofisiel peurgetket.

Emdroadur an niver a euskaregerien en tu all da 16 vloaz etre 1981 ha 2001

War greskiñ ez a an niver a euskaregerien er gumuniezh emren tra ma kendalc'h da ziskenn e Norzheuskadi. Talvoudegezh ur statud ofisiel a ziskouez skouer Euskadi.



Ar galloudoù foran o deus o lod da gemer evit eilpennañ ar c'hemm yezh. Dibosupl eo normalaat* implij ar yezh e gwirionez hep harp an ensavadurioù, evit ar pezh a denn d'he implij foran peurgetket. Kinnig an ensavadurioù foran a laka ar goulenn sokial da ziwanañ: seul vrasoc'h e vo kinnig ar servijoù brezhonek en ensavadurioù foran, seul aesoc'h e vo da geodedourien Breizh adperc'hennañ o yezh. Ar galloudoù foran o-unan ne c'hallont ket gwarantiñ buhez ur yezh avat. Ne c'hell bezañ nemet frouezh obererezh ar galloudoù foran asambles gant hini ar geodedourien zo ret dezho kemer ur perzh oberiant en adperc'hennañ ar yezh.

UNESCO* : un aozadur etrebroadel a zifenn al liesseurtes yezhel

Gant ar framm gwirel bet savet gant an UNESCO*, dreist-holl, e vez kaset obererezhioù da benn evit saveteiñ ar yezhoù en arvar war an dachenn etrebroadel. Termenet eo bet ar palioù a rank ar Stadoù klask tizhout gant ur steuñv da lakaat an Disklêriadur hollvedel war liesseurtes ar sevenadurioù da dalvezout. Gouestlet o deus ar 190 Stad ezel eus an UNESCO* saveteiñ glad yezhel Mab-den, broudañ al liesseurtes yezhel en deskadurezh ha brudañ al liesseurtes-se war an dachenn niverel, dre ar Genrouedad dreist-holl. Dont a raio ar C'hendivizad evit gwareziñ ha brudañ liesseurtes an doareoù sevenadurel da greñvaat an obererezh-se pa vo bet lakaet da dalvezout, da lavaret eo pa vo bet degemeret gant 30 Stad.

Gouestlet ez eus programmoù ha linennoù budjed en UNESCO* d'al liesseurtes yezhel ha d'ar yezhoù en arvar (6,5% eus programm sevenadur an UNESCO*, da skouer). Unan eus an obererezhioù termenet e budjed 2004/2005 an UNESCO* zo **kizidikaat ar Stadoù ouzh kudennadur ar yezhoù en arvar**, ouzh talvoudegezh ar glad-se hag ouzh o c'hirievezh da sevel ur framm gwirel hag ensavadurel a-benn termenañ obererezhioù war dachenn an deskadurezh hag a-benn brudañ ha lakaat anavezout ar yezhoù bihanniver. War liesseurtes ar yezhoù e pouez ar programm gouestlet da liesseurtes ar sevenadurioù. Ur budjed 155000€ zo gouestlet d'al labour resis-se.

Gant an UNESCO* eo kreñvaet ar programm a denn d'ar yezhoù en arvar evit e lakaat da glotañ gant an disklêriadur hollvedel war liesseurtes ar sevenadur (ur budjed 2136195€ a zo gouestlet d'an obererezh-se).

Kroget en deus ur poellgor arbennigourien da labourat war saveteiñ ar yezhoù en arvar e 2003. E-touez an nav dezverk bet termenet ganto a-benn priziañ hag-eñ eo buhezek ur yezh emañ ar statud ofisiel. Gant ar poellgor-se eo aliet ar Stadoù da skoazellañ en un doare oberiant an anaoudegezh eus ar yezhoù en arvar en o bro. Gant an arbennigourien eo aliet pennrener an UNESCO* da ziazezañ ur reizhiad arc'hantaouiñ evit studiañ ar yezhoù en arvar, ha lakaat da dalvezout raktresoù da greñvaat ha da vuhezekaat ar yezhoù-se. Sikour a rafe ar reizhiad-se da broduiñ ha da skignañ dafar kelenn peurgetket.

Kizidikaat an dud ouzh ar yezhoù en arvar ha degas ur skoazell d'an aozadurioù lec'hel a empenn hag a lak programmoù yezhel da dalvezout eo lod an UNESCO*. Ret eo kaout soñj eo an UNESCO* en deus trechalet an

dud en ur renkañ ar brezhoneg e-touez ar yezhoù en arvar bras da vervel. E-touez ar raktresoù harpet gant an UNESCO* n'eus hini ebet a denn da yezhoù bihanniver Europa war-bouez unan a denn d'ur yezh eus Serbia hag eus Montenegro (ar valakeg). Gouestlet eo e harp d'ar yezhoù eus Afrika, Azia pe Amerika ar Su, anezho ar yezhoù ar muiañ en arvar bras da vervel peogwir n'eus stumm skrivet ebet anezho, ha peogwir n'int ket bet studiet c'hoazh. N'eo ket yezhoù bihanniver Europa, hag ar brezhoneg en o zouez, diouzh an dezverkoù-se, ne c'haller ket o renkañ e-touez ar yezhoù-se neuze.

Klozadur darnel

Kenderc'hel a ra an argerzh da wareziñ ar yezhoù en arvar da vont war-raok er bed a-drugarez d'an UNESCO*. Nevez zo ez eus bet degemeret gantañ kendivizadoù evit saveteiñ ar glad sevenadurel dizanvez hag al liesseurtes sevenadurel: war greñvaat ez a gwarez gwirel ar yezhoù en arvar. Krouet ez eus bet ur poellgor arbennigourien en UNESCO* da labourat evit prederiañ war ar strategiezh da gas da benn evit saveteiñ ar yezhoù en arvar. Met n'eo ket ar gwarez-se gwall rediv evit ar Stadoù e gwirionez. A-hend-all, gant gwir abeg e treistwir ar programmoù ar yezhoù breskañ n'o deus framm lec'hel ebet evit o difenn hag o harpañ. Yezhoù bihanniver Europa, ar brezhoneg en o zouez, a c'hall tennañ gounid eus stignadoù gwareziñ all ne vezont ket skoazellet gant ar programmoù etrebroadel eta.

Diazezet e vez reolennoù ha pennaennoù diazez d'al live etrebroadel. D'ar Stadoù eo da zoujañ dezho ha da lakaat anezho e pleustr.

Europa : ur framm evit gwareziñ ha brudañ ar yezhoù bihanniver

Daou ensavadur politikel distag a zo en Europa : Kuzul Europa hag Unaniezh Europa. Koshoc'h eo an hini kentañ, savet e 1949, hag a vod muioc'h a Stadoù (46 Stad e 2006) war un dachenn ledanoc'h. Karget eo da vrudañ an demokratelezh ha da wareziñ gwirioù Mab-den hag ar Stad a wir en Europa. Aet eo Unaniezh Europa pelloc'h war dachenn ar c'henober politikel hag ekonomikel etre ar Stadoù : gwir ensavadurioù boutin d'ar Stadoù a zo enni gant ur Parlamant dilennet war-eeun gant he c'headedourien. Plediñ a ra an daou ensavadur-se gant ar yezhoù bihanniver diouzh levezon pep hini anezho.

Kuzul Europa : kred al liesyezhegezh

Termenet en deus Kuzul Europa ur politikerezh yezh gant programmoù a vez kenurzhiet gant daou aozadur :

- Rann ar politikerezhioù yezh lec'hiet e Strasbourg.
- Kreizenn Europa evit ar yezhoù bev e Graz (Aostria).

Mennout a ra ar politikerezh-se gwareziñ ha diorren glad yezhel ha liesseurted sevenadurel Europa ha brudañ al liesyezhegezh.

Karget ez eus ur poellgor arbennigourien da heuliañ penaos e vez lakaet Karta Europa ar yezhoù rannvro pe bihanniver da dalvezout gant ar Stadoù : evit poellgor ar Vinistred e sav ar poellgor-mañ un danevell briziañ war an doare ma touj pep Stad ouzh hec'h emouestloù. Studiañ a ra stad wirion ar yezhoù bihanniver er Stad-mañ-Stad, ha, pa vez ret, broudañ a ra ar Stadoù da dizhout ul live uheloc'h evit gwareziñ ha brudañ ar yezhoù-se. Gallout a ra poellgor ar Vinistred erbediñ d'ar Stadoù gwellaat o lezennadur hag o folitikerezhioù evit ar yezhoù bihanniver. Graet en doa, da skouer, meur a erbed d'ar Rouantelezh-Unanet e 2004 p'en doa erbedet dezhi aesaat krouidigezh ur chadenn skinwel e gouezeleg ha diorren an abadennoù skingomz kinniget e gouezeleg ivez. Goulennet en doa ar poellgor e vefe implijet muioc'h ar c'hembraeg er servijoù sokial ha diazezet ur politikerezh yezh evit implijout an iwerzhoneg er vuhez foran e Norzhiwerzhon.

An doujañs evit liesseurted ar yezhoù hag ar sevenadurioù : unan eus pennaennoù diazez Unaniezh Europa

Kemeret he deus Unaniezh Europa diarbennoù evit gwareziñ ha brudañ yezhoù rannvro pe bihanniver Europa. Betek 2001 e veze arc'hantaouet ganti raktresoù a ginnige oberoù fetis az ae war an tu-se. E 2000 e oa bet dasparzhet 2,5 milion a euroioù da 35 raktres disheñvel. Abalamour d'he diouer a ziazez gwirel e oa bet nullet al linenn vudjed-mañ e 2001, da-heul ur varnadenn gant Lez-varn Kumuniezhioù Europa e 1998. Strivet ez eus bet evit sevel an diazez-se gant Burev Europa evit ar Yezhoù Implijet Nebeutoc'h peurgetket met n'eo ket bet disoc'het betek-henn.

Gant programm Unaniezh Europa da arc'hantaouiñ raktresoù fetis ez eus bet roet lañs d'ar raktres kelaouenn etrerannvroel evit ar vugale, deuet da vezañ **Louarnig** e brezhoneg, e 2000. Diwar atiz France 3 Alsace eo bet kinniget ha skignet ar Shadoked e yezhoù bihanniver e Frañs (elzaseg, brezhoneg, katalaneg, korseg, okitaneg, hag okitaneg Provañs) a-drugarez da skoazell arc'hant Unaniezh Europa e 2000 ivez.

Daou framm o deus bet ur skoazell arc'hant evit ar mont en-dro gant Unaniezh Europa er bloavezhioù diwezhañ :

- **Burev Europa evit ar Yezhoù Implijet Nebeutoc'h** : krouet e oa bet e 1982 diwar atiz Parlamant Europa. Un aozadur e-maez gouarnamant eo, da lavaret eo dizalc'h ouzh ar Stadoù ezel hag ouzh o gouarnamantoù. Dileuriañ a ra ar c'humuniezhioù yezhel en Unaniezh Europa. E karg emañ ar Burev-se eus brudañ madoù boutin ar c'humuniezhioù-se. Un hanterour eo etrezo hag ensavadurioù an Unaniezh. Aliañ ha kelaouiñ a ra an dud, an divizourien war ar yezhoù bihanniver. Abaoe 2000 e kinnig ur servij enlinenn nevez dre e ajañs-kelaouiñ : gant **EuroLang** e vez skignet keleier a denn d'ar yezhoù bihanniver en Europa. Ur rouedad eus ar c'hentañ eo evit bezañ kelaouet eus an divizoù bet degemeret gant ar Stadoù hag eus an oberoù nevez. Gant an diouer a skoaziadennoù o tont eus Kengor Europa eo bet difredet ar pennkazetenner e fin 2005. Mont a ra en-dro gant doaretaerien* a-youl vat hepken hiviziken. Abalamour da cheñchamant mont en-dro Kengor Europa evit skoazellañ ar yezhoù bihanniver e 2006 e rank ar Burev kreskiñ da vat an arc'hantaouiñ diabarzh o tont eus ar poellgarioù ezel anezhañ e pep Stad.
- **Ar Rouedad Mercator** : pal ar rouedad-se bet krouet e 1988 zo reiñ keleier diuntuek ha fizius diwar-benn an holl yezhoù rannvro pe bihanniver. Teir c'hreizenn enklask ha teuliaouiñ zo : **Mercator Gwir ha Lezennadur yezhel** renet gant ar CIEMEN* lec'hiet e Barcelona e Katalonia (un teuliad zo gouestlet d'ar reolennadur evit ar brezhoneg war o lec'hienn Genrouedad), **Mercator Deskadurezh** renet gant Akademiezh Friz lec'hiet e Ljouwert en Izelvroioù ha **Mercator Media** renet gant Skol-veur Aberystwyth e Kembre.

Ul linenn vudjed a veze gouestlet d'an daou framm-se e budjed Sevenadur ha Yezhoù Unaniezh Europa betek 2005 (ur sammad 1 224 000 € a oa rakwelet evit 2005). War greskiñ eo aet ar budjed etre 2003 ha 2005 (+16%). Ur cheñchamant hent zo war ar stern gant Kengor Europa. Adalek 2007 e vo ur programm nevez war meur a vloaz evit ar frammoù a labour evit skoazellañ ar yezhoù bihanniver en Europa.

Kinniget e oa bet e fin 2005 ur stern strategel nevez evit al liesyezhegezh gant komiser Europa an Deskadurezh, ar Stummañ, ar Sevenadur hag al Liesyezhegezh, Jan Figel.

Daou zibab a oa: krouiñ un ajañs nevez evit ar yezhoù bihanniver en Europa pe lakaat ar c'hreizennoù a oa anezho dija da labourat en ur rouedad. Raktres ur "Rouedad kas war-raok liesseurtes ar yezhoù" eo a zo bet miret. Dileuriet eo ar brezhoneg ennañ gant daou framm, Kuzul-rannvro Breizh evel ezel hag Ofis ar Brezhoneg evel ezel keveler.

Degermeret e oa bet gant Parlamant Europa un "Danevell diwar-benn ur stern strategel nevez evit al liesyezhegezh" d'ar 15 a viz Du 2006. Pouezañ a reer ennañ war an ezhomm da astenn politikerezh liesyezhek Europa d'ar yezhoù bihanniver ha broudet eo ar Stadoù ezel da gemer anezho e kont e steuñvoù broadel. Diorren an teknologiezhioù nevez, ar micherioù hag ar gennadoù liammet d'ar yezhoù bihanniver a lak an danevell-se war-raok peurgetket. Siwazh, n'eus ket bet miret enni ur rannbennad a c'houlenne e vefe degemeret un diazez gwirel d'ar gwirioù yezhel.

Daoust d'an diouer a brogrammoù a-ratozh e c'hall programmoù boutin Europa dont da skoazellañ raktresoù brudañ ar yezhoù bihanniver: programmoù eus renerezh an Deskadurezh, ar Sevenadur met ivez programmoù a denn d'ar yaouankiz, d'ar stummañ ha d'ar politikerezh rannvroel. A-benn bezañ arc'hantaouet gant Europa eo ret d'ar raktres bodañ kevelerien eus meur a Stad ha kemer meur a yezh e kont. Rediañ a ra ar c'humuniezhioù yezh da lakaat o barregezh e boutin ha da genlabourat etrezo. Bevenniñ a ra ar raktresoù a c'hall bezañ arc'hantaouet avat ha luziañ a ra o sevenidigezh o rediañ ar frammoù war ar renk da glask kevelerien a labour war yezhoù all ha da sevel ur c'henlabour ganto. Kaout titouroù war an danvez kevelerien zo ezhomm evit ar frammoù a fell dezho bezañ arc'hantaouet gant Europa. Evit respont d'an ezhomm-se dres ez eo bet kaset da benn ar **raktres ADUM** bet skoazellet gant Kengor Europa e 2003 e stern ar programm "brudañ deskiñ ar yezhoù ha liesseurtes ar yezhoù". Kinnig a ra kelaouiñ an dud hag ar frammoù war programmoù Unaniezh Europa a c'hall arc'hantaouiñ ar raktresoù a denn d'ar yezhoù bihanniver. Dre un diaz titouroù a c'haller sellet outañ enlinenn e ro ar raktres ADUM an tu d'ar frammoù d'en em gavout evit kas raktresoù da benn asambles. War raktresoù all a denn d'ar yezhoù bihanniver evel Euromosaic en doa labouret dija ar skipailh a gas ar raktres ADUM da benn.

Da-heul bloavezh ar yezhoù en Europa, lidet e 2001, en deus kinniget Kengor Europa ur steuñv labour evit brudañ an deskiñ yezhoù hag al liesseurtes yezhel. Kemeret eo ar yezhoù bihanniver e kont er steuñv-se. Dister eo lod Unaniezh Europa evit ar yezhoù e-keñver an arc'hant dasparzhet gant Stadoù zo memes tra. Lakaet e vez pennaenn **ar c'housezadelezh*** e pleustr: **d'ar Stadoù ezel pe d'ar rannvroioù da gentañ eo mirout ha skoazellañ ar yezhoù rannvro pe bihanniver.**

Klozadur darnel

Kenderc'hel a ra Kuzul Europa da gas da benn ur politikerezh evit gwareziñ liesseurtes ar yezhoù. N'eus bet krouet benveg gwirel nevez ebet met implijet e vez ar re bet diazezet dija.

N'eo ket bet adlakaet e pleustr ar programm da arc'hantaouiñ raktresoù fetis diwar-benn ar yezhoù bihanniver, bet nullet e 2001. Ne vir ket ouzh ar yezhoù bihanniver bezañ sikouret gant Unaniezh Europa avat. Gallout a reont bezañ skoazellet gant programmoù boutin. Heñchadurioù nevez a zo gant Kengor Europa en e strategiezh evit skoazellañ ar frammoù oberiant war dachenn ar yezhoù bihanniver: mont a reer war-zu lakaat ur rouedad da vont en-dro etre ar frammoù lec'hel, ar pezh a zegaso cheñchamantoù bras evit ar frammoù a zo dija moarvat.

Bevennet eo obererezh an Unaniezh evit ar yezhoù bihanniver gant pennaenn ar c'housezadelezh*: d'ar Stadoù ezel pe d'ar rannvroioù eo d'ober da gentañ.

Yezhoù Frañs war-lerc'h ar galleg

Ar plas bihan-kenañ roet d'ar brezhoneg en ur gweledva yezhel meret gant ar Stad hag e ezvezañs eus servijoù foran ar Stad

Ne vez roet tost plas ebet d'ar brezhoneg er gweledva yezhel meret gant ar Stad (ensavadurioù, melestradurezhioù) ha n'eus ket anv d'e zivyezhekaat evit ar poent. War bajenn degemer lec'hienn Genrouedad Prefeti Breizh e kaver ur frazenn e brezhoneg memes tra, ha troet eo bet e brezhoneg anv an ajañsoù Stad e ti ar servijoù foran e Karaez, diwar o c'houlenn.

E Breizh, n'eus ket bet staliet panelloù heñchañ war an hentoù meret gant ar Stad betek-henn. Bep tro eo bet nac'het gant Renerezhioù-departamant an Hentoù ha padal ez eus bet staliet panelloù divyezhek war hentoù Stad e lec'hioù zo dija evel e Korsika (meret int eno gant Strollegezh Korsika) pe er Pireneoù-Atlantel da skouer.

N'eus servij ebet eus ar Stad a ginnig servijoù e brezhoneg. Ne vez ket kinniget un degemer e brezhoneg, pe skridoù melestradurel divyezhek gant ar melestradurezhioù. Keit ha ne vo ket ur statud gwirel gant ar brezhoneg e vo start-mat reiñ ur plas d'ar yezh e servijoù foran ar Stad hag er vuhez foran dre-vras. Asantet eo bet ar plas-se d'ar saozneg koulskoude: divizet en doa prefeti Aodoù-an-Arvor krouiñ ur rouedad kargidi da zegemer ar velestridi e saozneg. Abaoe miz Genver 2005 e c'hall ar saoznegerien kaout displegadennoù war penaos e ya en-dro melestradurezh Frañs ha dre-se bezañ aesaet o implij eus ar servijoù foran.

An diouer a statud gwirel zo un harz ouzh implij ar yezhoù rannvro er melestradurioù. Rankout a ra skridoù marilh ar boblañs bezañ skrivet e galleg. Ne c'haller ket rediañ ar melestradurioù nag ar servijoù foran d'ober gant ur yezh rannvro. Rankout a ra doare-skrivañ an anvioù-tud (hag ar anvioù-bihan zoken) ober gant al lizherenneg ha gant framm diazez ar galleg. Ma'z eus frankiz evit dibab un anv-bihan e rank ar frankiz-se doujañ da bennaennoù meur evel melladoù 1 ha 2 ar Vonreizh. An arguzenn-mañ a oa bet degaset gant lez-engalv Montpellier (diviz ar 26 a viz Du 2001) evit gwirabegiñ nac'hañ enrollañ an anv-bihan katalanek Martí war marilh ar boblañs.

Ur politikerezh aonik kaset da benn gant Frañs evit ar yezhoù rannvro

A-benn sklaeraat he ferzh war dachenn Breizh eo bet kinniget ar PASER* (Raktres Ober Strategel ar Stad er Rannvro) gant ar Stad e miz Gwengolo 2004. Termenet eo bet dibaboù pennañ strategiezh ar Stad e Breizh evit ar prantad 2004/2006. E-touez an dibaboù pennañ-se eo bet lakaet **talvoudegezh glad Breizh dre he yezh**. Kinniget eo ar brezhoneg ennañ evel unan eus elfennoù kreiz nerzh sevenadurel Breizh hag ur chañs evit Breizh. Gouzout a ra ar Stad emañ ar brezhoneg en arvar. Embannet eo bet er PASER* emañ ar Stad o vont da greñvaat hec'h obererezh evit saveteiñ ha pinvidikaat ar glad yezhel-se. Disklêriañ a

ra ar Stad emañ e soñj gwareziñ ha talvoudekaat ar brezhoneg gant diorren ur politikerezh kelenn ha stummañ koulz ha gant dastum, pinvidikaat ha skignañ ar glad yezhel-se. Paliou an obererezh a denn d'ar brezhoneg er steuñv-se zo :

- saveteiñ glad yezhel ar brezhoneg, kas ar c'helenn hag an ober gant ar yezh war-raok e-touez ar re yaouank hag an oadourien ;
- broudañ an embann e brezhoneg ha harpañ ar skignañ.

Gant ar Rektoriezh hag an DRAC* e tle an divizoù-se bezañ lakaet da dalvezout. Adkemeret ez eus bet oberoù a oa bet termenet er Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 dija, evel an hini a denn d'ar glad yezhel. Dleout a rae an embann hag an treiñ e brezhoneg bezañ skoazellet a-benn kas o obererezhioù da benn. Dleout a rae al levraouegoù skol hag ar re a dizh an holl dud bezañ broudet da binvidikaat o dalc'hadoù. Arc'hantaouet e tlee bezañ an obererezhioù-se gant Europa, ar Stad hag ar strollegezhioù tiriadel. A-dal d'ar paliou-mañ, ne oa tamm budjed ebet avat.

Ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro, ur stern evit termenañ perzh ar Stad

Perzh ar Stad ha hini ar rannvro e talvoudekaat ar brezhoneg zo bet termenet da-geñver ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro evit ar prantad 2000/2006. Daou brogramm diwar c'hwec'h eus al lodenn "stummañ, sevenadur ha kengred" a denn d'ar brezhoneg :


- an hini a denn d'ar stummañ (Programm 1)
- an hini a denn da dalvoudekaat ar glad sevenadurel (Programm 4).

Gouestlet he deus ar Stad reiñ **3,2 milion a euroioù war c'hwec'h vloaz** d'an oberoù a denn d'ar brezhoneg war-eeun. Diwar c'houlenn ar strollegezhioù tiriadel e oa bet degemeret, e miz Meurzh 2002, ur stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro war an divyezhegezh galleg-brezhoneg a-benn termenañ gwelloc'h perzh ar Stad e-keñver hini ar strollegezhioù tiriadel evit diorren an divyezhegezh er skolioù hag e diavaez ar skolioù. Er stagadenn e kaver oberoù a oa dija er Gevrat-steuñv koulz hag oberoù nevez (s.o. ar pennad sterniet p. 65, peurgetket).

Emouestlañ a ra ar Stad, dre Ministrerezh an Deskadurezh Stad, kement hag ar Rannvro, e diorren yezh ha sevenadur Breizh war dachenn ar stummañ (programm 1) dre hanterouriezh TES*, an ti-embann arbennikaet war ar produiñ dafar pedagogel brezhonek. Talvoudekaat ar glad yezhel zo unan eus obererezhioù pennañ ar programm 4. Gant ar Gevrat-steuñv eo bet fiziet al labour-se en Ofis ar Brezhoneg. Lodenn ar Stad (Ministrerezh ar Sevenadur) zo kalz bihanoc'h eget hini ar Rannvro hag a gemer an div drederenn eus ar programm-se e karg.

Dasparzh emouestloù ar Stad er stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 dre oberenn

E-maez ar budjed gouestlet da bolitikerezh ar c'hoskor (ar gelennerien, kuzulierien pedagogel, ATOS*) a ra 91% eus emouestloù ar Stad, ez eus tri c'hard eus e berzh er stagadenn a oa rakwelet er Gevrat-steuñv he-unan dija. Da 770 000 € e sav emouestloù nevez ar Stad evit ar brezhoneg war ar prantad 2000/2006, da lavaret eo 2% eus hollad he emouestloù.



Echu eo ar Gevrat-steuñv-se. E miz Ebrel 2007 o deus sinet ar Stad hag ar Rannvro ur gevrat keveliñ nevez evit ar prantad 2007/2013 : ar Gevrat Raktresoù. An oberoù a denn d'ar brezhoneg e stern ar Gevrat Raktresoù az aio c'hoazh d'ober ur stagadenn a-ratozh ha ne vint ket e-kreiz ar Gevrat he-unan.

DGLFLF* karget da genober evit talvoudekaat yezhoù Frañs

Evit ar Stad e vez kenurzhiet ar politikerezh yezh gant an DGLFLF (Délégation Générale à la Langue Française et aux Langues de France). Ledanaet e oa bet kefridi an DGLF da yezhoù all Frañs e 2001. Karget eo da wareziñ, da dalvoudekaat yezhoù Frañs ha da genaozañ an oberoù a vo lakaet da dalvezout gant renerezhioù rannvroel an aferioù sevenadurel (an DRAC*où). Peseurt kefridioù ouzhpenn zo gantañ neuze ?


- mirout ha talvoudekaat ar glad yezhel dre gomz pe dre skrid
- skoazellañ an embann war ar yezhoù rannvro pe er yezhoù rannvro gant ar programm "Librairies des langues de France"
- skoazellañ ar gennadoù e-lec'h ma vez krouet er yezhoù rannvro (c'hoariva, kleweled, kan,...).

Krouet e oa bet Arsellva implijoù ar yezhoù e 1999 a-benn anavezout gwelloc'h glad yezhel yezhoù Frañs. Dre c'halvoù da ginnigoù e vez kaset enklaskoù da benn gant kreizennoù enklask. Evel-se e oa bet skoazellet Ensavadur Broadel ar Studioù Poblansouriezh (an INED e galleg) evit dielfennañ an disoc'hoù a denne da yezhoù Frañs en enklask "Etude de l'histoire familiale" graet gant an EBSSA* e 1999. Un darn vat eus budjed an DGLFLF* a denn da yezhoù Frañs a vez gouestlet d'an embann er yezhoù rannvro. Skoaziadennoù foran a vez roet d'al levraouegoù evit prenañ levrioù er yezhoù rannvro pe levrioù diwar o fenn ivez.

Aozet e oa bet **asizoù yezhoù Frañs** evit ar wezh kentañ gant an DGLFLF* diwar atiz ministr ar Sevenadur hag ar C'hehentiñ e miz Here 2003. E-kerzh an divizoù e oa bet anv eus reiñ ur statud gwirion da yezhoù Frañs, ha prederiet e oa bet war demoù zo a-benn diazezañ ur politikerezh yezh :

- an ezhomm da zegemer ur reolennadur evit yezhoù Frañs
- ar soñj fiziout er strollegezhioù foran kelenn ar yezhoù rannvro e framm an arnodañ
- gwellaat kaier kargoù ar mediaoù (skingomz ha skinwel) a-benn ledanaat plas yezhoù Frañs enno.

Da-heul an asizoù n'eus deuet netra fetis avat. Eus pell e vez heuliet teuliad ar yezhoù bihanniver gant an DGLFLF* e gwirionez. Kas ar galleg war-raok a chom pal pennañ ar framm-se. N'eus nemet oberoù hag a denn d'ar galleg a zo meneget el lodenn a denn d'ar glad yezhel e budjed 2006 Ministrerezh ar Sevenadur hag ar C'hehentiñ, zo kaeroc'h.



Rannadur ar budjed "galleg ha yezhoù Frañs" e 2006 en euroioù

Tost ur c'hard eus budjed "galleg ha yezhoù Frañs" a oa bet gouestlet da yezhoù Frañs e 2004, abalamour da aozañ asizoù kentañ yezhoù Frañs peurgetket. Digresket eo ar feur da 22% adalek ar bloavezh 2005 avat. An darn vrasañ eus ar budjed-se a vez gouestlet d'ar galleg atav.

Evit kelaouiñ : ne dalvez budjed "galleg ha yezhoù Frañs" nemet 0,05% eus budjed ar sevenadur, budjed ar sevenadur e-unan ne dalvez nemet 1% eus budjed ar Stad.

Klozadur darnel

Daoust d'an atizoù diavaez pe diabarzh n'eus bet araokadenn ebet evit statud gwirel ar yezhoù rannvro e Frañs. Ar yezh anavezet nemeti eo ar galleg evit ar mare c'hoazh.

Gallout a ra an digreizennañ reiñ an tu d'ar strollegezhioù foran da lakaat diarbennoù a denn d'ar brezhoneg e pleustr e framm ar gwir da arnodiñ, gant ma fello dezho en ober. Embannet en deus Kuzul-rannvro Breizh e oa e soñj goulenn ma vefe kresket e c'halloud war ar sevenadur, gant an arc'hant a vo ezhomm evit lakaat war-sav ur gwir politikerezh yezh. Ar goulenn ofisiel n'eo ket bet graet c'hoazh.

Ral a wezh e vez roet ur plas d'ar brezhoneg er gweledva yezhel meret gant ar Stad ha, pa vez, ne vez nemet ur plas arouezel-kenañ. N'eus servij foran ebet eus ar Stad a vefe kinniget e brezhoneg, da skouer.

Talvoudekaat glad Breizh dre he yezh zo unan eus ar palioù termenet gant ar PASER* a-benn harpañ kenstagded tiriadel ha sokial Breizh. Un dra da gemer e kont e Breizh eo deuet ar brezhoneg da vezañ ha meneget e vez bremañ e-touez ar politikerezhioù Stad. Un nevezenti a-feson eo. Koulskoude, ne'z eer ket pelloc'h eget soñjoù kaer evit ar poent ha ne lakaer ket c'hoazh oberoù fetis da dalvezout.

Termenet e oa bet obererezh ar Stad evit ar brezhoneg er Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006. Adtermenet e oa bet emouestloù ar Stad evit ar brezhoneg er stagadenn d'ar Gevrat-steuñv war an divyezhegezh galleg-brezhoneg e 2002 a-benn resisaat lodenn ar Stad ha hini ar strollegezhioù tiriadel (Rannvro Breizh ha 4 departamant Breizh velestradurel). 91% eus emouestloù ar Stad er stagadenn-se a dalvez evit politikerezh an implijidi (ar gelennerien, ar guzulierien bedagogel, an ATOS*), an tri c'hard eus peurrest he emouestloù a oa rakwelet er Gevrat-steuñv dija. N'eo ket bras emouestloù nevez ar Stad er stagadenn d'ar Gevrat-steuñv a-benn ar fin (n'eo nemet 2% eus hollad he emouestloù). N'he deus ket doujet ar Stad d'he sinadur ouzhpenn-se (s.o. ar pennad sterniet, p. 65).

An DGLFLF* zo karget da genurzhiañ politikerezh ar Stad evit yezhoù Frañs abaoe 2001. Ur c'hard hepken eus kredoù budjed ar sevenadur gouestlet d'ar galleg ha da yezhoù Frañs a ya d'ar yezhoù bihanniver. Kas ar galleg war-raok a chom pal pennañ an DGLFLF*.

Politikerezh yezh ar rannvroioù

Peseurt plas evit ar brezhoneg e politikerezh ar rannvroioù ?

Gant **Kuzul-rannvro Breizh** e oa bet taolet evezh ouzh ar brezhoneg e-kerzh ar respetad tremenet (1998/2004) muioc'h eget na veze graet kent. Araokadennoù a oa bet graet diwar atiz Jean-Yves Cozan peurgetket (besprezidant ar Rannvro, sammet gantañ ar garg da gas identelezh Breizh war-raok). Ar youl da vont war-zu ur politikerezh yezh a oa enkorfet neuze er programm 247 "promotion de la langue et de la culture bretonnes" ha

resisoc'h c'hoazh en isprogramm 247-2 "promotion de la langue bretonne". Krouidigezh Ofis ar Brezhoneg (1999) ha sinadur ur stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 war an divyezhegezh (stagadenn bet sinet e 2002) a c'heller reiñ da skouer eus an araokadennoù bet graet d'ar mare-se.

Un doare da briziañ emdroadur spered ar bolitikerien e-keñver ar brezhoneg e oa bet ar c'houlzad kabaliñ* evit an dilennadegoù rannvro e 2004. Evit ar wech kentañ, kalz a listennoù o doa lakaet menegoù brezhonek en o frammoù politikel*; sed aze ar pezh o doa graet al

listennoù pennañ (PS*, UMP*). Un arouez eo eo deuet saviad ar brezhoneg da vezañ ur c'hraf sirius en tabutoù politikel e Breizh. Gant ar PS* hag an UDB* e oa bet embannet diazez ur politikerezh yezh gant pennaennoù resis zoken.

Aet e oa ar C'huzul-rannvro gant an tu kleiz lies (PS*, PC*) harpet gant ar Re C'hlas-UDB* a-benn ar fin. Youl ar muiañ-niver nevez er Rannvro da gas ar brezhoneg war-raok a oa bet kadarnaet gant Jean-Yves Le Drian da-geñver e brezegenn gentañ evel prezidant Kuzul-rannvro Breizh d'an 2 a viz Ebrel 2004: "Une Bretagne forte, c'est une Bretagne qui garantisse la pérennité linguistique tant le lien est étroit entre culture et développement".

Er mizioù war-lerc'h e oa bet krouet ur Bodad labour war ar "Politikerezh yezh", a oa bet lakaet Yann-Ber Thomin en e benn. E karg eus empennañ ha heuliañ ar steuñv evit diorren ar yezhoù emañ ar Bodad labour-se a zo pemzek dilennad eus kostezennoù disheñvel ezel anezhañ.

En diskar-amzer 2004, un destenn "Pour une vision stratégique, partagée et ambitieuse de la Bretagne" he doa diskuliet petra a oa ahelioù pennañ politikerezh hollek ar C'huzul-rannvro nevez. E-touez an daouzek labour da vezañ kaset da benn a-gevret ez eo gouestlet an dekvet da sevel ur politikerezh yezh¹. N'eo ket bevennet d'ar Rannvro ar strivoù zo d'ober gant ar politikerezh-se: ar Stad, ar c'hevredigezhioù, ar c'humunioù, ar c'humuniezhoù kumunioù, ar broioù hag an departamantoù zo kinniget er skrid evel kevelerien ar Rannvro.

¹ An nawvet labour eo deuet da vezañ er "Gevrat evit Breizh" bet embannet da-geñver eil Asizoù rannvroel tiriadoù Breizh.

Ur skrid divyezhek diwar-benn ar politikerezh yezh ("Ur politikerezh yezh evit Breizh") a oa bet degemeret a-unvouezh gant Bodadenn rannvroel Breizh d'ar 17 a viz Kerzu 2004. Ennañ ez embanner ez eo "anavezet end-ofisiel, e-kichen ar galleg, ar brezhoneg hag ar gallaoueg, yezhoù Breizh (gant Kuzul-rannvro Breizh)". Pouezañ a reer en destenn-se war an ezhomm da lakaat pemp departamant Breizh e-barzh an taol. Talvoudegezh ur statud ofisiel evit ar brezhoneg zo lakaet war wel ivez hag embannet eo soñj Kuzul-rannvro Breizh goulenn gant ar Stad ma vo kresket e veli war ar sevenadur, gant an arc'hant a vo ezhomm evit lakaat war-sav ur gwir politikerezh yezh.

Kinnigoù pleustrek da gas ar yezh war-raok zo graet a-hend-all; diverret int amañ, er pennad sterniet "Kinnigoù pennañ politikerezh yezh Rannvro Breizh". Daoust ma lakaer ar pouez war diorren ar c'helenn, n'eo ket disoñjet an ezhomm zo da lakaat muioc'h ar yezh war wel er vuhez foran koulz hag er vuhez sokial ha prevez.

Kinnigoù pennañ politikerezh yezh Rannvro Breizh evit ar brezhoneg

A - Chadenn deskiñ ar yezh

a - Er skolioù

- Kaout 20 000 skoliad er c'hlasoù divyezhek a-benn ar bloavezh 2010.
- Stummañ 150 kelenner bep bloaz.
- Embann dafar pedagogel ha diorren ostilhoù nevez.
- Broudañ ar skolidi da vont war micherioù brezhonek er-maez eus bed ar c'helenn.
- Klask kenlabourat gant ar Skolioù-meur evit kas war-raok an enklaskoù sokioyezhoñiel (yalc'hadoù doktorelezh) a ra diouer bremañ.

b - Er familhoù

- Delc'her ul liamm etre ar vrezhonegerien a-vihanik ha skolidi an hentadoù divyezhek.
- Niveriñ ingal ar vrezhonegerien.

c - Stummadur an oadourien

- Kas ur politikerezh a-youl evit ma kreskfe ar goulenn ha ma klotfe ar c'hinnig gantañ.

d - Brudañ

- Kas war-raok ha brudañ ar gelennadurezh divyezhek hag ar c'hentelioù evit an oadourien, dre ar radio, an tele hag ar c'hazetennoù.

B - Diorren an implij eus ar yezh er vuhez sokial ha foran

a - Ar vuhez sokial ha foran

- Broudañ ar strollegezhioù lec'hel da skoulmañ emglevioù gant ar Rannvro evit kas en-dro politikerezhioù divyezhegezh hollek war o zachenn: sevel servijoù e brezhoneg (magourioù, kreizennoù dudi, kampoù ha stajoù vakañsoù...), staliañ panelloù heñchañ divyezhek, skignañ paperennoù divyezhek, tuta ha stummañ implijidi.

b - Ar mediaoù

- Radio: skignañ brezhoneg e Breizh a-bezh eo ar pal; met da gentañ skoazellañ ar radioioù kevredigezhel ha bountañ re ar servij publik da ginnig muioc'h a draoù a-feson e brezhoneg.
- Skinwel: sevel ur chadenn skinwel divyezhek publik evit Breizh.
- Kas ar c'hleweled e brezhoneg war-raok: stummañ tud a vicher war dachenn ar c'hrouiñ; skoazellañ ar c'hrouiñ, ar produiñ hag an advouezhiañ; skignañ an traoù krouet e brezhoneg dre veur a zoare.
- Prederiañ evit reiñ plas d'ar brezhoneg en teknologiezhioù nevez.

C - Broudañ ar groudigezh sevenadurel e brezhoneg

a - Embann

- Reiñ skoazell d'an embann ha d'ar skignañ levrioù brezhonek.
- Reiñ yalc'hadoù evit skrivañ ha treiñ, dreist-holl evit ar re yaouank hag ar grennarded.
- Skoazellañ muioc'h skignerezh ha bruderezh al levrioù brezhonek.

b - Ar c'hoariva hag ar c'han

- Sikour stummañ aktored a vicher ha stummañ war micherioù an arvestoù hag ar c'hontadennoù.
- Skignañ an abadennoù en holl lec'hioù sevenadurel hag er gouelioù, dre emglevioù etre an aozadurioù-se hag ar C'huzul-rannvro.

D - Reiñ lañs d'an divyezhezh e Kuzul-rannvro Breizh

- Sevel ur servij "brezhoneg" evit ma vo kemeret ar brezhoneg e kont, ha brudet, gant holl bolitikerezhioù ar Rannvro.
- Lakaat tamm-ha-tamm panneloù divyezhek war ar savadurioù hag ar staliadurioù all zo d'ar Rannvro.

→ Digeriñ embannadurioù ha lec'hienn Genrouedad ar Rannvro d'an divyezhegezh.

→ Delc'her kont eus ar brezhoneg evit stummadurioù an implijidi.


E - Lakaat da dalvezout

→ Lakaat ar politikerezh yezh da dalvezout en ur zalc'her kont eus an diforc'hioù zo etre ar broioù hag eus ar goulenn a gaver enno e-touez an dud. Lakaat un termen da bep pal.

→ Reiñ ar statud DFKS* da Ofis ar Brezhoneg evit solutaat e ziazez evel benveg da lakaat da vont en-dro politikerezh yezh ar Rannvro.

Pal ar Rannvro evit kresk poblañs ar skolioù divyezhek

Techet eo kresk bloaziek poblañs an hentadoù divyezhek da c'horrekaat goustad a vloaz da vloaz (abaoe 1999 peurgetket). Pal ar Rannvro a 20 000 skoliad er c'hlasoù divyezhek a-benn 2010 a dalvez mont a-enep an tech-se en ur lakaat ar pevar bloavezh-skol a zeu da gaout ur c'hresk brasoc'h-brasañ (16% eo ar c'hresk keitat ret eus 2007 da 2010; gw. an daolenn amañ da-heul).



Ar c'hresk bloaziek a vefe ezhomm da bep distro-skol eus 2007 da 2010 a-benn tizhout ar pal a 20 000 skoliad divyezhek

| | 2001 | 2002 | 2003 | 2004 | 2005 | 2006 | 2007 | 2008 | 2009 | 2010 |
|--------------------|-------|-------|------|------|-------|-------|-------|-------|-------|-------|
| Kresk bloaziek (%) | 12,69 | 10,63 | 8,60 | 8,85 | 7,76 | 6,4 | 11,6 | 14,4 | 17,5 | 20,7 |
| Niver a skolidi | 7386 | 8171 | 8874 | 9659 | 10409 | 11075 | 12400 | 14100 | 16600 | 20000 |

Diwar ar martezeadennoù bet savet en teuliad "An distro-skol en hentadoù kelenn divyezhek - Bloavezh 2006/2007" [Arsellva ar brezhoneg, p. 10-15].

Siwazh **n'eus budjed resis ebet a-dal d'ar c'hinnigoù-se**; n'anavezzer nemet ur sammad hollek gouestlet d'ar brezhoneg (gw. ar rannbennad amañ da-heul).

Diouer a balioù fetis ha sifret zo evit lakaat ar c'hinnigoù-se da dalvezout. Ul labour donaat a vefe d'ober, da skouer, evit termenañ an oberoù da gas evit ma'z afe pep hentad war-raok war an dachenn a-benn tizhout an 20000 skoliad er c'helenn divyezhek a-benn 2010. Padal n'he deus Rannvro Breizh termenet steuñv diorren ebet evit kas ar pal-se da wir (seurt steuñvoù liesvloaziek savet dre genemglev etre ar Rannvro hag ar Rektoriezh zo war ar stern en Akwitania evit an euskareg, e Midi-Pyrénées evit an okitaneg, hag e Lengadog-Roselhon evit an okitaneg hag ar c'hatalaneg² koulskoude; al lezenn Fillon a vroud da vont war an tu-se³). Ar martezeadennoù meneget er pennad sterniet diaraok zo bet savet gant Ofis ar Brezhoneg; n'int ket bet studiet gant ar Bodad-labour war ar politikerezh yezh evit ober kinnigoù d'ar Rektoriezh evelkent.

² Mammennoù: Rannvro Akwitania, Rannvro Lengadog-Roselhon.
³ Gw. p. 49.

War-bouez he ferzh e Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro, n'he deus Rannvro Breizh liamm strizh ebet gant Rektoriezh Roazhon evit kas an deskadurezh divyezhek war-raok. Posupl e vefe koulskoude: e-giz m'eo bet skrivet amañ a-us, **Rannvro Lengadog-Roselhon** zo o prientiñ ur c'henemglev gant Rektoriezh Montpellier evit diorren kelenn an okitaneg (ur c'henemglev all zo evit ar c'hatalaneg); e-touez palioù all eo rakwelet ennañ ez afe da 5% feur an deskadurezh divyezhek a-benn 2015 (da lavaret eo e vefe lieskementet ar feur-se dre 14 en ur ober dek vloaz, pa fell da Rannvro Breizh e vefe lieskementet dre 2 en ur ober pemp bloaz hep kenemglev a-ratozh).

Mankoù a c'heller merzout e testenn ar politikerezh yezh ivez. N'eus bet lakaet pal sifret ebet d'an niver a zeskidi gant ar c'helenn brezhoneg en eil derez pe gant ar c'helenn d'an dud deuet. En islodenn A-b ("Chadenn deskiñ ar yezh er familhoù") e reer anv, dreist-holl, eus skoulmañ darempredoù etre brezhonegerien a-vihanik (da lavaret eo tud war an oad) ha skolidi an hentadoù divyezhek. Ne zeu ket splann pa lenner ar skrid an ezhomm da brederiañ war an doareoù da vroudañ ar gerent yaouank da gomz brezhoneg ouzh o bugale.

Skouerioù eus Kembre a c'hellfe bezañ lakaet da dalvezout e Breizh war an dachenn-se. Ar raktres "Twf" (douget gant **Bwrdd yr Iaith Gymraeg**) a glask broudañ an dud da zesevel o bugale e kembraeg. Strivoù a ra dreist-holl e-touez ar familhoù "kemmesket", ar familhoù ma n'eus nemet unan eus ar gerent a oar yezh ar vro. Pouezus eo e vefe treuzkaset muioc'h ar brezhoneg gant seurt familhoù e Breizh ivez. Ur yalc'had 500000 lur sterling (727 200€) a oa bet gouestlet d'ar raktres-se gant Gouarnamant Kembre e-pad ar marevezh tri bloaz 2001/2004. **Mudiad Ysgolion Meithrin** zo un aozadur all a stourm evit ar c'hembraeg gant ar vugale dindan pemp bloaz; meret e vez gantañ ul lec'hienn Genrouedad da guzuliañ ar gerent a fell dezho e klevfe o bugale kembraeg abred ha pa ne vefent ket kembraegerien int o-unan.

Dale zo ivez war tachennoù all a c'hellfe ar Rannvro pouezañ warno. Digant an **SNCF***, da skouer, e c'houlenn ar gevredigezh **Ai'ta!** e krogfe tiez-gar Breizh da vezañ divyezhekaet. Gant ar Rannvro eo aozet servijoù rannvroel an tren e Breizh abaoe 2002. Kement ha doujañ d'an div frazenn a gaver e pennad digeriñ lodenn B testenn he folitikerezh yezh ("Diorren an implij eus ar yezh er vuhez sokial ha foran"): "Ne zle ket ar brezhoneg bezañ ur yezh desket er skol nemetken. Ret eo komz ha klevout anezhañ war bep tachenn eus buhez ar gevredigezh." ez eus bet lakaet ur mellad a denn d'an divyezhegezh (mellad 21) e roll ar c'hargoù ar c'hendivizad bet sinet gant Rannvro Breizh hag an SNCF* e deroù 2007. Seul daol e vez goulennet bremañ digant ar c'humunioù ha fellout a ra dezho e vefe ur panellerezh divyezhek en o ziggar pa erru ar mare nevezin hemañ.

Kement hag efedusaat obererezhioù Rannvro Breizh evit ar brezhoneg ez eus bet savet ur bodad da briziañ bep bloaz kas war-raok ar politikerezh yezh.

Un araokadenn a bouez eo he defe ar Rannvro savet ur steuñv politikerezh yezh anavezet evel-henn. Mankoù diazez a verzer ennañ koulskoude pa geñverier anezhañ gant dielloù kevatal evit Kembre, Katalonia, pe Skos zoken (nevesoc'h zo). E gwirionez, n'eus pal ebet - nag uvel nag uhel - a denn d'an niver a yezherien (nag ouzh o feur er boblañs dre-vras) daoust da badusted ar yezh bezañ abeg bezañ an destenn-se. Hogen ar pal kentañ e rankfe bezañ hag ar palioù all a zeufe d'e heul. Roadennoù klok ha pizh a vefe ezhomm da gaout war an dodenn-se evel-just (gw. kudenn an niveridigezh el lodenn diaraok).



Lakaat ar gwir da arnodiñ da c'hoari

Penaos kas ur politikerezh yezh da wir, er fedoù, pa n'emañ ket an holl varregezhioù zo ezhomm e dalc'h ar re o deus savet ar politikerezh-se? Splann e teu ar gudenn-se war wel evit ar pezh a sell ouzh ar c'helenn divyezhek. Evit ma vefe tizhet pal an 20 000 skoliad divyezhek a-benn 2010 e vefe dav da Guzul-rannvro Breizh sevel ur steuñv diorren hollek harpet war gwirvoud pep hentad e pep departamant d'an nebeutañ.

Rektoriezh Roazhon eo a ren war an deskadurezh e Breizh velestradurel ha poan he deus Rannvro Breizh da gaout krog en dra-se war a seblant. Perak ne vefe ket savet ur c'henemglev a-ratozh war skouer ar pezh zo war ar stern e rannvroioù all e Frañs, pe c'hoariet muioc'h war Guzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro evit kas an traoù war-raok? Tu a vefe da c'houlenn en em gavfe ar Bodad labour war ar

politikerezh yezh gant pennadurezhioù ar Rektoriezh evit studiañ lakaat an doareoù ret da dalvezout evit kas da wir palioù ar Rannvro, da nebeutañ. Ma ne vefe ket a-walc'h e c'hellfe c'hoazh Rannvro Breizh goulenn e vefe treuzkaset dezhañ ar barregezhioù war ar c'helenn divyezhek (hag ur budjed a-ratozh).

Gant ar **gwir da arnodiñ** e c'heller lakaat ur politikerezh foran da dalvezout en un tiriad resis hag e-pad ur maread resis (gw. ar pennad sterniet, p. 26). E Breizh e vefe un dra vat goulenn en ofisiel ober gant ar gwir-se evit ar c'helenn divyezhek pe evit ar politikerezh yezh. Ar bed kevredigezhel a vount war an tu-se, ar C'huzul-rannvro a sav a-du gant ar soñj (lenskrivet eo e skrid e bolitikerezh yezh) hag e brezidant e-unan en deus kadarnaet e youl ober ur c'hinnig lezenn dre ar Parlamant evit goulenn ar gwir-se evit politikerezh sevenadurel (ha yezhel) Breizh (e embannadenn Ouest-France an 3-4 a viz Even 2006).

Ha gant **Kuzul-rannvro Broioù-al-Liger** ?

N'eus stignad ebet evit ar brezhoneg e Rannvro Broioù-al-Liger. Ar bevennoù melestradurel a laka departamant al Liger-Atlantel e-maez eus Rannvro Breizh ne aesaont ket an traoù hag, ha pa ne vefe ket dister, e chom bihan niver brezhonegerien an departamant-se. Koulskoude en deus embannet ar C'huzul-rannvro nevez bezañ prest da gemer perzh er politikerezh yezh; met, evit doare, n'eo ket tuet ar c'hevredigezhioù lec'hel da glask kenlabourat gantañ evit poent.

N'eo ket dileuriet Kuzul-rannvro Broioù-al-Liger e Kuzul Akademiezh Naoned ar yezhoù rannvro, en desped d'al lezenn. Ober war-dro politikerezh yezh an Akademiezh eo kefridi ar c'huzul-se; siwazh ne bled nemet gant stadañ ar c'helenn divyezhek ha n'eo ket gant e ziorren. Ret eo lavaret eo bet krouet ar c'huzul-se diwezhat a-walc'h (2003) ouzhpenn-se, ha n'eo bet bodet nemet ur wech e 2005 (e lec'h div wech bep bloaz da nebeutañ hervez lezenn).

War greskiñ ez a ar budjedoù gouestlet d'ar brezhoneg gant Rannvro Breizh abaoe bloavezhioù

N'eus ket bet graet kalz a oberoù eeun liammet mod pe vod ouzh ar brezhoneg gant Rannvro Breizh betek-henn; arc'hantaouiñ pe skoazellañ oberoù aozadurioù all a vez graet ganti kentoc'h. Anat eo e talc'h da emdreiñ al lodenn gouestlet d'ar brezhoneg e budjed bloaziek Rannvro Breizh abaoe 1999.

3723 000€ a ya gant ar programm 721 ("Promouvoir la langue bretonne et l'expression gallèse") e budjed kentañ 2006 Rannvro Breizh neuze. Da lavaret eo e roer aze d'ar yezhoù rannvroel **0,47%** eus ar budjed kentañ hollek

(heñvel e oa ar feur e 2005); ha hervez sifroù ar budjed kentañ-se **e kresk eus 8,1%** ar sammad roet d'ar programm 721 e 2006 e-keñver ar pezh a oa e budjed kentañ 2005.

Met un **"ahel politikel treuz"** eo ar politikerezh yezh hervez digoradur budjed kentañ 2005 Rannvro Breizh. Da lavaret eo, ouzhpenn ar programm gouestlet d'ar brezhoneg ent resis, e rank ar politikerezh-se bezañ lakaet da dalvezout e rannoù all eus budjed ar Rannvro. **Diwar se e vefe poellek e vefe stag ar gefridi brezhoneg ouzh pennrenerzh ar servijoù** (evel kefridioù treuz all er Rannvro) ha n'eo ket ouzh renerezh ar sevenadur evel m'emañ evit ar poent. Anv zo e vefe graet muioc'h-mui an troc'h er Rannvro etre ar pezh a denn d'ar politikerezh yezh hag ar pezh a denn d'ar politikerezh sevenadurel ouzhpenn-se.

Menegoù eus ar yezh a gaver e meur a rann eus budjed ar Rannvro c'hoazh e gwirionez (gwir eo evit rann ar stummadur a-hed ar vuhez, hini al liseoù, hini ar c'hleweled pe hini ar brudañ c'hoazh); diresis e chom an doare ma vo lakaet ar pennaennoù-se e pleustr avat.


Er fedoù e vez dispignet bep bloaz evit ar brezhoneg muioc'h eget ar sammad gouestlet d'ar programm a-ratozh er budjed kentañ. Muioc'h eget peder fempvedenn eus dispignoù Rannvro Breizh evit ar brezhoneg e 2005 a oa bet graet gant budjed ar sevenadur memes tra.

Pa seller ouzh munudoù dispignoù ar Rannvro (gant ar "Recueils des actes administratifs"), e verzer en em gav traoù a denn d'ar brezhoneg er-maez eus ar programm a-ratozh (programm 721 "Promouvoir la langue bretonne et l'expression gallèse" abaoe 2005): an advouezhiañ e brezhoneg a gaver er programm 741 ("Développer l'image et soutenir l'activité audiovisuelle") da skouer, pe ar raktresoù embann e brezhoneg er programm 711

(“Créer et diffuser en Bretagne”). Traoù all c’hoazh a vez arc’hantaouet gant programoù na dennont ket d’ar sevenadur : implijoù yaouank (programm 225), sikourioù d’ar stummadurioù micherel (programm 312), ober evit terkerezh kevraouet an triadoù (programm 101), h.a. A-hend-all e vez kontet er programm 721 traoù a denn d’ar gallaoueg, pe c’hoazh traoù a denn kentoc’h d’ar sevenadur eget da yezhoù Breizh.

Diaes eo sevel ur renabl peurglok eus an holl skoaziadennoù bet roet evit un dra bennak a denn d’ar brezhoneg neuze, ha diouzh an traoù zo bet skoazellet eo

kudennek a-wechoù gouzout hag-eñ e talvezont da vat evit ar yezh (gouelioù, saloñsoù, emglevioù-bro da skouer). Ar sammadoù kinniget er grafikoù amañ da-heul **evit ar brezhoneg** zo bet jedet o sellet pizh ouzh ar roadennoù a gaver er “Recueils des actes administratifs” ha gant harp servijoù ar Rannvro. Ne lavaromp ket eo peurglok ar sifroù-se, met diazezet int war diarbennoù heñvel eus an eil bloavezh d’egile.




Emdroadur an dispignoù (en €) bet graet evit ar brezhoneg e-keñver budjed hollek Rannvro Breizh eus 2002 da 2005

Kresket eo teir gwech muioc’h an dispignoù evit ar brezhoneg eus 2002 da 2005 (+42%) eget budjed hollek ar Rannvro (+13% war an hevelep maread) e-giz ma vez gwelet gant ar grafik-mañ. Ar c’hresk bloaziek evit ar brezhoneg a oa da 10,7% e 2003, 8,8% e 2004 ha 18,3% e 2005 hervez an doare jediñ-mañ.

Emdroadur rannoù an dispignoù (en €) bet graet gant Rannvro Breizh evit ar brezhoneg eus 2002 da 2005

E 2005 eo bet kreñv ar c’hresk gant an dispignoù evit ar c’helenn divyezhek : gant ar bourvezadenn* a-ratozh d’al liseoù hag adframmadur skol-vamm divyezhek Rostrenenn eo deuet ar c’hresk-se dreist-holl (met n’eus bet efed ebet war sifroù ar skolidi d’an distro-skol 2005). Lodenn an embann ivez zo aet war greskiñ : muioc’h a levrioù zo bet embannet e 2005 eget e 2004 (tost d’un hanter muioc’h a levrioù), met un digresk a oa bet e 2004 e-keñver 2003 (gw. p. 100). Bras a-walc’h eo ar c’hresk evit ar c’helenn d’an oadourien hag an aozadurioù sevenadurel a-hend-all (met diouzh ar raktresoù a vez kinniget e c’hell an traoù cheñch eus un eil bloavezh d’egile). Ret eo menegiñ ez eus bet un digresk evit ar pezh a denn d’ar c’hleweled.



Ur politikerezh sevenadurel nevez a oa bet degemeret gant Kuzul-rannvro Breizh d’ar 24 a viz Du 2005. Siwazh, n’eus resiadenn ouzhpenn ebet en destenn-se evit ar pezh a denn d’ar politikerezh yezh (n’eus nemet e bevar fal pennañ a zo diverret p. 32).

Ar budjed gouestlet d'ar yezhoù rannvro gant Kuzulioù-rannvro all e Frañs

Diaes-tre eo keñveriañ yezhoù kenetrezo pa vez disheñvel o dibarderioù, o zuioù kreñv hag o ezhommoù. Hag evit ar pezh a denn da vudjed politikerezh yezh ur rannvro, diouzh an traoù zo bet skoazellet eo diaes a-wechoù gouzout hag-eñ e talvezont da vat evit ar yezh, evel m'eo bet lavaret dija. Setu dangorel dre ret eo pep brasjedadenn hollek a vez embannet. Dibosupl eo, koulz lavaret, gouzout **ent resis** pegement a vez gouestlet d'ar yezh hec'h-unan.

Ur gwir gael a vefe da sevel evit lakaat keñver-ha-keñver politikerezhioù yezh rannvroioù Frañs. Da c'hortoz eo talvoudus, memes tra, kaout ur soñj bennak eus ar pezh a vez graet gant Kuzulioù-rannvro all.

Dispignoù graet e-pad ar bloavezh 2004 gant ar C'huzulioù-rannvro a sell an dra-se outo

| | Brezhoneg | Euskareg | Katalaneg | Okitaneg |
|---|--------------|--------------|-------------|-------------|
| Sammad dispignet gant ar C'huzulioù-rannvro (en €) | 3 930 000 | 840 000 | 600 000 | 2 700 000 |
| Niver a yezherien deuet d'o oad e Frañs (EBSSA*, 1999) | 304 000 | 74 000 | 132 000 | 526 000 |
| Dispignoù ar Rannvroioù evit ar yezhoù dre yezher deuet d'e oad (en €) | 12,93 | 11,35 | 4,55 | 5,13 |

Gwir eo lavaret ez eus bet roet muioc'h a skoaziadoù rannvro d'ar brezhoneg eget n'eus bet roet d'an okitaneg daoust m'eo brasoc'h tachenn an okitaneg ha brasoc'h ivez niver e yezherien. Met kammet eo ar geñveriadenn-se dre m'emañ an okitanegerien war veur a rannvro: Kuzulioù-rannvro zo o deus ur politikerezh yezh evit an okitaneg pa ne ro re all gwenneg ebet (pe dost) d'ar yezh. Er c'hontrol emañ ar brasañ niver eus ar vrezhonegerien o chom e Breizh velestradurel he-unan. Ouzhpenn-se eo disheñvel lusk ar yezhoù-se: ne oa nemet tost da 4 500 bugel skoliataet en hentadoù divyezhek Okitania d'an distro-skol 2005 pa oa o niver en tu hont da 10 000 e Breizh.

Ur geñveriadenn all a vefe tu d'ober gant an euskareg. Un tamm muioc'h a arc'hant dre yezher zo gouestlet d'ar brezhoneg gant Kuzul-rannvro Breizh eget n'eus roet d'an euskareg gant Kuzul-rannvro Akwitania c'hoazh. Kalz tostoc'h emañ an eil sifr d'egile ar wech-mañ avat. N'eo ket heñvel lusk ar yezhoù-se kennebeut a c'heller soñjal, met gwir eo ivez e tenn Norzheuskadi splot eus ar pezh zo graet evit ar yezh e Sueuskadi (levrioù skol, skolioù-meur, kleweled, h.a.). N'eus eskemm ebet a seurt-se evit ar brezhoneg.

Un nebeud oberoù graet c'hoazh gant ar C'huzul-rannvro nevez

E-touez servijoù ar C'huzul-rannvro nevez e kaver e-kreiz renerezh ar sevenadur **ur gefridi brezhoneg**. E miz Here 2006 hepken e oa bet tutaet ar bennefridiourez*, daou vloaz hanter goude an dilennadegoù Rannvro (e miz Kerzu 2005 hepken e oa bet embannet ar c'hinnig-labour). En he c'harg emañ "ober ma vo kemeret ar brezhoneg e kont, ha brudet, e-barzh holl bolitikerezhioù ar Rannvro" (hervez skrid ar politikerezh yezh). Anv zo ivez e rafe ar servij war-dro respont e brezhoneg en anv ar Rannvro pa vo ezhomm, koulz ha diorren implij ar brezhoneg e kehenterezh ar Rannvro (pedadennoù, hetoù, lec'hienn Genrouedad,...) hag aozañ darvoudoù da vrudañ ar brezhoneg.

Oberoù bihan a ziskouez ar youl a vez embannet gant ar C'huzul-rannvro nevez da gas ar brezhoneg war-raok en e ziabarzh. Divyezhek e oa ar gartenn hetoù evit 2005 da skouer, al logo nevez zo bet graet ur stumm ofisiel brezhonek anezhi (met n'eo nemet gant ar bed

kevredigezhel ha war TER*ioù zo e vez implijet evit ar poent), ha sinet eo bet stumm brezhonek ar "Feur-emglev etre Rannvro Breizh hag ar Vodadenn Vroadel evit Kembre" a oa bet sinet gant prezidant ar C'huzul-rannvro diaraok e kembraeg, saozneg ha galleg hepken, nebeutoc'h eget bloaz a-raok. An destenn da ginnig ar politikerezh yezh a zo bet troet e brezhoneg evel-just; met n'eo bet skignet dindan stumm ul levrig divyezhek gant karta c'hrafek nevez ar Rannvro nemet e deroù 2007. Ingaloc'h e labour servij Treiñ-Aliañ Ofis ar Brezhoneg evit ar Rannvro bremañ: pennadoù-stur, testennoù emglevioù troet e brezhoneg evit servijoù liesseurt (servij ar c'hehentiñ, servij ar c'henlabour etrerannvroel, servij an embann, h.a.).

Ezhomm zo da vont pelloc'h gant seurt traoù, splann eo, d'an nebeutañ evit ma vefe kengret emzalc'h diabarzh ar C'huzul-rannvro gant ar soñjoù a vez embannet dre ar politikerezh yezh: panellerezh diabarzh divyezhek, ur plas bennak d'ar brezhoneg e skoroù kehentiñ ar Rannvro (divyezhekaat al lec'hienn Genrouedad da skouer), h.a.

Klozadur darnel

Daoust d'an emdroadurioù a zo bet da-heul degemeradur ur steuñv politikerezh yezh gant Bodadenn rannvroel Breizh (testenn gentañ a seurt-se e Frañs) e ro kerse ne'z afe ket, war meur a dachenn, pelloc'h eget lakaat palioù ha brasaat ar skoazelloù arc'hant da oberoù fetis ar bed kevredigezhel. Splann eo ne vo ket graet araokadennoù diskoulmus keit ha ne vo ket brasaet galloudoù ar Rannvro en ur mod bennak. War verr dermen e vefe ret kaout emdroadurioù war an dachenn-se o c'houzout ne zle ket ar politikerezh yezh chom bevennet d'ur politikerezh dasparzhañ skoaziadennoù hepken. Met muioc'h zo tu d'ober gant ar barregezhioù zo d'ar Rannvro c'hoazh (war dachenn ar c'hehentiñ hag implij ar yezh da nebeutañ).

Posupl eo e teufe perzh ar rannvroioù en aozadur ar velestradurezh da vezañ brasoc'h-brasañ en Unaniezh Europa, war hir dermen. Gwak a-walc'h e chom ar bazenn-se e Frañs e-keñver ar pezh a vez kavet er Stadoù tro-dro. Daoust da boblañs Kembre bezañ damheñvel ouzh hini Breizh velestradurel ez eo **24 gwech brasoc'h** budjed bloaziek Gouarnamant Kembre eget hini Rannvro Breizh.

Mat eo gouzout e chom budjed Rannvro Breizh a-live gant budjed keitat un departamant; n'eo ket kalz brasoc'h eget budjed ar c'hêrioù bras: budjed kentañ Rannvro Breizh evit ar bloavezh 2005 a oa kement ha

1,6 gwech hini kêr Roazhon pe hini kêr Naoned. Un ezhomm da arnodiñ an digreizennañ sevenadurel a glever neuze evit ma vefe kresket barregezhioù ha peadra Breizh war an dachenn-se. Meneget eo ar soñj-se e testenn ar politikerezh yezh.

Ne glot ket bevennoù Rannvro Breizh gant ment Breizh e gwirionez. Evel-se, ne vez ket kemeret ar brezhoneg kalz e kont gant Rannvro Broioù-al-Liger m'eo en em gavet departamant al Liger-Atlantel. En enep, war greskiñ ez a ar sammad arc'hant gouestlet d'ar brezhoneg gant Kuzul-rannvro Breizh. Degemeradur ur steuñv politikerezh yezh gentañ e 2004 eo an degouezh pouezusañ war an tem-se abaoe m'eo bet krouet an ensavadur rannvroel. Daoust d'ar mankoù meneget ganeomp, ur skoazell-gaer a vefe e lakaat da dalvezout klok war verr dermen evit lakaat un harz da ziskar an niver a yezherien hag evit kreñvaat diazezoù zo eus diorren ar yezh war hir dermen.

Un ezhomm bras zo eus ur youl bolitikel greñv da genurzhiañ, da greñvaat ha da efedusaat al labour a vez graet war an dachenn. Gant se e vefe poellek solutaat statud ha peadra Ofis ar Brezhoneg, "ar benveg da lakaat da vont en-dro politikerezh yezh ar rannvro", hag efedusaat ar c'henlabour etrezañ, ar Bodad labour war ar politikerezh yezh ha servijoù ar Rannvro.

Politikerezh yezh en departamantoù : diforc'hioù bras zo hervez ar C'huzulioù-departamant

Disheñvel-bras eo plas ar brezhoneg er gweledva yezhel eus an eil departamant d'egile

Ar brezhoneg war an hentoù departamant

Aodoù-an-Arvor etre daou zour

War an hentoù departamant da gentañ emañ ar brezhoneg er gweledva yezhel meret gant an departamantoù. Aodoù-an-Arvor eo bet an departamant kentañ bet divizet gentañ, ugent vloaz zo, staliañ panneloù divyezhek war an hentoù meret gentañ. Da hentoù **kornôg an departamant hepken** e oa bet divizet strishaat implij an divyezhegezh d'ar mare-se. Kenderc'hel a ra an departamant da staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek pa vez digoret tammoù hent nevez pe pa vez erlec'hiet panneloù kozh. Aveet madik eo hentoù kornôg an departamant bremañ met un tamm mat a lezober zo deuet war implij an divyezhegezh er bloavezhioù diwezhañ avat. Kalz a venegoù ne vezont ket troet hag alies e kaver fazioù skrivañ. Ne bled ket nemeur an departamant gant anvioù ar c'hêriadennnoù a chom faziet alies.

Penn-ar-Bed er penn a-raok

E 1990 e oa bet divizet gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed kregiñ da staliañ ur panellerezh divyezhek war e rouedad hentoù. E 1998 e oa bet divizet staliañ **bep tro** panneloù e brezhoneg evit ar panneloù nevez staliet. Daoust d'an diviz-se n'eo ket aveet ar rouedad penn-dabenn c'hoazh, met mont a ra an divyezhegezh war-raok ingal. E tost un drederenn eus ar rouedad e oa staliet panneloù divyezhek e 2007, da lavaret eo 1000 km a hentoù aveet e Penn-ar-Bed (ur c'hard a oa aveet e 2002). Bezant-mat e teu ar brezhoneg da vezañ e takadoù zo. Gant se, an departamant ma weler ar muiañ a vrezhoneg eo Penn-ar-Bed.

Koulskoude ez eus bet kiladennoù ivez rak divizet ez eus bet gant servijoù an hentoù chom hep skrivañ stumm reizh brezhonek anvioù ar c'humunioù pa oa heñvel-tre ouzh ar stumm melestradurel. Pa n'eus nemet un diforc'h tired, da skouer evit **Plouzane/Plouzané**, e oa bet

divizet en deroù skrivañ ar stumm brezhonek mat hepken. Ar c'hontrol eo a vez graet bremañ koulskoude pa ne vez mui lakaet nemet ar stumm gallekaet war wel.

Dihun ar Mor-Bihan

Dister-kenañ eo chomet plas ar yezh war hentoù departamant ar Mor-Bihan e-pad pell. Daoust da c'houlennoù strollegezhioù lec'hel zo e nac'he an departamant lakaat panneloù e brezhoneg war an hentoù meret gantañ. Ne oa nemet un nebeud panneloù glad bet staliet war hent An Oriant-Rosko. Kuzul-departamant ar Mor-Bihan, chomet pell diseblant ouzh strivoù an daou zepartamant all, en deus divizet, a-benn ar fin, e miz Du 2004 staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek war e rouedad hentoù.

Gant ar skiant bet prenet en departamantoù all e ouzer ne vo ket divyezhekaet an hentoù departamant en un taol. Aweet e vo ar rouedad pa vo digoret tennadoù nevez pe pa vo erlec'hiet panneloù kozh. Goulenn a raio amzer pa ouzer n'eus nemet un drederenn eus hentoù departamant Penn-ar-Bed zo aweet pemzek vloaz goude diviz staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek war rouedad an hentoù departamant. Staliet eo bet ar panneloù divyezhek kentañ e-kreiz 2005 er Mor-Bihan. Ur araokadenn da vat evit bezañs ar yezh en departamant-se eo atav. Da notenniñ zo eo bet kemeret e kont gant ar C'huzul-departamant araokadennoù ar rouedad skolioù divyezhek un tammig dre-holl hag ez eus bet divizet e vefe lakaet an divyezhegezh war wel e pep lec'h en departamant, hep droukziforc'h. Nebeutoc'h a venegoù a vo troet er reter koulskoude.

Departamantoù reter Breizh : unyezhegezh war an hentoù, plas ebet evit ar brezhoneg

N'eus bet araokadenn ebet gant politikerezh departamant Il-ha-Gwilen na gant hini al Liger-Atlantel. Hiziv an deiz n'eus nemet galleg war an hentoù meret gant an daou zepartamant-se neuze.

Divizet en doa Kuzul-departamant Il-ha-Gwilen chom hep mont war-zu staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek war hentoù an departamant e 1998. E 2002 e oa bet ur preder er C'huzul-departamant evit staliañ ur panellerezh touristel ha glad e brezhoneg avat. Koulskoude n'eo ket bet kaset ar raktres-se da benn e 2007 c'hoazh.

N'en deus ket Kuzul-departamant al Liger-Atlantel lavaret e soñj diwar-benn an divyezhegezh war an hentoù. Dre ma n'emañ ket departamant al Liger-Atlantel e Breizh velestradurel eo diaesoc'h d'an departamant-mañ kas da benn ur preder e-keñver an divyezhegezh, ha pa en defe embannet prezidant a vremañ Kuzul-departamant al Liger-Atlantel e c'hoant da dostaat da Guzul-rannvro Breizh evit kas oberoù boutin da benn.

Nebeut a blas evit ar brezhoneg e politikerezh an departamantoù

E-maez an hentoù e chom dister plas ar yezh alies. N'eus nemet departamantoù Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor a ra un tammig gant ar brezhoneg evit kehentiñ. Ur pennad-skrid e brezhoneg a vez kavet bep tro en **o c'hannadig miziek**. Pennadoù diwar-benn ar glad pe bed ar brezhoneg hepken a vez embannet gant Penn-ar-Bed avat. Pennadoù kannadig Aodoù-an-Arvor zo liesseurtoc'h o danvez.

Gant Penn-ar-Bed e vez graet traoù all memes tra. **Pajennoù Kenrouedad** a denn da bolitikerezh yezh an departamant a c'haller lenn e brezhoneg da skouer. E logo eo al **logo** nemetañ gant brezhoneg warnañ. Pouezus eo reiñ e lec'h d'ar brezhoneg war al logoioù rak gwelet e vezont e pep lec'h. Implijet e vez kalz stumm brezhonek anv an departamant a-hend-all, evel war rouedad kirri-boutin Penn-ar-Bed da skouer. A-benn gwellaat ar servijoù kinniget d'ar velestridi e vez troet e brezhoneg teuliadoù kehentiñ zo pe skoroù kelaouiñ zo. Divyezhek eo teuliadoù ar c'houlzad "klaskerien, treuzerien soñjoù" diwar-benn ar glad yezhel hag e dreuzkas etre ar remziadoù, da skouer. Panellerezh diabarzh pe panneloù kelaouiñ Kuzul-departamant Penn-ar-Bed a vez kinniget en div yezh bremañ. Gouestlet ez eus ur budjed da dreiñ e brezhoneg teuliadoù ar C'huzul-departamant (1000€ zo bet postet d'an ober-se e 2005 evit arc'hantaouiñ an troidigezhioù kaset da benn gant Ofis ar Brezhoneg). N'eus nemet an teulioù sevenadurel breizhek a sell an dra-se outo avat. Evit echuiñ, kinnig a ra ar C'huzul-departamant ur servij enlinenn nevez evit lakaat ar brezhoneg en endro pemdeziek an dud : reiñ a ra an tu da grouiñ ur chomlec'h postel e brezhoneg.

Evit an departamantoù all n'eus netra par. A-wechoù e vez implijet ar brezhoneg war ar c'hartennoù bloavezh mat.

Ur bern tachennoù nevez d'ober ganto

War dachenn implij ar yezh ez eus oberoù aes a c'hallfe an departamantoù lakaat e pleustr : paperennoù talbennet divyezhek (lizheroù, goloioù-lizher, sielloù...), lakaat an div yezh war dafar ha war kirri an departamant hag er c'hehentiñ dre-vras (skritelloù brudañ a bep seurt, pedadennoù, kartennoù-bizit,...). Dre an ober gant ur yezh eo e vez roet ur statud dezhi. Didalvoudekaet e vez ur yezh e spered an dud e gwirionez pa ne vez ket implijet. Atebegezh ar strollegezhioù eo ober gant ar brezhoneg. Tachennoù nevez a c'hall bezañ digoret d'ar yezh gant an departamantoù ma fell dezho.

Ar brezhoneg lakaet e-maez mont en-dro an departamantoù


N'eus departamant ebet a raje gant ar brezhoneg en e vont en-dro da vat. Ne vez kinniget degemer e brezhoneg ebet gant servijoù an departamantoù peurgetket. Ur c'hinnig servij ouzhpenn e vefe koulskoude. Ar skridoù melestradurel n'int ket divyezhek daoust ma c'hall ar brezhoneg bezañ implijet er vuhez foran e-kichen ar galleg, yezh ofisiel ar Republik. Da gentañ e c'hallfe an departamantoù renabliñ an implijidi brezhonegerien ha kinnig ur stummadur e brezhoneg d'ar re a fell dezho, a-benn gallout degemer an dud e brezhoneg. Kinniget e oa bet da implijidi eus Kuzul-departamant Penn-ar-Bed heuliañ ur stummadur brezhonek gant Mervent. Chomet eo ar stummadur-se a-sav siwazh daoust d'ar wellaenn e vefe kinnig servijoù divyezhek er melestradurezhioù.

Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamantoù

Kensinet e oa bet gant departamantoù Breizh velestradurel ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro war an divyezhegezh e 2002. Termenañ a rae ar skrid-se oberoù ar strollegezhioù o doa sinet a-benn diorren an divyezhegezh war tachenn ar skolioù hag e diavaez ar skolioù. Renablet e oa ennañ an darn vrasañ eus oberoù an departamantoù a-du gant ar brezhoneg dija enta.

Emdroadur budjed an departamantoù gouestlet d'ar brezhoneg (en €) eus 2001 da 2005


War greskiñ eo aet ar budjedoù gouestlet d'ar brezhoneg gant an darn vrasañ eus an departamantoù etre 2001 ha 2005 : +15,3% eo o c'hresk e Breizh. Kement ha bezañ resis, budjedoù Il-ha-Gwilen, ar Mor-bihan ha Penn-ar-Bed o deus kresket tra m'o deus digresket kentoc'h re Aodoù-an-Arvor hag al Liger-Atlantel.




Rannadur keñveriet budjed an departamantoù (en €) gouestlet d'ar brezhoneg dre annezad ha dre vrezhoneger e 2005

Penn-ar-Bed eo an departamant a ouestl ar budjed brasañ d'ar brezhoneg dre annezad kenkoulz ha dre vrezhoneger. Er c'hontrol, Aodoù-an-Arvor eo an departamant a ro an nebeutañ dre yezher.

Budjed dre annezad



Budjed dre vrezhoneger




Bihan e chom harp an departamantoù pa jeder ar budjed bloaziek dre annezad gouestlet d'ar brezhoneg. Penn-ar-Bed a chom an departamant oberiantañ evit kas ar brezhoneg war-raok : tost da 2,50 euro dre annezad a ouestl dezhañ. Evit keñveriañ gant dispignoù all, div wezh brasoc'h eo ar budjed dre annezad gouestlet d'an touristerezh gant an departamant-se, ha kalz brasoc'h c'hoazh hini aveiñ an hentoù departamant (53 euro).

Kalz izeloc'h eo skoazell an departamantoù all d'ar brezhoneg: war-dro 50 sent dre annezad hepken a vez roet gant departamant ar Mor-Bihan ha hini Aodoù-an-Arvor evit ar brezhoneg tra ma ro hemañ diwezhañ 20 gwezh muioc'h d'an touristerezh. Dister eo lodenn Il-ha-Gwilen (9 sent) ha hini al Liger-Atlantel (3 sent).

Kadarnaet eo pouez dreist emouestl Penn-ar-Bed pa jeder an dispignoù dre yezher (hervez roadennoù an EBSSA* gant e enklask "Étude de l'histoire familiale"). Merzout a reer ivez ez eo Aodoù-an-Arvor a ouestl an nebeutañ a arc'hant dre yezher, nebeutoc'h eget departamantoù reter Breizh.

E div lodenn bennañ e c'haller renkañ oberoù an departamantoù. Diorren plas ar brezhoneg er c'helenn eo an hini kentañ, ar pezh a dalvez an tañva, an hentadoù divyezhek met ivez stummañ ar gelennerien hag ar c'helenn d'an oadourien. Mod all ez eus un dachenn ledanoc'h a stroll an holl oberoù kaset da benn e-maez tachenn ar c'helenn : plas ar brezhoneg er vuhez foran, talvoudekaat ar glad yezhel, diorren ar brezhoneg er mediaoù ha plas ar brezhoneg er vuhez sevenadurel dre-vras. Diwar-se eo gwall zisheñvel ar sammadoù a vez gouestlet gant pep departamant.




Rannadur keñveriet budjed an departamantoù gouestlet d'ar brezhoneg etre 2001 ha 2005

Merzout a reer pouez dreist Departamant Penn-ar-Bed, evit ar c'helenn peurgetket, en ingaladur ar skoaziadennoù foran.

Oberoù an departamantoù evit kas ar brezhoneg war-raok

Munodoù dasparzh an dispignoù graet gant an departamantoù evit ar c'helenn etre 2001 ha 2005



Dreist d’an departamantoù all emañ perzh **Penn-ar-Bed** war dachenn ar c’helenn. Daou dra bennañ a vez kaset da benn gant ar C’huzul-departamant-se : harpañ ar skolioù Diwan ha kizidikaat ar skolidi d’ar brezhoneg dre an tañva kinniget er c’hentañ derez publik ha prevez.

E Kuzul-departamant **Aodoù-an-Arvor** eo troet an darn vrasañ eus ar politikerezh skoazell d’ar c’helenn divyezhek ha daou framm hepken a resev ar peder fempvedenn eus ar skoaziadennoù : Diwan ha TES*. Da zDiwan e ro ar C’huzul-departamant an div drederenn eus e skoaziadennoù a denn d’ar c’helenn, abalamour d’ar skoazell da skolaj Diwan Plijidi dre ar greizenn da dalvoudekaat ha da dreuzkas glad ha sevenadur Breizh meret gant Studi-ha-Dudi.


Stummañ ha harpañ diorren an hentadoù divyezhek eo obererezh pennañ Kuzul-departamant ar **Mor-Bihan** dre ingalañ skoaziadennoù.

Bihan-kenañ eo ar budjed gouestlet d’ar c’helenn gant Departamant **Il-ha-Gwilen**. Div gevredigezh oberiant ha staliet abaoe pell en departamant a vez skoazellet : Diwan evit ar c’helenn dre soubidigezh ha Skol an Emsav evit diorren ar c’helenn d’an oadourien.

Diwan a stroll tost an tri c’hard eus ar skoaziadennoù ingalet evit ar brezhoneg gant departamant al **Liger-Atlantel**. Abaoe 2005 hepken e skoazell an departamant-se ar c’helenn d’an oadourien o reiñ ur skoaziadenn da gKentelioù an Noz.

Munudoù dasparzh an dispignoù graet gant an departamantoù evit oberoù e-maez tachenn ar c’helenn etre 2001 ha 2005

Rannet eo budjed an oberoù e-maez tachenn ar c’helenn e **Penn-ar-Bed** en ur doare kempouez a-walc’h. Lakaet e vez ar pouez war ar skingomz gant Kuzul-departamant **Aodoù-an-Arvor**, gouestlet e vez ivez tost un drederenn eus e vudjed d’ar glad yezhel ha d’an embann. Skoazellet ez eus bet tri zra, en un doare digempouez a-walc’h er bloavezhioù diwezhañ, gant Kuzul-departamant ar **Mor-Bihan** : ar glad yezhel (dre e skoazell da Ofis ar Brezhoneg peurgetket), ar skingomz (Radio Bro Gwened) hag an embann. Dister eo ar skoaziadennoù roet d’an obererezh sevenadurel e brezhoneg a-hend-all.



Skoazellañ a ra an daou zepartamant eus reter Breizh o emglevioù-bro hag a genurzh an obererezhioù sevenadurel e brezhoneg. Ur skoazell da sevenadur Breizh eo kentoc’h. Harpañ a ra an daou zepartamant-se an anaoudegezh eus ar yezh hag he skignañ dre o skoazell da Ofis ar Brezhoneg.

Klozadur darnel

O vezañ barregezhioù an departamantoù ha plas ar brezhoneg er gweledva meret ganto koulz hag e implij er servijoù foran e verzer e c'hallfe ar yezh gounit aes tachennoù nevez.

Estreget ar panelloù-hent, ne vez ket gwelet kalz a vrezhoneg er vuhez pemdez evit ar mare. N'eus departamant ebet c'hoazh a ro un endro brezhonek d'ar geodediz.

E miz Du 2004 en deus divizet departamant ar Mor-Bihan lakaet e plas ur panellerezh divyezhek war e hentoù, da-heul Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor. **Mont a ra goustadik staliadur ar panellerezh e Penn-ar-Bed. N'eo ket divyezhek panellerezh holl hentoù an departamant-se e 2007 c'hoazh :** un drederenn eus an tiriad zo aveet evit ar mare pa oa ur c'hard e 2002. An departamant aet ar pellañ war an dachenn-se e chom Penn-ar-Bed avat. N'eus tamm brezhoneg ebet war vord hentoù departamant Il-ha-Gwilen na war re al Liger-Atlantel c'hoazh. N'eus bet araokadenn ebet war an dachenn-se daoust d'ar cheñchamant politikel e penn an departamantoù e 2004.

N'eus departamant ebet a raje gant ar brezhoneg en e vont en-dro. Aet eo Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor pelloc'h eget ar re all memes tra, evit kemer ar brezhoneg e kont en o c'hehentiñ peurgetket. Mat e vefe da zepartamantoù Breizh heuliañ skouer departamant ar Pireneoù-Atlantel en deus sinet, e dibenn 2006, ur c'henemglev gant Ofis Publik an Euskareg evit ma vefe kreñvaet plas ar yezh en ensavadur hag en e servijoù peurgetket.

Skoazellañ hag heuliañ intrudu ar bed kevredigezhel eo ober an departamantoù betek-henn. N'eus ket c'hoazh ur gwir politikerezh yezh hollek ha youlek hag a vefe lakaet da dalvezout. Penn-ar-Bed eo an departamant nemetañ en deus kroget gant ur seurt politikerezh. Kas a ra oberoù da benn eñ e-unan, evit diorren plas ar brezhoneg er c'helenn peurgetket, met ivez er vuhez foran pe en embann. Reiñ a ra an departamantoù all ur sammad skoaziadennoù d'ar frammoù o deus lakaet da bal kas ar yezh war-raok.

Penn-ar-Bed eo en deus roet an tri c'hard eus ar budjedoù departamant gouestlet d'ar brezhoneg etre 2001 ha 2005. Durc'haat a ra e bolitikerezh war-zu treuzkas ar yezh dre harpañ ar c'helenn. Arouezel-kenañ e chom ar skoazell roet d'ar brezhoneg gant departamantoù Il-ha-Gwilen hag al Liger-Atlantel.

Pevar departamant diwar bemp o deus grataet diorren an divyezhegezh war dachennoù ar skol hag e-maez ar skol p'o deus sinet ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv 2000/2006 war an divyezhegezh. **Emouestloù bodet ar pevar departamant-se a oa kevatal ouzh re Rannvro Breizh tra m'eo peder gwezh brasoc'h o budjedoù bodet eget hini ar Rannvro.** Ouzhpenn-se en deus kemeret Penn-ar-Bed e karg muioc'h eget an tri c'hard eus an emouestloù departamant-se. **Ret e vo kreskiñ kalz skodenn an departamantoù all ma fell d'ar strollegezhioù sevel un dazont d'ar brezhoneg.**

C'hoantoù ar broioù hag ar c'humuniezhoù kumunioù

Durc'hadurioù a vez roet gant ar broioù "Voynet"

Petra a dalvez ar broioù "Voynet" ?

Gant al lezenn Voynet ("loi d'orientation pour l'aménagement et le développement durable du territoire") e oa bet termenet ar broioù-se e 1999. Ur framm kenlabourat int : bodañ a reont strollegezhioù tiriadel prest da labourat kenetrezo d'o diorren, asambles gant obererien an armerzh, ar gevredigezh hag ar sevenadur. Savet eo pep bro diwar ur genstagded douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel a ya d'ober he dibarder dezhi e gwirionez.

E penn a-raok krouidigezh ar broioù-se emañ Breizh velestradurel : goloet eo ar rannvro-se gant 21 vro diazezet-mat (n'eus nemet Eusa ha teir c'humun eus reter ar Mor-Bihan n'emaint e bro ebet evit ar poent). Gant al Liger-Atlantel ez eus dale war an dachenn-se : n'eus nemet pemp bro zo bet bevennet e gwirionez (estreget bro Redon hag ar Gwilen), ar pezh na c'holo ket an tiriad a-bezh. Evit ar poent ne vez ket studiet nag implijet ar broioù-se gant ar velestradurezh kement ha re departamantoù all Breizh.

Ur **garta** a vez savet e pep bro gant an dilennidi hag ar c'huzul diorren (a vod oberourien al lec'h); honnezh a dermen strategiezh diorren ar vro gant ur programm obererezhioù a respont d'un nebeud palioù. Meneget e vez ar brezhoneg en o zouez a-wechoù.

Bro Gerne eo ar vro nemeti a ra anv eus ar brezhoneg e-touez palioù he c'harta (Pal niv. 41, "Soutenir la langue bretonne"). An danvez obererezh a glot gant ar c'hraf-se zo "Rechercher la professionnalisation et la qualification dans son utilisation quotidienne professionnelle et dans les médias ainsi que dans son enseignement principalement en direction des adultes".

E kartaoù broioù all e vez gouestlet danvez obererezhioù d'ar yezh evit respont da balioù a bled gant ar sevenadur, an identelezh, ar vuhez pemdeziek, an touristerezh hag ar glad.

- **Bro Vontroulez** : “Définir et affirmer une volonté du pays pour l’engagement d’une politique de la langue et de la culture bretonnes”
- **Bro Treger ha Goueloù** : “Souscrire au développement de la langue et de la culture bretonne par la promotion du bilinguisme français-breton dans la signalétique et la communication”
- **Bro Bondi** : “Valoriser la culture et la langue bretonne ainsi que le Gallo”
- **Bro Kornôg Kreiz-Breizh** : “Soutenir l’implantation de l’Office de la Langue Bretonne”. E-touez ar broioù o deus krouet ul lec’hienn Genrouedad dezho, n’eus nemet bro Kornôg Kreiz-Breizh he deus troet e brezhoneg un darn eus he fajenoù.

Splann a-walc’h eo e vo ret kemer ar yezh e kont evit kas da benn danvez obererezhioù zo (pe palioù zo) e broioù all.

- **Bro Vrest** : “Encourager les centres de formation en lien avec le monde scolaire et universitaire : culture bretonne et celtique” ; “Créer des événements culturels de diffusion pour promouvoir la création issue du territoire”
- **Bro Roazhon** : “Définir avec les pays voisins (...) les modalités de la coopération permettant le développement d’un projet commun (...) pour le territoire, compte tenu des responsabilités de l’aire métropolitaine vis à vis de l’ensemble de la Région Bretagne”
- **Bro an Orient** : “Affirmer les identités celtiques et nautiques du pays”
- **Bro an Alre** : “Mener une politique de mise en valeur du patrimoine culturel et naturel” ; “Vivre la culture comme ciment social et facteur d’épanouissement de l’individu”
- **Bro Redon hag ar Gwilen** : “Renforcer les dynamiques culturelles du pays”

Disklêriadurioù evel-se zo da vezañ lieskementet ha da vezañ lakaet da dalvezout asambles gant sikour derezioù all ar galloudoù foran. Un dachenn raktresañ eo ar broioù Voynet evit terkerezh an tiriad evit gwir : diazezet eo politikerezh nevez an tiriad er Rannvro war kejadenn raktresoù ar broioù gant raktres ar Rannvro⁴. Ahelioù strategel ar Rannvro eo ar re bet displeget er Gevrat evit Breizh (Chanter 9, “Pour l’élaboration d’une véritable politique linguistique”).

⁴ “elle est fondée sur la rencontre des projets portés par les collectivités locales, à travers les pays, et du projet régional”, Contrat pour la Bretagne - La nouvelle politique territoriale, p. 35.

Kevratoù bro liesvloaziek (evit ar marevezh 2006-2012) zo bet sinet gant 21 vro Voynet Breizh velestradurel ha Rannvro Breizh etre miz Mezheven ha miz Kerzu 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro dre diriad (steuñvoù arc’hantaouiñ ha steuñvoù kas-da-benn* a vo savet). Pouezus eo e kavfe ar brezhoneg e blas en teulioù-se evel-just. Tri goload a ya d’ober ar C’hevtratoù bro. Ar goload kentañ a denn da raktresoù ar Rannvro war tiriad ar broioù ; n’emañ ket e stern ar gevrat evit gwir. An eil goload (“structurant régional/local”) a denn da raktresoù kendivizet etre ar Rannvro hag ar broioù ; danvez ar C’hevtratoù eo. Siwazh, n’eus ket fellet d’ar Rannvro pouezañ evit ma lakfe ar broioù ar Chanter 9 da dalvezout. Hogen ar re-se n’int ket prederiet gant ar brezhoneg c’hoazh war a hañval.

N’eus nemet **bro Gerne** he deus miret ar Chanter 9 e-touez an ahelioù labour kinniget gant ar Rannvro. Rakwelet eo en he C’hevrat bro gouestlañ arc’hant da solutaat ha diorren Radio Kerne.

Daou obererezh a-du gant ar brezhoneg zo meneget evit ar Chanter “Pour une Bretagne équitable et solidaire” e Kevrat **bro Kornôg Kreiz-Breizh** memes tra : an eil obererezh a denn da grouidigezh ur c’hlas divyezhek e skol Bulad-Pestivien, egile a denn da adkempenn savadur skol divyezhek Sant-Riwal.

N’eo ket ken splann menegoù ar brezhoneg e Kevrat **bro Treger ha Goueloù** : raktresoù a denn da skolioù ar vro a ra anv eus kresk an niver a skolidi divyezhek enno, ha krouidigezh ur c’hlas divyezhek e Tregrom a vo studiet da-geñver adkempenn ar skol bublik.

Treutik eo ar bilañs. **Un emgav c’hwitet evit ar brezhoneg e vefe ar C’hevtratoù bro ?** Tu zo memes tra d’ar broioù kas oberoù a-du gant ar brezhoneg en ur implij an trede goload (“structurant local”) a denn da raktresoù n’int ket termenet en a-raok en o C’hevrat.

Degemer ar Broioù Touristel

Petra a dalvez ar Broioù Touristel ?

Kumuniezhoù kumunioù a bled gant an touristerezh eo ar Broioù Touristel. Ober a reont gant ur preder sokial hag armerzhel a-benn respont da ezhommoù an danvez pratikoù en ur gemer e kont pep elfenn eus identelezh o ziriad gant aked : an endro, ar gweledvaou, ar sevenadur, ar glad, an dud a vev eno.

Ur bodad “Langue et Culture Bretonne” a zo bet krouet gant an **AACP**⁵ da skouer. Kevrat en deus graet ar bodad-se gant Ofis ar Brezhoneg evit ma vefe graet un enklask war c’hlad lec’hanvadurezh ar c’horn-bro. Al labour-se, goude bezañ studiet, a zlefe disoc’hañ war reizhañ an anvioù-lec’h.

⁵ Association Ouest Cornouaille Promotion ; enni emañ bodet kumuniezhoù kumunioù ar Vro Vigoudenn, ar C’hab ha Bro Douarnenez, da lavaret eo un 40 kumun bennak.

Broioù all o deus staliet panelloù touristel divyezhek : **Bro Argoad 22**, **Bro Gwerledan Koronk** ha **Bro ar Roc'haned**.

Skoazellet e vez al letioù **Celtia** gant **Kevread Broioù Touristel Breizh** (Fédération des Pays Touristiques de Bretagne) a-hend-all ; ur panellerezh diabarzh en div yezh a vez el letioù-se peurliesañ. Evit ar poent, ne vez ket graet kalz a draoù ganto en tu all d'ar panellerezh-se avat : stummañ an implijidi war ar yezh a c'hellfe bezañ graet en amzer-da-zont da skouer ; gouest e vefent neuze da zisplegañ ar glad pe da ditouriñ ar pratikoù e brezhoneg.

Ar frammoù etre kumunioù, ul live strategel

Panelloù-heñchañ divyezhek a vez staliet tamm-ha-tamm gant Kumuniezh-kêr Brest (**Brest Meurgêr ar Mor**) abaoe 2002 gant sikour Ofis ar Brezhoneg. Ar frammetre kumunioù kentañ da vezañ sinet an emglev "Ya d'ar brezhoneg" (d'an 11 a viz Gouere 2006) eo ar gumuniezh-kêr-mañ.

Ur panellerezh divyezhek diwar-benn ar glad zo bet lakaet e plas e kumunioù Kumuniezh Tolpad-kêrioù An Oriant (**CAP Lorient**). Evel-se eo deuet ar brezhoneg war wel en ur mod ledan e trowardroioù an Oriant (ha war un hent departamant zoken) evit ar wech kentañ er Mor-Bihan (ha dale zo gantañ war an dachenn-se c'hoazh).

Sindikad Diazad ar Skorf en deus staliet panelloù divyezhek evit heñchañ an dud war an hentoù bale.

Estreget staliañ panelloù glad zo bet graet gant **Kumuniezh kumunioù Kreiz-Breizh**. Ur blegfollenn e brezhoneg a oa bet skignet ganti evit kelaouiñ war dastum divesk al lastez. Ur skouer e-unan e Breizh eo hemañ, Kumuniezhoù kumunioù all a c'hellfe ober kement-all koulskoude

En hevelep doare e oa bet savet un diskouezadeg-pad gant panelloù displegañ divyezhek e purlec'h* Pont Sant-Anton e Larruen diwar c'hourc'hemenn **Sindikad Kemmesk Kerne-Uhel** e 2002.

An nebeud skouerioù amañ a-us a ziskouez war peseurt tachennoù barregezh e c'hell ar frammoù etre kumunioù kemer ar brezhoneg e kont (gwir eo, peurgotket, evit ar pezh a denn d'an aveadurioù* sevenadurel ha sportel a dalvoudegezh kumunel, d'an treuzdougen, h.a.). Met re zistank eo an oberoù-se c'hoazh.

Klozadur darnel

Binvioù ouzhpenn da respont da ezhommoù ha c'hoantoù o melestridi a vez roet d'ar c'humunioù gant ar c'henlabour etre kumunioù (e-ser doujañ o emrenerezh). Un doare dereat eo da ziskoulmañ ar c'hudennoù a sav gant merañ ha terkañ un tiriad. Aesoc'h e vez neuze kadarnaat ur servij publik a-zoare da skouer pe mont war-zu un diorren lec'hel.

War greñvaat ez a an etrekumunelezh neuze, ha war ledanaat ez a tachenn he galloudoù. Chañsoù zo eta e teufe da vezañ brasoc'h-brasañ e-touez ar galloudoù foran. Ul live melestradurel talvoudus-tre eo ar frammoù etre kumunioù-se evit kas ur politikerezh yezh da benn (diagnostikañ, prederiañ, ober). Nebeut-tre a oberoù a-du gant ar brezhoneg a vez kaset ganto evit ar poent c'hoazh, setu ret e vefe gounit e kemerfent anezhañ e kont buan. En abeg d'an dra-se e kinnig bremañ an Ofis ur garta "Ya d'ar brezhoneg" azasaet d'al live melestradurel-se.

Ar brezhoneg er vuhez pemdez a-drugarez d'ar c'humunioù

Disoc'hoù pennañ an "Enklask diwar-benn implij ar brezhoneg e kumunioù Breizh"

Roet e oa bet lañs d'an enklask-se gant servij Arsellva Ofis ar Brezhoneg e miz Ebrel 2003. Dastum roadennoù war soñj an dilennidi a-zivout ar brezhoneg, war e implij er panellaouiñ hag e mont en-dro an ti-kêr e oa pal ar c'houlennaoueg bet kaset d'ar 1489 ti-kêr zo e Breizh. Niveriñ ar c'humunioù a embann bezañ prest da gas ar yezh war-raok zo bet graet ivez.

Setu amañ da-heul disoc'hoù pennañ an enklask-se.

- Ur c'hard eus kumunioù ar pemp departamant o deus respontet d'an enklask (369 c'humun, kement ha bezañ resis); ur feur mat eo evit seurt enklaskoù. Pignat a ra feur ar responderien da 34,6% e Breizh-Izel.
- Tost an holl gumunioù o deus respontet zo savet a-du gant ar frazennoù amañ da-heul : "La langue bretonne ne concerne pas seulement les locuteurs du breton, elle est une marque d'identité valorisante pour tous les Bretons" (86% a gumunioù a-du), ha "La langue bretonne ne concerne pas seulement la

Basse-Bretagne. Elle est une marque d'identité valorisante pour toute la Bretagne" (81%).

- Un drederenn eus an 369 zi-kêr he deus respontet bezañ prest da implijout anv brezhonek o c'humun war unan d'an nebeutañ eus ar skoroù-mañ : panelloù ar savadurioù-kêr, panelloù touristel, plakennoù straed, panelloù-heñchañ.
- 26% eus ar c'humunioù o deus respontet a ro ur plas bennak d'ar brezhoneg en o c'hannadig-kêr : 40 kumun a embann lakaat pennadoù e brezhoneg ha 56 kumun all a embann e roont ur plas arouezel d'ar yezh en o c'hannadig-kêr.
- Implijidi a vefe gouest da zegemer ar velestridi e brezhoneg zo e 22% eus ar c'humunioù o deus respontet.
- 76 kumun a vefe prest da ginnig ur stummadur war ar brezhoneg d'o implijidi e kement ha ma fellfe dezho, 14 kumun all a embann bezañ graet kement-se c'hoazh.



- 40% eus an tiez-kêr o deus respontet d'an enklask a embann bezañ prest da gas implij ar brezhoneg war-raok war ar pemdez. 23 anezho zo e Breizh-Uhel ha lieskementet dre zaou eo bet feur Breizh-Izel e-skoaz an enklask kentañ kaset da benn e 2000.

Evit gouzout hiroc'h e c'hellit lenn "An divyezhegezh en ho kumun", Arsella ar brezhoneg, Ebrel 2004, 18 pajenn.



M A I R I E T I K E R

Staliañ ur politikerezh yezh er gumun

Dre hentoù disheñvel e c'hell ar brezhoneg bezañ ebarzhet er politikerezhioù foran. Alies-mat eo hollbouezus perzh ar bed kevredigezhel, a zoug c'hoantoù an dud, er c'hoari-se.

E-giz-se, **kenemglevioù** (pe kevratoù kefridi) zo bet sinet etre **Ofis ar Brezhoneg** ha kumunioù zo : **Karaez-Plougêr, Douarnenez, An Oriant, Pluguen, Pondi, Roazhon, Kemper, Pont-'n-Abad, Gwened, Landerne...** Gant ar c'henemglevioù-se e vez fiziet en Ofis kefridiou aliañ war an divyezhegezh koulz hag ur skoazell deknikel (gant e servij Treiñ, peurgetket, koulz hag e servij Glad evit al lec'hanvadurezh). Kroget e vez alies gant ar panellerezh (panelloù-heñchañ, panelloù ar savadurioù-kêr, plakennoù straed) ha gant skorioù kehentiñ (pennadstur ar c'hannadig-kêr, kartennoù bizit, pedadennoù, h.a.). Bras pe vrasoc'h eo ar striv a vez graet gant ar c'humunioù-se, met tost an holl anezho o deus graet ul lamm war-raok e-keñver ar brezhoneg da-heul sinadur o c'henemglev. An emglev "Ya d'ar brezhoneg er c'humunioù" (gw. ar pennad sterniet amañ dindan) zo un doare all da ziazezañ ur politikerezh yezh ha da ambroug e lakaat da dalvezout.

A-hend-all, ur "Bodad brezhonekaat" a oa bet krouet e Bro-Dreger gant ar c'hevread **Al Levrig** e 1997. Luskañ ha skoazellañ implij ar brezhoneg el lec'hioù foran eo pal ar bodad-se. Sinet e oa bet ur "Steuñv evit an divyezhegezh brezhoneg/galleg e **Lannuon**" etre ti-kêr Lannuon hag Al Levrig e 2001. Oberoù all a vez kaset gant meur a gumun e Bro-Dreger.

Kevredigezhioù all en em ouestl da vroudañ an dilennidi da respont d'ar goulenn zo evit an divyezhegezh. Da skouer, e trowardrioù Lesneven e vez graet traoù a-drugarez da **dTi ar Vro Bro Leon**, ha **Emglev Bro an Oriant** en deus broudet ti-kêr **An Oriant** da grouiñ ur "Bodad trakêr evit an divyezhegezh".

Un nebeud **bodadoù trakêr** (anvioù disheñvel dezho) diwanet er bloavezhioù tremenet a bled gant ar brezhoneg pe gant an divyezhegezh e gwirionez. Dilennidi, teknikourien ar gumun ha frammoù dave (Ofis ar Brezhoneg en o zouez) a ya d'ober ar bodadoù trakêr-se. Ganto e vez heuliet ha heñchet tamm-ha-tamm al labour divyezhekaat ; met ur galloud kinnig o devez, ne zivizont ket. Bodadoù evel-se zo bet krouet en **Oriant, Karaez, Lannuon, Pondi, Pont-'n-Abad, Douarnenez, Sant-Brieg** ha **Roazhon**.

Da echuiñ, ur bodad labour "politikerezh yezh" savet gant dilennidi a c'hell bezañ krouet gant ar skipailh-kêr drezi hec'h-unan. E **Pluguen** ez eus ur seurt bodad abaoe 2001, da skouer ; ar galloud da zivizout en deus, nemet war an tachennoù a rank bezañ asantet gant ar c'huzul-kêr.

E miz Meurzh 2006 o deus embannet Ti ar Vro Kemper hag Ofis ar Brezhoneg ul levrig da reiñ d'an dilennidi danvez oberoù koulz hag an holl ditouroù zo ezhomm evit lakaat ur politikerezh yezh da dalvezout en ur gumun : "**An divyezhegezh en ho kumun**".

“Ya d’ar brezhoneg er c’humunioù”

Broudañ oberourien ar vuhez sokial hag armerzhel d’ober traoù fetis evit ar yezh eo pal ar c’houlzad “Ya d’ar brezhoneg” a oa bet roet lañs dezhañ gant Ofis ar Brezhoneg e 2001.

Divizet e oa bet gant an Ofis ober kemend-all gant ar c’humunioù e 2004, p’eo ar c’humunioù elfenn diazez ar vuhez foran. Er pleustr e vez kinniget d’ar pennadurezhioù-kêr dibab en ur roll 28 ober ar re a vo sammet ganto. Diouzh emouestl ar gumun, diouzh an niver a oberoù asantet ganti ha goude ma vefe gwiriet o sevenidigezh gant an Ofis e vez anavezet dezhi unan eus an 3 live testeniekat zo gant ar c’houlzad-se.

64 c’humun o doa mouezhiet evit sinañ ar garta daou vloaz hanter goude kinnig ofisiel “Ya d’ar brezhoneg er c’humunioù” (22 a viz Kerzu 2004). E-touez an 59 zi-kêr o doa sinet er fedoù d’ar mare-se, 36 o doa goulennet e vefe deroet al live 1 dezho, 16 o doa gouestlet tizhout al live 2 ha 7 o doa lakaet al live 3 da bal. Tremen un hanter milion a geodedourien zo dileuriet gant ar c’humunioù-se

c’hoazh. Kumunioù all a zeuio d’o heul, koulz ha frammoù etre kumunioù (hini Brest en deus sinet evit al live 1, ha hini Kreiz-Treger evit al live 3). Ur pevare live testeniekat a vo diazezet d’an diskar-amzer 2007.

Sinerien “Ya d’ar brezhoneg er c’humunioù” d’ar 1añ a viz Mezheven 2007



Klozadur darnel

Evit diorren implij ar brezhoneg eo pouezus-meurbet sevel ur c’henlabour etre an tiez-kêr hag an aozadurioù oberiant war an dachenn-se.

Ur framm dezhañ ar garg ofisiel da gas ar yezh war-raok er vuhez foran ha da skoazellañ ar strollegezhioù lec’hel eo **Ofis ar Brezhoneg**. Programmoù ha barregezhioù teknikel ha micherel zo gant ar framm-se d’en ober. Tonket eo da gas e ampartiz da holl gumunioù Breizh neuze dre ur skoazell guzuliañ hag ur skoazell deknik azas ouzh gwirvoud hag ezhommoù pep kornbro. Gant muioc’h eget ur c’hant kumun bennak e labour Ofis ar Brezhoneg hiziv an deiz.

Ur perzh meur zo gant frammoù lec’heloc’h (emglevioù bro kentoc’h, evel **Al Levrig**, **Emglev Bro an Oriant** pe **Ti ar vro Bro Leon**) o vezañ ma vez graet ganto al liamm etre c’hoantoù ar bed kevredigezhel hag an dilennidi. Diskouez a reont splann ar goulenn sokial (damguzhet pe fetis) a zo war an dachenn evit an divyezhegezh.

Gant ur c’henlabour a-feson etre an oberourien (dilennidi, servijoù-kêr, Ofis ar Brezhoneg ha kevredigezhioù lec’hel) e c’hell ur politikerezh yezh youlek hag efedus bezañ kaset da benn. Bodadoù trakêr a vez savet d’en ober alies.



Peseurt oberoù a zo diouzh barrezhioù ar c'humunioù war-eeun ?

Lakaat ar brezhoneg war wel er vuhez pemdeziek

Un divyezhegezh a-zoare

Diwar atizoù lec'hel ez eus bet staliet panelloù divyezhek e lec'hioù zo e Breizh. Disheñvel eo an doare da ginnig an div yezh eus an eil lec'h d'egile alies, hag ezhomm zo poellekaat ar strivoù. Setu amañ da-heul un nebeud erbedadennoù a-benn sevel ur panellerezh divyezhek kempouez.

- **Kuit da zroukziforc'hiñ ar yezhoù eo gwelloc'h kinnig anezho heñvel-rik**, da lavaret eo implijout an hevelep font, stil, ment arouezennoù hag an hevelep liv. Evel-se e vez graet e broioù divyezhek pe liesyezhek all Europa ha Norzh-Amerika.
- **Gwelloc'h eo chom hep implijout arouezennoù "kel-tiek"** evit menegoù melestradurel pe ofisiel. N'eus hengenoun ebet ganto e Breizh ha diaes e vezont da lenn peurliesañ.
- **Gwelloc'h eo chom hep stouiñ an holl venegoù en ur yezh**. Reolennoù resis a ro ur ster da bep stumm arouezenn : ne dalvez ket ar memes tra pa vez skrivet ur ger war ur banell gant lizherennoù bras pe re vihan pe re stouet. Ret eo ober gant ar reolennoù-se en div yezh evit ma vefe an hevelep titouroù o tremen gant an eil yezh ha gant eben.
- **Dibab pe yezh a vo da gentañ zo un dra a bouez**. Talvoudekaet e vez ar yezh zo en ur blegenn diaes pa vez gwelet da gentañ, da lavaret eo pe a-us pe a-gleiz d'ar yezh all. Strivañ muioc'h a rankjed ober evit kinnig yezh ar vro da gentañ, evel ma vez graet e broioù all.

• Implij ar brezhoneg er panellerezh mont e kêr

Ha pa ne vefe kemeret diviz ebet war an dachenn-se gant ar C'huzul-departamant (gw. ar pennadoù war politikerezhioù Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan) e c'hell un ti-kêr staliañ panelloù mont e kêr en div yezh diwar e atiz e-unan.

Kement-se zo bet graet gant kêrioù-penn an holl zepartamantoù : **Kemper** ha **Gwened** evel just, met **Sant-Brieg** ha **Roazhon** ivez. E **Naoned** e vez meneget anv brezhoneg ar gumun war banelloù gevelliñ hag e krec'h "totemoù" a gaver o vont e-barzh ar gumun.

Gant divizoù ar C'huzul-departamant eo aet war stankaat ar staliañ panelloù divyezhek mont e-barzh ha mont e-maez ar c'humunioù e Penn-ar-Bed (muioc'h eget 95% eus ar c'humunioù-se a oa pourvezet ganto e 2004). Laoskoc'h e chom an traoù e lodennoù kornôg ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor evit ar poent daoust ma vez graet araokadennoù.

Ouzhpenn-se e vez kavet seurt panelloù e reter Breizh a-wechoù. Staliet e vezont gant kumunioù bras dreist-holl (**Roazhon, Saozon-Sevigneg, Felger, Orvez, Pornizh**), met el Liger-Atlantel ez eus daou strollad kêrioù o deus lakaet war wel o anvioù brezhonek er mod-se : e Gourenez Gwenrann (**Gwenrann, Bourc'h-Baz, An Turball, Ar Poulgwenn** hag **Ar Groazig**) ha tro-war-dro Blaen (**Blaen, Ar C'havr** ha **Kerrigon**).

• Implij ar brezhoneg er panellerezh-heñchañ

Skoroù disheñvel a vez graet ganto muioc'h-mui da reiñ ur plas fetis d'ar brezhoneg er gweledva-kêr.

Staliañ **panelloù-heñchañ divyezhek** zo unan eus an doareoù gwellañ da dalvoudekaat ur yezh zo en ur blegenn diaes : reiñ a ra dezhi un dalvoudegezh pemdeziek koulz hag an dro da vezañ gwelet gant an holl. Panellerezh-heñchañ **An Orient** zo da vezañ roet evel skouer eus un divyezhegezh a-zoare a ginnig an div yezh par ouzh par.

Lakaat divyezhek **panelloù diavaez ha/pe diabarzh ar savadurioù kêr** (ha re an aveadurioù foran* : poullou-neuial, sportvaoù da skouer) zo un doare all da reiñ e blas d'ar brezhoneg er vuhez foran. Gant an hevelep spered e c'heller staliañ **plakennoù straed** divyezhek. Mat eo mont war-zu divyezhekaat an dafar-kêr ivez (kirri, poubellennoù, h.a.).

Lakaat ar brezhoneg e-touez yezhoù all a c'hell bezañ graet gant ar **panelloù touristel**; ur bazenn ouzhpenn graet gant kalz a gumunioù abaoe ar bloavezhioù 80 eo. An doare panelloù divyezhek kentañ a vez staliet gant an ti-kêr eo alies. Da ziwall zo ne vefe ket bevennet plas ar brezhoneg d'un implij liammet gant ar glad hepken neuze. Talvoudus e c'hell bezañ koulskoude e vefe graet e lec'hioù zo : e **Naoned** ez eus bet staliet panelloù touristel testennoù brezhonek warno e miz Ebrel 2005.



Pegen diorroet eo ar panellerezh-heñchañ divyezhek e Breizh hiziv an deiz er fedoù ?

E korf un ugent vloaz bennak eo aet kalz war-raok ar panelloù-heñchañ divyezhek. Al lusk staliañ bet kroget gantañ en Aodoù-an-Arvor zo deuet da Benn-ar-Bed da c'houde ha d'ar Mor-Bihan bremañ.

Seul vrasoc'h eo poblañs ur gumun seul vuanoc'h e teu he fanellerezh-heñchañ da vezañ divyezhek. Divyezhek eo panellerezh-heñchañ kêrioù brasañ Breizh-Izel (en tu all da 10 000 annezad) bremañ, pe war zivyezhekaat ez a : **Landerne, Douarnenez, An Oriant, Kemper, Brest, Montroulez, Lannuon, Gwengamp, Pondi**. Gant ar c'humunioù-se e vez brezhonekaet ar skorou all alies war ar marc'had (panelloù ar savadurioù-kêr pe plakennoù straed nevesoc'h zo). E penn a-dreñv al labour-se e chom kêr **Wened** hepken (ouzhpenn panelloù ar skolioù divyezhek ha panelloù touristel zo, n'eus bet kroget da vat gant staliañ panelloù-heñchañ divyezhek eno nemet en hañv 2005), met oc'h ober araokadennoù emañ kêr-benn ar Mor-Bihan, a-du gant al lusk a verzer gant an departamant.

Kavet e vez kement-se e kumunioù bihanoc'h ivez tamm-ha-tamm : kumunioù etre (eus 5 000 da 10 000 annezad evel **Karaez, Sant-Teve, Gwengamp, Pempoull**), pe kumunioù bihan (**Kastell-Nevez-ar-Faou, Pluguen, Rostrenenn, Tregastell, Plaeraneg, Plougerne, Speied**, h.a.). Kalonekaus eo gwelet e krog kumunioù a-ziwar ar maez da strivañ war an tu-se (**Sant-Hern, Duoad, Melioneg, Sant-Wazeg, Gwimaeg, Ar Chapel-Nevez**, h.a.). Ar c'humunioù-se a vez kaset an divyezhegezh war-raok en o fanellerezh gant atiz kevredigezhioù lec'hel pe hiniennoù, a-drugarez da oberoù Ofis ar Brezhoneg pe c'hoazh a-drugarez d'ul lusk dibar d'o c'horn-bro (e Kreiz-Breizh da skouer).

Kenderc'hel war an hent-se zo d'ober. War-bouez **Konk-Kerne** a chom distriv, n'eus kumun ebet ken hep panellerezh divyezhek e kornôg Breizh. Dale zo gant meur a gumun etre ivez : **Fouenant, Pont-'n-Abad, Kastell-Paol** koulz ha reoù all war aodoù ar Mor-Bihan. Divizoù a yafe a-du gant lakaat ar brezhoneg war wel emeur o c'hortoz eus perzh **Sant-Brieg**, kêr-benn Aodoù-an-Arvor ha lec'h m'eo diorroet mat an emsav kevredigezhel hag an ensavadurioù liammet gant ar brezhoneg (skolioù, kentelioù noz, kevread kevredigezhioù, Skol ar Gelennerien en ESSM*, kreizenn pedagogel TES*,...). Fraezh e oa bet goulennet an dra-se gant he bodad trakêr evit an divyezhegezh e fin 2004.

Ledañ implij ar brezhoneg war banelloù ar savadurioù-kêr ha war ar plakennoù straed zo un dra a bouez evit m'io defe muioc'h-mui tud ar c'hêrioù bras un darempred pemdeziek gant o yezh rannvro. Ar c'humunioù bihan diwar ar maez zo da vezañ broudet ha skoazellet da staliañ panelloù divyezhek ivez (bihanaet e c'hell bezañ priz ar staliañ-se gant skoazelloù a-ratozh a-berzh strollegezhioù lec'hel all).

Disheñvel a-walc'h eo stad an traoù e **reter Breizh**. Ouzhpenn kêrioù-penn **Roazhon** ha **Naoned**, n'eus nemet **Redon** a ra un nebeud traoù.

Gant plakennoù straed (130 plakenn evit 20 lec'h a bouez) ha panelloù divyezhek en unan eus arsavioù ar VAL (metro Roazhon) eo diazezet al lakaat brezhoneg e dremmvro kêr **Roazhon**. E **Naoned** e oa bet staliet panelloù touristel testennoù brezhonek warno e miz Ebrel 2005. Un implij arouezel eus ar yezh a vez graet gant ti-kêr **Redon** evit echuiñ : ar meneg "Degemer mat" zo war banelloù elektronek an ti-kêr, ur banell-degemer e brezhoneg zo bet staliet e ti an douristed ha panelloù un droiad istorel a-zarn e brezhoneg a vo staliet e kêr d'an diskar-amzer 2007 (brezhoneg zo en ardamez Redon war ar marc'had : "Kear vihan brud vraz").

Kumunioù bras all a c'hellfe sevel ur preder da staliañ panelloù divyezhek : **Gwenrann, Sant-Nazer** pe **Sant-Maloù** da gentañ. Brasaet e c'hellfe bezañ plas ar brezhoneg e **Roazhon** ma vefe kaset da wir ar soñj staliañ panelloù-heñchañ divyezhek evit diskouez hent kêrioù bras Breizh, da skouer.

• Reizhañ skritur an anvioù-lec'h

Peseurt talvoudegezh zo gant reizhañ skritur an anvioù-lec'h ?

Skoazellañ a ra talvoudekaat ar glad ha lakaat an dud da adkavout anezhañ. Distummet eo bet an anvioù-lec'h alies-kenañ abalamour d'an diouer a zedenn hag a skiant war ar yezh a oa -hag a zo- gant ar velestradurezh ("Kroashent" zo deuet da vezañ "Croissant" da skouer). Meur a adstumm zo d'an anvioù-se ha pep melestradurezh he deus savet hec'h anvadur dezhi he-unan (an EBSSA*, an IGN*, levr ar pellgomz, pe c'hoazh ar panelloù war an hentoù).

Ar c'humunioù an hini zo mestr war an anvioù bihan-se (kêriadennoù, stêrioù, menezioù, h.a.) : lec'hanvioù anofisiel int en enep re ar Stad, ar rannvroioù, an departamantoù hag ar c'humunioù. Reizhañ skritur an anvioù-se a c'hell ober ar c'humunioù neuze, ha doujañ a reont evel-se d'ar brezhoneg, da istor an anvioù, d'o glad e berr gomzoù.

Ofis ar Brezhoneg, aozadur dave war an dachenn-se, a ro skoaz d'ar c'humunioù ha d'an departamantoù evit ma vefe doujet ha reizhskrivet al lec'hanvioù brezhonek. Kement-se a vez graet en ur studiañ pizh gant doareoù skiantel boazioù komzet brezhonegerien genidik eus ar vro hag ar stummoù istorel testeniekaet. Sinet ez eus bet un emglev etre an IGN* hag Ofis ar Brezhoneg e 2005 evit ma vefe degemeret anvioù-lec'h reizhet an Ofis en RGE (Référentiel à Grande Echelle).

Un nebeud kumunioù zo aet war an dachenn-se c'hoazh : **Bear, Bulad-Pestivien, Pluguen, Tremeven-Kemperle, Kerlaz, Poullann, Douarnenez, Pouldregad, Ar Yeuc'h, Rostrenenn, Sant-Wazeg, Purid** ha **Melionez** da skouer. **Rostrenenn** peurgetket zo da vezañ roet evel skouer : brudet eo bet ar stummoù reizhet en ur embann ur gartenn hag en ur gelaouiñ ar c'hazetennoù, an annezidi ha melestradurezh ar Post (emañ reizhañ ar gladroll* war ar stern). **Karaez** ha **Langoned** a ya war an tu-se ivez. Kuzul-kêr Brest, trede kêr brasañ Breizh, en deus degemeret studiadenn an Ofis war e anvioù lec'h e miz Mezheven 2007 ; ur skouer a-feson eo evit ar c'humunioù all.

Meur a gumun e bro Wengamp (**Treglañviz, Sant-Egantou** ha **Plouizi** da skouer) o deus staliet er c'hêriadennoù panelloù d'en em heñchañ⁶ warno stumm reizh an anvioù-lec'h e brezhoneg.

⁶ Skritelloù a ginnig an hentoù tremen hag ar c'hêriadennoù war ar maez en ur brastres.

Implij ar brezhoneg gant ar velestridi

Muioc'h-mui a gumunioù a ro ur plas bras pe vrasoc'h d'ar brezhoneg en o binvioù da gehentiñ gant o melestridi. **Ar c'hannadig-kêr** eo a soñjer ennañ da gentañ evel-just. Un implij arouezel eus ar yezh a vez graet ennañ alies (titloù pennadoù pe rubrikennoù zo), met un nebeud tiez-kêr a ya pelloc'h eget se en ur sevel o fennad-stur ha/pe pennadoù e brezhoneg. Evel-se e vez graet gant kumunioù a bouez : **Brest, Douarnenez, Karaez, Landerne, Lannuon, Lesneven, Montroulez**, h.a. Evit ar poent, n'eus kelaouenn ebet divyezhek penn-da-benn avat. Skoroù all a c'heller lakaat brezhoneg warno a-hend-all. **Plegfollennoù touristel, pedadennoù, kartennoù hetiñ** a vez embannet e brezhoneg ha kemennadennoù divyezhek a vez lakaet war **responterioù** kumunioù zo. Ar c'houlzad "Ya d'ar brezhoneg" bet digoret d'ar c'humunioù gant an Ofis e diwezh 2004 a vroud seurt oberoù e-ser kas ur skoazell deknikel d'o seveniñ. An teknologiezhioù nevez a c'heller en em dreiñ warno ivez : **Karaez** ha **Pleskob** eo ar c'humunioù kentañ e Breizh a zo ul **lec'hienn Genrouedad** divyezhek dezho ha hini **Gwened** zo bet troet e rubrikennoù pennañ e 2007 ; kumunioù all (**Brest** pe **Landerne** da skouer) a c'heller kavout e brezhoneg un darn eus pajennoù o lec'hienn.

Gouzout a reer ez eus en un darn vat eus tiez-kêr Breizh-lzel implijidi gouest da **zegemer ar velestridi e brezhoneg**. Kalz a draoù a chom d'ober war an dachenn-se rak ne vez ket brudet ar varregezh-se (gant skritelligoù da skouer). Ur stummadur war ar brezhoneg a vez kinniget d'an implijidi a fell dezho e kumunioù zo e stern ar stummadur dibaouez a-hend-all : goude **Landerne, Douarnenez, Pondi, Kemper, Roazhon, Karaez**, emañ tiez-kêr all e soñj ober ar memes tra.

Kizidikaat ar gargidi

A-raok stummañ anezho war ar yezh eo mat kizidikaat kargidi ar servij publik lec'hel ouzh talvoudegezh ar brezhoneg. Abadennoù kelaouiñ a vez aozet ingal gant skourr rannvroel ar CNFPT* e Gwened da skouer. Ur perzh oberiant a gemer Ofis ar Brezhoneg enno. Gantañ e vez kinniget ivez ur staj klok daou zevezh diwar-benn merañ an divyezhegezh war un tiriad hag a vez dalc'het e miz Here abaoe 2006.

Ha pa vefe embannet gant mellad 2 ar Vonreizh ez eo ar galleg yezh ar Republik, n'eo ket difennet ober gant div yezh da-geñver degouezhioù ar vuhez foran. Skridoù melestradurel a c'heller aes-tre lakaat divyezhek, da skouer. Evel-se eo bet graet c'hoazh gant tiez-kêr evel **Karaez pe **Pluguen**. Skridoù dimeziñ int dreist-holl ; ti-kêr Pluguen en doa goulennet digant servij Treiñ Ofis ar Brezhoneg treiñ teulioù raktres hag embann an dimeziñ (o toujañ da vellad 75 ar c'hod keodedel*). Ar paper-ganedigezh hag an aotre da guitaat an tiriad a oa bet troet evit kumun Karaez ivez. Ret eo lavaret ne vez ket implijet kalz an teulioù-se gant ar c'humunioù c'hoazh ; lakaat an holl velestridi d'ober gant paperioù melestradurel divyezhek a vefe un doare a-feson da dalvoudekaat ar yezh avat. Gant Karaez c'hoazh ez eus bet lakaet ul **levrig familh divyezhek** da dalvezout adalek nevezamzer 2007, da skouer. An holl skridoù-se zo e-kerz an Ofis evit an holl strollegezhioù foran. Graet int da vezañ implijet gant kement kumun a fello dezhi.**

Lid an euredoù en ti-kêr e-unan a c'hell bezañ dalc'het en div yezh ivez. Kalzik a vaered hag a zilennidi a ra gant ar brezhoneg da-geñver al **lidoù ofisiel** (hetoù ar bloaz nevez, geveilliñ, h.a.).

Reiñ harp d'an divyezhegezh en obererezh sokial hag en deskadurezh

• An obererezh sokial

E-touez barregezhioù henvoazel ar c'humunioù emañ an obererezh sokial. Karget int e gwirionez da verañ **an diwallerezhioù, ar magourioù ha tiez ar re gozh**. E stern politikerezh yezh ar c'humunioù eo talvoudus kemer ar brezhoneg e kont e degemer ar frammoù-se koulz hag en o endro (gw. p. 87).



• An deskadurezh divyezhek

E karg eus ar **skolioù kentañ derez publik** emañ ar c'humunioù; harpañ hentad publik an deskadurezh divyezhek a c'hellont ober, neuze, en ur **sevel pe en ur c'hempenn ar savadurioù**. A-hend-all, e ken kaz ne vefe ket c'hoazh eus an hentad-se war tiriad ar gumun, mat eo aesaat enskrivadur ar vugale a fell dezho en ur gumun nes en ur asantiñ e vefe rannet ar frejoù enskrivañ ganti. Diouzh barrezhioù ar pennoù-kêr eo tuta an ATSEM* a ro skoaz d'ar skolaerien evit degemer ar vugale, koulz ha tuta implijidi all er skolioù; anavezet eo pegen talvoudus eo e vefe an dud-se ivez ampart war ar brezhoneg lec'h ma'z eus eus un hentad divyezhek.

Harpañ an deskadurezh divyezhek a c'heller ober ivez dre an arc'hant a c'heller reiñ d'ar **skolioù prevez dindan kevrat kevredigezh** (skodenn-skol ar gumun, skoaziadenn "dafar-skol bihan"). Keit ha ma vez "e-maez kevrat" lec'hiad un hentad, reiñ ur skoaziadenn d'ar gevredigezh kerent a ra war-dro ar raktres zo an doare gwellañ d'e harpañ. A-hend-all, Kuzul-kêr Sine en deus divizet e 2007 reiñ ur skoaziadenn dreistordinal da skol Diwan Gwened o vezañ ma ro homañ un deskadurezh vrezhonek d'ar vugale na c'hellont ket kaout e skolioù Sine, ur skouer dedennus eo.

Atizañ oberourien all ar vuhez lec'hel

Oberoù all da lakaat ar brezhoneg war wel a c'heller erbediñ d'ar c'humunioù evel elfenn greiz ar vuhez lec'hel. Ouzhpenn reiñ harp d'ar c'hevredigezhioù a stourm war-eeun evit ar brezhoneg evel-just (reiñ skoaziadennoù, reiñ bod, brudañ an oberoù a vez kaset ganto), e c'heller ivez broudañ hollad an oberourien sokio-armezhel da gemer ar brezhoneg e kont ne vern pe hini a vefe o zachenn obererezh. Gant skoaziadennoù azas e vroud ti-kêr **Karaez** ar genwerzhourien da lakaat divyezhek o zalbennoù pa vezont renevezet, da skouer; un intrudu talvoudus eo.

Kas ar c'houlzad "Ya d'ar brezhoneg" war-raok e-touez embregerezhioù ha kevredigezhioù e diriad a c'hell ober ar gumun ivez. Kemend-all a c'hell ober evit "Ya d'ar brezhoneg er c'humunioù" o tougen anezhañ dirak ar c'humunioù nes dezho, koulz hag o lakaat da sinañ kumuniezhoù tiriadel a vent vrasoc'h (frammoù etre kumunioù, broioù).

Splet ar c'humunioù eo bountañ war ar c'humuniezhoù tiriadel a vent vrasoc'h evit ma kemerfent muioc'h ar brezhoneg e kont en o folitikerezh. Evit ar pezh a denn d'ar broioù Voynet, da skouer, oberoù lec'hel zo a sav adu gant an divyezhegezh a c'hell bezañ harpet muioc'h **dreist-holl m'emaint er C'hevratoù bro 2006-2012** a ra al liamm etre ar raktresoù douget gant ar c'humuniezhoù lec'hel ha raktres ar Rannvro.

Ar skoazelloù a c'hell kaout ar c'humunioù da lakaat o folitikerezh yezh da dalvezout

Skoazell ar Stad

Tu zo lakaat ar brezhoneg d'ober e vad eus skoazelloù zo a ro ar Stad d'ar c'humunioù. Al levraouegoù-kêr da skouer a c'hell gounit ur skoazell digant ar CNL* dre an DRAC* abaoe un nebeud bloavezhioù : war un dodenn resis ez eus tu d'ober ur **goulenn tematek** bloaziek. Un hent da binvidikaat an dalc'hadoù levrioù brezhonek eo; ezhomm zo neuze da vroudañ al levraouegoù-kêr da vont war an tu-se.

Skoazell Rannvro Breizh

Ur wellaenn bet degemeret a-unvouezh gant ar C'huzul-rannvro (25-26 a viz Genver 1999) a embann e c'hell ar Rannvro hag ar c'humunioù sevel emglevioù da gas yezh ha sevenadur Breizh war-raok.

Rannvro Breizh a skoazelle ar c'humunioù c'hoant ganto lakaat **panelloù-heñchañ divyezhek** war vord o hentoù. 20% eus priz al labourioù (pep taos er-maez) a c'helle bezañ roet neuze d'ar c'humunioù dindan 20 000 annezad. A-hend-all, arc'hantaouiñ ar **sevel klasoù pe skolioù divyezhek** a rae ar C'huzul-rannvro evit skoazellañ ar c'humunioù mennet ha derc'hel kont e teu ar skolidi eus meur a gumun.

Siwazh, n'hall ket ar c'humunioù bezañ skoazellet er mod-se ken dre ma ne oa ket embannet fraezh ar reolennoù evit kaout ar sikourioù-se. Tu zo memes tra d'ar c'humunioù klask kaout ur skoazell digant ar broioù Voynet dre ar C'hevratoù bro 2006-2012 hag o zrede goload peurgetket. A-bouez e vo kelaouiñ mat ar strollegezhioù lec'hel eus an doare-se.

Skoazell an departamantoù

Ur programm skoazellañ ar c'humunioù zo gant departamant **Penn-ar-Bed** evit ma vefe savet **studiadennoù war an anvioù-lec'h** hag evit ma vefe staliet **panelloù a gemer a brezhoneg e kont**. Ur skoazell da **zigeriñ klasoù divyezhek publik** a ro Penn-ar-Bed ivez. Mat e vefe d'an departamantoù all ober kement buan (evit ar c'humunioù dindan 10 000 annezad peurgetket).

Klozadur darnel

Galloudoù zo gant ar c'humunioù hag ul live melestradurel tost ouzh an annezidi eo, da lavaret eo e vez ganto meur a dro da reiñ plas d'ar brezhoneg. Skouerioù e-leizh zo e gwirionez eus an oberoù a c'hell kas ar c'humunioù da ziorren implij ar yezh war dachenn pe dachenn stag ouzh buhez pemdez ar geodourien.

Merzout a reer ez eus un nebeud kumunioù zo er penn a-raok evit diorren plas ar brezhoneg (Landerne, Karaez, Rostrenenn, Lannuon pe Pondi da skouer), alies ar memes re abaoe bloavezhioù; tiez-kêr all o deus divizet mont war-raok ivez dre "Ya d'ar brezhoneg" (Douarnenez, Lannarstêr, Pleskob, Sant-Teve, h.a.), re all c'hoazh a hañval koll o lusk goude bezañ kemeret divizoù a yae war an tu mat koulskoude (Pempoull, Gwengamp pe Kemper da skouer). Pouezus eo dreist-holl gwelet pegen lies eo an doareoù zo da ziorren implij ar brezhoneg : peadra zo evit ma rafe pep kumun araokadennoù diouzh gwirvoud he ziriad.

Araokadennoù heverk zo bet graet war dachenn implij ar yezh gant an tiez-kêr abaoe un ugent vloaz bennak e gwirionez. E-kreiz ar bloavezhioù 80, n'o doa tost nemet ur sell glad war ar yezh : ne veze lakaet e brezhoneg nemet traoù a oa liv ar brezhoneg warno c'hoazh, da lavaret eo anv ar gumun peurliesañ. Tamm-ha-tamm ez eus deuet oberoù all evel reizhañ anvioù ar c'hêriadennnoù da skouer; gant ar bazenn-se e vez anavezet pouez ar yezh en ur implij anezhi evel dave evit al lec'hanvioù.

Da c'houde eo kroget kumunioù zo da zivyezhekaat ar panelloù-heñchañ, koutz ha panellerezh diabarzh ha diavaez ar savadurioù-kêr; er mod-se e teu ar brezhoneg da vezañ un tamm eus gweledva pemdeziek annezidi ar gumun hag ur yezh a c'heller ober ganti en un doare fetis war ar marc'had.

War ziorren ez a an divyezhegezh e skoroù kehentiñ kumunioù zo abaoe un nebeud bloavezhioù : pedadennoù, plegfollennoù, teulioù bihan, kannadig-kêr, lec'hiennoù Kenrouedad an ti-kêr, h.a. Brasoc'h-brasañ eo plas ar brezhoneg er vuhez pemdez neuze dre ma reer gantañ evit traoù pleustrek ha berrbad ha n'eo ket evit panelloù staliet evit pell hepken.

E-ser kenderc'hel da ziorren ha da ledañ an holl bazennoù-se eo deuet ar poent da vrudañ doareoù all d'ober gant ar brezhoneg evit mont pelloc'h ganti. Diorren implij teulioù melestradurel divyezhek a c'heller ober aes : bez' ez eus eus an teulioù-se en un nebeud kumunioù c'hoazh met peurliesañ ne vezont kinniget d'an annezidi nemet pa reont fraezh ar goulen (hogen diazez ur politikerezh yezh eo e talvezfe evit an holl). Diorren un degemer e brezhoneg a c'hell bezañ graet ivez : lakaat war wel an implijidi-kêr gouest da gomz brezhoneg gant ar velestridi zo un dra aes. Stummadurioù dibaouez war ar yezh a vez kinniget e ti-kêr-mañ-ti-kêr ouzhpenn-se (Douarnenez, Pondivi).



Ar galloudoù foran Klozadur

War gresk un tammig eo aet, e-kerzh ar pemp bloavezh tremenet, ar gwask etrebroadel evit difenn ar yezhoù bihanniver ha kas al liesyezhegezh war-raok (gant an UNESCO* hag Unaniezh Europa peurgetket). Neoazh, n'eo ket gwall redius ar gwarezioù-se evit c'hoazh ha diseblant a-walc'h eo chomet Stad Frañs ouzh an atizoù diavaez da anavezout muioc'h ar yezhoù rannvro. N'eo ket bet cheñchet statud lezennel ar brezhoneg pa ne anavez ar Vonreizh nemet ur yezh d'ar Republik atav. Ar skoilh-mañ zo unan eus ar skoilhoù pennañ en deus ar brezhoneg da dalañ outo. E miz Gouere 2006 e oa bet degemeret gant Frañs daou gendivizad eus an UNESCO* hag a sav a-du gant al liesseurted sevenadurel koulskoude. En desped da gement-mañ n'eus bet tamm cheñchamant ebet e emzalc'h ar Stad evit ar mare.

En tu all d'an emdroadur diavaez e talc'her da vountañ a-benn gwellaat statud ar yezhoù rannvro e diabarzh Frañs ivez. Ouzhpenn ar c'hinnigoù graet gant kannaded zo evit kemmañ ar Vonreizh eo krog bremañ ar strollegezhioù foran e Breizh da gemer ar brezhoneg e kont en o folitikerezh betek lakaat ar Stad da c'hoari eno evel keveler a-wechoù. Aet eo an dra-se war ziorren kalzik er bloavezhioù diwezhañ-mañ ha splann eo bremañ n'eo ket ken ar brezhoneg afer hiniennoù ha kevredigezhioù hepken : **afer kevredigezh Breizh en he fezh e teu da vezañ tamm-ha-tamm.**

Krog eo an dilennidi neuze da sammañ o atebegezh war an dachenn-se hag, a-wechoù zoken, da vezañ e penn ar jeu evit kas ar yezh war-raok. Ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro war an divyezhegezh a soñjer enni koulz hag er steuñv Politikerezh yezh degemeret a-unvouezh gant Bodadenn rannvroel Breizh, pe c'hoazh en emglevioù niverus sinet etre Ofis ar Brezhoneg hag ar c'humunioù. Un emdroadur a bouez-bras eo. E penn a-raok al lusk-se e oa an departamantoù er bloavezhioù 80 ha 90 (dreist-holl Aodoù-an-Arvor ha Penn-ar-Bed). Hiziv an deiz, Penn-ar-Bed a chom an departamant a sikour ar muiañ ar brezhoneg ha departamant ar Mor-Bihan zo oc'h adaptout an dale a oa gantañ, met mankout a ra dezho ur preder hollek c'hoazh (par da hini ar Rannvro ha kumunioù zo). Emichañs e vo broudet an departamantoù da ziazezañ ur politikezh yezh en o zachenn obererezh d'o zro.

Daou skoilh dreist-holl a vir ouzh ar politikerezhioù-se da vont ken pell ha m'eo dleet. Da gentañ e ranker menegiñ strizhded barregezhioù ar strollegezhioù foran-se (e Frañs, ar Rannvroioù zo dister o barregezhioù), met da c'hortoz e vefent ledanaet - evel ma c'hellfent bezañ gant ar gwir da arnodiñ da skouer - ez eus doareoù all da gas an traoù war-raok memes tra (o sevel kenemglevioù gant ensavadurioù all peurgetket). Da eil e verzer eo techet c'hoazh ar strollegezhioù-se da arc'hantaouiñ oberoù ar bed kevredigezhel muioc'h eget strivañ war an oberoù a c'hellont kas da benn drezo o-unan. Araokadennoù a verzer war an dachenn-se tamm-ha-tamm memes tra ha pa vefe ezhomm e vefe emskiantekoc'h c'hoazh ar strollegezhioù eus o atebegezh hag eus o galloud ober.

An emouestl pleustrekañ gant ar yezh eo c'hoazh hini ar c'humunioù moarvat. Meur a zoare zo da gas ar brezhoneg war-raok dre oberoù a zo tost d'ar geodedourien e gwirionez (gwelet da skouer an oberoù kinniget gant an Ofis en emglev "Ya d'ar brezhoneg"). An dalc'h eo e chom bihan evit ar poent an niver a gumunioù a gas ur preder politikel war ar yezh ha ne vez ket kemeret ar brezhoneg e kont gant ar frammoù etre kumunioù peurliesañ en desped da dalvoudegezh al live melestradurel-se.

dre-vras, degouezh dibar ar bloavezhioù diwezhañ-mañ eo dihun strollegezhioù foran Breizh a anavez muioc'h-mui ar brezhoneg evel un teul politikel da vezañ kaset war-raok war pep tachenn. Mont a reer er-maez tamm-ha-tamm eus ur sell war ar yezh bevnet d'ar glad evit kaout ur politikerezh treuz. Krog eo ar strollegezhioù d'ober gant ar brezhoneg ; ur bazenn a bouez-kenañ eo hag a ranko bezañ kreñvaet er bloavezhioù da zont betek ma teufe ur gwir divyezhegezh da vezañ degemeret gant ar gevredigezh evel un dra reizh hag ordinal.



K e l e n n

Penaos emañ kont gant ar c'helenn, mammenn bennañ ar yezherien nevez ha marc'h blein diorren ar brezhoneg ?

Kelenn divyezhek, petra nevez er reolennadur abaoe 2002 ?

26 a viz Kerzu 2004 : Sinadur ur c'henemglev-stern etre Kuzul departamant ar Pireneoù-Atlantel hag ar Stad (dileuriet gant Rektor Akademiezh Bourdel) evit diorren ha frammañ kelenn ar yezhoù rannvro hag ar c'helenn dre ar yezhoù rannvro (euskareg hag okitaneg). D'en ober e tiazeez ar skrid-se kenlabour an ensavadurioù sellet outo ha fiziañ a ra e frammoù arbennikaet (evel Ofis Publik an Euskareg) kefridioù evel empennañ ur steuñvekaat liesvloaziek evit ar c'hinnig kelenn.

24 a viz Meurzh 2005 : Embannadur al lezenn heñchañ ha programm evit dazont ar skol (**lezenn Fillon**) er Gazetenn Ofisiel. Drezi eo skrivet bremañ e mellad L.312-10 kod an deskadurezh : "Un enseignement de langues et cultures régionales peut être dispensé tout au long de la scolarité selon des modalités définies par voie de convention entre l'Etat et les collectivités territoriales où ces langues sont en usage,...". Tu a vefe da Rannvro Breizh sevel ur c'henemglev gant ar Stad eta ; seurt testennoù zo war ar stern, da skouer, en Akwitania, e Midi-Pyrénées pe e Lengadog-Roselhon etre ar C'huzulioù-rannvro hag ar rektoriezhoù.

A-hend-all, gant ar resisadenn "où ces langues sont en usage" degaset gant al lezenn Fillon ez eus riskloù e vefe bevennet kelenn ar brezhoneg da Vreizh hepken (ha, gwashoc'h zo, da Vreizh velestradurel) : d'an distroskol 2006 e oa bet nac'het gant Akademiezh Arcueil an enskrivadurioù d'an arnodennoù okitaneg ha korseg er vachelouriezh da lakaat al lezenn Fillon da dalvezout. A-drugarez d'an enebadurioù a zo bet ez eus bet asantet d'an enskrivadurioù a-benn ar fin, met riskloù zo e savfe ar gudenn-se en-dro d'an distroskol 2007.

29 a viz Even 2006 : Degemeret ez eus bet gant Bodadenn Korsika ur Steuñv Rannvroel war ar Stummañ ennañ ur rann "Lingua è cultura corsa" (Yezh ha sevenadur Korsika). Elfenn bennañ ar rann-se eo astenn ar c'helenn divyezhek d'an holl glasoù er skolioù-mamm ac'hann da fin mare ar steuñv (2007/2013). An diviz-se a ya da-heul pal Steuñv Diorren Korsika (1993) da ledanaat kelenn ar c'horseg da holl glasoù an enez' (hervez un enklask embannet gant ar Rektoriezh e 2005, ne chome nemet 5% eus ar c'hlasadoù n'o doa tamm tañva ebet d'ar c'horseg d'ar c'houlz-se). Evit ma vefe doujet da bennaenn ar c'hevatalder, seurt divizoù a rankfe bezañ kemeret evit ar brezhoneg ivez.

1 Ur pal heñvel a oa bet lakaet gant an emglev kensinet gant Ministrerezh an Deskadurezh Stad, Rannvro Elzas ha Rektoriezh Strasbourg ("Convention portant sur la politique régionale des langues vivantes dans le système éducatif en Alsace - Période 2000/2006").

N'eo ket rannet ingal kresk ar c'helenn divyezhek

Petra eo hentadoù divyezhek Breizh ?

En o barrekañ emañ ar re yaouank evit deskiñ ar yezhoù pa vezont dindan seizh vloaz. Gant an emskiant o deus eus daou zoare reoladoù* e teu d'ar vugale divyezhek abred ar pleg da lakaat a-dal, da geñveriañ ha da enebiañ an traoù. Gounit eo an div yezh gant kement-se ha broudet e vez ar boelloniezh hag ar varregezh da gas ur preder difetis. Aesoc'h e vez d'ar vugale-se degemer sevenadurioù all ha doareoù all da soñjal, zo kaeroc'h. Kemer harp war yezh ar vro, gwriazennet ha bev, a ro tro da zigeriñ muioc'h c'hoazh spered ar vugale (anavezout an-unan evit gellout anavezout ar re all) e-ser doujañ da liesseurted ar sevenadurioù. Muioc'h en o aez gant ar meizadoù jedoniell hag al labourioù krouiñ e vez ar vugale divyezhek abred hervez studiadennoù skiantel war an divyezhegezh bet graet e Kanada er bloavezhioù 60.

Evit lakaat bugale vihan da vezañ divyezhek e ranker mont dre deir fazenn : barregezh ar c'hehentiñ (bezañ gouest da gompren ha da gomz en div yezh), barregezh ar skrid (bezañ gouest da lenn ha da skrivañ en div yezh), barregezh ar skiant (bezañ gouest da ren soñjoù difetis ha kemplezh en div yezh).

Boutin eo ar soñjoù-se d'an tri hentad divyezhek zo e Breizh. Pep hini anezho a vez kaset war-raok war-bouez strivoù kevredigezhioù kerent².

2 Diwar dafar kehentiñ ar c'hevredigezhioù-se eo bet savet ar pennad sterniet-mañ.

Gant ar gevredigezh **Diwan** e oa bet digoret ar skol-vamm divyezhek kentañ e 1977. Ar **soubidigezh** eo perzh dibar an hentad-se. Da lavaret eo, en em gavout a ra ar vugale en un endro brezhonek er skol. **Kelenn divyezhek par-ouzh-par** a vez graet gant an daou

hentad all. E skolioù-mamm an **deskadurezh publik** (rouedad klasoù divyezhek diorroet gant ar gevredigezh tud skolidi **Div Yezh** abaoe 1983) e vez lakaet ar vugale da zeskiñ, d'ober ha da vevañ gant an div yezh. Er **skolioù prevez katolik** eo bet krouet an trede hentad diwar intrudu ar gevredigezh tud skolidi **Dihun** e 1990. Soubidigezh zo er skol-vamm evit kas ar vugale d'an divyezhegezh. Ouzhpennet e vez un trede yezh buan dre an hentenn "Artigal" (deskiñ ur yezh dre ur gendestenn staliet gant c'hoarioù).

Pep hini eus an tri hentad divyezhek en deus un doare kelenn dezhañ e-unan. N'eus ket kalz a enklaskoù a zo bet kaset gant pep hentad da c'houzout piv eo ar gerent met gwelet a reer drezo ne vez ket sachet tre ar memes tud gant pep doare kelenn. Peadra zo da soñjal n'eus ket gwir gevezerezh etre an tri hentad.

Da-geñver emvod Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro e miz C'hwevrer 2007 e oa bet kemennet e vefe ledanaet d'ar c'helenn divyezhek e 2007/2008 arnodoù priziañ evit gwiriañ **live yezh ar skolidi**. Evit ar poent, al liveoù goulennet da-geñver priziañ ar barregezhioù yezh (ha pa vefe ar brezhoneg pe ur yezh all) eo al live A1 e dibenn ar CM*2 hag al live B1 e dibenn an 3de klas - diouzh ar Framm europat boutin diazez evit ar yezhoù. Azas e c'hell bezañ seurt liveoù gant un tañva d'ar yezh, met splann eo e rankfe palioù kalz uhelekok'h bezañ lakaet evit an deskadurezh divyezhek (un diferad* a vefe war ar stern gant Ministrerezh an Deskadurezh Stad hag a lakfe al live A2 da bal evit ar yezhoù rannvro e dibenn ar c'hentañ derez ; pell a vezañ a-walc'h eo c'hoazh).

Poblañs deskidi ar c'helenn divyezhek

Dasparzh ar c'helenn divyezhek war tiriad Breizh

Emdroadur ar c'hinnig : kumunioù enno ul lec'hiad divyezhek (d'an nebeutañ) e 1985, e 1995, hag e 2005

Aet eo an traoù war-raok e-korf un ugent vloaz bennak. War stankaat ez a ar c'helenn divyezhek tamm-ha-tamm war kartenn Vreizh, er c'hentañ derez dreist-holl.



Stankaet mat eo rouedad ar c'humunioù ma'z eus ul lec'hiad divyezhek d'an nebeutañ abaoe deroù ar c'helenn divyezhek e Breizh e 1977. Diorroet eo muioc'h ha buanoc'h e kornôg Breizh ma'z eus un hengoun kreñv gant ar brezhoneg. Dizingal eo dasparzh ar skolioù er vro-se avat : un diforc'h bras a zo etre kornioù-bro a zo goloet mat a-walc'h (bro Vrest, mervent ar Mor-Bihan, arvor Treger) ha kornioù all goullooc'h.

Nebeutoc'h a skolioù zo e reter Breizh met n'int ket bodet ken er c'hêrioù brasañ hepken evel ma oant er penn kentañ; tamm-ha-tamm e vez digoret skolioù e kumunioù bras all (Sant-Nazer, Sant-Maloù), pe kumunioù etre (evel Gwenrann, Redon, Dinan, Bruz) hag e kumunioù bihan zoken (e reter ar Mor-Bihan peurgetket). Emskiantet eus an tuadur-se en deus goulennet prezidant Kuzul-departamant Il-ha-Gwilen gant an Ensellerezh Akademiezh e vefe savet ur bodad labour etre an daou ensavadur evit aozañ ar c'helenn brezhoneg e deskadurezh publik an departamant.

A bouez bras eo e vefe ur c'hinnig tost da lec'h annez an dud evit ma vefe tizhet an holl gant ar c'helenn divyezhek e gwirionez. Sachet eo evezh kalz a gerent gant perzhioù mat ar c'helenn divyezhek met n'eo ket mennet pe kelaouet a-walc'h an darn vrasañ anezho evit kas o bugale da skolioù pell diouzh o lec'h annez pe diouzh o lec'h labour.


Strivoù zo d'ober c'hoazh evit stankaat ar rouedad lec'hiadoù divyezhek e Breizh neuze. Seul gempleshoc'h e teu an traoù da vezañ, seul dalvoudusoc'h eo kaout aozadurioù gouest da vodañ kevredigezhioù kerent pep hentad hag an ensavadurioù barrek a-benn kas ur preder hollek war diorren ar skolioù divyezhek e Breizh a-bezh (unan eus abegoù bezañ ar C'huzulioù Akademiezh evit ar yezhoù rannvro eo) pe war un dachenn resisoc'h.

**Stad diorren ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez (skolioù-mamm ha skolioù kentañ)
Distro-skol 2007**

Gallout a reer komz eus ur c'hinnig tost da lec'h annez an dud e kornioù zo (bro Vrest, mervent departamant ar Mor-Bihan), met tachenoù distankoc'h a chom e kornioù all eus Breizh-Izel (bro Gerne, norzh bro Kornôg Kreiz-Breizh).



- Kinnig kelenn divyezhek
- Takadoù war-hed 10 km tro-dro d'ul lec'hiad divyezhek
- Kelenn unyezhek hepken



- Kinnig kelenn divyezhek
- Takadoù war-hed 15 km tro-dro d'ul lec'hiad divyezhek
- Kelenn unyezhek hepken

Stad diorren ar c'helenn divyezhek en eil derez - Distro-skol 2007

Pell a vezañ stank eo rouedad al lec'hiadoù divyezhek en eil derez c'hoazh.

Rouedad al lec'hiadoù divyezhek en eil derez n'eo ket kenkoulz ha hini ar c'hentañ derez. Gwir eo ez eo kreizennetoc'h ar skolajoù hag al liseoù war ar c'hêrioù bras pe etre eget ar skolioù, dre-vras, met splann eo e chom diaes kenderc'hel gant an hentad divyezhek en eil derez evit un darn vat eus ar grennarded.

An hentad dre soubidigezh a zegemer ar skolidi e savadurioù dezhañ e-unan : pevar skolaj (mui un adskolaj) hag ul lise a zo e 2007. Pañsionidi eo ar brasañ niver eus skolajidi ha liseidi Diwan ha startoc'h-startañ eo kavout ar plas ret evit degemer an holl vugale a zeu eus ar CM*2.

Peurliesañ e vez degemeret skolidi an hentadoù divyezhek par-ouzh-par e skolioù unyezhek a-hend-all. Splann eo emañ kerent ar vugale skoliataet enno o klask kentoc'h ur skolaj pe ul lise tost a-walc'h d'o lec'h annez.

Pouezus eo gellout kenderc'hel gant an hevelep hentad ouzhpenn-se : daoust ma vez aes d'ur bugel skoliataet er c'hentañ derez e Diwan tremen d'ar c'helenn divyezhek publik oc'h en em gavout e 6vet klas, gallout a ra an tremen bezañ diaesoc'h en tu kontrol. Ha digalonekaus e c'hell bezañ evit danvez kerent zo gouzout en a-raok n'eo ket sur e c'hello o bugel chom gant an hevelep doare kelenn a-hed e amzer-skol. Kompren a reer mat neuze pegen mallus eo mont war-zu ur rouedad stank a skolajoù evit pep hentad par-ouzh-par. Kalz a araokadennoù a chom d'ober war an dachenn-se c'hoazh.


Ouzhpenn stankaat ar rouedad-se e vefe pouezus kadarnaat ar c'helenn divyezhek en eil derez el lec'hioù m'emañ dija, en hentad divyezhek an deskadurezh publik peurgetket. Ar pal a vefe mont da 12,5 eurvezh brezhoneg e pep lec'h (gwir kelenn "par-ouzh-par") ha liesaat an danvezioù kelennet. Bevennet-tre eo an danvezioù a vez kelennet e brezhoneg e gwirionez : ned eer ket dre ar brezhoneg evit kelenn saozneg, da skouer (daoust ma c'hell bezañ eil danvez ar c'hCAPES* daoubennek), nag ar vevoniezh kennebeut (daoust ma'z eus, evit an danvez-se, kelennerien titlet ampart-tre e brezhoneg).

Ar c'helenn divyezhek er-maez eus Breizh

E Pariz he deus ar gevredigezh Diwan digoret ur skol divyezhek dre soubidigezh d'an distro-skol 2004. N'eus skouer ebet all e Frañs eus ur c'helenn divyezhek graet en ur yezh vihanniver er-maez eus he rannvro istorel. Gallout a rafed mont pelloc'h war an tu-se en amzer-dazont : digeriñ lec'hiadoù divyezhek e kerioù brasañ Frañs (An Havr-Nevez, Bourdel, Lyon...) evit m'o defe tro ar Vretoned niverus a labour du-hont da skoliata o bugale en div yezh.

Emdroadur an niver a vugale skoliataet en hentadoù divyezhek abaoe an deroù (eus 1977 da 2006) ha martezeadennoù evit tizhout ar pal a 20 000 skoliad a-benn 2010


11 092 skoliad o doa un deskadurezh divyezhek e 2006/2007. Ne baouez ket an niver a vugale skoliataet en deskadurezh divyezhek da greskiñ abaoe m'eo bet digoret ar skol gentañ e 1977. Techet eo ar c'hresk bloaziek da c'horrekaat abaoe un nebeud bloavezhioù avat. Reiñ ul lusk nevez da ziorren pep hentad zo ezhomm evit ma vefe 20 000 skoliad gant an deskadurezh divyezhek a-benn 2010 (hervez pal politikerezh yezh Rannvro Breizh). Ma ne zeufe netra da gemm an tuadurioù a stader hiziv an deiz, ne vo nemet war-dro 14 000 skoliad en deskadurezh divyezhek a-benn 2010.



Gwelet a reer gant ar grafik amañ a-us e kresk dizehan an niver a vugale skoliataet e brezhoneg tra ma chom stabil a-walc'h poblañs ar skolioù dre-vras e Breizh a-hend-all. Pa seller ouzh emdroadur kresk bloaziek ar skolioù divyezhek avat e verzer **ez a ar c'hresk-se war c'horrekaat tamm-ha-tamm**. Tost da 25% e oa ar c'hresk bloaziek keitat er bloavezhioù 80, met diskennet e oa da 17% e fin ar bloavezhioù 90 (maread 1995/2000) ha da 9% er bloavezhioù tremenet (maread 2001/2006).

Emdroadur kresk bloaziek an niver a skolidi en deskadurezh divyezhek keñveriet gant hini ar c'hentañ derez ha hini ar skolioù-mamm (eus an distro-skol 1996 da hini 2006)

Liammet start gant emdroadur kresk bloaziek ar skolioù-mamm eo kresk bloaziek an deskadurezh divyezhek dre-vras. Evit ma kreskfe kalz an niver a skolidi ez eus ezhomm da zigeriñ muioc'h a lec'hioù skolioù-mamm, splann eo.



Seul stankoc'h e vez ur rouedad skolioù, seul ziaesoc'h e vez derc'hel gant an hevelep lusk digeriñ a c'heller soñjal ha "naturel" e vefe neuze gorrekadur kresk ar c'helenn divyezhek (kompren a reer gwelloc'h talvoudegezh pal Rannvro Breizh a 20000 skoliad divyezhek a-benn 2010 neuze, gw. p. 27). Neoazh, arabat eo disoñjal an diaesterioù en deus ranket ar c'helenn divyezhek talañ outo er bloavezhioù tremenet.


Anavezet eo e chom meur a lec'hiad divyezhek nevez hep digeriñ bep bloaz daoust dezho kaout danvez skolidi a-walc'h d'en ober. Diaesterioù melestradurel, un enebiezh e diabarzh ar skolioù pe un diouer a youl bolitikel a zegas an dra-se. Daou zanvez lec'hiad divyezhek zo chomet hep digeriñ en deskadurezh publik d'an distro-skol 2006 daoust dezho seveniñ diarbennou al lezenn. Ul lec'hiad nevez hepken a oa da zigeriñ d'an distro-skol-se en hentad prevez katolik. Un harz-debriñ en deus graet prezidant ar gevredigezh Dihun da stourm ouzh an diviz-se, ha bountet en deus evel-se renerien an DDEC*où da embann e vefe digoret seizh lec'hiad; tri hepken a zo bet a-benn ar fin. Nec'hus eo e rankfer mont ken pell evit gounit e vefe digoret lec'hioù tra m'eo bodet an holl aozioù d'en ober.

Kement ha kreñvaat goulenn ar gerent ha reiñ un nerzh nevez da gresk an niver a skolidi divyezhek en deus aozet **Kuzul Sevenadurel Breizh** (asambles gant "an tri di-"³) ur c'houlzad brudañ kentañ e miz Mezheven 2006. Ur 600 skritell vras bennak mui goreennoù brudañ e kelaouennoù pemdeziek zo bet gouestlet d'ar c'houlzad-se a lak ar pouez war perzhioù mat ar c'helenn divyezhek evit ar vugale ("Ur chañs evit ho pugel!"). Ar vrudadeg-se n'he deus ket miret ouzh an hentad divyezhek bezañ e gresk bloaziek izelañ d'an distro-skol da-heul. Ret eo en em soñjal war ar penaos hag ar perag evit aozañ ar c'houlzadoù da zont neuze. Evit brudadeg 2007 eo bet digresket pouez ar skritelloù, met skignet ez eus bet ur bomm bruderezh 42 wech gant France 3 Ouest da vare ar predoù a-hed miz Mae.

3 An teir c'hevredigezh : Diwan, Div Yezh ha Dihun.

Emdroadur an niver a vugale skoliataet en hentadoù divyezhek dre zepartamant (eus an distro-skol 1996 da hini 2006)

E departamant ar Mor-Bihan eo kresket ar buanañ an niver a skolidi divyezhek en ur ober dek vloaz, goude ma chom ar brasañ niver gant Penn-ar-Bed. Kalz gorrekoc'h eo bet an emdroadur en Aodoù-an-Arvor o deus kollet kalz eus al lañs o doa er bloavezhioù 80. dre-vras ez eus dek vloaz dale gant departamant Il-ha-Gwilen e-keñver Aodoù-an-Arvor pe ar Mor-Bihan. Diaes-kenañ eo diorroidigezh ar skolioù divyezhek el Liger-Atlantel en abeg d'an disparti melestradurel peurgetket.



Kresk bloaziek keitat an niver a skolidi en deskadurezh divyezhek dre zepartamant

| | Maread 1996/2006 | 2001/2006 |
|----------------|------------------|--------------|
| Aodoù-an-Arvor | 10,25% | 8,69% |
| Il-ha-Gwilen | 17,44% | 7,15% |
| Liger-Atlantel | 16,86% | 3,13% |
| Mor-Bihan | 15,11% | 9,34% |
| Penn-ar-Bed | 11,41% | 8,49% |
| Breizh | 12,63% | 8,45% |

O keñveriañ kreskoù keitat ar maread 1996/2006 gant re ar maread 2001/2006 e verzer eo techet kresk bloaziek poblañs an hentad divyezhek da vont war c'horrekaat en holl zepartamantoù.

Pep departamant en deus ur perzh disheñvel en emdroadur an niver a skolidi divyezhek e Breizh. An darn vrasañ eus ar poblañs-se zo skoliataet e Penn-ar-Bed (42% eus an hollad e 2006); kadarnaet e vez an dra-se a vloaz da vloaz. Er Mor-Bihan (31% eus an hollad e 2006) eo aet buanoc'h an traoù war-raok avat : tremen 15% eo ar c'hresk keitat jedet war an dek vloaz tremenet. Izeloc'h eo pouez Aodoù-an-Arvor e poblañs skolioù divyezhek Breizh (16% eus an hollad e 2006), ha merzout a reer eo an hini eus ar pemp departamant m'emañ ar c'hresk bloaziek keitat en e izelañ evit maread an dek vloaz tremenet.


Bras eo an diforc'h diorroadur etre ar c'hentañ hag an eil derez en deskadurezh divyezhek. En abeg d'an dra-se eo dedennus sevel studiadennoù war ar c'hentañ derez hepken a-wechoù a-benn kaout ur sell gwirion war stad an traoù ha na vefe ket kammet gant an eil derez.

Pouez ar c'helenn divyezhek e poblañs skolioù ar c'hentañ derez e pep bro Voynet - Bloavezh-skol 2006/2007

Diouzh ar vro eo bras pe vrasoc'h feur ar c'helenn divyezhek e poblañs ar c'hentañ derez. N'eus nemet pemp bro war nav warn-ugent zo skoliataet enno ouzhpenn 5% eus poblañs ar skolioù kentañ derez en hentad divyezhek. Gant bro Treger ha Goueloù emañ ar feur uhelañ (7,1%). A-hend-all, unnek bro zo c'hoazh hep tamm kinnig deskadurezh divyezhek ebet enno (unan nebeutoc'h a vo memes tra gant digoradur lec'hiad Gwitreg d'an distro-skol 2007).

Kentelius-kenañ eo kartenn pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre-vras. Dont a ra war wel da gentañ emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ e kornôg Breizh. Merzout a reer ivez eo er broioù "war ar maez", m'eo un tamm bevoc'h ar brezhoneg c'hoazh, m'emañ ar feurioù brasañ (bro Treger ha Goueloù, bro Kornôg Kreiz-Breizh, bro Bondi). Met live izel ar c'helenn divyezhek e bro Gerne eo anadenn heverkañ ar gartenn amañ dindan memes tra. Ouzhpenn bezañ izeloc'h eget re broioù all Breizh-lzel, feur ar c'helenn e brezhoneg e kentañ derez bro Gerne zo izeloc'h eget hini bro Bloermael ha homañ e Breizh-Uhel penn-da-benn avat. Daoust ma ranker kemer meur a elfenn e kont a-raok keñveriañ div vro, ez eo ur merk anat a zilañs. Displegañ a reer aes ar stad-se dre an diouer a skolioù nevez krouet e bro Gerne (nemet unan) er bloavezhioù diwezhañ.

Disheñvel mat eo neuz Breizh pa daoler pled ouzh dasparzh poblañs skolioù divyezhek ar c'hentañ derez dre vro. Pouez bras bro Vrest en deskadurezh divyezhek a zo anat : ouzhpenn ur bemvedenn eus ar re yaouank skoliataet e brezhoneg er c'hentañ derez zo enskrivet eno. Splet ar rouedad stank a skolioù zo enni eo. E Breizh-Uhel e oa o chom 15% eus skolidi ar c'hentañ derez divyezhek e Breizh e 2006/2007 a-hend-all, daoust d'an niver a lec'hiadoù kelenn divyezhek bezañ kalz izeloc'h eno eget e Breizh-lzel.



Keñveriañ pouez pep bro Voynet e kentañ derez an deskadurezh dre-vras hag e kentañ derez an deskadurezh divyezhek e Breizh-Izel - Bloavezh-skol 2006/2007

| | Pouez pep bro en deskadurezh dre-vras (A) | Pouez pep bro en deskadurezh divyezhek (B) | Arouez keñveriañ (B/A) |
|-------------------------|---|--|------------------------|
| Bro Gerne | 19,1% | 10,9% | 0,57 |
| Bro an Oriant | 13,2% | 9,7% | 0,73 |
| Bro Vrest | 24,4% | 25,2% | 1,03 |
| Bro Kêr-Wened | 10,0% | 10,9% | 1,09 |
| Bro Ventronez | 7,8% | 8,9% | 1,14 |
| Bro an Alre | 5,2% | 6,0% | 1,15 |
| Bro Kornôg Kreiz-Breizh | 5,4% | 6,4% | 1,19 |
| Bro Wengamp | 3,7% | 4,4% | 1,2 |
| Bro Treger ha Goueloù | 6,7% | 10,3% | 1,54 |
| Bro Bondi | 4,5% | 7,3% | 1,62 |

E bro Gerne emañ an diforc'h brasañ etre pouez ar vro en deskadurezh dre-vras hag he fouez en deskadurezh divyezhek.

Soñjal a c'helljed e vije bet damheñvel lodenn pep hini eus broioù Breizh-Izel en deskadurezh divyezhek ouzh he fouez en deskadurezh dre-vras. Gant ar soñj-se eo bet savet an daolenn amañ a-us ha disheñvelderioù a weler neuze. Kadarnaet eo emañ bro Treger ha Goueloù er penn a-raok evit ar c'helenn divyezhek, met un tammig brasoc'h eo striv bro Bondi diouzh ar c'henfeurioù. Pouez bras bro Vrest en deskadurezh divyezhek a hañval bezañ stag ouzh stad diorren an deskadurezh dre-vras p'eo kevatal he fouez en deskadurezh divyezhek ouzh he fouez en deskadurezh dre-vras.


Gwiriet eo gant an daolenn a-us, evel m'eo bet skrivet a-raok, eo izel a-walc'h feur ar c'helenn e brezhoneg e bro Gerne. Ne c'heller ket displegañ ar feur-se gant abegoù sokio-armerzhel, rak kalz izeloc'h eo pouez ar vro-se e deskadurezh divyezhek Breizh-Izel eget he fouez en deskadurezh dre-vras. Araokadennoù a c'hell bezañ graet er bastell-vro-se neuze.

Daoust m'eo diorroet mat a-walc'h rouedad ar skolioù divyezhek e bro an Oriant e chom izel lodenn ar vro en deskadurezh divyezhek e-keñver ar pezh a zlefe bezañ (n'eus lec'hiad divyezhek ebet e Plañvour da skouer).

Rannadur an deskadurezh divyezhek dre live

Keñveriañ pouez an deskadurezh divyezhek en deskadurezh dre-vras hervez al live e 2001/2002 hag e 2006/2007 e Breizh

Mont a ra an traoù war-raok buan a-walc'h er c'hentañ derez padal n'eo ket kenkoulz an tremen skolidi eus ar skolioù kentañ d'ar skolajoù nag eus ar skolajoù d'al liseoù.



Gant ar grafik-mañ eo kadarnaet an anadenn bet gwelet uheloc'h : kalz brasoc'h eo plas ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez eget en eil derez. Lodenn an deskadurezh e brezhoneg en deskadurezh dre-vras a zo brasoc'h e pep live kelenn eget el live uheloc'h. Arouezius eo an dra-se eus un doare skoliata nevez a-walc'h ha tonket da emdreiñ buan. E gwirionez, pa geñverier stad an traoù er bloavezh-skol 2006/2007 hag e 2001/2002 e verzer penaos eo aet an traoù war-raok en ur ober pemp bloaz. N'emañ ket re bell an dregantad a oa gant ar skolioù kentañ e 2006/2007 (1,7%) diouzh hini ar skolioù-mamm e 2001/2002 (1,97%); diskouez a ra ne goller ket re a vugale aze.

Siwazh n'eo ket kenkoulz an tremen eus ar skolioù kentañ d'ar skolajoù. Sañset e vefe tost an holl vugale a oa skoliataet eus ar CP* d'ar CM*2 da vezañ aet d'ar skolaj abaoe : ur feur ken bras da nebeutañ ha hini ar skolioù kentañ e 2001/2002 a rankfed kaout er skolajoù e 2006/2007 neuze. Hogen e-lec'h kavout 1,1% eo 0,64% ar sifr; **da lavaret eo e c'heller brasjediñ ez eus paouezet war-dro ur skoliad diwar tri gant ar c'helenn divyezhek etre ar CM*2 hag ar 6^{vet} klas** e-pad ar maread-se. Diaes eo ivez kenderc'hel gant ar c'helenn divyezhek evit ar re a dremen eus ar skolaj d'al lise : brasjediñ a c'heller ez eus aet ur skolajiad divyezhek diwar zaou d'ar c'helenn uyezhek el lise e-keit-se.

An diouer a ziorren zo gant rouedad al lec'hiadoù divyezhek en eil derez eo abeg pennañ ar c'holloù-se moarvat. Ma n'eus ket tu d'ar grennarded da genderc'hel gant "o" hentad divyezhek en ur skol tost a-walc'h da lec'h annez o zud, un nebeud anezho a ya d'un hentad divyezhek all, met an darn vrasañ a baouez gant ar c'helenn divyezhek. Gant gwir abeg e pouez UGB* ha kevredigezhioù kerent an deskadurezh divyezhek par-ouzh-par (Div Yezh peurgetket) war an ezhomm a zo e vefe diorroet al linennoù kirri-boutin a-ratozh evit aesaat treuzdougen ar grennarded a rank mont d'ur gumun bell evit kenderc'hel gant ar c'helenn divyezhek. Ur perzh bras o deus ar C'huzulioù-departamant da c'hoari aze gant ar varregezh o deus war ar servijoù-se (ur seurt preder a zo gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, da skouer).

Petra eo Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg ?

Bodañ a ra UGB* kellennerien a ra gant ar brezhoneg en o labour. Lakaet he deus da bal pennañ kelaouiñ ha stourm evit kelenn brezhoneg pe e brezhoneg er skolioù hag er c'hentelioù-noz. Evit kas ar brezhoneg war-raok e bed ar c'helenn e c'houlenn UGB* e vefe kresket niver eurvezhioù kelenn ar brezhoneg, koulz ha niver ar gellennerien; difenn a ra plas ar yezh en implij amzer ar skolioù hag en arnodennoù. Skoazellañ a ra ar gellennerien en o labour ivez.


Evit tizhout he falioù ez a UGB* e darempred gant an dilennidi ha gant dileuridi ar velestradurezh (kemer a ra perzh e Kuzul Akademiezh ar yezhoù rannvro da skouer), lakaet a ra ar gellennerien da anavezout o gwirioù, embann a ra pennadoù ha mennadoù, h.a.

Pouez ar c'helenn divyezhek e poblañs pep live kelenn e pep departamant - Bloavezh-skol 2006/2007

Emañ departamantoù ar Mor-Bihan ha Penn-ar-Bed er penn a-raok war dachenn diorren an deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez. Met labour a zo d'ober e pep departamant.

Lodenn ar c'helenn divyezhek e pep live deskadurezh en em gav ingalet ar gwellañ e Penn-ar-Bed. E 2005/2006, evit ar wech kentañ, e oa brasoc'h feur ar c'helenn brezhonek er c'hentañ derez en e bezh er Mor-Bihan (3,84%) eget e Penn-ar-Bed (3,82%). War-bouez nebeut eo tremenet an eil departamant-se dirak egile adarre e 2006/2007 avat. Izeloc'h-mat e chom ar feur en eil derez ar Mor-Bihan bepred. Daoust da se, ma kendalc'hfe da vont war-raok evel-se ha ma tiorrofe ar c'hinnig en eil derez, e c'hellfe ar Mor-Bihan dont da vezañ, un deiz bennak, an departamant kentañ war tachenn ar c'helenn divyezhek dirak Penn-ar-Bed.

Bihanoc'h eo perzh ar c'helenn divyezhek e pep live kelenn trede departamant kornôg Breizh, Aodoù-an-Arvor. Souezhus eo an dra-mañ, rak hanter vrasoc'h eo poblañs vrezhonek ar rummad-oad yaouankañ (18/30 vloaz) en departamant-se eget er Mor-Bihan hervez sifroù an EBSSA* (s.o. ar grafik p. 15). Muioc'h komzet gant an dud e chom ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor eget er Mor-Bihan ivez. Koulskoude eo kadarnaet gant ar gartenn-mañ an dilañs zo bremañ war dachenn ar c'helenn gant Aodoù-an-Arvor e-keñver ar Mor-Bihan.



Stag eo ouzh ar birvidik m'eo bet ar c'hrouiñ lec'hiadoù divyezhek er Mor-Bihan abaoe un dek vloaz bennak a-drugarez, dreist-holl, da strivoù kevredigezh kerent ar skolioù prevez katolik, Dihun. Diouzh an tu all eo koazhet-spontus diorren ar c'helenn divyezhek publik en Aodoù-an-Arvor e-keit-se (lec'hiad publik nevez ebet etre distro-skol 2002 ha hini 2006, pevar lec'hiad prevez katolik nevez zo bet abaoe en departamant avat).

Kalz izeloc'h eo ar feurioù e departamantoù ar reter abalamour d'an diaesterioù zo da zigeriñ lec'hiadoù nevez eno (skoilhoù lakaet gant dilennidi zo pe gant an Ensellerezhioù Akademiezh pa ne zeu ket un enebiezh eus diabarzh ar skol).

Liammet eo ar stad-se ouzh dibarderioù diorren an hentadoù divyezhek e pep departamant ivez. E **Penn-ar-Bed** eo bras pouez Diwan hag en eil derez muioc'h c'hoazh dre ma vez skoliataet en departamant-se an darn vrasañ eus e skolajidi (63%) hag e holl liseidi. Er **Mor-Bihan** eo an hentad prevez katolik a zo e penn a-raok diorren ar c'helenn divyezhek (s.o. ar gartenn p. 58) ha n'eo ket gwall ziorroet an hentad-se en eil derez c'hoazh (un hentad yaouank eo ha skoilhoù a vez lakaet gant an ensavadur e-unan). En **Aodoù-an-Arvor** eo enskrivet ar brasañ niver eus ar skolidi divyezhek en hentad publik; neoazh n'eus bet krouet lec'hiad nevez ebet enno gant an hentad-se etre 2002 ha 2006, ha lodenn an hentad publik e poblañs deskadurezh divyezhek an departamant-se zo tremenet eus 60% e 1996 da 53% e 2006. Ha daoust d'ar pol diorren a zo e bro Treger ha Goueloù evit ar c'helenn divyezhek e chom izel ar sifroù er peurrest eus an departamant hag er reter peurgetket.

Derc'hel da vont war-raok dalc'hmat

Da 2,47% e sav feur ar c'helenn divyezhek en hollad bugale **skolioù-mamm** Breizh evit ar bloavezh-skol 2006/2007. Er brezhonegva hengounel (Breizh-Izel) e sav ar sifr-se da **5,56%**. Pell a vezañ dister eo, met pell a vezañ a-walc'h eo ivez o vezañ brasjedadennoù an UNESCO* : hervez ar framm-se e ranker mont dreist da 30% a yezherien er rummadoù yaouank evit suraat buhez ha diorroidigezh ur yezh. Kalz a strivoù zo d'ober c'hoazh evit dont a-benn eta met n'eo ket dibosupl : gwelet eo bet pegen buan e c'hell an traoù mont war-raok en ur ober dek vloaz.

Rannadur ar c'helenn divyezhek dre hentad

Merzet eo bet uheloc'h eo techet kresk poblañs ar skolioù divyezhek da vont war c'horrekaat tamm-ha-tamm abaoe un nebeud bloavezhioù. Ken gwir eo an dra-se evit hollad ar skolioù divyezhek hag evit pep hentad sellet outañ unan-hag-unan. N'eo ket bet direizhet gwech ebet lusk kreskiñ un hentad gant krouidigezh un hentad nevez. An evezhiadenn-mañ a ya a-du gant ar soñj n'eus kevezerezh fall ebet etrezo, koulz lavaret.


Arabat disoñjal ez a elfennoù all estreget e hended d'ober lusk un hentad; anat eo an dra-se p'eo deuet lodenn an hentad publik ha hini an hentad prevez katolik da vezañ brasoc'h eget hini Diwan e poblañs ar skolioù divyezhek, da skouer. Un degouezh nevez c'hoarvezet goude 2002 eo e vije bremañ al lodenn vihanañ gant ar skolioù dre soubidigezh e poblañs skolioù divyezhek Breizh.

E-pad ur pemp bloaz bennak (maread 2000/2004) ez eus bet ur seurt kempouez etre an tri hentad er sifroù hollek met seblantout a ra ar maread-se bezañ echu. Riskloù bras zo e teufe an traoù da vezañ digempouez ma kendalc'h an emdroadur gant ar plegoù zo gantañ. Hogen pouezus eo ez afe rouedad pep hentad war ziorren a-benn ma teufe ar c'helenn divyezhek da vezañ boutin ha ma c'hellfe tud ar skolidi dibab an doare hentad a zere ar gwellañ outo.

Diwan eo en deus ar brasañ ezhomm da vezañ skoazellet evit adkavout ul lusk kreskiñ er mare-mañ. Diskouezet eo bet gant disoc'hoù ar briziadeg bet kaset gant Akademiezh Roazhon (gw. ar grafik amañ da-heul) ez eo hentenn bedagogel ar soubidigezh an hini varrekañ da gas ar skolidi da wir vrezhonegerien ampart. Arvarus e vije ma kendalc'hfe pouez Diwan en hollad ar skolidi divyezhek da zigreskiñ neuze.

Disoc'hoù priziadeg live brezhoneg ar skolidi CM*2 bet kaset da benn e 2003 e Breizh (notennoù war 10)


Gwelet a reer fraezh gant ar grafik-mañ ez eo uheloc'h live brezhoneg skolidi CM*2 Diwan eget re an hentadoù all war bep tachenn.




Rannadur poblañs ar skolioù divyezhek en tri hentad evit pep departamant Distro-skol 2006

Diouzh an departamant e cheñch dasparzh poblañs ar skolioù divyezhek en tri hentad.


Pell a vezañ kempouez eo dasparzh ar skolidi divyezhek en tri hentad diouzh an departamant. Levezon an deskadurezh dre-vras a c'heller anavezout e kornôg Breizh. Bras eo lodenn an hentad par-ouzh-par prevez er Mor-Bihan, da lavaret eo en departamant eus Breizh m'emañ pouez ar skolioù prevez katolik en deskadurezh dre-vras en e greñvañ a-hend-all (48,4% pa sav ar feur-se e Breizh da 39,4%). En Aodoù-an-Arvor e vez skoliataet ouzhpenn ur bugel divyezhek diwar zaou gant an hentad par-ouzh-par publik, hag en departamant-se eo emañ pouez ar skolioù publik en deskadurezh dre-vras en e greñvañ (66,5% pa sav ar feur-se e Breizh da 60,6%).




Hentad dre soubidigezh (bet krouet e 1977)



Hentad divyezhek ar c'helenn publik (bet krouet e 1983)



Hentad divyezhek ar c'helenn prevez (bet krouet e 1990)



Keñveriañ pouez pep hentad divyezhek e poblañs skolidi Breizh e pep live kelenn Bloavezh-skol 2006/2007

E-keñver an hentadoù all eo bras lodenn an hentad dre soubidigezh en eil derez, tra m'emañ bremañ an hentad-se er penn a-dreñv war dachenn ar c'hentañ derez (er skol-vamm dreist-holl).



Disheñvel mat eo krugell pep hentad divyezhek daoust ma adkaver enno ar plegoù bras bet merzet gant hollad ar c'helenn divyezhek (s.o. ar grafik p. 55).

Kaer en deus **Diwan** en em gavout er penn a-dreñv war dachenn ar c'hentañ derez hiziv an deiz, emañ c'hoazh er penn a-raok war dachenn an eil derez. Diwar pemp bugel a oa e skolioù kentañ Diwan e 2001 e c'heller brasjediñ ez eus pevar o deus kendalc'het gant ar c'helenn dre soubidigezh er skolaj e 2006. En hentadoù "par-ouzh-par", n'eus nemet ur bugel diwar zaou en deus graet kemend-all e-pad ar memes maread⁴. Hended an hentad dre soubidigezh n'eo ket abeg a-walc'h evit displegañ an diforc'h-se, dreist-holl pa ouzer eo aesoc'h krouiñ ur c'hlas divyezhek en ur skolaj publik pe gatolik eget kavout ur savadur a-bezh evit an hentad kevredigezhel.

⁴ Hervez ar Rektoriezh, en deskadurezh publik, 22% eus skolidi CM*2 ar bloavezh 2005/2006 n'o deus ket kendalc'het gant ar c'helenn divyezhek er 6^{vet} klas e 2006/2007. Un emdroadur a vefe aze war an tu mat neuze.


E mod-all eo nec'hus gwelet pegen izel eo deuet lodenn Diwan da vezañ er skolioù-mamm, kalz izeloc'h eget lodenn an hentadoù all (n'eus nemet 20,2% eus ar vugale skoliataet en div yezh er skol-vamm a zo e Diwan). E-ser kenderc'hel da vont war-raok war an tachennoù all, ret eo d'an hentad-se krouiñ klasoù ha skolioù nevez er skol-vamm dreist-holl evit ma kavfe ul lañs nevez. Estreget Pariz, n'eus kumun nevez ebet ma oa bet digoret ur skol-vamm gant an hentad dre soubidigezh etre an distro-skol 2001 (skol Pondi) ha hini 2006 (skolioù Ar Chapel-Nevez ha Louaneg). Ezhomm brasañ Diwan evit mont war-raok war an dachenn-se eo kaout sikour digant ar galloudoù foran evit kaout savadurioù nevez. Kemeret eo bet an diviz gant ar gevredigezh da grouiñ ur font a-ratozh evit prenañ klasoù heloc'h ; spi a c'heller kaout e vo aesaet an digeriñ lec'hiadoù nevez evel-se.

Perzh dibar krugell **an hentad "par-ouzh-par" publik** eo an diforc'h pouez brazik zo etre ar skolioù-mamm hag ar skolioù kentañ. Arouez un hentad yac'h tonket da vont war-raok e c'hell bezañ, gant ma vo krouet an holl glasoù zo ezhomm er skolioù kentañ da zegemer ar vugale a zeu eus ar skolioù-mamm. Kemend-all zo ret ober er skolajoù hag el liseoù evel-just.

Ma talc'her gant politikerezh ar poloù eo pouezus-tre e vefe kaset ur gwir breder war diorren ar c'helenn divyezhek eus ar skol-vamm betek ar c'hlas termen e-giz ma vez kinniget gant Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro (evit tizhout ar pal a oa bet lakaet gant ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannro Breizh 2000/2006 evit staliañ kartenn al lec'hiadoù divyezhek) : ur skol-vamm a vag ur skol gentañ, div pe deir skol gentañ a vag ur skolaj, daou skolaj a vag ul lise. Evit ma'z afe mat an dra-se en-dro e vefe ret klokaat rouedad ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez ha kas an eil derez war-raok e pep korn eus Breizh. N'eo nemet da-geñver Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro dalc'het e miz C'hwevrer 2007 ez eus bet kinniget rouedad klok ar poloù evit pep hentad. Met stummañ kelennerien nevez ha krouiñ trawalc'h a bostoù d'o degemer (en eil hag er c'hentañ derez) eo traoù da raktresañ ivez evit ma yafe an traoù war-raok.

Deuet eo klasoù **hentad par-ouzh-par an deskadurezh prevez katolik** da vezañ diorroet-mat er c'hentañ derez evit ar poent, met gwan eo chomet lodenn an hentad yaouank-se er skolajoù ha gwanoc'h c'hoazh el liseoù (diaes e vo mont war-raok keit ha ne vo nemet ul lise prevez o kinnig an hentad divyezhek par-ouzh-par). Diazezet mat eo an hentad katolik er Mor-Bihan, met distank eo e rouedad skolioù en departamantoù all (Aodoù-an-Arvor ha su Penn-ar-Bed peurgetket) ; klokaat ar rouedad-se zo ur pal a bouez da dizhout war verr dermen dre stummañ ha titlañ an niver rekis a gelennerien evit ar c'hentañ hag an eil derez.

Hogen koazhet trumm eo kresk bloaziek an hentad prevez d'an distro-skol 2006 (tremenet eo eus ur geidenn +14,6% etre 2001 ha 2005 da +6,4%) ha santimant an dud war an dachenn eo e vo gwashoc'h c'hoazh bilañs an distro-skol 2007. E gwirionez, chom a ra sac'het ur raktres kenemglev war an diorren a oa war ar stern etre Rannvro Breizh, ar gevredigezh Dihun hag ar CAEC* pa ne fell ket da hemañ diwezhañ sevel deiziataer digeriñ ebet. Ar stummañ mistri e-unan a chom boud : Dihun a rae war-dro brudañ ar stummadur a-ratozh betek 2007, met e-kerz ar CAEC* emañ bremañ ha, dre ziouer a striv war an tu-se, ne oa studier ebet en doa lakaet e anv c'hoazh e miz Mezheven 2007 evit an distro-skol da-heul.



Klozadur darnel

Kregiñ a ra rouedad ar skolioù divyezhek da vezañ stank a-walc'h e kornioù-bro zo, betek ober ur c'hinnig tost d'an dud a-wechoù. Disheñvelerioù heverk zo etre dasparzh ar boblañs vrezhonek ha hini poblañs an deskadurezh divyezhek. Da deurel evezh zo ne'z afe ket war vrasaat betek re an diforc'hioù etre an departamantoù ha, peurgetket, etre Breizh velestradurel ha departamant al Liger-Atlantel m'eo bet dibosupl digeriñ lec'hiadoù nevez abaoe 1999.

Daoust ma kendalc'h poblañs ar skolioù divyezhek da greskiñ a vloaz da vloaz, eo techet ar c'hresk-se da c'horrekaat. Meur a abeg zo d'an dra-se ha n'eo ket heñvel stad an traoù na diouzh al lec'h na diouzh al live kelenn na diouzh an hentad. Aet eo pep hentad war-raok diouzh e lusk ha diouzh ar strivoù zo bet graet war an dachenn gant ar bed kevredigezhel. Met ken kemplezh e teu an traoù da vezañ m'eo diaes derc'hel gant un diorren a-fragadoù. Kas ur preder don ha hollek a zeu da vezañ pouezusoc'h-pouezusañ evit ma vo lakaet da dalvezout ur gwir strategiezh diorren diazezet war ur gartenn skol kenasantet gant an holl (kevredigezhioù, strollegezhioù, rektoriezhioù). Evit gwir, mankout a ra d'ar c'helenn brezhonek ur steuñv diorren par d'an hini zo bet savet, da skouer, gant Akademiezh Montpellier evit an okitaneg hag ar c'hatalaneg.

dre-vras, evit kas ar c'helenn divyezhek war-raok e Breizh e vefe ret : stankaat ar rouedad lec'hiadoù e Breizh-Izel, klokaat hini Breizh-Uhel, ha dont a-benn da gaout ur c'hinnig stank a-walc'h en eil derez evit degemer kement skoliad a zeu eus ar CM*2 pe eus an 3^{de} klas ha c'hoant gantañ kenderc'hel gant ar memes hentad divyezhek.

O kemer dale emañ Aodoù-an-Arvor e-keñver departamantoù all kornôg Breizh abaoe bloavezhioù. Kaer en deus an departamant-se kaout ur pol diorren evit ar c'helenn divyezhek e bro Treger ha Goueloù e chom

distank rouedad ar skolioù er peurrest eus e diriad (er reter dreist-holl). En Aodoù-an-Arvor eo e vez anavezet ar muiañ ar brezhoneg evel "hor yezh rannvro" koulskoude : 92% eus annezidi an departamant a sav a-du gant ar soñj-se pa sav feur Breizh a-bezh da 82%⁵.

5 Hervez ur sontadeg bet kaset gant TMO-Région e dibenn 2001.

Pep hentad zo degouezhet d'ur bazenn disheñvel eus red e istor dezhañ; ret eo kemer an dra-se e kont hep disoñjal ez aio ar brezhoneg war-raok en ur ober gant an tri hentad-se war un dro. Araokadennoù bras zo d'ober en eil derez gant an daou hentad divyezhek par-ouzh-par e gwirionez, tra ma vank d'an hentad dre soubidigezh kavout ul lañs nevez d'ar c'hrouiñ skolioù-mamm war verr dermen (a bouez bras e vo skoazell ar galloudoù foran da gavout savadurioù nevez evit dont a-benn dezhi).

Ar skoilh splannañ eo en deus poan an Deskadurezh Stad da bleidiñ evit gwir gant diorren ar c'helenn divyezhek. War chouk ar c'hevredigezhioù liesseurt eo lezet ar garg divent-se. Un dra dibar da Frañs e-keñver Stadoù all Europa eo ha ne glot ket gant disklêriadurioù pennadurezhioù ar Stad evit ar pezh a denn da virout al liesseurtes sevenadurel.

Da echuiñ, ouzhpenn sifroù an deskadurezh divyezhek eo arabat disoñjal kalite an doare kelenn-se. Estreget deskiñ brezhoneg d'o bugale ha degas dezho perzhioù mat an divyezhegezh abred e c'houlenn an dud un doare da gelenn a-zoare evitañ e-unan ivez. An dra-se, e-touez re all, a lakaio an deskadurezh divyezhek da zerc'hel ha da vont war-raok. Ha perzhded ar c'helenn zo stag ouzh tuta ar gelennerien peurgetket.



Poblañs ar gelennerien

Stummañ ar gelennerien

• Kentañ derez


Evit pep hentad divyezhek ez eus ur stummadur a-ratozh digor d'an dud zo ganto un aotreegezh d'an nebeutañ (bachelouriezh +3) hag a fell dezho mont da gelenner ar skolioù.

E lec'hiad Sant-Brieg ESSM* Breizh e vez kinniget ur stummadur evit deskiñ ar vicher **kelenner divyezhek er skolioù publik** abaoe 1993; **Skol ar Gelennerien**, ar greizenn stummañ war ar c'helenn e brezhoneg eo deuet da vezañ e miz Gwengolo 2002. Prientet e vez

kenstrivadeg diavaez a-ratozh kelennerien ar skolioù divyezhek (bet krouet e 2002) e-kerzh ar PE1* (bloavezh kentañ ar stummadur) gant an danvez skolaerien. Ur **genstrivadeg diabarzh a-ratozh** (yezh rannvro) a c'hell tremen ar gelennerien nann-titlet (tri bloavezh skiant-prenet ganto da nebeutañ) abaoe 2003. Pevar fost nemetken zo embannet evit ar genstrivadeg-se e 2007, un tregont kelenner nann-titlet bennak zo koulskoude.

Disoc'hoù kenstrivadegoù a-ratozh an deskadurezh publik evit tuta kelennerien ar skolioù divyezhek abaoe ma'z eus anezho (eus 2002 da 2006)

War greskiñ goustad ez ae hollad ar postoù roet d'ar c'henstrivadegoù a-ratozh betek 2005. Hogen abaoe 2003 eo techet an niver a genstriverien degemeradus da dostaat en-dro d'an niver a bostoù embannet. En abeg d'an dra-se eo ez eus bet embannet nebeutoc'h a bostoù e 2006 marteze. Pouezus meurbet eo e vefe brasoc'h an niver a dud war ar renk en dazont, ha ret e vefe neuze ez afe war greskiñ an niver a dud stummet war ar brezhoneg en a-raok (gwelet roadennoù nec'hus rannbennad an deskadurezh uhel war ar poent-se).




Kelennerien-stajidi (PE2*, eil bloavezh ar stummadur) e teu da vezañ ar re bet degemeret neuze, da lavaret eo e vez desket o micher ganto dre stajoù. E dibenn ar bloavezh staj-se e c'hellont bezañ degemeret evel kelennerien titlet gant ma vo kadarnaet o stummadur (priet e vez o labour dre un enselladenn hag ur c'hounskrid).

Damheñvel eo red ar stummadur evit mont da **gelenner divyezhek er skolioù prevez**. Aozet eo ar stummadur-se gant ar **c'hreizennoù stummañ war ar bedagogiezh** (ar CFP*où, par d'an ESSM* evit ar skolioù prevez) a zo lec'hiet en Aradon, Brest ha Gwengamp.

Titladur ar studierien PE2* e dibenn o staj (eus 2002 da 2006)

War greskiñ ez a an niver a ditladurioù en deskadurezh publik tra ma chom stabiloc'h en deskadurezh prevez. Nec'hus eo an digresk a zo gant an niver a dud war ar renk evit bezañ titlet er bloavezh-skol 2006/2007.





E 1997 e oa bet digoret **Kelenn**, ar greizenn stummañ war ar bedagogiezh evit danvez **kelennerien ar skolioù divyezhek dre soubidigezh (Diwan)**. Ur stummadur teorikel a vez roet a-hed ar bloavezh kentañ d'ar re a venn labourat er c'hentañ derez, ha prientet e vezont da dremen **kenstrivadeg a-ratozh kelennerien ar skolioù dre soubidigezh yezhel**.

Ar re a zo bet degemeret er genstrivadeg a ya da gelenn (level stajidi PE2*) war ur post kevratet gant ar Stad. Gant ur bodad priziañ e vez divizet ha tremen a raio ar re all en

eil bloavezh pe get. Pleustrekoc'h eo hemañ : e karg eus ur c'hlasad emaint evel skolaerien-stajidi. Goude bezañ bet titlet gant Diwan (e dibenn an eil pe an trede bloavezh stummadur) ha bezañ bet lakaet da gelenn war ur post nann-kevratet e c'hell ar skolaer tremen en-dro kenstrivadeg a-ratozh kelennerien ar skolioù dre soubidigezh yezhel. Evel en hentadoù all, ar re zo bet degemeret er genstrivadeg a rank bezañ titlet gant ar Stad e dibenn o staj evit kaout ar statud ofisiel a gelenner ar skolioù.

Titladur an danvez kelennerien e kentañ derez Diwan e dibenn o staj (eus 2002 da 2006)

Un digresk serzh zo bet gant ar sifroù-mañ e 2002, da lavaret eo d'ar mare ma oa bet nullet enframmañ ar skolioù dre soubidigezh en deskadurezh publik. War greskiñ en-dro emaint war a seblant.



Kenstrivadeg publik kelennerien ar skolioù a brientet kenstriverien Kelenn abaoe 2002 a-raok ma vefe enframmet ar skolioù dre soubidigezh en deskadurezh publik e-giz ma oa rakwelet d'ar mare-se : e 2002/2003 ha 2003/2004 e oa ar stajidi en ESSM* Sant-Brieg. Ar genstrivadeg prevez eo a vez tremenet ganto en-dro abaoe 2004. Kompren a reer gwelloc'h neuze an digresk trumm a zeu war wel gant ar grafik amañ a-us. Kenstriverien ar bloavezhioù-se zo aet da vagañ hentad divyezhek an deskadurezh publik a-benn ar fin.

Eil derez


Gant un hentad heñvel ouzh an hini a vez heuliet er c'hentañ derez ez a ar studierien (live an aotreegezh ganto) a venn mont da **gelennerien en eil derez divyezhek**. Ur genstrivadeg tuta diavaez zo da dremen : pe ar c'hCAPES* evit ar c'helenn publik, pe ar c'hCAFEP* evit ar c'helenn prevez (skolioù katolik ha Diwan). Ur genstrivadeg daoubennek eo : ouzhpenn bezañ ampart war ar brezhoneg e rank ar genstriverien bezañ barrek war un danvez resis all ivez (istor, douaroniezh, lizhiri modern, jedoniezh pe saozneg).

Prientet e vez ar genstrivadeg gant danvez kelennerien ar c'helenn publik hag ar c'helenn prevez katolik e-pad bloavezh kentañ (PLC1*) ar stummadur a vez kinniget gant lec'hiad Sant-Brieg ESSM* Breizh. Ur stummadur a-ratozh war ar brezhoneg a vez meret eno gant Skol ar Gelennerien. Ar re bet degemeret er genstrivadeg a zeu da vezañ kelennerien-stajidi e-pad eil bloavezh (PLC2*) o stummadur a-raok bezañ titlet.



Disoc'hoù ar c'hCAPES* hag ar c'hCAFEP* brezhoneg evit tuta kelennerien evit an eil derez divyezhek (eus 2002 da 2006)


War zigreskiñ ez a an niver a bostoù digor er c'hCAPES* ; diwar-se marteze e teu nebeutoc'h a dud war ar renk. Un emroadur nec'hus-tre eo atav rak gwelet eo bet uheloc'h pegen mallus eo gwellaat kalz degemer ar skoldi a zeu eus ar c'hentañ derez. Evit ar c'hCAFEP* e weler eo bet degemeret kement den a oa degeradus er bloavezhioù tremenet ; n'eo ket yac'h-tre e vefe ar gont evel-se moarvat.



A-hend-all eo posupl da gelennerien titlet gouenn kelenn darnamzer pe leunamzer e brezhoneg ; ma n'eus ket ganto un diplom skol-veur a desteni o barregezh war ar yezh e vo priziet gant un enseller. D'an diskar-amzer 2006 ez eus bet kaset ul lizher gant ar Rektor da gelennerien Akademiezh Roazhon war an istor-douaroniezh, ar jedoniezh, ar sport, an arzoù-neuziañ hag ar sonerezh da c'houlenn diganto ma oant e-tailh pe ma vefent kontant da vezañ stummet evit kelenn o danvez e brezhoneg. Un dra ret evit diorren an deskadurezh divyezhek en eil derez an hentad publik eo. Koulskoude, ouzhpenn ar gelennerien war o fost e Breizh e vefe mat kelaouiñ ar re yaouank bet kaset niverus da gelenn e Bro-C'hall.

Titladur ar studieren PLC2* e dibenn o staj (eus 2002 da 2006)



Koulz lavaret an holl stajidi PLC2* a vez titlet gant ar Stad e dibenn o bloavezh staj.



E Diwan e krog ar stummadur gant ur staj kelenn heñchet, ha goude ur bloavezh staj pe zaou e rank ar stajiad bezañ titlet gant Diwan. Da c'houde e rank lakaat e anv evit tremen ar c'hCAFEP* a-benn bezañ titlet gant an Deskadurezh Stad.

Titladur an danvez kelennerien en eil derez Diwan e dibenn o stajoù (eus 2002 da 2006)

Kalz kelennerien zo ezhomm evit ober war-dro skolajidi ha liseidi Diwan, met nebeut a ditladurioù a vez bep bloaz (e-touez ar stajidi diabarzh e konter amañ an erlec'hierien koulz hag an danvez kelennerien a zo gant o c'hentañ pe o eil bloavezh staj).



■ Stajidi titlet gant Diwan

■ Stajidi diabarzh

■ Stajidi titlet gant ar Stad

■ Stajidi kelennerien

Kelennerien all a oa dija war ar vicher e Diwan zo bet titlet gant ar Stad a-drugarez d'al lezenn Sapin (lezenn niv. 2001-2 an 3 a viz Genver 2001 a denn da goazhañ al labour diasur er velestradurezh foran). Ar c'helenner diwezhañ gant an degouezh-se zo da vezañ titlet e 2007.

• Stummadurioù rak-micherel hag ehaniou stummadur

Stummadurioù rak-micherel a c'hell bezañ heuliet gant an danvez kelennerien o deus c'hoant en em varrekaat war ar brezhoneg. Un diplom skol-veur "micherioù e brezhoneg" a vez kinniget e skourroù Gwengamp hag Aradon Skol-veur Gatolik ar C'hornôg da skouer. Un diplom skol-veur "barregezhioù e brezhoneg" (live bachelouriezh + 4) a vez kinniget gant Kelenn a-gevret gant Skol-veur Breizh-Izel. A-hend-all, stajoù hir a vez dalc'het gant Stumdi e Landerne hag e Plañvour, gant Roudour e Karaez ha gant Skol an Emsav e Roazhon (gw. p.82).


Posupl eo d'ar gelennerien titlet "unyezhek" er c'hentañ hag en eil derez mont d'ar c'helenn divyezhek ivez; gant un **ehan stummadur** e c'hell ar re n'int ket barrek a-walc'h war ar yezh ober ur staj hir. Stajoù berr (ur sizhunvezh) a c'hell bezañ aozet ivez : unan a oa bet kinniget gant an deskadurezh publik e 2003/2004, bodet en doa seizh kelenner eil derez titlet.

Gant sikour ar galloudoù foran e c'hell ar gevredigezh KSDS* reiñ yalc'hadoù-studi (betek 2250 euro) d'ar re a grog gant unan eus ar stummadurioù meneget amañ a-us.

An niver a bostoù

Emdroadur an niver a bostoù kelennerien e kentañ derez an hentadoù divyezhek d'an distro-skol abaoe 2001 hag an ezhommoù evit gellout ober war-dro 20 000 skoliad a-benn 2010

An hevelep tuadurioù bras a verzer er grafik-mañ hag evit emdroadur an niver a skolidi. Ezhomm bras zo da vroudañ tud e-leizh da vont war ar renk evit dont da vezañ kelenner.



N'eo ket souezh e vefe damheñvel krommennoù poblañs ar gelennerien ouzh hini an deskidi. An hevelep tra eo en eil derez : e 2005/2006, gant Diwan e oa ar brasañ niver a bostoù KILA* kelennerien gant un 70 bennak. Nebeutoc'h a oa en deskadurezh publik (54,63 post KILA* evit 83 kelenner) ha gant an deskadurezh prevez katolik (un 20 post KILA* bennak). A-benn 2010, koulskoude, e vefe ret krouiñ war-dro 70 post ouzhpenn e Diwan, ur 100 post bennak ouzhpenn er c'helenn publik ha 50 er c'helenn prevez katolik nemet evit gallout degemer en eil derez ar vugale zo dija en hentad divyezhek.

Gant ur youl wirion da ziorren ar c'helenn divyezhek eo ret lakaat an niver a bostoù da greskiñ buanoc'h-buanañ er bloavezhioù da zont, ar pezh a dalvez degemer muioc'h-mui a dud stummet war bostoù nevez, ha, gant se, stummañ muioc'h a vrezhonegerien da gentañ penn.

Ouzhpenn pemp kant post bennak a vefe ezhomm krouiñ evit an deskadurezh divyezhek ac'hann da 2010⁶, ar pezh a dalvez degemer un niver brasoc'h c'hoazh a gelennerien nevez stummet dre ma vo lod anezho o kemer plas tud aet kuit eus bed ar c'helenn ha lod all o labourat darnamzer hepken. N'eo ket un dra dibosupl dre ret, met strivoù a vefe d'ober war ar stummadur kentañ

(ne emdro ket sifroù an deskadurezh uhel war an tu mat, gw. p. 77) koulz ha war ar stummadur dibaouez (broudañ muioc'h a gelennerien tittel da gemer un ehan stummadur da skouer evel m'en deus graet Rektoriezh Roazhon d'an distro-skol 2006). Da ziwall zo ivez gant an doareoù ma vo degemeret ar gelennerien nevez-se.

6 Siwazh ne hañval ket Rektoriezh Roazhon bezañ gant ar youl-se : da-geñver emvod miz C'hwevrer 2007 Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro e oa bet kemennet e vefe krouet un tamm muioc'h eget ugent post kelenner, an holl hentadoù kontet, d'an distro-skol 2007.

Gant statud ha meradur ar gelennerien emañ an dalc'h ivez a-hend-all. Pa vez diank ur c'helenn d'ur c'hlasad divyezhek n'eo ket sur e vo erlec'hiet gant un den a oar brezhoneg : c'hoarvezet eo meur ar wech c'hoazh e chomfe skolidi mizioù-pad hep klevet ger brezhoneg ebet (en Il-ha-Gwilen peurgetket ma n'eus post erlec'hier divyezhek ebet er c'hentañ derez publik). E 2005/2006, un darn vat eus ar skolaerien ne oant ket kelennerien tittel ouzhpenn-se : tost ur c'helenn diwar bemp en hentad publik (un digresk serzh a vefe bet gant ar feur-se d'an distro-skol 2006), tost d'ur c'helenn diwar bevar en hentad dre soubidigezh ha tremen ur c'helenn diwar bevar en hentad prevez katolik.

Bilañs ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006

Ober e doare ma vefe durc'hadurioù ar Stad ha re ar Rannvro kempoell an eil gant egile eo pal ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro. Er stern-se e vez termenet raktresoù e-leizh o deus un efed eeun war buhez ar geodedourien. D'ar 4 a viz Meurzh 2002 e oa bet sinet ur stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro Breizh 2000/2006 war an divyezhezh brezhoneg-galleg gant ar Prefed, Rektor an Akademiezh, Rannvro Breizh ha pevar departamant Breizh velestradurel.

Div rann a oa er stagadenn-se :

- 1) Diorren an divyezhezh war dachenn ar skolioù hag ar skolioù-meur
- 2) An divyezhezh e-maez tachenn ar skolioù hag ar skolioù-meur

Emouestloù resis ha sifret zo bet graet evit pep rann.



Evit ar pezh a denn d'ar rann gentañ, tizhet eo ar pal a **3000 skoliad ouzhpenn er c'hentañ derez** e fin ar marevezh : d'an distro-skol 2006 e oa kresket poblañs ar skolioù divyezhek eus 3081 skoliad (o kontañ Diwan) e-keñver an distro-skol 2001.

Pell emañ Yann diouzh e gazeg avat evit ar pal a **2000 skoliad ouzhpenn en eil derez**. D'an distro-skol 2006 ne oa nemet 625 skoliad divyezhek ouzhpenn en eil derez e-keñver an distro-skol 2001, da lavaret eo nebeutoc'h eget an drederenn eus ar pal bet lakaet. Pouezus-meurbet eo koulskoude ez afe kinnig ar c'helenn divyezhek en eil derez war wellaat evit ma teufe skolidi ar c'hentañ derez da vezañ brezhonegerien ampart.

Gouestlet he doa Akademiezh Roazhon e vefe stummet **50 skolaer bep bloaz** evit ma vefe tu digeriñ **24 c'hlas divyezhek bep bloaz** e skolioù ar c'hentañ derez publik (Diwan a oa da vezañ enframmet en deskadurezh publik d'an distro-skol 2002 pa oa bet savet ar stagadenn-se). Gouestlet he doa an Akademiezh ivez e vefe stummet **30 skolaer bep bloaz** evit ma vefe tu digeriñ **16 klas divyezhek bep bloaz** e skolioù ar c'hentañ derez prevez. Ar palioù-se n'eus ket bet doujet dezho daoust m'eo aet an traoù war-raok un tamm evit ar pezh a denn da stummañ skolaerien ar c'helenn publik. Merzout a reer neuze ne glote ket ar palioù c'hwitet-se evit an niver a skolaerien gant ar pal tizhet evit an niver a skolidi, ar pezh a ziskouez mat penaos ne oa ket diazezet al lodenn-se eus ar Gevrat-steuñv war ur preder don ha kempoell.


Emdroadur an niver a gelennerien stummet evit ar c'hentañ derez (da lavaret eo tud e staj PE2*) da bep bloavezh-skol eus 2001 da 2006

N'eo ket bet doujet da balioù ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv war dachenn stummañ ar gelennerien divyezhek daoust d'an emdroadur a zo bet. E-lec'h 400 skolaer a oa da vezañ stummet e-kerzh ar c'houlzad 2002/2006 ez eus bet 216 a-benn ar fin : diouer a ra 88 eus an 250 kelenner a oa bet rakwelet evit an deskadurezh "publik", ha 96 eus ar 150 kelenner a oa bet rakwelet evit an deskadurezh prevez katolik.



Emdroadur an digoradurioù klasoù divyezhek e skolioù kentañ derez publik Akademiezh Roazhon da bep distro-skol eus 2002 da 2006

N'eo ket bet doujet da balioù ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv war dachenn an digeriñ klasoù kennebeut. E-lec'h 120 klas a oa da zigeriñ e-kerzh ar c'houlzad 2002/2006 n'eus bet nemet 75 a-benn ar fin : 45 klas a vank eta, da lavaret eo tost d'ur mil skoliad bennak en deskadurezh publik.



Ur Gevrat-steuñv nevez (adanvet "Kevrat raktresoù") zo bet sinet d'an 12 a viz Ebrel 2007 evit ar maredad 2007-2013. Kalz bihanoc'h eo goload hollek ar Gevrat nevez eget an hini kozh (kred ar Stad a sav da 594 milion a euroioù e-lec'h 700 milion, da lavaret eo un digresk 15%). Rakwelet eo er skrid e vo savet ur stagadenn nevez war an divyezhegezh; degemeret e tlefe bezañ d'an diskar-amzer 2007. Ret eo diwall e vefe palioù uhelek en diell nevez-se. War an dachenn e verzer ez eus diemglev etre kevelerien zo diwar-benn ar pezh a ranker ober war dachenn ar c'helenn : c'hoant ar Rektoriezh eo leuniañ al lec'hiadoù zo anezho c'hoazh a-raok diorren muioc'h, pa fell d'ar Rannvro e vefe digoret lec'hiadoù nevez evit respont da c'houlenn ar familhoù.



Klozadur darnel

Stag eo diorren ar c’helenn divyezhek ouzh kresk an niver a gelennerien ampart war ar yezh er c’hentañ hag en eil derez, splann eo. Pouezus-meurbet eo en em soñjal mat war emdroadur an niver-se rak unan eus diazezoù pennañ emdroadur an niver a skolidi divyezhek eo.

Ur redi eo desachañ muioc’h-mui a genstriverien evit dont da vezañ kelenner eta. Daoust ma’z eus bet graet araokadennoù (bihan) gant ar stummañ kelennerien evit kentañ derez an deskadurezh publik e-kerzh ar bloavezhioù tremenet, n’eo ket kenkoulz evit an hentadoù all nag en eil derez dre-vras. N’eo ket bet tizhet gwech ebet palioù stummañ ar stagadenn d’ar Gevrat-steuñv. War zigresk ez a an niver a studierien a zesk brezhoneg er mare-mañ ouzhpenn-se hag eno emañ mammenn bennañ kenstriverien ar c’henstrivadegoù diavaez (evit an deskadurezh publik peurgetket). Evit echuiñ, pouezus eo e teufe muioc’h a dud war ar renk ivez : seul vuioç’h a genstriverien a vo, seul vuioç’h a dud degemeradus a vo ha seul aesoc’h e vo heuliañ diorren an hentad divyezhek. Strivoù a zo d’ober evit ar c’hinnig en eil derez en hentadoù par-ouzh-par peurgetket rak **gant an diouer a gelennerien stummet e kendalc’hfe feur ar vugale o tilezel an deskadurezh divyezhek er 6^{vet} klas da vont war washaat er bloavezhioù a zeu.**

Lakaat muioc’h a gelennerien titlet gallek da gelenn o danvez e brezhoneg a vefe mat ober. D’en ober eo ret broudañ anezho d’en em stummañ pe da gemer eha-noù stummadur. Talvoudus e vefe d’ar re zo ampart war ar brezhoneg dija goulenn bezañ priziet o live yezh. Un doare all da duta kelennerien vrezhonek ouzhpenn evit an eil derez war danvezioù nann-yezhel a vefe kin-nig d’ar studierien ar brezhoneg evel yezh danvez dibab pa heuliont stummadur kentañ ar c’hCAPES* (evit ar poent n’eo digor an danvez dibab-se nemet d’ar yezhoù estren).

Ouzhpenn tuta kelennerien nevez, derc’hel ar gelennerien war o fostoù e diabarzh pep hentad zo un dra a bouez evel-just : da lavaret eo sevel hentadoù kreñv, kreskiñ ar rouedad ha gwellaat an aozioù labour (nebeutoc’h a liveoù dre glas er c’hentañ derez da skouer). Ha pouezus eo ne chomfe ket bresk postoù un darn vat eus ar gelennerien (gant an deskadurezh publik e vefe ar youl da ziskoulmañ ar gudenn-se ac’hann da 2009, hervez ar Rektoriezh).

Ar c’helenn brezhoneg er skol : un tañva d’ar brezhoneg

Mod pe vod, e sell ar c’helenn brezhoneg ouzh tost da **18 000 skoliad**, eus ar skol-vamm d’al lise, evit ar bloavezh-skol 2005/2006. 93% anezho a heuilh un tañva d’ar brezhoneg er c’hentañ derez, evit an darn vrasañ anezho, pe er skolaj. Aet eo pouez an tañva er c’hentañ derez war greskiñ a-drugarez da bolitikerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed : bodañ a ra en departamant-se an div drederenn eus an holl skolidi o deus bet kentelioù brezhoneg e 2005/2006.

Kelenn brezhoneg e skolioù Breizh dre live - Distro-skol 2005

| | Kentañ derez | | | Skolaj | | | Lise | | | Hollad | | |
|----------------|---------------|--------------|---------------|--------------|--------------|--------------|------------|------------|------------|---------------|--------------|---------------|
| | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad |
| Aodoù-an-Arvor | 486 | | 486 | 756 | 183 | 939 | 124 | 51 | 175 | 1 366 | 234 | 1 600 |
| Penn-ar-Bed | 8 685 | 2 400 | 11 085 | 1 494 | 1 391 | 2 885 | 134 | 103 | 237 | 10 313 | 3 894 | 14 207 |
| Il-ha-Gwilen | | | | 142 | 13 | 155 | 17 | 6 | 23 | 159 | 19 | 178 |
| Liger-Atlantel | | | | 58 | | 58 | 22 | | 22 | 80 | | 80 |
| Mor-Bihan | 870 | | 870 | 518 | 6 | 524 | 105 | 26 | 131 | 1 493 | 32 | 1 525 |
| Breizh | 10 041 | 2 400 | 12 441 | 2 968 | 1 593 | 4 561 | 402 | 186 | 588 | 13 411 | 4 179 | 17 590 |

Kelenn brezhoneg e skolioù Breizh dre zoare kelenn - Distro-skol 2005

| | Tañva | | | Brezhoneg dibab | | | Brezhoneg Yezh Vev | | | Hollad | | |
|----------------|---------------|--------------|---------------|-----------------|------------|------------|--------------------|------------|------------|---------------|--------------|---------------|
| | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad | Publik | Prevez | Ishollad |
| Aodoù-an-Arvor | 1 112 | 168 | 1 280 | 130 | 15 | 145 | 124 | 51 | 175 | 1 366 | 234 | 1 600 |
| Penn-ar-Bed | 9 960 | 3 596 | 13 556 | 219 | 195 | 414 | 134 | 103 | 237 | 10 313 | 3 894 | 14 207 |
| Il-ha-Gwilen | 86 | | 86 | 56 | 13 | 69 | 17 | 6 | 23 | 159 | 19 | 178 |
| Liger-Atlantel | | | | 67 | | 67 | 13 | | 13 | 80 | | 80 |
| Mor-Bihan | 1 372 | 6 | 1 378 | 63 | | 63 | 58 | 26 | 84 | 1 493 | 32 | 1 525 |
| Breizh | 12 530 | 3 770 | 16 300 | 535 | 223 | 758 | 346 | 186 | 532 | 13 411 | 4 179 | 17 590 |

Un tañva d'ar brezhoneg a vez roet er c'hentañ derez. Er skolaj e c'hell bezañ kinniget un tañva d'ar yezh evel danvez dibab diret pe kentelioù yezh evel danvez dibab e 4re ha 3de klas. El lise e tesker brezhoneg evel Yezh Vev.

Niver ar skolidi enskrivet e kentelioù brezhoneg - Distro-skol 2005

Skolidi a heuilh kentelioù brezhoneg er pemp departamant; e Penn-ar-Bed e kaver ar brasañ niver anezho avat, e lec'h m'emañ diorroet ar muiañ an tañva er c'hentañ derez.


Kelenn brezhoneg er c'hentañ derez : un tañva kinniget e skolioù publik ha prevez zo

Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek eo an tañva-se un doare da dostaat d'ar yezh : etre un eurvezh ha teir eurvezh bep sizhun e pad an tañva, diouzh ar skol. Kinniget e vez kanaouennoù, rimadelloù, c'hoarioù e brezhoneg, damanaoudegezhioù eus ar yezh evit kizidikaat ar skolidi, ha, drezo, o zud.


Pelec'h emañ ar c'hinnig tañva e Breizh ?

Lec'hiadur skolioù ar c'hentañ derez a ginnig un tañva d'ar brezhoneg - Distro-skol 2005

Izel e chom ar c'hinnig tañva d'ar brezhoneg er skolioù kentañ derez e 2006 : n'eus nemet 10% eus tiriad Breizh zo goloet.



- Skolioù publik
- Skolioù katolik



Bevennet eo ar c'hinnig tañva d'ar brezhoneg da Benn-ar-Bed, dreist-holl, m'eo aet war greskiñ tamm-ha-tamm betek bezañ diorroet mat awalc'h. Treut eo ar c'hinnig er Mor-Bihan gant an nebeud kumunioù ma vez kinniget un tañva e gwalarn an departamant hepken (kinniget e vez er skolioù publik e Kumuniezh kumunioù ar Roue Morvan en he fezh). Treutoc'h eo ar c'hinnig en Aodoù-an-Arvor c'hoazh, bevennet eo eno da gornôg pellañ an departamant. En Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel, evit echuiñ, ne oa kinnig ebet evit an tañva d'ar brezhoneg e 2006/2007 c'hoazh. dre-vras, nebeut-tre a skolidi a c'hall heuliañ ar c'hentelioù-se neuze.

Departamantoù ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor a hañval tennañ splet eus al lusk zo e Penn-ar-Bed gant ar programm lakaet e pleustr gant ar C'huzul-departamant : un doare kenstagded zo etre Penn-ar-Bed hag an daou zepartamant all e gwirionez.

An niver a skolidi evit an tañva

Niver ar skolidi er c'hentañ derez o doa heuliet un tañva d'ar brezhoneg - Distro-skol 2005

An darn vrasañ eus ar skolidi a heuilh kentelioù tañva d'ar brezhoneg zo e Penn-ar-Bed hag er skolioù publik.

12 440 skoliad o deus bet un tañva d'ar brezhoneg e-kerzh ar bloavezh 2005/2006 e skolioù publik ha prevez ar c'hentañ derez e Breizh. Tost an holl anezho (90%) zo skoliataet e Penn-ar-Bed. Brasoc'h eo ar c'hinnig er skolioù publik eget er skolioù prevez ivez : pevar skoliad diwar bemp a heuilh un tañva a zo en ur skol publik. Bihan eo c'hoazh dregantad ar vugale tizhet gant an tañva-se e Breizh : 3% hepken eus skolidi ar c'hentañ derez.


Penn-ar-Bed, ur youl evit diorren an tañva er c'hentañ derez

Gant youl ar C'huzul-departamant eo diorroet muioc'h an tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez e Penn-ar-Bed eget en departamantoù all. D'en ober en deus lakaet ur stignad war-sav e skolioù publik ar c'hentañ derez o sinañ un emglev gant an Ensellerezh Akademiezh e 2000. Dezverkoù dibab a zo evit divizout peseurt skolioù a zegemero an tañva-se. Da gentañ eo ret d'an emelloù bezañ enskrivet splann er raktres-skol, hemañ a rank bezañ douget gant skipailh pedagogel ar skol. E-pad tri bloaz da vianañ e rank ar skol gouestlañ kas an emelloù da benn a-hend-all.

N'eus bet krouet post ebet gant an Ensellerezh Akademiezh : gant ar C'huzul-departamant e vez kemeret e karg goprou an emellerien diavaez* (gant ar GRETA* e oant gopret a-raok 2000). Peder c'hevredigezh (Mervent, An Oaled, Sked ha KLT*) zo bet kefridiet gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed hag an Ensellerezh Akademiezh da ginnig an tañva-se.


Skoazellet eo an tañva d'ar brezhoneg er skolioù katolik en un doare heñvel. Gopret eo an emellerien dre skoaziadennoù roet gant ar C'huzul-departamant dre ar gevredigezh **Yezh ha Sevenadur** a ra al liamm gant DDEC* Penn-ar-Bed. Ur budjed bloaziek tro-dro 700 000 a euroioù a vez gouestlet d'ar programm kizidikaat-se er c'hentañ derez (publik ha prevez) gant ar C'huzul-departamant, da lavaret eo tost un drederenn eus budjed an departamant gouestlet d'ar brezhoneg.

Er skolioù publik ha prevez bodet, **11 000 skoliad o doa bet un tañva d'ar brezhoneg e Penn-ar-Bed e 2005/2006**, da lavaret eo **12,2%** eus holl skolidi kentañ derez an departamant.



An niver a skolidi a heuilh un tañva d'ar brezhoneg e skolioù publik ha prevez kentañ derez Penn-ar-Bed dre gumun Distro-skol 2005

Kregiñ a ra ar programm kizidikaat d'ar brezhoneg, kaset da benn gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, da dizhout un darn vat eus ar skolidi e lec'hioù zo en departamant. Stank a-walc'h eo ar rouedad tañva d'ar brezhoneg.




Goloet mat a-walc'h eo bro Gerne gant labour Mervent. Ar gevredigezh-se eo a ginnig an tañva e kumunioù bro Kornôg Kreiz-Breizh ivez. Bro Vrest zo goloet gant Sked hag an Oaled ha bro Vntroulez gant KLT*. E 2005/2006, un drederenn eus kumunioù Penn-ar-Bed a oa goloet gant kinnig ar peder c'hevredigezh-se a zo distag diouzh an Deskadurezh Stad. Toulloù a oa memes tra, e-kreiz an departamant peurgetket hag e gourenez Kraozon.

Feur ar skolidi a heuilh un tañva d'ar brezhoneg e skolioù publik ha prevez kentañ derez Penn-ar-Bed dre gumun - Distro-skol 2005




Bro Vrest a skoliata tost un hanter eus skolidi Penn-ar-Bed o deus un tañva d'ar brezhoneg. Kinniget eo hemañ koulz en deskadurezh publik hag en deskadurezh katolik. Daou skoliad diwar dri hag a heuilh un tañva er c'hentañ derez **publik** zo skoliataet e bro Vrest hag e bro Gerne. Met evit ar pezh a denn d'an dregantad er boblañs skol emañ bro Vontroulez er penn a-raok : tremen ur c'hard eus skolidi ar c'hentañ derez publik a heuilh un tañva d'ar brezhoneg er vro-se. Tizhet eo muioc'h skolidi ar skolioù-mamm (18,4% eus skolidi deskadurezh publik Penn-ar-Bed) eget re ar skolioù kentañ (12,1%).

Strishaet eo ar c'hinnig tañva er c'hentañ derez **katolik** da Vro Leon hepken, ha bro Vrest a skoliata daou skoliad diwar dri. N'eus kinnig ebet e peurrest an departamant (nemet e Plonevez-Porzhe).



An tañva d'ar brezhoneg e skolioù publik ar c'hentañ derez (eus 1998 da 2005)

Dre c'hwec'h eo bet lieskementet an niver a skolidi abaoe m'eo bet kemeret ar stignad kizidikaat e karg gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed e 2000.



En 2005/2006 o doa gallet **8 630 skoliad** heuliañ un tañva d'ar brezhoneg **e skolioù publik** ar c'hentañ derez e Penn-ar-Bed, da lavaret eo **15% eus skolidi ar c'hentañ derez publik**. Tizhet eo kalz muioc'h a vugale e Penn-ar-Bed eget er Mor-Bihan ma kaver 2,3% eus skolidi ar c'hentañ derez publik o kaout un tañva hepken pe en Aodoù-an-Arvor ma sav an dregantad-se da 1,2%. War greskiñ kalz eo aet an niver a skolidi kizidikaat e Penn-ar-Bed e-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ. Neoazh, sac'het eo ar c'hresk abaoe 2002 (nac'het e oa bet digeriñ un tañva e 25 skol e 21 gumun d'an distro-skol 2006 da skouer). Tizhet en deus ar stignad ur vevenn rak ne fell ket d'an departamant sammañ e-unan e gresk ken. Keit ha ne vo ket kresket ar budjed gouestlet d'an tañva, ne vo ket tu d'e astenn da lec'hiadoù nevez.

Gant se, o klask kevelerien all emañ Kuzul-departamant Penn-ar-Bed evit kas pelloc'h ar stignad ha ledañ anezhañ. Hervez an departamant, ma vefe paeet un hanter eus ar frejoù gant ar c'humunioù, e c'hellfe 18 000 bugel kaout an tañva en deskadurezh publik (da lavaret eo tremen 30% eus skolidi ar skolioù-se). Er c'humunioù a nac'hfe mont gant an hent-se e paouezo tamm-ha-tamm an departamant da arc'hantaouiñ an tañva adalek an distro-skol 2007, da lavaret eo e koazhfe spontus an doare kelenn-se ac'hann da 2009 daoust d'ar goulenn. Kerse bras eo ne vefe ket arc'hantaouet ur seurt stignad gant an Deskadurezh Stad.

N'eus nemet e departamant Penn-ar-Bed e vez aozet an tañva d'ar brezhoneg er **c'hentañ derez prevez**. Gallout a ra skolaerien kizidikaat d'ar brezhoneg kinnig rimadelloù pe dañsoù e brezhoneg d'o skolidi e skolioù prevez zo en Aodoù-an-Arvor pe er Mor-Bihan, met n'eo ket kentelioù un eurvezh pe div eurvezh kinniget ingal bep sizhun. Enskrivet e oa **2400 skoliad** er programm kizidikaat-se d'an distro-skol 2005 e Penn-ar-Bed, da lavaret eo **7%** eus skolidi kentañ derez an deskadurezh katolik o deus heuliet an tañva-se en departamant.

N'eus programm kevatal ebet en departamantoù all. Ret e vefe dezho ha d'o Ensellerezhioù heuliañ skouer Penn-ar-Bed koulskoude.

Kerent ar skolidi a-du gant an tañva kinniget

Fellet ez eus bet da Guzul-departamant Penn-ar-Bed priziañ an ober kizidikaat bet kaset betek-henn. E 2004 en doa fiziet e KEBK* sevel un enklask gant ar pal gouzout penaos eo degemeret ar steuñv gant ar skolidi, ar skolaerien, an ATSEM*, ar gerent hag an dilennidi, hag evit gouzout petra emañ an dud-se o c'hortoz ivez. Da gentañ en deus diskuliet an enklask-se eo plijet-bras ar skolidi gant an tañva kinniget ha prest int da genderc'hel ganti. Soñjal a ra da dost an holl eo talvoudus-kenañ an tañva kinniget, evit ar sevenadur hag an istor, hag evit ar brezhoneg e-unan muioc'h c'hoazh. C'hoant o deus e kendalc'hfe an tañva-se en eil derez, dindan stumm un danvez dibab kentoc'h. Kavout a ra d'an dud eo mat ar plas roet d'ar brezhoneg er programm : c'hoant o deus e kendalc'hfe ar steuñv evel m'emañ, da lavaret eo un eurvezh tañva bep sizhun. A-du emaint evit ma vefe kinniget an tañva d'an holl, hep na vefe rediet ar skolidi da heuliañ anezhañ memes tra. Ne fell ket d'ar gerent e vefe krouet poloù tañva pe poloù kelenn brezhoneg ; **gwelloc'h eo ganto kaout ur c'hinnig tost**. Diskuliet en deus an enklask c'hoazh e vroud ar steuñv-se ar vugale d'ober un tammig gant ar brezhoneg gant tud eus o familh ha da sellet ouzh an abadennoù skinwel e brezhoneg.

Bihan a-walc'h e chom levezon an obererezh-se war ar gerent koulskoude : daoust dezho sevel a-du gant ar steuñv ha gant ar brezhoneg, n'eus nemet un darn vihan anezho (28%) a embann bezañ kontant da zeskiñ brezhoneg. N'eo ket tizhet ar pal kizidikaat ar gerent dre o bugale enta.

Ouzhpenn priziañ penaos eo degemeret ar programm gant an dud a sell hemañ outo, n'en deus ket pledet an enklask gant talvoudegezh ar stignad evit deskiñ ar yezh siwazh.

Digresk bras ar c'helenn brezhoneg en eil derez

Kinniget e vez kentelioù brezhoneg en eil derez er pemp departamant : diouzh ar skolaj, etre un eurvezh ha div eurvezh bep sizhun a c'hall bezañ kinniget adalek ar 6vet klas betek an 3de klas. Kelennet e vez an damanaoudegezhioù eus yezh ha sevenadur Breizh. E 4re hag en 3de klas e c'hall bezañ kinniget etre div ha teir eurvezh kelenn brezhoneg bep sizhun evel Yezh Vev 2 (YV2) pe evel danvez dibab. E liseoù zo e c'haller dibab ar brezhoneg evel YV2 pe evel YV3 adalek an eilvet klas betek ar c'hlas termen. Gallout a reer dibab ar brezhoneg evit ar vachelouriezh en Akademiezh Roazhon. Ne c'haller ket en ober ken el Liger-Atlantel abaoe 2004 : tennet eo bet Akademiezh Naoned eus roll an Akademiezhioù ma c'haller kinnig ar brezhoneg er vachelouriezh.

Lakaet he doa Rektoriezh Roazhon ur stignad nevez war-sav e 2004 evit ar pezh a sell ouzh ar c'helenn brezhoneg el liseoù publik. Lamet eo bet ar c'hentelioù brezhoneg kuit eus un daouzek lise publik bennak (diviz

Klozadur darnel

Aet eo an tañva d'ar brezhoneg kalz war-raok abaoe m'en deus Kuzul-departamant Penn-ar-Bed sammet karg ar stignad-se e 2000. Splann eo eo lec'h ma oa dija ar c'helenn divyezhek en e greñvañ (bro Vrest) eo aet an tañva ar muiañ war-raok. Da lavaret eo ez a al lec'hioù kreñv war greñvaat. Neoazh, krog eur da ginnig an tañva un tamm dre-holl e Penn-ar-Bed. Mont pelloc'h war an tu-se zo d'ober betek goleiñ an departamant a-bezh, dreist-holl el lec'hioù dilezet penn-da-benn (evel trowardroioù Kastellin hag ar Porzhe).

Bevennet eo an tañva da Benn-ar-Bed hepken pe dost. Ret e vefe d'an departamantoù all heuliañ skouer hemañ ha diorren an doare kelenn-se. Abenn diorren an tañva da Vreizh a-bezh e vefe ret termenañ e zoareoù evit kaout un diazez boutin d'an holl skolidi.

Kinnig un tañva d'ar brezhoneg er skolioù a c'hall bezañ un hent evit kizidikaat ar skipailh pedagogel, renerien ar skol hag ar gerent evit digeriñ klasoù divyezhek er skolioù publik d'an nebeutañ : pemp diwar an nav c'hlas publik divyezhek nevez digoret e Penn-ar-Bed abaoe 2002 a veze kinniget da gentañ un tañva d'ar brezhoneg en o skol. Ar c'hontrol a c'hall c'hoarvezout ivez. Skolioù a zegemer klasoù divyezhek a c'hall kinnig un tañva da c'houde. Hogen ur c'hinnig ouzhpenn e-kichen kinnig an hentadoù divyezhek eo ar c'hizidikaat. Klotañ a ra gant ezhommoù Bretoned zo n'int ket prest evit poent da lakaat o bugale en un hentad divyezhek. Ur stignad kizidikaat eo ha n'eo ket ur programm evit stummañ yezherien.

gwrabeget gant ar Rektoriezh gant un digresk e niver ar berzhidi) ha lakaet en o flas ur gwelgelenn*. Staliet e oa bet dafar e pep lise ha daou gelenner a oa bet gouestlet d'an doare kelenn-se. Gallout a rae al liseidi heuliañ ur gentel gant ur c'helenner ur wech ar miz memes tra. Ur bilañs a oa bet graet e fin ar bloavezh kentañ : 30 lisead o doa heuliet ar c'hentelioù dre ar gwelgelenn*. Da vare ar priziañ e oa laouen an Deskadurezh Stad gant an taol-esa. A-drugarez d'ar c'hentelioù bev kinniget gant an daou gelenner e oa bet tapet ul live dereat gant al liseidi, ken dereat ha live al liseidi a heulie an hentenn glasel. N'eo ket bet kresket an niver a eurvezhioù nag an niver a lec'hioù en distroskol 2005 ken ker eo staliañ an dafar. Ur vevenn all a oa gant ar stignad-se : ne c'hall ket muioc'h eget c'hwec'h lisead mont er sal gwelgelenn*. E 2006/2007 ne oa ket ken eus an doare kelenn-se c'hoazh.

Ar gelennerien a ra war-dro ar c'helenn brezhoneg en eil derez publik ha prevez eo ar re a ra war-dro ar c'helenn divyezhek peurliesañ; kement ha gouzout hiroc'h diwar-benn o stummadur hag an niver a bostoù, sellit ouzh p. 62.

Peseurt kinnig zo e skolioù Breizh ?


Ur skol diwar bemp hepken a ginnig kentelioù brezhoneg en eil derez e Breizh, skolioù publik ha prevez bodet, da lavaret eo e c'halled heuliañ kentelioù brezhoneg e **166 skolaj pe lise** d'an distro-skol 2005. Un tamm gwelloc'h eo ar c'hinnig er skolajoù eget el liseoù : ur skolaj diwar bevar a ginnig kentelioù brezhoneg. Izeloc'h eo dregantad skolioù prevez an eil derez a gelenn brezhoneg : 18% eus skolioù an eil derez prevez hepken a ginnig kentelioù brezhoneg pa sav ar feur da 25% evit ar skolioù publik. Er skolioù hollek eo e kinniger kentelioù brezhoneg, dreist-holl. N'eus nemet daou lise micherel a ginnig kentelioù brezhoneg : an eil e Rostrenenn hag egile en Orient.

Niver skolioù an eil derez a ginnig kentelioù brezhoneg - Bloavezh-skol 2005/2006

| | Publik | | | | Pevez | | | | Hollad | | | |
|----------------|-----------|----------------------|-----------------|------------|-----------|----------------------|-----------------|-----------|------------|----------------------|-----------------|------------|
| | Skolajoù | Liseoù kelenn hollek | Liseoù micherel | Ishollad | Skolajoù | Liseoù kelenn hollek | Liseoù micherel | Ishollad | Skolajoù | Liseoù kelenn hollek | Liseoù micherel | Hollad |
| Aodoù-an-Arvor | 20 | 6 | 1 | 27 | 8 | 4 | - | 12 | 28 | 10 | 1 | 39 |
| Penn-ar-Bed | 33 | 9 | - | 42 | 32 | 9 | - | 41 | 65 | 18 | - | 83 |
| Il-ha-Gwilen | 5 | 3 | - | 8 | 2 | 1 | - | 3 | 7 | 4 | - | 11 |
| Liger-Atlantel | 3 | 2 | - | 5 | - | - | - | - | 3 | 2 | - | 5 |
| Mor-Bihan | 16 | 5 | 1 | 22 | 2 | 4 | - | 6 | 18 | 9 | 1 | 28 |
| Breizh | 77 | 25 | 2 | 104 | 44 | 18 | - | 62 | 121 | 43 | 2 | 166 |

Ar c'hinnig kentelioù brezhoneg er skolajoù publik ha prevez Distro-skol 2005

- Kentelioù brezhonek kinniget e skolajoù ar gumun
- Kumunioù diskolaj stok ouzh ar skolaj tostañ ma vez kinniget kentelioù brezhonek
- Kumunioù diskolaj pell eus ur c'hinnig kentelioù brezhoneg
- Kinnig ebet e skolajoù ar gumun
- Kentelioù brezhoneg er skolajoù publik
- Kentelioù brezhoneg er skolajoù katolik



Ar c'hinnig kentelioù brezhoneg el liseoù publik ha prevez kelenn hollek ha micherel Distro-skol 2005

Troc'het eo Breizh e div lodenn pa seller ouzh an takadoù tizhet gant kentelioù brezhoneg en eil derez d'an distro-skol 2005. Bevennet eo ar c'hinnig da Vreizh-Izel war-bouez un nebeud kêrioù bras eus Breizh-Uhel.



- Kentelioù brezhonek kinniget e liseoù ar gumun
- Kumunioù dilise stok ouzh al lise tostañ ma vez kinniget kentelioù brezhonek
- Kumunioù dilise pell eus ur c'hinnig kentelioù brezhoneg
- Kinnig ebet e liseoù ar gumun
- Kentelioù brezhoneg el liseoù publik
- Kentelioù brezhoneg el liseoù katolik
- Kentelioù brezhoneg dre welgelenn el liseoù publik

Dizingal eo ar c'hinnig kentelioù brezhoneg eus an eil departamant d'egile. E-giz ma c'hoarvez er c'hentañ derez, e Penn-ar-Bed eo diorroet ar muiañ ar c'hinnig kentelioù brezhoneg en eil derez, kement er skolioù publik hag er skolioù prevez. En departamant-se emañ an hanter eus ar skolioù eil derez hag a ginnig kentelioù brezhoneg e gwirionez. Goloet-mat eo tiriad an departamant-se ouzhpenn-se dre ma c'haller heuliañ kentelioù e tost holl gumunioù Penn-ar-Bed a zegemer ur skolaj pe ul lise. N'eo ket diorroet ar c'hinnig e reter Aodoù-an-Arvor nag e reter ar Mor-Bihan, padal eo goloet-mat lodenn gornôg an departamant-se. Ar

c'helenn brezhoneg e skolioù prevez an departamantoù-se n'eo ket ken diorroet hag e re Penn-ar-Bed : 36% eus skolioù publik eil derez Aodoù-an-Arvor a ginnig kentelioù brezhoneg pa vez graet gant 19% eus skolioù prevez an eil derez. Er Mor-Bihan ez eo 41% ar c'henfeur evit ar skolioù publik, 16% evit ar skolioù prevez.


Treut eo ar c'hinnig en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel : 4% hepken eus skolioù eil derez an departamantoù-se a ginnig kentelioù brezhoneg. Ha daoust d'an troc'h melestradurel ez eus kentelioù brezhoneg e kement a skolioù el Liger-Atlantel hag en Il-ha-Gwilen.

An niver a skolidi a heuilh kentelioù brezhoneg en eil derez

E Breizh a-bezh e oa **5 150** skolidi o doa heuliet kentelioù brezhoneg en eil derez e 2005/2006. Skolajidi e oant dreist-holl (87%). Met peder fempvedenn anezho n'o doa nemet un tañva d'ar yezh. N'emañ ket ar brezhoneg e-touez an danvezioù studi pennañ ha n'eus skolajiad ebet a studife ar brezhoneg evel Yezh Vev. Gwir eo ez eus nebeutoc'h a zeskidi el liseoù eget er skolajoù, met kelennet e vez brezhoneg dezho evel Yezh Vev.


Niver ar skolidi o doa heuliet kentelioù brezhoneg en eil derez (skolaj + lise) - Distro-skol 2005

Er skolioù publik eo skoliataet an div dederenn eus ar skolidi a zesk brezhoneg en eil derez, hag e Penn-ar-Bed emañ an darn vrasañ anezho (60%).



Feur ar skolidi en eil derez (skolaj + lise) a heuilh kentelioù brezhoneg er boblañs skol (publik ha prevez) - Distro-skol 2005

Izel-kenañ e chom dregantad ar skolidi enskrivet er c'hentelioù brezhoneg e boblañs skol an eil derez e Breizh. N'eus nemet e Penn-ar-Bed m'eo un tammig uheloc'h er skolajoù a-drugarez d'an tañva a vez kinniget enno.




Daoust m'eo bras a-walc'h an niver a skolioù a ginnig kentelioù brezhoneg e chom gwall vihan feur ar skolidi a heuilh anezho : ne save nemet da 2% er bloavezh-skol 2005/2006. Un tamm uheloc'h e oa an dregantad memes tra en Aodoù-an-Arvor hag e Penn-ar-Bed, dreist-holl, ma veze heuliet kentelioù brezhoneg gant 7% eus ar skolidi. E kumunioù zo eo uheloc'h c'hoazh ar feur : an div dederenn eus skolidi eil derez an Uhelgoad a heuilh kentelioù brezhoneg, da skouer, pe an hanter e Kastell-Nevez-ar-Faou.

Emdroadur an niveroù berniet a skolidi o deus bet kentelioù brezhoneg en eil derez publik ha prevez (eus 2000 da 2005) dre zepartamant

Eus ur c'hard en doa digresket an niver a skolidi eil derez o teskiñ brezhoneg e hollad departamantoù Breizh etre 2000 ha 2005 (sifroù Aodoù-an-Arvor eo ar re stabilañ). Drastus e oa an emdroadur el liseoù, dreist-holl, ma oa bet rannet an niver a zeskiñ dre zaou.

Nec'hus-kenañ eo gwelet eo aet war zigreskiñ kalz an niver a skolidi o deus heuliet kentelioù brezhoneg er c'hwec'h bloavezh diwezhañ. Gwashoc'h eo an digresk el liseoù eget er skolajoù c'hoazh : eno e oa bet rannet an niver a zeskiñ dre zaou etre 2000 ha 2005. Spontus eo bet an digresk-se



e liseoù Il-ha-Gwilen (-82%) hag e liseoù ar Mor-Bihan (-69%).

Ur gudenn aozañ zo er c'helenn brezhoneg en eil derez : kinniget e vez ar c'hentelioù brezhoneg da eurvezhioù diaes-kenañ evit ar skolidi. Ne vezont ket kelaouet mat gant renerezhioù ar skolioù e c'hallont dibab ar brezhoneg da zanvez studi, a-hend-all. Ne lak ket an Deskadurezh Stad ar brezhoneg e-touez an danvezioù studi pennañ kennebeut. N'eo ket broudet ar skolidi da zibab ar brezhoneg evel Yezh Vev eta. N'eus nemet ur politikerezh diorren a c'hall eilpennañ an tuadur-se, diwar skouer ar stignad kizidikaat lakaet e pleustr er c'hentañ derez gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed.

Klozadur darnel

Peseurt kelenn a vez kinniget d'ar skolidi e Breizh ?

Un tañva d'ar brezhoneg, heñchet war-zu ar c'hentañ derez, eo ar c'helenn brezhoneg a vez kinniget hiziv an deiz e skolioù Breizh a-benn ar fin. Levezonet kalz eo ar stad-se gant politikerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed : daou skoliad diwar dri hag a zesk brezhoneg a c'hall en ober a-drugarez d'ar stignad kizidikaat d'ar brezhoneg kaset da benn gant an departamant-se. Betek 20% eus hollad skolidi kentañ derez lec'hioù zo a heuilh un tañva d'ar brezhoneg (evel bro Vontroulez peurgetket).

Dleout a rafe an departamantoù all bezañ atizet gant taol-arnod frouezhus Penn-ar-Bed, met nec'hus eo gouzout emañ ar stignad-se en arvar du-hont c'hoazh dre ziouer a emell a-berzh ar strollegezhioù tiriadel all hag an Deskadurezh Stad.

Bevennet a-walc'h eo ar c'hinnig kentelioù brezhoneg d'ar brezhonegva hengounel koulz er c'hentañ hag en eil derez. Ha c'hoazh, takadoù hep tamm kinnig kelenn brezhoneg ebet a chom en tiriad-se zoken (kreiz departamant Penn-ar-Bed, n'eo ket goloet mat Aodoù-an-Arvor nag ar Mor-Bihan evit ar c'hentañ derez). Aozet eo ar c'hinnig gant ar Rektoriezh a zouj ouzh ar vevn yezh hengounel diamzeret bremañ.

Tost da netra eo emouestl ar c'hevredigezhioù kerent (ken pouezus evit ma vefe digoret lec'hiadoù kelenn divyezhek) war tachenn diorren ar c'helenn brezhoneg en eil derez ; hemañ (hag e stad reuzus) zo penn-da-benn diouzh politikerezh ar Rektoriezh. Evit kas an teuliad resis-se war raok e c'hellfe ar bed kevredigezhel hag an dilennidi lec'hel sellet outo tennañ ur splot brasoc'h eus o ferzh e Kuzul Akademiezh ar yezhoù rannvro.

War ziskar eo aet an niver a skolidi eil derez o deus heuliet kentelioù brezhoneg etre 2000 ha 2005. Koulskoude n'eo ket dister an niver a skolioù a ginnig kentelioù brezhoneg en eil derez : unan diwar bemp e Breizh a-bezh. Met n'emañ ket ar brezhoneg e-touez an danvezioù studi pennañ, pell alese. **Skolajiad ebet n'en deus heuliet kentelioù brezhoneg evel Yezh Vev e 2005 da skouer.**

N'eus youl ebet evit diorren ar c'helenn brezhoneg gant Akademiezh Roazhon ha nebeutoc'h c'hoazh gant Akademiezh Naoned evit ar pezh a denn d'al Liger-Atlantel. Evit ar poent, war-bouez skouer Penn-ar-Bed, **n'eus preder politikel ebet e Breizh evit diorren ar c'helenn brezhoneg er skol er c'hentañ hag en eil derez** (meneg ebet er stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro, ha tost netra e steuñv Politikerezh yezh Rannvro Breizh). Ezhomm zo priziañ stad ar goulenn (el liseoù peurgetket), kas ur preder youlek da ziorren ar c'hinnig ha lakaat palioù uhelek evit an amzer-da-zont.

Ledanaet e rank bezañ an tañva er c'hentañ derez (diorroet e Penn-ar-Bed dreist-holl betek-henn). Ouzhpenn-se eo ret reiñ d'ar skolidi kizidikaat c'hoazh ouzh ar brezhoneg an tu da vont pelloc'h en eil derez, ha ret eo reiñ d'ar grennarded all tro d'ober an dibab deskiñ brezhoneg memes tra. Rankout a ra ar Rektoriezhioù hag ar strollegezhioù tiriadel (Rannvroioù, departamantoù, kumunioù) labourat war an tu-se.

Evel-just e rank an tañva hag ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez bezañ anavezet evel doareoù all da zeskiñ ar yezh, da lavaret eo n'o deus ket da ziorren diwar-goust ar c'helenn divyezhek, asambles gantañ ne lavaromp ket.

Deskadurezh uhel : studioù war ar brezhoneg

Studioù war ar yezh eo a vez kinniget e brezhoneg en deskadurezh uhel hiziv an deiz; alies e vezont liammet strizh ouzh kelenn ar yezh zoken, evel ar stummadur evit skolaerien ar skolioù divyezhek hag ar gelennerien. Bevennet eo ar c'hinnig studioù brezhoneg d'ar skolioù-meur ha d'ar c'hevrennoù Lizhiri dreist-holl : n'eus skol uhel ebet war dachenn ar c'henwerzh pe ar skiantoù a ginnigfe studioù e brezhoneg betek-henn. N'eus kinnig ebet en hentad a gas da vicherioù ar yec'hed kennebeut.

Ar c'hinnig studioù brezhoneg

E 2004 ez eus bet lakaet un adreizhadur e plas en deskadurezh uhel a-benn ma c'hallfe ar studierien mont eus an eil skol-veur d'eben e pep lec'h dre Europa. Diazezet ez eus bet tri live bras : an Aotreegezh, ar Master hag an Doktorelezh. Div skol-veur a ginnig ur c'hursus e brezhoneg : Skol-veur Breizh-Uhel ha Skol-veur Breizh-Izel. Ar skolioù all a ginnig kentelioù brezhoneg d'o studierien pe stummadurioù evit dont da vezañ kelennerien.

Skol-veur Breizh-Uhel, ar skol bennañ evit ar pezh a denn d'ar brezhoneg

Kadarnaet eo bet, tamm pe damm, ar studioù war ar brezhoneg kinniget betek-henn gant ar gevrenn brezhoneg ha keltieg e Skol-veur Breizh-Uhel, gant adreizhadur 2004.

Stummet war ar brezhoneg eo studierien an Aotreegezh meneg "Brezhoneg ha keltieg". Gallout a reont kenderc'hel o studioù gant ur Master "Klaskerezh" brezhoneg ha keltieg, kinniget war daou vloaz, hag a glot gant ar Vestroniezh hag an Diplom Studi Don (DEA*) kozh. Tri ahel klask a vez kinniget d'ar studierien : studi ar yezh, studi al lennegezh ha studi ar sevenadur. Gallout a ra ar studierien kenderc'hel o c'hask gant un Doktorelezh. Kinniget he deus ar gevrenn brezhoneg ha keltieg ur Master war ar vicher kelenner divyezhek brezhoneg-galleg e 2004/2005 hag e 2005/2006. Stummañ a rae war ar c'helenn divyezhek (hentenn dre soubidigezh ha par-ouzh-par) koulz ha war ar c'helenn d'an oadourien. N'eo ket bet kendalc'het gant ar Master a-ratozh-se e 2006/2007.

Gallout a ra studierien ar c'hevrennoù all kemer ar brezhoneg evel danvez dibab ivez. Studierien skourr **Sant-Brieg** Skol-veur Breizh Uhel a c'hell en ober abaoe 2004.

Skol-veur Breizh-Izel, an eil skol-veur a ginnig ur c'hursus war ar brezhoneg

Abaoe adreizhadur 2004 eo bet krennet ar c'hinnig studioù war ar brezhoneg e Skol-veur Breizh-Izel. Un Aotreegezh gant ar meneg yezhoù ha sevenadur rannvro zo kinniget d'ar studierien hepken. N'eus Master ebet a denn d'ar brezhoneg da vat. Ret eo notenniñ ivez eo Skol-veur Breizh-Izel ar framm nemetañ ma vez implijet un doare-skrivañ disheñvel eus an eil kelenner d'egile (distag a-wechoù diouzh ar standard a vremañ).

Gallout a ra ar studierien en Aotreegezh dibab ur stummadur doubl gant ar pal prientiñ ar c'hCAPES* daoubennek zo anezhañ evit ar brezhoneg : studioù brezhoneg-istor, brezhoneg-lizhiri modern pe brezhoneg-saozneg zo kinniget d'ar studierien. Kinnig a ra ivez Skol-veur Breizh-Izel d'he studierien ur stummadur e trede bloavezh an Aotreegezh evit prientiñ ar genstrivadeg a-ratozh evit tuta kelennerien divyezhek.

Evit echuiñ, kinnig a ra Skol-veur Breizh-Izel un diplom skol-veur "Yezhoù ha sevenadur Breizh". Graet eo evit kizidikaat ar studierien ouzh sevenadur Breizh, hag un tañva d'ar brezhoneg a vez kinniget dezho neuze.

Er skol-veur e kaver ul labourva enklask : Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek (KEBK). Karget eo da genurzhañ ar studioù war an dachenn geltiek. Ar brezhoneg zo e-touez an temoù enklask gant daou ahel : ar sokioyezhoniezh hag al lennegezh vrezhonek.

Brezhoneg evel danvez dibab a c'hall studierien ar c'hevrennoù all dibab ivez.

Un diplom skol-veur, da lavaret eo un doare "rak DEUG*", evit stummañ war ar brezhoneg a oa kinniget gant skourr Skol-veur Breizh-Izel e Karaez-Plougêr abaoe 2000, met chomet eo a-sav e 2002. Talvoudus eo seurt stummadurioù evit reiñ an tu d'an dud n'o deus ket gallet deskiñ brezhoneg er skol kaout al live ret evit heuliañ studioù war ar brezhoneg koulskoude.

Evit ar pezh a denn d'ar c'haskerezh en deskadurezh uhel ez eer war-zu emdroadurioù a-benn 2008 gant ar gevrat nevez a vo savet etre ar skolioù-meur, ar Stad hag ar Rannvro evit ar prantad 2008-2011. Divizet o deus an div skol-veur bezañ er memes unvez klaskerezh da lavaret eo o deus kinniget d'ar CNRS* bezañ un unvez klaskerezh kemmesk war ar memes anv, KEBK*. Adframmet e vo KEBK* neuze etre Skol-veur Breizh-Izel e Brest, Skol-veur Breizh-Uhel e Roazhon ha "l'École Pratique des Hautes Études" e Pariz gant daou ahel studi a denno da "liesseurted ha disheñveler yezh" ha da "gomz, skrivañ ha kevredigezh". A-fet klaskerezh e labouro kelennerien Skol-veur Kreisteiz Breizh e-barzh framm nevez KEBK*.

Skol-veur Gatolik ar C'hornôg, ar skol-veur brevez nemeti a ginnig studioù war ar brezhoneg.

Krouet e oa bet un diplom skol-veur "Micherioù ha brezhoneg" gant Skol-veur Gatolik ar C'hornôg, en he skourroù e Gwengamp hag Aradon e 2001. Evit respont d'an ezhomm stummañ a weler en deskadurezh hag e micherioù all ez eus bet roet lañs d'ar stummadur-se. Daou zoare a c'hall ar studierien dibab : ur stummadur daoulamm war ur bloavezh pe ur stummadur war tri bloavezh. A-benn lakaat e anv er stummadur eo ret d'ar studierien kaout un Aotreegezh.

Stummadurioù evit deskiñ komz ha skrivañ brezhoneg a vez kinniget gant Skol-veur Gatolik ar C'hornôg ha n'eo ket ur studi skolveurel anezhañ evel ma kinnig an div skol-veur all. Pourvezet e vez un darn eus an ezhommoù kelennerien nevez evit kentañ derez an hentad divyezhek gant ar stummadurioù-se.

Ensavadur Skol-veur ar Stummañ Mistri (ESSM) hag e Skol ar Gelennerien

E 2002, da-heul krouidigezh ar genstrivadeg a-ratozh evit tuta kelennerien divyezhek, ESSM* Breizh en doa krouet Skol ar Gelennerien, ur greizenn stummañ war ar c'helenn e brezhoneg, e Sant-Brieg da stummañ ar gelennerien vrezhonek (gw. p. 60). Ur stal-labour diret "Yezh ha sevenadur Breizh" a vez kinniget d'an holl studierien e skourr Sant-Brieg an ESSM*. Un tañva d'ar brezhoneg a vez kinniget enni. Troet eo ar c'hentelioù war-zu pleustr ar gomz.

Kelenn, kreizenn stummañ kelennerien Diwan

Kinnig a ra Kelenn ur stummadur kentañ da zanvez skolaerien Diwan (gw. p. 62).

Asambles gant Skol-veur Breizh-Izel e veze kinniget gant Kelenn un diplom "Barregezh war ar brezhoneg" e Kemper : ur bloavezh e pad ar stummadur evit peurzeskiñ ar yezh. Pal ar stummadur-se zo kreskiñ an niver a zanvez skolaerien divyezhek e Diwan. Dleout a rafe ar stummadur-se bezañ gwiriekat e steuñ stummadur ar rannvro.

Kreizennoù stummañ war ar bedagogiezh (CFP*où) an deskadurezh katolik

Kinnig a ra ar c'hreizennoù-se ur stummadur kentañ war daou vloavezh evit dont da vezañ skolaer divyezhek en deskadurezh katolik (gw. p. 61).

Brezhoneg evel danvez dibab


Studierien skol-veur Kreisteiz Breizh **en Orient** a c'hall heuliañ kentelioù brezhoneg evel danvez dibab. Skol-veur **Naoned** a ginnige an dra-se d'he studierien ivez, met tennet eo bet ar brezhoneg eus ar c'hinnig danvezioù dibab. Daoust d'ar stourm gwirel kaset da benn gant ur strollad studierien, n'haller ket mui deskiñ brezhoneg er skol-veur el Liger-Atlantel abaoe 2004 eta.

An niver a studierien

War-dro **800 studier** o doa ur c'helenn war ar brezhoneg e Breizh e 2006/2007. Peder fempvedenn anezho a zaremprede daou lec'h : Skol-veur Breizh-Uhel (hag a stroll tost an hanter eus an holl studierien war ar brezhoneg) ha Skol-veur Breizh-Izel (hag a stroll ur c'hard anezho). An div skol-veur a ginnig ur c'hursus e brezhoneg int. Ma ouzhpennet d'o sifroù re skolioù-meur all Breizh (danvez dibab, ESSM*) e c'heller lavaret e oa enskrivet e skolioù publik tremen ar peder fempvedenn eus ar studierien o doa ur c'helenn war ar brezhoneg e 2006/2007.

Dasparzh ar studierien war ar brezhoneg dre skol ha dre live e Breizh - Bloavezh-skol 2006/2007

Div skol-veur o deus ur perzh pennañ e kelenn ar brezhoneg : Skol-veur Breizh-Uhel ha Skol-veur Breizh-Izel.




47% eus an 800 studier bennak o deus ur c'helenn war ar brezhoneg a heuilh kentelioù brezhoneg evel danvez dibab ha, gant se, n'int ket studierien war ar brezhoneg da vat.

Ur studier diwar eizh a heuilh ur stummadur evit dont da vezañ kelenner brezhonek, ur feur un tamm izeloc'h evit ar bloavezhioù diaraok eo.

Emdroadur dasparzh ar studierien diouzh an doare studioù eus 2001 da 2006

An niver a studierien a oa kentoc'h gant ul lusk kreskiñ betek ar bloavezh-skol 2002/2003, met techet eo bet da zigreskiñ da c'houde ha **splann eo ar c'hoazhadur abaoe 2004**. Un emdroadur chalus-meur-bet eo, evel-just.



Abaoe 2002 ez a war zigresk an niver a studierien o deus ur c'helenn war ar brezhoneg. E 2006/2007 eo digresket an niver-se eus 26,6% e-keñver an niver uhelañ bet tizhet e 2002/2003. Kollet he deus Skol-veur Breizh-Uhel ur bempvedenn eus he studierien etre 2001/2002 ha 2006/2007. Ar skol-veur a zegemer ar muiañ a studierien war ar brezhoneg eo c'hoazh (an tri c'hard eus ar studierien a brient un Aotreegezh I&II (DEUG* kozh) peurgetket).

Diskuliañ a ra emdroadur an niver a studierien dre live studi daou dech kudennek dreist-holl. Da gregiñ, mantrus eo koazhadur an niver a **studierien danvez kelennerien** (-32,9% etre 2002/2003 ha 2006/2007) o vezañ an ezhommoù bras zo evit kaout kelennerien : ouzhpenn 500 post bennak a vefe ret krouiñ en deskadurezh divyezhek ac'hann da 2010 evit gallout ober war-dro 20 000 skoliad d'ar mare-se (hervez pal politikerezh yezh Rannvro Breizh, gw. p. 65). Penaos kavout a-walc'h a dud da lakaat war ar postoù-se pa oa a-boan kant den er stummadurioù a-ratozh e 2006/2007? Da eil, abegoù zo da soñjal ne'z aio ket ar stad-se war wellaat pa verzer e koazh spontus an niver a studierien en **Aotreegezh I&II** ivez (-49,4% etre 2002/2003 ha 2006/2007), homañ mammenn bennañ an danvez kelennerien.

Ret-holl ha mallus eo aozañ ur c'houlzad kelaouiñ bras o vezañ ar stad-se : evit desachañ studierien war-zu an hentadoù-se eo ret reiñ dezho da anavezout ar stummadurioù kinniget e skolioù an deskadurezh uhel koulz hag ar fred zo liammet outo.

A-hend-all, ezhomm a vefe eus ur stummadur publik heñvel ouzh hini Skol-veur Gatolik ar C'hornôg a-benn stummañ brezhonegerien e-doug ur bloavezh (n'eo ket dre zegouezh e ra berzh ar stummadurioù c'hwec'h miz, gw. p. 83).

Erfin, pouezus-tre eo ivez lakaat ar stummadurioù da glotañ gant ezhommoù ar studierien ha digeriñ ar stummadurioù a zo war-zu tachennoù nevesaus evel ar c'hleweled.


An deskadurezh uhel e brezhoneg, un dachenn da c'hounit evit an dazont

Un emdroadur a zo war tachenn an deskadurezh uhel e brezhoneg ma ne oa tost netra a-raok ar bloavezhioù 2000. Met **stummadurioù berr** eo a gaver e brezhoneg evit ar poent dreist-holl.

Un degouezh da gelenn tud yaouank war sevenadur Breizh e liamm gant temoù bras ar gevredigezh a vremañ eo Skol-veur Yaouankiz Breizh abaoe he c'hrouidigezh e 2000 gant Kuzul Sevenadurel Breizh. Adalek an deroù ez eus bet dalc'het enni prezegennoù hag eskemmoù zo e brezhoneg. E dalc'h 2007 e oa brezhoneg en darn vrasañ eus an abadennoù (a-drugarez da zafar jubenniñ prim Ofis ar Brezhoneg peurgetket).

Da-heul ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 war an divyezhegezh bet sinet e 2002 ez eus bet lakaet da dalvezout stummadurioù e brezhoneg war ar buheziñ (an DABU* hag an DARE*, gw. ar pennad sterniet p. 95).

Kroaz-Ruz Lannuon he deus kinniget e brezhoneg, evit ar wech kentañ e miz Meurzh 2007, he stummadur evit kaout an testeni stummañ war ar sikourioù kentañ.



Kalz raktresoù all a zo c'hoazh, met mont a ra da get an darn vrasañ anezho a-raok bezañ bet kaset da benn evit abegoù lies : diouer a enskrivadurioù, kudennoù melestradurel, h.a.

War dachenn ar **c'hleweled**, dilezet ez eus bet ur raktres stummadur hir e brezhoneg war ar c'hrouiñ gant Daoulagad Breizh en abeg da gudennoù melestradurel. Daoust da se, ur stummadur pemp devezh war an "Teknikoù micherel hag an teknikoù-mouezh e kleweled Breizh" zo, abaoe 2006, e roll ar stajoù berr kinniget gant SSD* Skol-veur Breizh-Uhel d'an aozadurioù publik ha prevez evit ar stummadur a-hed ar vuhez. Trawalc'h e vefe da eizh den en em enskrivañ evit ma vefe dalc'het.

Ur raktres stummadur e diabarzh an embregerezhioù a oa gant ar greizenn stummañ war ar yezhoù e Skol-veur Breizh-Izel. He fal a oa reiñ un tañva d'ar brezhoneg ha deskiñ troioù-lavar eus ar pemdez d'an dud a vicher e **bed ar yec'hed** : klañvdiourien, mezeien, leuñvourien. Enskrivet e oa ar staj e programm stummadurioù 2005/2006. Met n'eo ket bet kaset ar raktres da benn a-benn ar fin.

Edo ar skipailh kelennerien zo e penn an Diplom Studi Uhel Arbennikaet skridaozer-troer er memes skol-veur e soñj kinnig ur staj war an **treiñ galleg-brezhoneg** e 2004. Nullet eo bet ar staj dre ziouer a enskrivadurioù.

Ur raktres stummadur all a oa war ar stern war un dachenn nevez : stummañ tud e brezhoneg war micherioù **ar sevel tiez** e AFOBAT* Penn-ar-Bed. Ganet e oa ar raktres-se diwar sinadur emglev Ya d'ar brezhoneg Ofis ar Brezhoneg gant kevread rannvroel ar sevel-tiez e Breizh. E kreiz 2007 e hañval ar raktres-se bezañ stanket siwazh. Ur c'hendivizad a zo bet sinet etre Kreizenn Stummañ an Deskidi e Kemper ha skolaj Diwan Plijidi a-benn kizidikaat ar skolajidi divyezhek ouzh ar micherioù-se memes tra.

Diouer a ra ar stummadurioù e brezhoneg evit ar poent c'hoazh; ezhomm bras zo anezho koulskoude evit ledanaat an ober pemdeziek gant ar yezh e bed al labour. Daoust d'an diaesterioù, splann eo ez eus birvilh war an dachenn-se gant ar raktresoù a ya war liesaat. Emdroadurioù fetis a c'heller gortoz diganti en dazont tost. Met ouzhpenn liesaat ar stummadurioù berr ez eus ezhomm lakaat e plas stummadurioù skol-veur hir e brezhoneg war danvezioù nann-yezhel. N'emeur ket ken pell eus an dra-se.

Ur **bodad "Deskadurezh uhel e brezhoneg"** zo anezhañ e Kuzul Sevenadurel Breizh abaoe dibenn 2006. Abeg bezañ ar bodad-se zo lakaat an ezhommoù war wel ha kaout ur preder pleustrek da ziorren ar c'hinnig stummadurioù brezhonek. Raktresoù zo gantañ dija evel ur greizenn war micherioù ar c'hrouiñ hag ur Skol-veur ar Bobl a ginnigfe stummadurioù berr d'an dud war o micher. Ur greizenn genurzhañ hag ul lec'hienn Genrouedad zo war ar stern evit aesaat diorren ar raktresoù-se.

Klozadur darnel

War zigresk ez a an niver a studieren vrezhonek abaoe 2002 ha gwashoc'h c'hoazh abaoe 2004 tra ma rankfe ar skolioù-meur stummañ muioc'h a vrezhonegerien panevet evit reiñ d'an hentadoù divyezhek ar gelennerien ret evit mont war-raok. D'en ober e vefe ret brudañ talvoudegezh ar brezhoneg e saloù-soù ar studieren ha reiñ c'hoant d'al liseidi da vont war-zu ar stummadurioù war ar brezhoneg kinniget gant skolioù an deskadurezh uhel. Ret e vefe ivez krouiñ moduloù daoulamm er skolioù-meur publik evit deskiñ ar yezh buan.

Skolioù-meur Breizh a ginnig studiañ ar yezh met n'eus kinnig ebet c'hoazh evit ober studioù dre ar yezh. Er-maez eus ar c'hevrennoù lennegel, n'eus plas ebet evit ar brezhoneg en deskadurezh uhel (e bed ar yec'hed pe er skolioù arbennikaet war an armerzh da skouer). Ezhomm zo koulskoude da zigeriñ tachenoù nevez d'ar c'helenn brezhonek en deskadurezh uhel, evit degemer ar studieren bet skoliataet en hentadoù divyezhek peurgetket. Reizh e vefe e c'hallfent kenderc'hel o studioù e brezhoneg e gwirionez.

Ar c'helenn d'an oadourien : penn kentañ ul lañs nevez ?

Ne vo ket tu da stabilaat an niver a vrezhonegerien hep diorren ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien. Pouezus-bras eo evit ma vo diorroet war verr dermen implij ar brezhoneg er vuhez pemdeziek hag evit adstagañ goude ur pennad gant treuzkas ar yezh er familhoù. Ne c'haller ket kontañ war ar vrezhonegerien yaouank stummet gant an hentadoù divyezhek hepken ha fiziout enno dazont ar brezhoneg penn-da-benn. Etre daouarn an oadourien emañ dazont ar brezhoneg da gentañ-penn.

Tri doare da zeskiñ brezhoneg a vez kinniget d'an oadourien hiziv an deiz : kentelioù noz (kinnig a ra an darn vrasañ eus ar frammoù un eurvezh hanter kelenn dre sizhun), stajoù ha kentelioù dre lizher.

Dasparzh an deskidi diouzh an doare kelenn e 2005/2006

Kentelioù noz eo a vez heuliet gant an div drederenn eus an oadourien a zesk brezhoneg.


Kentelioù dre lizher : 500

Stajoù hir : 102

Stajoù ur sizhunvezh : 611


Stajoù dibenn-sizhun : 389

Kentelioù noz : 3200



Ar c'hinnig kentelioù noz e distro-skol 2006 hag ar c'hinnig stajoù e 2005/2006

Diorroet eo bet ar c'hinnig dre rouedadoù gant labour ar c'hevreadoù. Chom a ra lodennoù bras eus ar vro hep tamm kinnig kentel ebet avat, dreist-holl war ar maez, e reter Aodoù-an-Arvor hag etre Roazhon ha Naoned.



Gallout a ra un hentad deskiñ mont da glokaat unan all : un den a zo enskrivet e kentelioù noz a c'hall heuliañ stajoù dibennoù-sizhun pe stajoù ur sizhunvezh zoken. Skoemp eo neuze embann an niver a oadourien a zo o teskiñ brezhoneg en hentad deskiñ a-bezh gant ar jedadenn doubl-se.

Gallout a reer brasjediñ ez eus bep bloaz un nebeud kantadoù a oadourien nevez stummet war ar brezhoneg gant an hentad kelenn a-bezh, en ur gemer e kont an niver a zeskiñ er stajoù hir hag re liveoù uhelañ ar c'hentelioù noz, da lavaret eo an oadourien o deus tizhet al live ret evit bezañ degemeret evel brezhonegerien. Pell emañ c'hoazh ar sifr-se da gempouezañ ar c'holl a verzer e-touez ar vrezhonegerien a-vihanik : da lavaret eo etre 6000 ha 6500 brezhoneger kozh hag a varv bep bloaz (hervez hor brasjedadenn savet diwar roadennoù enklask 1999 an EBSSA*7).

7 Gw. al lodenn Imbourc'herezh, p. 129.

Ar c'hentelioù noz : ur c'hinnig stabil met sifroù war zigresk

Stad ar c'hinnig kentelioù noz

An niver a lec'hiadoù deskiñ : ur c'hinnig en ur gumun diwar eizh

Lec'hiadoù deskiñ a gaver e 12% eus kumunioù Breizh e 2006 (evit keñveriañ, 8% anezho a zegemer ul lec'hiad divyezhek evit ar skolidi), da lavaret eo ez eus tro-dro 230 lec'hiad kentelioù noz e Breizh. N'eo ket ken diorroet ar c'hinnig en holl zepartamantoù. Gallout a reer kavout kentelioù noz en ur c'hard eus kumunioù Penn-ar-Bed da skouer, pe e lodenn gornôg ar Mor-Bihan padal e chom bihan ar c'hinnig e departamant Aodoù-an-Arvor a-bezh.

Ar stummerezh dibaouez

Unnek framm a ginnig ur stummerezh dibaouez war ar brezhoneg : frammoù arbennikaet a ginnig stummadurioù azasaet, dre stajoù pe dre gentelioù noz, d'an dud dezho ur pal micherel, da lavaret eo bezañ gouest da labourat e brezhoneg. Tapet gant ar frammoù-se un niverenn aozadur stummañ digant ar prefeti e kinnigont steuñvoù stummañ d'an deskidi a c'hall lakaat arc'hantaouiñ o stummadur gant aozadurioù ofisiel (Rannvro, departamantoù, an AVAL* pe ar c'hKIMINEK*) pe gant o implijer.

Diouzh intrudu tiez-kêr zo e vez stummet war ar brezhoneg an implijidi dedennet war o amzer labour. Fiziet e vez e kevreadoù ar c'helenn d'an oadourien reiñ ar c'hentelioù. Kinniget e vez da skouer gant Mervent daou pe tri fenn-devezh bep miz da implijidi ti-kêr Douarnenez. Kinniget e vez ivez kentelioù gant Stumdi da implijidi ti-kêr Pondi ha gant Roudour da implijidi ti-kêr Karaez. Pouezus bras eo ar stummadurioù-se evit diorren implij ar brezhoneg er vuhez foran. An holl strollegezhioù foran ha frammoù melestradurel all a zlefe heuliañ ar skouerioù-se.

Ar poellgor embregerezh a c'hell bezañ un doare all c'hoazh da stummañ an oberidi war ar brezhoneg e stern al labour. Kentelioù brezhoneg a vez kinniget gant poellgor embregerezh IFREMER* Plouzane da skouer.

Pelec'h emañ al lec'hiadoù deskiñ ?

Hervez enklask miz Du 2006 Arsellva ar brezhoneg emañ tost an hanter eus al lec'hiadoù kentelioù noz e Penn-ar-Bed. Goloet mat a-walc'h eo tiriad an departamant-se. Ur c'hard eus al lec'hiadoù zo er Mor-Bihan a-hend-all. Emañ ar c'hentelioù war lodenn gornôg an departamant ha tost d'an aod, lec'h ma kresk fonnus ar boblañs (eno e kaver lec'hiadoù divyezhek ivez). N'eus nemet 16% eus ar c'hentelioù noz zo lec'hiet en Aodoù-an-Arvor. E gwalarn an departamant emañ ar c'hinnig dreist-holl. Eus tu ar reter, n'eus nemet teir c'humun ma vez kinniget kentelioù noz : Sant-Brieg, Ploufragan ha Dinan. N'eus bet araokadenn ebet e pemp bloaz evit goleiñ gwelloc'h lodenn reter an departamant. Muioc'h a lec'hiadoù deskiñ zo el Liger-Atlantel eget en Il-ha-Gwilen a-hend-all. Diazezet eo ar c'hinnig en daou zepartamant-se er c'hêrioù-penn ha tro-dro dezho dreist-holl.

Ul liamm zo etre an hentadoù divyezhek er skolioù hag an hentad deskiñ d'an oadourien : e div gumun diwar deir a zegemer ul lec'hiad divyezhek er skol e c'haller heuliañ kentelioù noz. Koulskoude, evit ar poent, n'eus ket a levr deskiñ nag a gentelioù a-ratozh evit kerent ar skolidi ha pa vefe kinniget kentelioù gant ar strolladoù skoazell da zDiwan pe gant kevredigezhioù kerent ar skolidi.

Ar c'hentelioù dre lizher

Div gevredigezh a ginnig kentelioù dre lizher abaoe pell : **Skol Ober** hag **Ar Skol Vrezoneg**. Ezhomm en deus an doare kelenn-se da vezañ klokaet gant kentelioù efedus ha modern a c'haller kaout enlinenn war ar Genrouedad. Ar frammoù a ginnig hentennoù brezhoneg evit ar c'hentelioù noz n'int ket aet kalz war-raok war an dachenn-se c'hoazh. Koulskoude e kinnig **Sav-Heol** kentelioù dre lizher hag azasaet he deus an hentenn "Ni a gomz brezhoneg" savet gant he frezidant hag embannet gant TES*. Kavout a reer anezho dre ar Genrouedad war lec'hienn Kervarker. Lec'hienn DAO* eus he zu a ginnig poelladennoù enlinenn dindan stumm c'hoarioù.

Emdroadur an niver a lec'hiadoù deskiñ

Kresket eo an niver a lec'hiadoù deskiñ, dreist-holl etre 1999 ha 2002. **Kresket eo ar c'hinnig eus tost an hanter en ur ober eizh vloaz (1998/2006)**. Diorroet eo bet kalz ar c'hinnig dre rouedadoù el Liger-Atlantel, en Il-ha-Gwilen hag er Mor-Bihan er prantad etre 1999 ha 2002 : kentelioù noz zo bet digoret tro-dro da Roazhon, da Naoned hag ur c'hresk zo bet e bro Kêr-Wened hag e bro an Alre. Disoc'h labour ar c'hevreadoù eo : **Skol an Emsav** e bro Roazhon, **Kentelioù an Noz** e bro Naoned, ha **Kerlenn Sten Kidna** e bro an Alre. Dre-vras, ez a war stabilaat ar c'hinnig e Breizh abaoe 2002. Kenderc'hel a ra da ziorren, met en un doare dizingaloc'h, e Penn-ar-Bed, en Aodoù-an-Arvor hag er Mor-Bihan. Diorroet eo kalz rouedad lec'hiadoù deskiñ **Mervent** e Kerne, hini **Sked** e bro Vrest, hini **KLT*** e bro Ventroutez hag hini **AL Levrig** e Bro-Dreger. Merzet ez eus bet un digresk bihan en departamantoù all abaoe 2002.


An hanter eus al lec'hiadoù kentelioù noz zo stag ouzh ur c'hevread e 2006. Evit mont war-raok, harp ar Stad o deus kavet ar c'hevreadoù gant ar postoù implij yaouank. Stag eo bet diorren ar c'helenn d'an dud deuet ouzh ar micherelaat dre stignadoù a seurt-se e gwirionez. Evel ma ya an implijoù yaouank da get e chom stanket emdroadur ar c'hinnig tamm-ha-tamm abaoe 2002.

An niver a zeskidi : war stabilaat ez a an digresk

Tro-dro 3000 oadour a heulie kentelioù noz e-kerzh ar bloavezh 2006/2007. Peurliesañ e vez kinniget d’an deskidi heuliañ pevar pe pemp bloavezh kentelioù noz evit dont da vezañ ur brezhoneger oberiant*. Deraouidi eo an darn vrasañ eus an deskidi : 56% eus an holl zeskidi a gaver el liveoù 1 ha 2. Diskouezet en deus enklask DAO* ne vez ket heuliet pizh redad deskiñ an deskidi gant darn vrasañ ar frammoù. N’eus koulz lavaret aozadur ebet a c’hall lavarout an niver a zeskidi o deus paouezet gant ar c’hentelioù eus an eil bloavezh d’egile. Ar roadennoù roet ganto zo kentoc’h prizadurioù ha ret eo teurel evezh neuze pa vezont kemeret e kont. Dre an enklask-se e ouzer e vez dilezet ar brezhoneg gant ul lodenn vras eus an deskidi el live 1. Koulskoude e verzer dre enklaskoù bloaziek Arsella ar brezhoneg ez eus muioc’h-mui a dud a ya betek penn an deskiñ (1342 den gant al live 3 pe uheloc’h e 2006 e-keñver 950 e 2002 da skouer) ha nebeutoc’h anezho o tilezel e-kerzh ar bloavezh kentañ. Frouezh micherelaat ar gelennerien hag ar frammoù eo an emdroadur mat-se dreist-holl.

An niver a zeskidi er c’hentelioù noz dre live ha dre zepartamant e 2006/2007

Kempouesoc’h-kempouesañ eo niver an oadourien o deus heuliet kentelioù brezhoneg dre zepartamant : pouez Penn-ar-Bed n’eo ket ken kreñv hag e 2000. Gwir eo evit al live 1. Met seul uheloc’h eo al live seul bouezusoc’h eo an niver a zeskidi e Penn-ar-Bed.



E Penn-ar-Bed emañ an darn vrasañ eus an oadourien a zesk brezhoneg : tro-dro 1350 den o deus lakaet o anv evit deskiñ brezhoneg eno e-pad ar bloavezh 2006/2007, da lavaret eo 44% eus an holl zeskidi e Breizh. Poellek eo ar feur-se o vezañ m’emañ tost an hanter eus al lec’hiadoù kentelioù noz en departamant-se ivez. Bodañ a ra an departamant muioc’h eget an hanter eus an oadourien enskrivet el liveoù uhelañ (live 4 ha 5) a-hend-all.

Diouzh kartenn stankted ar boblañs eo kartenn ar c’helenn d’an dud deuet e gwirionez. War an aod hag er c’hêrioù brasañ emañ an deskidi : ar peder c’hêr gentañ (Roazhon, Naoned a-raok Kemper, Brest ha Montroulez), diwar 171 kumun a zegemer kentelioù noz, a stroll 20% eus an holl zeskidi pa vodont 24% eus poblañs Breizh.



N’eus ket kalz a zeskidi en Aodoù-an-Arvor : nebeutoc’h eget 500 den a zo enskrivet er c’hentelioù noz kinniget en departamant e 2006/2007 (16% eus an hollad). N’eus ket kalz muioc’h a zeraouidi en Aodoù-an-Arvor eget en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel. Koulskoude, ar c’hresk uhelañ a zo bet en departamant-se e 2006/2007 : +20%, tra m’emañ an niver a zeskidi o tigrskiñ en holl zepartamantoù all, nemet al Liger-Atlantel (+6%).

Dibar eo ar c’hinnig deskiñ en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel : an div drederenn eus lec’hiadoù deskiñ an departamantoù-se zo bodet en o c’hêrioù-penn.



Emdroadur an niver a zeskidi er c'hentelioù noz eus 1999 da 2006 (sifroù d'an distroioù-skol)

Un digresk hollek eus an niver a zeskidi a zo en holl zepartamantoù abaoe un nebeud bloavezhioù. Koulskoude, mont a ra an niver-se war greskiñ en-dro el liveoù uhelañ (+7% e 2006/2007 el liveoù 4 ha 5) ha stabilaat a ra an niver a zeskidi. Gant an dra diwezhañ-se e c'heller kaout spi e vefemp e penn kentañ ul lañs nevez. Ur c'hresk hollek a zo ivez e 2006 en Aodoù-an-Arvor (+20%) hag el Liger-Atlantel (+6%). Erfin, digreskiñ a ra en-dro pouez Penn-ar-Bed e-keñver an departamantoù all (goude bezañ aet war greskiñ e 2005/2006).



War zigresk eo aet an niver a zeskidi etre 1999 ha 2006 e Breizh a-bezh. Gwelet ez eus bet un digresk en holl zepartamantoù. Bras eo bet an digresk betek 2002. War a seblant ez a an digresk-se war stabilaat abaoe 2003. Enklaskoù a vez kaset da benn gant servij Arsellva ar brezhoneg evit gouzout pet den a heuilh ar c'hentelioù brezhoneg. Gant an diaesterioù zo da zastum ar sifroù (frammoù zo ne embannont ket o sifroù pe ne heuliont ket o deskidi), ne c'heller nemet brasjediñ an niver a zeskidi (ha dreistpriziet e c'hall bezañ bet da vare an enklaskoù kentañ). Posupl eo ne vefe ket an digresk ken kreñv ha ma hañval bezañ.

Brasoc'h eo bet an digresk gant live an deraouidi. Un digresk eus 60% a zo bet etre 1999 ha 2006 : 2600 den a oa el live 1 e 1999, ne oant nemet 1018 e 2006. Koulskoude, stabilaat a ra an niver-se abaoe 2004. An digresk el liveoù all n'eo ket ken kreñv. Ur c'hresk a zo el liveoù uhelañ zoken : +7% el liveoù 4 ha 5 e 2006/2007. Un darn fetis eus an dud o doa kroget tri pe bevar bloaz zo a gendalc'h da zeskiñ. Gallout a reer soñjal emaint war an hent da zont da vezañ brezhonegerien oberiant*. Met an niver bihan a dud enskrivet el liveoù izelañ bremañ en do efedoù war sifroù al liveoù uhelañ er bloavezhioù a zeu dre ret.

Ar stajoù

Ar c'hinnig

Triwec'h framm strewet er pemp departamant a ginnig stajoù brezhoneg e Breizh. Stabil eo an niver-se er bloavezhioù diwezhañ met mont a ra danvez ar stummadurioù war liesaat. Stajoù nevez zo bet staliet gant **Ti ar Vro Bro Leon, Bevañ e Brezhoneg**, gant **Gevred** pe c'hoazh gant **skolaj Diwan ar Mor-Bihan, Soubañ e brezhoneg**. Estreget deskiñ brezhoneg eo pal ar stajoù-se lakaat o deskidi da eskemm gant brezhonegerien a-vihanik ha d'ober traoù e brezhoneg a-benn gwellaat ha pinvidikaat o brezhoneg.

Liesseurt eo ivez ar c'hinnig diouzh padelezh ar stajoù. **Stajoù dibenn-sizhun** a vez kinniget gant tost kement a frammoù ha **stajoù ur sizhunvezh**. Tri framm a ginnig **stajoù hir c'hwec'h miz** : **Roudour, Stumdi** hag, abaoe miz Genver 2007, **Skol an Emsav**. Disheñvel-bras eo pal ar stummadurioù hir-se : mennout a ra ar stajidi dont da vezañ brezhonegerien e berr amzer. Ur pal micherel zo gant ar stajidi peurliesañ. An tri framm-se zo e roll ar frammoù aotreet evit ar stignad "chèques-force" kinniget gant ar Rannvro a arc'hantaou evel-se ul lodenn eus ar stummadur.

Efedus eo ar stummadurioù hir evit dont a-benn da gaout ul labour e brezhoneg. Gant enklaskoù e heuilh Stumdi e stajidi gozh a-benn anavezout o stad labour. Hervez disoc'hoù an enklask evit eil remziad 2005/2006 da skouer, an div drederenn eus ar stajidi o doa kavet fred c'hwec'h miz goude fin ar stummadur hag an div drederenn anezho war postoù brezhonek. Ouzhpenn un drederenn eus ar stajidi he doa dibabet kenderc'hel he studioù war ar yezh, pe gant an Aotreegezh war ar brezhoneg, pe gant stummadurioù a denn d'ar c'helenn.


Evit harpañ e stajidi en o c'h-lask labour, Stumdi a ginnig dezho ur servij nevez evit o aliañ hag o heñchañ davit ar gennadoù a c'hell enfredañ brezhonegerien. Talvoudus-kenañ eo ar servij-se a respont da ziaked an AVAL* evit ar pezh a denn da ved al labour e brezhoneg.

An niver a stajidi

Stabil e chom an niver a stajidi er bloavezhioù diwezhañ. Tro-dro 1 100 den o deus heuliet stajoù e-kerzh ar bloavezh 2005/2006. Muioc'h a stajidi o deus heuliet stajoù ur sizhunvezh eget stajoù dibennoù-sizhun (a bad daou zevezh peurvuiañ). Ur c'hant stajiad bennak o deus dibabet ur stummadur hir (c'hwec'h miz) ; ar pal kreskiñ buan an niver-se a rank bezañ lakaet o vezañ pegen efedus eo an doare stummadur-se (ha pa ne vefe nemet evit kenstrivañ da ziorren ar c'helenn divyezhek).

En Aodoù-an-Arvor ez eus bet ar muiañ a stajidi dibenn-sizhun gant ar framm Studi-ha-Dudi. Evit ar stajoù ur sizhunvezh e kaver tost pevar stajiad diwar bemp e Penn-ar-Bed. En departamant-se emañ frammoù arbennikaet war ar seurt stajoù-se evel Roudour, Stumdi pe KEAV*.

Dasparzh ar stajidi diouzh padelezh o staj ha dre zepartamant - Bloavezh 2005/2006



Gwellaat ar c'helenn d'an oadourien

DAO*, ur framm da genurzhiañ ha da ziorren an deskiñ d'an oadourien

Gant sikour Ofis ar Brezhoneg ez eus bet boulc'het ur preder gant ar c'hevredigezhioù hag ar c'hevreadoù war an ezhomm da genurzhiañ a-benn diorren hag efedusaat an deskiñ d'an oadourien, e fin ar bloavezhioù 90. Disoc'het eo ar preder hollek-se war grouidigezh DAO ivez (Deskiñ d'An Oadourien) e miz Mezheven 2001.

Pal kentañ ar gevredigezh-se eo bodañ ar frammoù deskiñ evit an oadourien, er-maez eus an Deskadurezh Stad. He zachennoù labour eo ar bedagogiezh, an dafar kelenn, titouriñ an deskidi, stummañ ar gelennerien, micherelaat anezho koulz hag an hentadoù deskiñ. Krouet ez eus bet ur post-labour er gevredigezh e 2002. E 2003, kefridi gentañ an implijad a oa bet reiñ lañs d'un enklask a-benn priziañ labour an hentad deskiñ d'an oadourien hag anavezout gwelloc'h ar c'helenn d'an oadourien hag an aozadurioù gouestlet dezhañ. Disoc'hoù an enklask-se a ya d'ober un diazez evit sevel ha kinnig raktresoù a glot gant ezhommoù an aozadurioù stummañ. Abaoe 2002 e vez aozet gant DAO* devezhioù eskemm ha stummañ evit ar gelennerien ; ur gwir steuñv stummadur daouvloaziek eo hag a gas d'ul label roet d'ar stummerien o deus heuliet an holl voadoù.

Daou vodad-labour a ya en-dro gant DAO* : an eil war ar c'helenn hag egile war an aozañ. Ur preder war statud ar gelennerien a gas ar bodad diwezhañ war-raok. Gant ar bodad-labour war ar c'helenn ez eus bet prederiet war al liveoù kelenn. Ur stumm eus **Portfolio Europat ar Yezhoù** en deus krouet evit ar brezhoneg hag ur goulenn kretaat a oa bet savet evitañ ouzh poellgor gwiriekat Kuzul Europa e 2005. N'eo ket bet kretaet e stumm eus ar Portfolio da zDAO* e 2007 c'hoazh, met gouestlet ez eus ul lodenn eus lec'hienn ar gevredigezh d'an embriazañ dija.

8 Gw. ar pennad sterniet a-ratozh a zeu da-heul.

43 aozadur pe kevread a oa ezel eus DAO* e miz Genver 2007. Ma kemerer e kont an aozadurioù ezel eus kevreadoù ezel eus DAO* e vod ar framm-se 77 aozadur pe kevread. Ganto e stroll ar gevredigezh tro-dro 130 lec'hiad deskiñ (kentelioù noz, stajoù pe kentelioù dre lizher), da lavaret eo war-dro 57% eus lec'hiadoù Breizh, 72% eus an dud a heuilh kentelioù noz e 2006/2007 ha 92% eus ar stajidi e 2005/2006.

Ar bedagogiezh

Roet e oa bet lañs gant DAO* e 2002 d'ul labour evit termenañ al liveoù deskiñ diwar ar Framm europat boutin diazez evit ar yezhoù. Labour zo war ar stern gant an aozadurioù kelenn a-benn lakaat e pleustr ur gael diazez evit al liveoù kelenn. Pouezus-kenañ eo evit gwellaat dasparzh an deskidi dre live ha priziañ o barregezhioù war ar brezhoneg. Azasaet eo bet Portfolio europat ar yezhoù da wirvoud ar brezhoneg. E pleustr emañ al labour er frammoù bremañ.

Diouer bras a zafar pedagogel a glotfe gant ar c'helenn d'an oadourien zo. Implijet e vez gant ar muiañ-niver div hentenn a ginnig ur bedagogiezh birvidik ha bev : **"Ni a gomz brezhoneg"** embannet gant TES*, savet gant Mark Kerrain, hag **"Oulpan"** embannet gant Skol an Emsav, savet gant Nikolaz Davalan. Ur c'helenner diwar bemp a implij dafar pedagogel savet gantañ e-unan. Disoc'hoù enklask DAO* a lak war wel an ezhomm da labourat evit liesaat ar mammenoù pedagogel hag evit adaptout ar mankoù war an distagañ, dreist-holl. Diskouez a reont ivez eo pouezus-kenañ krouiñ raktresoù tro-dro d'al lenn, d'ar skingomz ha d'ar skinwel a-benn diorren danvez azasaet evit an dud a zesk brezhoneg. Gant DAO* e vez lakaet enlinenn dafar pedagogel azasaet ouzh liveoù ar Portfolio abaoe kreiz 2006 a-benn ma c'hallo pep kelenner eus ur framm ezel pe ezel e-unan ober e vad anezhañ.

Portfolio Europat ar Yezhoù, ur benveg evit gwellaat ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien

Diwar atiz Kuzul Europa ez eus bet roet lañs da bPortfolio Europat ar Yezhoù. Pal ar Portfolio eo stadañ barregezhioù yezh an deskidi hag e-se anavezout ar strivoù graet evit deskiñ yezhoù. Ar barregezhioù war ar yezhoù zo deskrivet gant termenoù al liveoù barregezhioù kinniget en teul "ur Framm europat diazez evit ar yezhoù".

Talvoudegezh ar framm-se evit ar brezhoneg eo reiñ an tu d'an deskidi d'en em briziañ, da dermenañ o barregezh war ar yezhoù. Reiñ a ra ivez an tu d'an aozadurioù stummañ da c'houzout e peseurt live e c'hall an deskidi en em enskrivañ evit ur bloavezh studi pe ur staj ha da zibab neuze palioù a glot gant o live. Gallout a raio bezañ implijet evit tuta brezhonegerien en dazont ivez. Ar splot ober se dindan askell DAO* eo kaout ur framm boutin d'an 230 lec'hiad deskiñ a zo e Breizh.

Ar merañ

N'eus nemet an hanter eus an aozadurioù a ver o skolidi gant ar stlenneg. A-hend-all ne c'hall tost aozadur ebet embann war ar prim rolloù a ginnig piv eo o deskidi (oad, lec'h annez, live brezhoneg). Al lodenn vrasañ anezho ne c'hell ket heuliañ ar skolidi a vloaz da vloaz kennebeut na

reiñ roadennoù a denn da aked pe da zilez an deskidi e-kerzh o amzer deskiñ. Labour a chom d'ober evit gwellaat binvioù merañ an aozadurioù kelenn neuze. Spletus e vefe mont war an tu-se evit ar gennad a-bezh. Studiañ mat redad deskiñ an oadourien a c'hallfe diskoulmañ kudenn an dilez da skouer. DAO* a ginnig d'ar frammoù stummañ labourat a-stroll a-benn diazezañ ur fichenn disoc'h evit dibenn ar stummadur. N'eus ket kalz a aozadurioù a ro un testeni eus dibenn ar redad deskiñ e gwirionez, nemet pa vez arc'hantaouet ar stummadur gant an implijer pe gant un aozadur foran.

Evit ar pezh a denn da brizioù ar c'hentelioù eo disheñvel-bras ar pezh a vez kinniget gant ar frammoù. 55% eus an aozadurioù a ginnig prizioù ne'z eont ket en tu all da 100€ ar bloaz. Priz keitat un eurvezh kentel zo neuze tro-dro da 2€ diouzh disoc'hoù enklask DAO*. Kalz izeloc'h eo priz ar c'hentelioù brezhoneg eget ar pezh a ginnig frammoù kelenn yezhoù all : etre 5 ha 10€ an eurvezh skol. Dleout a rafe ar frammoù dont a-benn da unvaniñ o frizioù. Ret e vo broudañ ar frammoù a ginnig prizioù kalz dindan ar geidenn da greskiñ anezho un tamm a-benn reiñ talvoudegezh en-dro d'ar c'helenn d'an oadourien, enfredañ kelennerien a vicher ha gwellaat ar c'hinnig. E gwirionez n'eo ket spletus kinnig kentelioù marc'had-mat-tre pe digoust zoken evit desachañ tud pa ouzer dre skiant prenet eo techet an deskidi da briziañ nebeud ar c'hentelioù-se ha da zilezel anezho aesoc'h. Ul label "kelenner d'an dud deuet" en deus savet DAO* a-benn talvoudekaat gwelloc'h al labour a vicher a vez kaset gant an aozadurioù kelenn.

Ar gelennerien

Kelennerien a-youl vat eo an tri c'hard eus ar gelennerien. Gopret ez eus, er gennad kelenn d'an oadourien, un hanter-kant kelenner bennak hepken, da lavaret eo 22 bost KILA*. Gant ur gevrat didermen he fad emañ an darn vrasañ anezho. Gant kevratoù implijoù yaouank e oa ur c'hard eus ar gelennerien gopret e 2004, an darn vrasañ anezho gant ur gevrat didermen he fad memes tra, ar pezh a dalvez e vo ret d'ar frammoù kavout diskoulmoù a-benn arc'hantaouiñ ar postoù-labour-se dizale bremañ m'eo aet ar stignad da get. Diaesterioù zo evit tuta kelennerien gopret. N'eo ket ur vicher hag a sach kalz tud evit ar mare, abalamour d'ar goprou izel, d'an eurvezhioù labour bodet diouzh an noz, ha d'ar statud bresk. Ret eo lakaat ar vicher-se da vezañ dedennusoc'h evit ar studierien hag an oberidi dre-vras gant ar youl diorren ar gennad ha lakaat ar stummadurioù da vezañ efedusoc'h.

Dont a ra war wel un ezhomm bras da stummañ ar gelennerien war ar bedagogiezh ha da wellaat o live yezh. E gwirionez, an hanter eus ar gelennerien n'int ket stummet a-raok kregiñ da gelenn. Kreñv eo ar goulenn p'emañ **82% eus ar gelennerien oc'h embann bezañ dedennet evit heuliañ devezhioù stummañ**. N'eo ket souezhus neuze e rafe berzh steuñv stummadur DAO* abaoe m'eo bet savet (372 eurvezh stummadur a zo bet aozet e 2006).

Dre ma n'eo ket stabil ar skipailhoù kelennerien ha ma'z eus un diouer a stummadur ganto a-wezhioù e c'haller displegañ e degouezhioù zo diaked pe dilez an deskidi. Ezhomm zo neuze eus ur framm kreñv diwar skouer AEK*, aozadur ar c'helenn d'an oadourien en Euskadi, a-benn micherelaat an hentad kelenn d'an oadourien. Krog eo DAO* da respont d'ar goulenn-se ha, gant se, ezhomm he defe da vezañ kreñvaet.

Piv eo an deskidi ?

N'ouzer ket gwall vat piv eo an deskidi. N'eus ket kalz a roadennoù diwar o fenn. **Enklask DAO* en deus degaset titouroù talvoudus koulskoude.** Diwar-benn an ober gant ar yezh, da skouer : un drederenn eus an deskidi ne gomz brezhoneg nemet e-pad ar c'hentelioù. Un darn vihanoc'h (6%) a gomz brezhoneg bemdez. Ar re a ra gant ar yezh e-maez ar c'hentelioù a gomz gant o c'herent ha gant o mignoned, ar pezh a zo nevez. Deskiñ a reer brezhoneg evit abegoù personel ha sevenadurel : an div drederenn eus an deskidi a zisklêr deskiñ brezhoneg gant ar c'hoant da anavezout gwelloc'h sevenadur Breizh. An div drederenn a fell dezho ober gant ar yezh ha dont da vezañ brezhonegerien da vat. An tri c'hard a zesk ar yezh evit ma chomfe bev ar brezhoneg. Mennet e hañval an deskidi bezañ da genderc'hel gant an deskiñ : pevar deskad diwar bemp a zo e soñj lakaat o anv en-dro er bloaz war-lerc'h hag 20% a zo e soñj klokaat o stummadur gant stajoù d'an daoulamm. Dre bennadoù-skrid er c'hazetennoù o deus gouezet an darn vrasañ eus an dud e oa kentelioù. Talvoudus eo ivez brudadeg Ofis ar Brezhoneg dre m'eo an eil skor kehentiñ a zegas tud nevez d'ar frammoù kelenn.

An darn vrasañ eus an deskidi (87%) a arc'hantaou o-unan o stummadur brezhoneg. N'eus nemet dek framm

bennak a lavar e kinnigont steuñvoù stummañ d'o deskidi, dre ar stummadur dibaouez peurgetket. Diwar o atiz o-unan, peurliesañ, e klask ar skolidi bezañ arc'hantaouet o stummadur. Gant an implijerien e vez arc'hantaouet an darn vrasañ eus ar stummadurioù a-hend-all. Gant ar Rannvro, an departamantoù, an AVAL* pe ar c'hKIMINEK* e c'haller goulenn arc'hantaouiñ ar stummadur. Ezhomm zo da gelaouiñ muioc'h an deskidi war an doareoù-se da lakaat arc'hantaouiñ o stummadur.

Brudañ an hentad deskiñ d'an oadourien

Bep bloaz ec'h aoz an Ofis ur c'houlzad brudañ war-zu an oadourien da vare an distro-skol. Liesaet eo bet skoroù ar brudadegoù : ouzhpenn skritelloù e vez skignet plegfollennoù gant arguzennoù evit mont da zeskiñ brezhoneg, kartennoù-post ha meur a skor all a adkemer skeudenn ar c'houlzad (deiziataerioù, kartennoù-emezelañ, follennoù-nij).

Kemer a ra ar frammoù perzh er c'houlzadoù en ur skignañ an dafar brudañ : karget int da virout lec'hioù brudañ digant o zi-kêr. Ofis ar Brezhoneg a gemere holl frejoù ar c'houlzad e karg betek 2004. Abaoe 2005, a-benn ledanaat ar skignañ, ez a Ofis ar Brezhoneg, a-unvan gant ar frammoù kelenn, e darempred war-eeun gant strollegezhioù lec'hel dezho tremen 5000 annezad evit ma kemerfent perzh er c'houlzad en ur skignañ ar skritelloù ha skoroù all ar vrudadeg hag en ur lakaat ur pennad-skrid en o c'hannadig. Hanterourien na c'heller ket tremen hepto eo an tiez-kêr evit ledanaat ar c'houlzadoù brudañ e Breizh. E miz Gwengolo 2006, ouzhpenn 70 kumun ha tri C'huzul-departamant o deus kemeret perzh e skignañ ar c'houlzad.

Klozadur darnel

Aet eo an hentad deskiñ war liesaat ha war efedusaat. Meur a gentel a c'hall klokaat ur redad deskiñ evit dont da vezañ brezhoneger da vat. Graet ez eus bet araokadennoù war dachenn ar bedagogiezh hag ar stummañ d'an dud deuet dre labour DAO* ha gant labour ar frammoù micherel. Ar c'hentelioù noz a chom an doare boutinañ evit deskiñ brezhoneg d'an oadourien. Gallout a ra an dud deuet klokaat ar stummadur-se gant kentelioù daoulamm, stajoù ur sizhunvezh, devezhioù adwelet pe stajoù dibenn-sizhun c'hoazh.

En ur mare etre emañ ar c'helenn d'an oadourien : aet eo an hentad war ziorren ha war vicherelaat a-drugarez da reizhiad an implijoù yaouank ha skiant prenet ar frammoù kelenn. Emañ dibenn ar reizhiad implijoù yaouank o tont hag an araokadennoù bet abaoe 2002 gant ar reizhiad-se a c'hallfe mont da get gwall vuan. Gallout a rafe strollegezhioù foran Breizh tennañ splet eus skiant-prenet Euskadi gant ar reizhiad kaset war-raok gant Kuzul-rannvro Akwitania evit lakaat an

oadourien da zeskiñ euskareg : arc'hantaouet e vez ul lodenn eus koust ar c'hentelioù gant ar C'huzul-rannvro. Ur strategiezh diorren a vefe ret termenañ gant ar frammoù kelenn, dezhi palioù sklaer sammet gant Rannvro Breizh evel m'eo bet graet evit ar c'helenn divyezhek (e dalc'h ar Rannvro emañ ar stummañ ouzhpenn-se).

Abaoe 2005 e arc'hantaou Kuzul-rannvro Breizh ar stummadur dibaouez e brezhoneg gant budjed ar stummañ ha n'eo ket gant hini ar sevenadur : en em ouestlet eo da baeañ 75 staj hir da frammoù stummañ zo. Evit ar mare n'eus nemet un darn vihan eus an deskidi (6%) a lak he stummadur da vezañ arc'hantaouet gant un aozadur bennak (an implijer evit an darn vrasañ anezho, ar poellgor embregerezh, an Departamant, ar Rannvro, an AVAL* pe ar c'hKIMINEK*). Tu a vefe diorren arc'hantaouiñ ar c'hentelioù en ur gelaouiñ gwelloc'h an deskidi, kreskiñ evel-se an niver a zeskidi hag, gant se, an niver a vrezhonegerien.

Kelenn Klozadur

E kalonenn dazont tost ar brezhoneg emañ ar c'helenn gant e holl zoareoù. An darn vrasañ eus an dud, pa glevont anv eus ar yezh-se, a ra diouzhtu al liamm gant ar c'helenn e gwirionez.

Ar c'helenn divyezhek eo a vez lakaet en a-raok peurliesañ zoken. Daoust d'an emdroadur dalc'het gantañ a vloaz da vloaz abaoe an deroù e teu splann war wel e kresk dousikoc'h-dousikañ an niver a vugale en hentad divyezhek. Stankoc'h eo rouedad al lec'hiadoù divyezhek e 2007 evit ar pezh a oa e 2002 memes tra, met an takadoù pourvezet ar muiañ eo zo aet war greñvaat c'hoazh etretant. Gant ar vent tizhet bremañ gant an hentad divyezhek e ranker steuñvekaat an diorren ha n'eo ket merañ anezhañ a-frapadoù ken. Ouzhpenn stankaat rouedad al lec'hiadoù er c'hentañ derez e rank ar c'hinnig en eil derez en em astenn a-galz : re wan eo c'hoazh evit ma vefe aes d'ar re yaouank kenderc'hel gant o hentad e gwirionez. **Mont war-zu ur c'hinnig tost d'al lec'h annez a zle bezañ ar pal evit kement live deskadurezh zo.**

An tañva er c'hentañ derez zo aet war-raok e Penn-ar-Bed, met bevennet eo en e ziorren (ha lakaet en arvar zoken) p'emañ douget gant ar C'huzul-departamant hepken. Ezhomm zo bremañ da emplegañ muioc'h ar c'humunioù hag ar c'humuniezhoù kumunioù en doare kelenn-mañ. N'eo ket bet heuliet c'hoazh skouer Penn-ar-Bed gant ar C'huzulioù-departamant all. Un araokadenn vras e vefe koulskoude ma c'hallfe an darn vrasañ eus bugale Breizh kaout un anaoudegezh bennak - ha hi diwar c'horre marteze - eus o yezh.

A-hend-all, **en eil derez** e talc'h an niver a grennarded a heuilh **kentelioù brezhoneg** da zigreskiñ abalamour ma ne vez ket lakaet a-walc'h ar yezh war wel er gevredigezh ha ma n'eo ket frammet ar c'helenn-se evel ma tlefe bezañ.

An tri doare-se da gelenn brezhoneg er skolioù (kelenn divyezhek, tañva, kelenn ar yezh) zo ken pouezus an eil hag egile. Pep hini anezho a respont da ezhommoù disheñvel a-berzh ar familhoù. War dachenn ar c'helenn e tlefe pep politikerezh yezh kaout da bal diorren an tri doare-se war un dro.

War dachenn **ar c'hentelioù d'an oadourien** e stader un emdroadur par da hini an eil derez en desped d'ar metoù-se bezañ aet war vicherelaat ha war frammañ er bloavezhioù diwezhañ. N'eus nemet ar stajoù hir a ya war-raok da vat e gwirionez, a-drugarez da bolitikerezh ar C'huzul-rannvro. Un emdroadur a bouez da vezañ kreñvaet ha harpet muioc'h c'hoazh eo p'eo an doare efedusañ da stummañ yezherien nevez e-touez an dud deuet.

Stummañ oadourien nevez zo ken pouezus ha stummañ bugale pa ziazeont ur skouer da vezañ heuliet gant ar re yaouank ha pa c'hallont kemer perzh diouzhtu e buhez ar gevredigezh (armerzh, sevenadur).

Strollegezhioù foran zo (evel Kuzul-rannvro Breizh pe Kuzul-departamant Penn-ar-Bed) o deus komprenet an ezhomm zo da lakaat palioù evit diorren ar c'helenn brezhoneg. Hini ebet anezho n'en deus lakaet c'hoazh **palioù resis** da gement doare kelenn zo avat. Ar bazenn gentañ eo koulskoude evit sevel dre ar munud **steuñvoù diorren liesvloaziek** gant ar youl kinnig d'an dud diskoulmoù tostoc'h d'o lec'h annez dre greskiñ an niver a lec'hioù kelenn. A-hend-all, ur wech lakaet ar palioù e vo da strivañ evit **sevel emglevioù padus gant an ensavadurioù e karg** (Rektoriezhioù, Ensellerezhioù Akademiezh, DDEC*où) evit mont dreist da skoilhoù zo ha kas ar palioù da wir. Kement-se zo bet graet, da skouer, evit an euskareg hag an okitaneg dre ur c'hemglev-stern bet sinet gant ar Stad ha Kuzul-departamant ar Pireneoù-Atlantel evit ar prantad 2004/2010.

Kizidikaat muioc'h a dud war dalvoudegezh an divyezhegezh hag ar brezhoneg a ranker ober evit mont pelloc'h ganti ivez.

N'eus abeg ebet evit ma ne c'hellfe ket bezañ graet e Breizh ar pezh a zo graet c'hoazh e rannvroioù all e Frañs (e Korsika da skouer) : kinnig an tañva d'ar yezh d'an holl er c'hentañ derez, ober ma vo kendalc'het en eil derez gant kentelioù brezhoneg. Asambles gant ar politikerezh-se e ranker kas war-raok ur politikerezh damheñvel evit ar c'helenn divyezhek.

Nec'hus eo ouzhpenn-se ne vefe ket frouezhusoc'h an nebeud diarbennoù lakaet da dalvezout e Breizh. Ar Stad n'he deus ket doujet da balioù ar stagadenn d'ar Gevrat-steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 (ha hi da venegiñ ar c'helenn divyezhek hepken). Techet eo Kuzulioù Akademiezh ar yezhoù rannvro e Breizh da soursial dreist-holl eus ar c'helenn divyezhek (int ivez) hag, abaoe m'int bet diazezet e 2001, eza splann stad ar c'helenn brezhoneg hag e brezhoneg er skol war washaat en desped d'ar palioù lakaet gant Kuzul-rannvro Breizh.

Evit echuiñ, a-benn diorren ar c'hinnig war an dachenn e ranker stummañ an niver a gelennerien ret. Seul nec'husoc'h a se eo neuze ez afe an niver a **studierien** a zesk brezhoneg er skolioù-meur war zigresk er maremañ. Oberoù pleustrek zo da gas da benn evit mont a-enep an tuadur-se. E-kichen ar gevrenn vrezhoneg ez eus doareoù all da gavout kelennerien vrezhonek : ar stummadurioù c'hwec'h miz a ya war liesaat, kentelioù yezh a c'hellfe bezañ roet da studierien ESSM* Breizh evit ma c'hellfent kinnig an tañva o-unan, ar gelennerien titlet a c'hell bezañ broudet da vont war ar c'helenn divyezhek, h.a.

Kalz a labour a chom d'ober evit gwellaat plas ar yezh en deskadurezh, splann eo.

Buhez sokial ha prevez

Peseurt lec'h d'ar brezhoneg war tachennoù a denn d'ar vuhez pemdez ha da zibaboù personel ?

Servijoù d'an dud : dister eo plas ar yezh c'hoazh

Ar frammoù aotreet da bourchas servijoù d'an dud

Da-heul lezenn ar 26 a viz Gouere 2005 eo bet diorroet ar servijoù d'an dud e Frañs. E-touez ar miliad frammoù aotreet renablet war Breizh a-bezh d'an diskar-amzer 2006 ez eus un darn vat a greizennoù liammet gant ar strollegezhioù lec'hel. Ar strollegezhioù-se a c'hell kemer ar servijoù d'an dud e kont en o folitikerezh yezh eta. Mat eo d'ar frammoù all soñjal kinnig servijoù e brezhoneg a-hend-all. Skoazellerien er gêr zo eus **kevread departamant ADMR* Penn-ar-Bed** a ra gant ar brezhoneg pa reont war-dro tud kozh, da skouer.

Bed ar vugaligoù

Hiziv an deiz, n'eus nemet e **Gouenoù** ez eus ur **vagouri** a zo e penn a-raok an degemer bugale e brezhoneg : **Dorn ha dorn**. E brezhoneg ez a en-dro ar vagouri gevredigezhel-se. Er vagouri gevredigezhel **Tamm-ha-Tamm** e **Plougerne** eo ar vugale brezhonek hepken a vez graet war o zro e brezhoneg. Un implijadeg eus magourikêr **Lanniliz** az a e brezhoneg gant ar re vihan, hag un den diavaez a zeu da vagouri gevredigezhel **La Farandole** e **Landerne** d'en ober.

Daoust d'un ezhomm bras e chom gwall strizh ar c'hinnig c'hoazh, hag eñ bevennet da vro Vrest. Souezhus eo n'eus ket diorroet c'hoazh seurt servijoù er c'humunioù m'eo bras niver ar skolidi divyezhek d'an nebeutañ. E **Gwened**, **Plougastell-Daoulaz**, **Naoned**, **Roazhon**, **Redon**,

Lannuon ha **Pariz** ez eus magourioù divyezhek war ar stern avat ; digeriñ a c'hellfent war verr dermen. Brudañ ha diorren ar brezhoneg tro-dro d'ar vugale vihan a-raok ar skoliata eo pal ar gevredigezh **Divskouarn** bet krouet e 2005 ; oberiant eo e Breizh a-bezh. Ganti ez eus bet savet ur garta da vezañ sinet gant ar magourioù a vo roet unan eus he zri live testenikaat diouzh ar plas roet d'ar brezhoneg e degemer ar re vihan.

Atebegezh ar strollegezhioù lec'hel eo merañ ar magourioù. Ouzhpenn ar magourioù kevredigezhel e c'hellfe an degemer e brezhoneg mont war-raok er magourioù-kêr gant ma vefe ur politikerezh yezh a yafe war an tu-se gant ar gumun pe ar framm etre kumunioù.

Emichañs ez aio seurt servijoù war ziorren er bloavezhioù zo o tont gant ar frouezhus m'eo an divyezhegezh kaset ken abred d'ar vugale. Ur steuñv "Petite enfance" a oa bet embannet gant ar ministr dileuriet ouzh ar Familh e 2006 ; rakwelet eo ennañ e vo digoret 40 000 plas ouzhpenn er magourioù en ur ober pemp bloaz. E-touez traoù all e kaver ar mennozh diorren ar magourioù bihan hag ar magourioù war ar maez. Splann eo e vefe mat d'ar brezhoneg tennañ gounid eus an diorren-se.

Nec'hus eo neuze e vefe bet nac'het gant CAF* Gwened e miz C'hwevrer 2007 ur skoazell da raktres ar gevredigezh **Babigoù Breizh** gant an abeg nemetañ e kav dezhañ e vefe an ober gant ar brezhoneg evit degemer ar vugale ur skoilh d'an digoradur d'an holl familhoù.

Un dachenn a-bouez bras all eo diorren **an ober e brezhoneg er gêr**. Ouzhpenn kas ar peadra (geriaoueg, c'hoarioù, rimadelloù, h.a.), eo talvoudus-kenañ broudañ an ober-se gant ar c'houbladoù ma n'eus nemet ur c'har

hag a gomz ar yezh. Frouezhus e vefe sellet a dostoc'h ouzh ar raktres "Twf" e Kembre war an dachenn-se (gw. p. 29). N'eus nemet abadennoù aozet ur wech an amzer gant **Ti ar Vro Bro Leon** pe stajoù arbennik aozet gant ar c'hevredigezhioù a ginnig kentelioù noz hag a denn d'an traoù-se.

A-hend-all, Kuzul-rannvro Breizh (pe ar C'huzulioù departamant) a c'hellfe heuliañ skouer Elzas ha lakaat titouroù a denn d'ar brezhoneg er valizennig a vez profet da gement babig nevez ganet (talvoudegezh an divyezhegezh abred, ar magourioù hag ar skolioù divyezhek) koulz ha profoù evel ur pegsun "Babig e-barzh" pe ur bladenn rimadelloù e brezhoneg.

Bed ar yec'hed

Evit ar pezh a denn d'ar savadurioù, n'eus nemet **Liesklinikenn* Armor Argoat e Gwengamp** ha servij radiologiezh **Pennospital* Kerne e Kemper** ez eus staliet ur **panellerezh divyezhek** enno. N'eo ket kalz, ha splann eo eo deuet an aveadurioù-se a-drugarez da youl hiniennoù. Ur preder gwirion a vank c'hoazh evit mont war-raok a-zevri war an dachenn-mañ. Bremañ ma ya bezañ ar brezhoneg er panellerezh foran war voutinaat e kornioù-bro zo, ur bazenn ouzhpenn e talvoudekaat ar yezh a vefe e krogfe da vezañ gwelet stank er staliadurioù yec'hed.



An ARH, Ajañsoù-rannvro an ospitalioù, eo e vez heñchet politikerezh ar staliadurioù yec'hed publik ha prevez ganto war triad ar rannvroioù. Ret e vefe da ARH* Breizh diazezañ ur preder war ar brezhoneg eta ; eus an tu all eo mat da bep staliadur yec'hed lakaat ar brezhoneg en e gevrat pal ha peadra (kement ha reiñ d'an ARH* da c'houzout ar goulenn a zo war an dachenn-se).

Ur preder a zo evit treuzkas galloudoù zo d'ar C'huzulioù-rannvro (evit ar pezh a denn d'ar postañ arc'hant peurgetket), met ur programm a-ratozh zo anezhañ c'hoazh (programm 801 : "Participer à la promotion de la santé publique"). Treuz eo ar politikerezh yezh ; poellek e vefe e lakaat da dalvezout gant ar programm-se neuze. Ouzhpenn-se e c'hellfe an dilennidi a zileur ar strollegezh foran e kuzul-merañ pep staliadur foran yec'hed pouezañ warnañ a-benn kas ar yezh lec'h ma ne vez ket lakaet war wel c'hoazh.

Ouzhpenn lakaat brezhoneg e panellerezh ar staliadurioù e vefe ezhomm ober gant ar yezh-se evit **ar c'hehentiñ**. An departamantoù an hini eo a zo barrek evit ar pezh a denn d'an diarbenn evit ar yec'hed da skouer. Met dre atiz kevredigezhioù eo deuet ar pezh zo bet graet evit ar poent kentoc'h, ar pezh a ziskouez ez eus ur goulenn war an dachenn. Poent eo bremañ tremen d'ur bazenn ensavadureloc'h evit kas an divyezhegezh war-raok.

Bed ar yec'hed a zlefe diorren **an degemer hag ar c'hinnig servijoù e brezhoneg** ivez. Un dra vat e vefe diazezañ ur preder a seurt-se e Breizh (gant an ARH* e kenlabour gant ar Rannvro marteze) : mezegiezh al

labour ha mezegiezh ar skolioù a vefe da gemer e kont ouzhpenn ar savadurioù yec'hed. Unan eus ar gennadoù a zlefe krouiñ postoù evit ar vrezhonegerien en amzer dazont eo bed ar yec'hed a-benn kinnig ur servij publik divyezhek d'an dud.

A-hend-all e c'hell ar vezeien, an apotikerien, an arnodvaoù dielfennadurioù mezegel ha yec'hedioù all implijout ar brezhoneg anezho o-unan. Un dek siner bennak en deus roet bed ar yec'hed d'an emglev Ya d'ar brezhoneg c'hoazh.

Servijoù d'an dud war an oad

Un ezhomm a zo, dreist-holl en tiez diskuizh hag e tiez retredidi m'en em gav brezhonegerien a-vihanik e-leizh : splann eo pegen plijus eo d'an holl bañsionidi kaout tro da gomz brezhoneg pe da vezañ skoazellet da vont er yezh-se kenetrezo ; ur ret eo zoken evit tud kozh zo hag a goll un tammig ar yezh all bet desket ganto (ar galleg). Ret-holl eo kavout en tiez-se tud ampart war yezh vamm ar re-se enta. A-hend-all, talvoudus-kenañ eo evel-just reiñ ur plas d'ar brezhoneg e seurt tiez dre ar panellerezh pe oc'h aozañ beilhadegoù e brezhoneg. Broudet eo ar re gozh talvoudekaat o yezh d'ober ganti gant ar remziadoù all ouzhpenn-se.

Un nebeud kevredigezhioù a glask mont war an dachenn-se e-giz **Startijenn ar Vro Vigoudenn**. Gant **Ti an Diskuizh** e Lanniskad ez eus bet staliet panneloù divyezhek hag ul levrig-degemer divyezhek a vez roet d'an dud eno.

Gant ar gevredigezh **Mervent** ha CIAS* ar C'hab e oa bet roet lañs d'ur raktres nevesaus e 2005. Abadennoù e brezhoneg a vez lusket e tiez retredidi evit lakaat ar brezhoneg da vevañ etre ar re gozh hag ober al liamm etrezo hag o endro dre ar brezhoneg. D'en ober e vez degemeret en abadennoù gopridi ar retredidi a zo dedennet ha gant al lusker e vez degaset ar c'heriaoueg hag an troioù-lavar a denn d'ar bed a vremañ, da ved an diavaez evit ma vefe aesoc'h d'an dud kozh mont e brezhoneg gant o familh.

Abadennoù c'hoariva e brezhoneg a vez aozet gant ar c'hevread **UDARPA* 29** zo e bal aesaat buhez ar re gozh. Ur stummadur a-ratozh evit an dud a youl vat zo war ar stern gantañ ivez evit lakaat anezho da azasaat o brezhoneg diouzh ar yezh komzet gant tud kozh ar vro. Siwazh, ar raktres-se a hañval bezañ chomet e-pign evit ar poent. Emgavioù gant bugale ar skolioù divyezhek a vez aozet gant an UDARPA* 29 abaoe bloavezhioù a-hend-all.

Ar skouerioù-se a vefe da lakaat e pleustr e lec'h all e Breizh. Stalioù kaozeal e brezhoneg a vez dalc'het e meur a di retredidi all memes tra (e Penn-ar-Bed peurgetket) met kentoc'h diwar youl hiniennoù c'hoazh. Tiez all a vefe dedennet met ne reont netra dre ziouer a arc'hant. Mat e vefe d'ar c'hevredigezhioù ha d'ar c'hluboù a ginnig abadennoù dudi evit ar re gozh plediñ muioc'h gant ar brezhoneg. Talvoudus e vefe ivez d'an aozadurioù arbennikaet war ar yezh mont e darempred gant ar c'hevreadoù da gizidikaat o izili eus ar pezh a c'hellfe

bezañ graet. Broudañ anezho da vont war an hent-se a c'hellfe ober an departamantoù o kemer sklaer ar brezhoneg e kont en o folitikerezh evit ar re gozh ivez. Evit buhezekaat an tiez retredidi e vefe tu d'an departamantoù lakaat e plas stignadoù par d'an hini bet savet gant departamant Penn-ar-Bed evit an tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez, da skouer.

Daou bost skoazeller brezhonek en doa krouet **Pennospital* Douarnenez** e 2000 gant skoazell **Mervent**. Gwelllaet eo bet buhez retredidi Douarnenez ha Kledenn-ar-C'hab gant ar vuhezourien-se. Aet e oa kuit ar vrezhonegerien-se goude unan pe daou vloaz siwazh hag erlec'hiet int bet gant tud divrezhonek. Un nevezenti a-zoare e oa avat evit hevoud ar re gozh. Seurt servijoù a rankfe bezañ kinniget stankoc'h e tiez retredidi Breizh-lzel a-bezh ha kêrioù bras Breizh-Uhel. Ar raktres bachelouriezh vicherel war an SMS* e Lise Diwan a vefe talvoudus evit kas tud barrek war ar brezhoneg da labourat e seurt metoù gant ma vo krouet postoù stabil ha n'eo ket implijoù diasur.

“Klaskerien ha treizherien soñjoù”

Tiez degemer ar re gozh ha kluboù an trede oad zo e-touez ar gevelerien bouezusañ evit ar raktres “Klaskerien ha treizherien soñjoù” bet savet gant departamant Penn-ar-Bed evit lakaat ar rummadoù da eskemm e brezhoneg kenetrezo. Berzh en deus graet dalc'h kentañ ar genstrivadeg-se dre ma 'z eus tost da vil den yaouank a zo bet lakaet da labourat war un 50 raktres bennak. Ur genstrivadeg a-ratozh he deus desachet 21 studier ouzhpenn. Un 200 den kozh bennak o deus bet un eskemm gant ar vrezhonegerien yaouank neuze.

Klozadur darnel

Nebeut a draoù a-du gant ar brezhoneg a vez graet war dachenn ar servijoù d'ar re vihanañ, d'ar re glañv ha d'ar re gozh evit ar poent memes tra. O lakaat politikerezhioù azasaet da dalvezout e vefe tu da ziorren en un doare efedus an ober gant ar brezhoneg er gennadoù-se m'eo gwirion an ezhomm.

Ur vuhez sevenadurel vreizhek liammet strizh gant ar brezhoneg

Bed ar c'hevredigezhioù breizhek

Ul lusk dibar a zo gant sevenadur Breizh. Douget e vez al lusk-se gant birvilh kevredigezhioù niverus hag oberiant-kenañ. Hag e-touez ar re virvidikañ emañ ar re o deus un darempred bennak gant ar brezhoneg.

Aet eo bed ar c'hevredigezhioù war ziorren abaoe derou ar bloavezhioù 70. Ul lamm war-raok a zo bet graet e-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ gant programm an implijoù yaouank en deus roet an tu d'ar c'hevredigezhioù da **vicherelaat** o aozadurioù. Diwezh ar c'hevratoù implij yaouank-se a zegas kudennoù rak ezhomm zo da gavout doareoù da virout ar postoù bet krouet kuit d'al lusk a ya ganto da vont da get.

Pouezus-kenañ eo ar c'hevredigezhioù e gwirionez evit respont d'an ezhommoù sokial na vezont ket sammet gant ar galloudoù foran war-eeun. **Urzhiet** eo ar meteier-se gwelloc'h-gwellañ gant ar c'hevreadoù. Seul vui e vez micherelaet ar c'hevredigezhioù ha seul vui e vez urzhiet o labour, seul efedusoc'h e vezont da gas ar brezhoneg war-raok en ur ziorren oberoù nevez.

Neoazh, daoust d'ar rouedad kevredigezhel bezañ diorroet mat e takadoù zo (Penn-ar-Bed, kornôg Aodoù-an-Arvor), **chom a ra distank e lec'hioù all** (er Mor-Bihan peurgetket). Kudennoù a sav neuze pa vez ezhomm eus kevelerien war al lec'h, pe e vefe evit respont da c'hoantoù ar vrezhonegerien (aozañ abadennoù e brezhoneg da skouer), pe e vefe evit ober al liamm etrezo hag ar galloudoù foran.

Ar c'hrouiñ arzel hag ar brezhoneg

Un hengoun bev gant ar c'hoariva brezhonek

Da-heul un hengoun kozh eo chomet bev ar c'hoariva brezhonek a-hed an XX^{vet} kantvet gant labour un nebeud skrivagnerien (Malmanche, Riou, Hemon, Helias, h.a.), ha douget e vez abaoe ar bloavezhioù 70 gant strolladoù komedianed a vicher pe amateur. N'eus ket kalz a strolladoù a ya da ginnig abadennoù war leurennoù Breizh met liesseurt eo an abadennoù a vez savet ganto.

Darn eus ar strolladoù a sav abadennoù diwar danvez hengounel ha lennegel Breizh met niverus eo ar re a glask mont pelloc'h eget danvez ar vro ha kinnig traoù nevez : krouidigezhioù, pe azasadennoù diwar pezhioù-c'hoari gallek, pe c'hoazh azasadennoù diwar pezhioù-c'hoari bet savet en ur yezh all.

Pezhioù-c'hoari a zo evel-just, met stummoù all a vez roet d'an arvest bev e brezhoneg : sketchoù, abadennoù evit ar vugale, abadennoù evit ar re gozh ha c'hoariva-straed zoken. War liesaat eo aet stummoù ar c'hoariva brezhonek abaoe deroù ar bloavezhioù 2000 e gwirionez a-drugarez da strolladoù nevez zo bet krouet.

Strishig e chom an dibab memes tra, ha c'hoariva dudi kentoc'h eget c'hoariva arnod eo a vez kinniget. Amateur eo an darn vrasañ eus ar strolladoù ouzhpenn-se, nebeut-tre a dud a vicher a zo.

Bec'h o dez ar skolioù pe ar c'hevredigezhioù oc'h aozañ degouezhioù evit ar vugale, ha bras eo ar goulenn koulskoude. Kalz re nebeut a strolladoù a ginnig abadennoù a-ratozh evit ar re yaouank : gwir eo evit ar c'hoariva koulz hag evit ar marvailhoù pe ar c'han. N'eus nemet **The Pirate-Puppet Company** a ginnig abadennoù margodennoù e brezhoneg.

E Penn-ar-Bed emañ diazezet ar pep brasañ eus ar strolladoù c'hoariva brezhonek. Nebeutoc'h a zo en departamantoù all met unan a vez kavet memes tra e pep hini eus div gêr vrasañ Breizh : Roazhon (**Barzhanoff**) ha Naoned (**Strollad Kentelioù an Noz**). Alies e vez kinniget stalioù-labour war ar c'hoariva gant ar skolioù divyezhek hag ar frammoù a ginnig kentelioù noz a-hend-all.

Krouet e oa bet ar c'hevread **C'hoariva** e 2005 a-benn respont da ezhommoù arbennik ar c'hoariva e brezhoneg : renabliñ ar strolladoù hag an holl bezhioù-c'hoari brezhonek a zo, stummañ an dud, broudañ ar c'hrouiñ hag an treiñ pezhioù-c'hoari, brudañ ha sikour an aozerien hag ar strolladoù da ginnig abadennoù, embann testennoù c'hoariva e brezhoneg. Da seveniñ ar palioù-se e oa bet krouet ur post e 2006.



Penaos en em gavout gant an arvesterien ?

Estreget en abadennoù a-unanoù e vez lakaet ar c'hoariva brezhoneg war wel da-geñver un nebeud darvoudoù. Festivalioù arbennikaet war ar stumm c'hoariva-se a zo : "C'hoariva e Kerne", "Kejadenn C'hoariva Roazhon" bet dalc'het evit ar wech kentañ e 2006, "War al leuren" e bro Vrest. Degouezhioù all a ro ur plas dalc'hmat da abadennoù e brezhoneg : festivalioù a denn da yezh pe da sevenadur Breizh ha gouelioù bloaziek emglevioù bro zo.

Abadennoù a-ratozh evit ar re gozh a vez aozet gant ar c'hevread **UDARPA* 29** o teurel evezh eus peseurt rannyezh zo anavezet gant an arvesterien.

Met gant ar c'hevread **C'hoariva** eo ez eus ur preder hollek war an dachenn-se dreist-holl. Ul levrig a zo bet embannet e 2006 da ginnig ur pemzek strollad bennak hag o oberoù. Da-heul eo bet digoret lec'hienn ar c'hevread. Ur garta "Tro Breizh ar C'hoariva" zo bet roet lañs dezhi gant C'hoariva ivez evit skoazellañ an aozerien hag ober evel-se e-doare ma troio muioc'h an abadennoù.

Ur sonerezh breizhek maget gant ar yezh

Gouzout a reer mat o deus ar Vretoned dalc'het gwelloc'h d'o sonerezh hengounel eget d'o yezh. N'eo ket dister pouez ar brezhoneg e sonerezhioù Breizh avat.

E pep korn eus Breizh e vez kavet lazoù-kanañ a gan kantikoù pe kanaouennoù disakr, traoù hengounel peurliesañ ha nevezenti ivez a-wechoù. Kalzik zo e Penn-ar-Bed met un toullad strolladoù a zo en departamantoù all. Gant **Kendalc'h** eo bet krouet ar festival "Breizh a gan" da vrudañ lazoù-kanañ Breizh. A-hend-all, ar c'hevread **Kanomp Breizh** bet krouet e 2004 zo skrivet en e statudoù kas war-raok ar "chant choral Breton". Ur genstrivadeg kan lazoù Breizh a oa bet aozet gantañ da-geñver "Kann al Loar" e Landerne evit ar wech kentañ e 2005. Hervez ar c'hevread-se e vefe pleustret mod pe vod kanaouennoù brezhonek gant an tri c'hard eus lazoù-kanañ Breizh-Izel, ha gant ur 150 bodadenn bennak war Breizh a-bezh.

Evel-just ne vefe ket ken brudet sonerezh Breizh ma ne vije ket bet eus kanerien ha sonerien **ar bloavezhioù 60-70** evit reiñ ul lañs nevez dezhañ (**Glenmor, Alan Stivell, Gilles Servat, Youenn Gwernig**, h.a.). Abaoe ar mare-se ez eus e Breizh arzourien a vesk pinvidigezhioù ar glad ha levezon an hengoun gant stummoù sonerezh all : ar rock (**Alan Stivell, Dan ar Bras, Gilles Servat**), an jazz (**Roland Becker**), ar sonerezh tsigan (**Erik Marchand**), ar "world music" (**Alan Stivell, Wig A Wag**), ar sonerezh elektronek (**Denez Prigent, Pascal Lamour**). Liesliv eo bed ar c'hanaouennoù brezhonek enta.

N'eo ket niverus avat ar re a skriv sonioù nevez e brezhoneg hep en em harpañ mui pe vui war an hengoun. Un nebeud traoù a vez graet evit ar vugale (gant **Brennig ar c'hurnig** da skouer), ha pladennoù kanaouennoù a vremañ distag un tammig eus ar glad a zo bet savet gant tud evel **Nolwenn Korbell, Denez Abernot, Marthe Vassalo, EV, Louis-Jacques Suignard, Gwennyn Louarn, Yann Raoul** ha **Marcel Berrou** (ha pa vefe klevet c'hoazh liv ar sonerezh hengounel war o c'hanaouennoù ur wech an amzer).

Bihanoc'h c'hoazh eo bed ar sonerien distag penn-da-benn diouzh an hengoun a sav pozioù e brezhoneg memes tra : menegiñ a c'heller ar strollad **Tri Bleiz Die** (punk-rock), **Lik ha Lik** (rock-metal), **DJ Blue** (scratch, hip-hop), **Pemp Gweneg** (rap). Kalz re dreut eo ar c'hrouiñ e brezhoneg gant ar stummoù sonerezh a blij ar muiañ d'an dud yaouank neuze. Mantrus eo ar stad-se pa ouzer eo ar sonerezh un doare da gadarnaat karantez ar vrezhonegerien yaouank ouzh o yezh ha, war ar marc'had, da zedennañ gant ar yezh tud n'int ket tomm tamm ebet ouzh danvez Breizh a-hend-all. **M'eo bras a-walc'h perzh ar brezhoneg er sonerezh breizhek e chom strizh-tre e bouez er sonerezh dre-vras.**

Ouzhpenn kudennoù boutin d'an holl sonerien e rank ar vrezhonegerien talañ ouzh diaesterioù dezho o-unan. Start eo d'ar re a glask kas ar yezh war-raok e stummoù nevesañ ar sonerezh a vremañ brudañ o labour. Mankout a ra dezho ul lusk heñvel ouzh an hini a oa er bloavezhioù 70.

Kenstrivadegoù ha leurennoù lañsañ a zo da ijinañ evit broudañ saverien kanaouennoù Breizh da skrivañ e brezhoneg. E-touez ar rummadoù a vez priziet gant "Kan ar Bobl" e kaver unan gouestlet d'ar c'hrouidigezhioù da skouer, hag ur priz "Polig Monjarret" evit ar re dindan 18 vloaz zo bet krouet e 2005. Ar genstrivadeg "Kan an Drask", eus he zu, zo he fal atizañ ar c'hrouiñ evit ar c'han-ha-diskan. Traoù a chom da sevel evit sikour ganedigezh strolladoù nevez : aozañ leurennoù lañsañ evit strolladoù rock e brezhoneg (ar youl-se zo gant an **Taol-Lañs** a oa bet dalc'het evit ar wech kentañ d'geñver **Devezh ar Brezhoneg** 2007), reiñ ur plas da vrudañ ar strolladoù nevesañ war leurennoù gouelioù meur Breizh, h.a. Talvoudegezh ur radio a skignfe e brezhoneg war Breizh a-bezh zo anat war an dachenn-se.

Ul lennegezh etre div amzer ? (gw. ivez p. 100)

Kozh eo al lennegezh vrezhonek. Un hengoun lennegel a zo bet gant ar brezhoneg a-holl-viskoazh met aet e oa war zisteraat pa oa bet dilezet ar yezh gant an dud desket. A-hed an XXvet kantved ez eus bet un adsav war an dachenn-se kaset gant tud a oa ar brezhoneg o yezh vamm. An darn vrasañ eus ar re a skriv e brezhoneg hiziv an deiz zo tud bet desket ar yezh ganto hag a sav o levrioù evit lennerien resis (ar re yaouank, an dud deuet a heuilh kentelioù-noz, h.a.).

Nevezentioù a ya d'ober an darn vrasañ eus al levrioù brezhonek a vez embannet hiziv an deiz. Krouidigezhioù zo eus al levrioù-se peurliesañ war-bouez ar bannoù-treset a zo troidigezhioù dreist-holl. Kentoc'h yac'h eo ar c'hrouiñ levrioù e brezhoneg eta. Met muioc'h eget ul lennegezh "arzel" ez eo ul lennegezh "dudi" a vez savet war-eeun e brezhoneg abaoe un ugent vloaz bennak. Abenn magañ ha pinvidikaat lennegezh vrezhonek an amzer-da-zont eo a bouez bras e vefe troet muioc'h a oberennoù eus al lennegezh etrebroadel.

Hervez an embannerien eo brasoc'h-brasañ an niver a zornskridoù lennegel a vez kaset dezho. Ur seurt birvilh a vefe gant al lennegezh vrezhonek enta. Broudet e vez c'hoazh ar birvilh-mañ gant un nebeud kenstrivadegoù lennegel bet krouet e-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ. Gant **FEA***, da skouer, eo bet ijinet "Priz ar Yaouankiz" da vroudañ skrivagnerien ha danvez skrivagnerien da sevel oberennoù lennegel evit ar re yaouank (ur "Priz ar Vugale" a vo ouzhpenn adalek 2008). Perak ket ijinañ ur genstrivadeg all da vroudañ an treiñ e brezhoneg ?

Gant ar gevredigezh **FEA*** c'hoazh e oa bet aozet ur **staj skrivañ** evit ar wech kentañ e miz Ebrel 2006. Un digarez da vroudañ skrivagnerien da sevel levrioù lennegezh vrezhonek eo. Mat e vefe kinnig ar staj-se adarre.

O youl da harpañ an embann levrioù e brezhoneg zo bet diogelet gant Rannvro Breizh koulz ha gant Departamant Penn-ar-Bed. Gouestlet o deus e vo yalc'hadoù da sikour ar skrivañ hag an treiñ levrioù e brezhoneg, ha kreñvaet e vo ivez ar brudañ hag ar skignañ.

Er fedoù, un heuliad tri devezh stummadur zo bet aozet gant **Kreizenn-rannvro al Levrioù e Breizh** evit oberourien al levrioù e brezhoneg evit ar re yaouank. Kaset eo bet **TES*** war hent al lennegezh e brezhoneg evit ar grennarded; daou gelenner zo bet kefridiet war ar skrivañ evit an dra-se. Met n'eus bet roet yalc'had aratozh ebet da sikour ar skrivañ pe an treiñ evit ar poent. Hag ouzhpenn skoazellañ mont en-dro an tiez-embann eo diaes d'ar strollegezhioù foran kaout un emell fetis war ar skignañ.

Ar seveniñ filmoù e brezhoneg

Ha pa ne vefe ket graet kalz e vez produet traoù e brezhoneg gant ar c'hleweled.

Teulfilmoù eo an darn vrasañ eus ar filmoù savet e brezhoneg. Eus labour **France 3 Ouest** ha **Kalanna Production**¹ eo e teu an darn vrasañ anezho. Ur wech an amzer e vez savet teulfilmoù gant stalioù all evel **Master Production** pe **13 Production**. Un nebeud kevredigezhioù a ya war an dachenn-se ivez. Gant ur pal pedagogel en deus dastumet **Blaz Produktion** testenioù brezhonegerien a-vihanik en e heuliad "A-hed ar c'hantved" da skouer. A-hend-all, e 2006 eo deuet **JPL Films** da vezañ unan eus ar brodrierien bennañ e brezhoneg abaoe ma ra war-dro an abadenn "Mouchig Dall". **Trégor Vidéo** ivez en deus roet ur plas d'ar sevel abadennoù e brezhoneg en he froduadur.

¹ Ar stal broduiñ nemeti arbennikaet war ar sevel teulfilmoù e brezhoneg.

Ral a wech ez eus bet sevenet **filmoù faltazi** e brezhoneg. Filmoù berr hepken a zo bet troet evit ar poent, filmoù skinwel pe filmoù bevaat*. Ur sitkom e brezhoneg anvet "Leurenn BZH" zo bet produet gant **Dizale** ha **Pois Chiche Films** evit **TV Rennes 35**. Skignet eo bet an dek rann anezhañ adalek miz Here 2007. Erfin, menegiñ a c'heller e vez enrollet pezhioù-c'hoari brezhonek ivez (gant France 3 Ouest peurgetket).

N'eo ket bet roet priz ar film e brezhoneg gant Gouel ar Filmoù Douarnenez abaoe 2002 dre ziuver a zanvez (pe dre ziuver a liesseurterd gant ar mammenoù). Mantrus eo e vefe produet ken nebeut a draoù e brezhoneg evel-just. Evit keñveriañ, "Seachd", ar film hir kentañ e skoseg, a oa bet troet e 2006 evit un 60 000 yezher bennak (da lavaret eo ur c'hard eus ar boblañs vrezhonek).

An arzoù neuziañ

Gwall zister e chom plas ar brezhoneg war dachenn an arzoù neuziañ daoust da hiniennoù a gemer ar yezh e kont en o freder arzel hag en o labour kehentiñ. Met ret eo anzav n'eo ket ar yezh, n'eus forzh pe hini e vefe, a vez lakaet war wel da gentañ gant an arzoù neuziañ, alies mat. Kement-se a zo bet graet memes tra gant ar gelaouenn varzhoniezh divyezhek berrbad "An tri zarzh".

Un nebeud kevredigezhioù a glask broudañ an arzourien da gemer o identelezh e kont ha da dalvoudekaat an awen a c'hellont kavout enni. Pal ar gevredigezh **Poellgor an Tarv**, da skouer, eo kas an divyezhegezh war-raok en ur vodañ skrivagnerien, livourien, kizellerien, priourien, h.a. gant ar re o deus c'hoant reiñ skoaz dezho da lakaat o zestenoù en div yezh. Gant ar soñj-se e vez dalc'het "Saloñs Arzoù Breizh" abaoe 1997 : diskouezet e vez eno oberennoù arz gant testennoù barzhoniel divyezhek d'ho heul. Roet e vez ar priz "Harmonie" en degouezh-se.

Implij ha plas ar brezhoneg er pleustrerezh sevenadurel

Diskouezadegoù

Gant **Mirdi Breizh** e oa bet aozet diskouezadegoù bale gant pannelloù troet e brezhoneg. Ha n'eus nemet er mirdi-se eo **divyezhek** un darn eus an diskouezadeg pad.

Diwar youl **Kumuniezh Tolpad-kêrioù Bro an Orient** e vez roet ur plas arouezel d'ar brezhoneg e aveadurioù dudi foran* ar vro a vez meret gant ar c'hevredad **Sellor**. Anvioù brezhonek loened zo a vez lakaet war wel en **Océanopolis** pe e **Akwariom Tregastell** a-hend-all (en akwariom-mañ ez eus ivez ur bonn etreoberiat* a zispleg anadenn ar mareoù e brezhoneg peurgetket).

Pa vez implijet klevheñcherioù eo mat soñjal lakaat ar brezhoneg e-touez yezhoù all. Graet eo bet c'hoazh gant **Mirdi Kastell Duged Breizh** digoret e deroù 2007 e Naoned. Neoazh, ar brezhoneg eo ar yezh nemeti ezvezant eus bonnoù liesvedia ar mirdi.

Stankoc'h eo al lec'hioù ma c'heller bezañ degemeret e brezhoneg. **Gweladennoù** a vez kinniget peurliesañ (ha gweladennoù kêr ivez, e Montroulez, Brest pe Konk-Kerne peurgetket). **Abadennoù pleustriñ** zo a-wechoù pe c'hoazh **stajoù dizoleiñ**. Klok hag aes d'ober ganti eo an "Diaz titouroù" a gaver war lec'hienn an **UBAPAR***, kelaouiñ a ra diwar-benn an holl weladennoù a c'heller ober e brezhoneg. Daoust da dalvoudegezh seurt gweladennoù a ro tro, ouzhpenn-se, da vugale ar skolioù divyezhek da glevet e vez graet gant ar yezh e-maez ar skol e chom bihan an niver a skolioù a ya di e gwirionez. Liammet eo ouzh kudennoù arc'hant a-wechoù moarvat ; mat e vefe ijinañ yalc'hadoù miret strizh evit seurt darvoudoù.

A-wechoù e vez embannet **dielloù e brezhoneg** gant al lec'hioù diskouez-se. Graet eo bet evit katalogoù diskouezadegoù zo gant **Mirdi Breizh** e Roazhon c'hoazh, gant **Mirdi an Arzoù-kaer** e Roazhon, gant **Abati Daoulaz**, pe gant **Ti an Douristed** e Roazhon. Ur c'hatalog teiryezhek (sinaeg, galleg ha brezhoneg) a oa bet embannet gant **Ajañs Sevenadurel Breizh** da-geñver an diskouezadeg "Breizh : douar al livourien" bet savet ganti e proviñs Shandong e Sina e 2005. Fichennoù pedagogel e brezhoneg a zo bet implijet gant **Akwariom Tregastell** e 1998 a-hend-all. Ur sturlevr a vez kinniget ivez d'ar vrezhonegerien e **Mirdi Kastell Duged Breizh**.

Neoazh, merzout a reer e chom ezvezant ar brezhoneg eus lec'hioù m'en defe abeg da vezañ. Sebezus eo, da skouer, ne vefe plas ebet roet d'ar brezhoneg e Maner Kernault ; n'eus plas d'ar yezh nag en abadennoù, nag er panellerezh el lec'h-se ma vez aozet diskouezadegoù bale hag abadennoù a denn d'ar c'homz koulskoude.

Festivalioù ha saloñsoù

Un nebeud degouezhioù a denn d'ar brezhoneg endeeun. Klask a ra "Devezh ar Brezhoneg" e Karaez, bodañ an holl dud a venn kas ar yezh war-raok. Gouelioù all da lidañ ar brezhoneg zo bet dalc'het eus ar Baol-Skoubleg da bPlougonvelen etre 2004 ha 2006. Strishoc'h eo abeg degouezhioù zo, pe hervez oad ar berzhidi (gouelioù e brezhoneg a vez aozet evit ar vugale), pe diouzh an danvez (festivalioù c'hoariva brezhonek a zo dreist-holl, gw. p. 90; met gellout a reer menegiñ ivez "Kampionad ar Bed ar Pouilhoù Brezhoneg", pe c'hoazh "Saloñs al levrioù e brezhoneg").

E programm gouelioù sevenadurel zo e vez lakaet obererezhioù e brezhoneg a-wechoù : pezhioù-c'hoari e brezhoneg pe stajoù yezh. Met ral eo kavout ur saloñs pe ur gouel ma vefe dalc'het divizoù pe prezegennoù e brezhoneg nemet e vefe ar yezh abeg pennañ an darvoud e-unan. Dafar jubenniñ prim a vez prestet evit netra gant Ofis ar Brezhoneg a-benn ma c'hellfe darvoudoù zo bezañ dalc'het e brezhoneg ha pa vefe tud ne ouzont ket ar yezh e-touez an arvesterien koulskoude. Prezegennoù e brezhoneg a vez dalc'het evel-se bep bloaz da-geñver "Skol-veur Yaouankiz Breizh". Un diviz "kafe-filo" a vez aozet da-geñver ar festival **Taol Kurun** pe **Saloñs Levrioù Gwenrann** (heuliet eo bet ar skouer-se gant Sked ivez).

Kalz aliesoc'h e vez roet ur plas, bras pe vrasoc'h, d'ar brezhoneg e displegadennoù an darvoudoù, er plegfollennoù, ha dreist-holl dre ar panellerezh divyezhek.

Ur plas arouezel a vez roet d'ar yezh en ur bern gouelioù folklorel a-hend-all; met mantrus eo e chom distriv c'hoazh degouezhioù sevenadurel meur eus Breizh da-geñver ar brezhoneg. Ezvezant pe dost eo eus ar "Fête internationale de la mer et des marins" e Brest, pe "Gouel ar Bigi" Douarnenez da skouer, p'en defe da gaout e blas enno (sinet ez eus bet ur c'henemglev gant Ofis ar Brezhoneg evit dalc'h 2008 gouel Vrest memes tra). E-giz ma ra evit an endro, ar Rannvro a c'hellfe goulenn e vefe graet traoù evit ar yezh gant ar festivalioù arc'hantaouet ganti.

En "enklask diwar-benn implij ar brezhoneg e kumunioù Breizh" bet kaset da benn gant Arsella ar brezhoneg e 2003, tost an teir fempvedenn eus an tiez-kêr o doa embannet e oant prest da gas implij ar brezhoneg war-raok war ar pemdez (da lavaret eo 85 kumun) o doa disklêriet bezañ dedennet evit lakaat war-sav abadennoù sevenadurel e brezhoneg. Degouezhioù da lakaat ar brezhoneg war wel ha da dalvoudekaat anezhañ a vefe tu da ziorren neuze.

Festoù-noz

Birvilh ar **festoù-noz** a zo unan eus arouezioù kreñvañ bividigezh ar sonerezh breizhek diazezet war an hengoun moarvat. Alies e vez klevet brezhoneg war al leurenn en abadennoù-se (dre ar c'han-ha-diskan peurgetket) met muioc'h-mui e c'hoarvez ne vefe ket kanet e brezhoneg er festoù-noz, siwazh... Unan eus al lec'hioù

aesañ da glevet tud er sal oc'h ober gant ar brezhoneg eo koulskoude.

Un digarez da lakaat panelloù divyezhek e vez alies a-walc'h ouzhpenn-se, en degouezhioù brasañ peurgetket.

Pouezus eo an abadennoù-se evit ar yezh, met ken pouezus all eo ar yezh evit ar festoù-noz. **Un touell eo soñjal e c'hell ur yezh chom bev ma ne vez graet nemet un implij sevenadurel-rik outi.** Kaer en deus Kreiz-Breizh

bezañ bro ar c'han-ha-diskan, nebeutoc'h-nebeutañ e vez graet gant an hengoun-se du-hont. Splann eo n'haller ket kanañ mat pozioù na gompren ket. **Ma c'hoarvezfe d'ar brezhoneg mont da get ez afe ar festoù-noz d'ar strad ivez, hag e-se e kollfe Breizh un tamm mat eus he identelezh hag eus he dedenn touristel.**

Beilhadegoù

Stank e vez aozet beilhadegoù (pe abadennoù all) e Breizh-lzel evit diduañ ar vrezhonegerien. Kevredigezhioù lec'hel a ra war-dro seurt abadennoù a zo danvezioù lies dezho : kaozeadennoù, predoù, prezegennoù, abadennoù liesseurt (c'hoariva, kan, marvailhoù). Skourroù zo eus **Dastum** zo oberiant-tre war an dachenn-se ha strolladoù arbennik zo anezho ivez evit luskañ seurt abadennoù evel **Strollad Beilhadegoù-Treger**.

Degouezh ar "Beilhadegoù kontet e Breizh" a oa bet aozet evit ar wech kentañ e 2005 gant **Skol-Uhel ar Vro**. Abadennoù marvailhoù dalc'het e galleg, brezhoneg pe gallaoueg a vez kinniget en un tregont kumun bennak e Breizh a-bezh d'an degouezh-se. N'eus nemet ur pemzek brezhoneger bennak e-touez an 200 marvailher renablet e Breizh gant Skol-Uhel ar Vro.

Pal ar beilhadegoù dre-vras zo bodañ brezhonegerien a-vihanik gant tud a zo o teskiñ ar yezh, dezho da eskemm war danvezioù lies-tre. En doare-se e vez pinvidikaet yezh an eil gant skiant egile (ereadurezh ar re goshañ, geriaoueg ar re yaouankañ, h.a.). Un digarez da adstagañ gant ar brezhoneg etre ar remziadoù ha da solutaat anezhañ e meur a geñver eo ar beilhadegoù-se neuze.



Klozadur darnel

Anavezet mat eo pouez ar brezhoneg e buhez sevenadurel ar vro a-bezh. Bras-tre eo perzh ar yezh er sonerezh breizhek peurgetket; deuet eo ar sonerezh-se da vezañ tra boutin an holl Vretoned abaoe ar bloavezhioù 60, met stag-tre eo chomet ouzh danvez Breizh. A-benn ma vefe dedennet rummadoù tud liesseurtoc'h gant ar yezh e vefe ret dezhi intrañ muioùc'h sonerezhioù lies Breizh.

N'eo ket ken kreñv implij ar brezhoneg en doareoù arz all met traoù bras pe vrasoc'h a vez graet en holl veteier-se memes tra. Mankoù a verzer evel-just, war dachenn an treiñ levrioù estren e brezhoneg da skouer. Dre-vras e verzer war meur a dachenn penaos eo

diaes d'an oberourien pe d'ar skignerien degemer ar soñj e c'hell ar yezh bezañ implijet eviti he-unan hep na vefe graet dave da zanvez Breizh a-hend-all.

En em gavout a ra an obererien sevenadurel a glask ober gant ar brezhoneg dirak kudenn ar skignañ hag ar brudañ. Alies ne gavont ket e diabarzh o framm ar barregezhioù ret evit diorren implij ar yezh ouzhpenn-se. Skoazellet e c'hellont bezañ gant Ofis ar Brezhoneg a-benn ma fonnusafe an doare strivoù-se. Donaat ha sistematekaat implij an divyezhegezh e buhez sevenadurel ar vro zo unan eus ar palioù diorren pouezusañ zo da vezañ tizhet er bloavezhioù da zont.

Ur yezh da gaout dudi

Dudi evit ar vugale hag ar grennarded

Ar c'hinnig dudi e brezhoneg evit ar vugale e-kerzh ar bloavezh-skol 2005/2006 hag an hañvezh 2006

E norzh Penn-ar-Bed hag e kornôg Aodoù-an-Arvor emañ an darn vrasañ eus ar c'hreizennoù a ginnig dudi e brezhoneg d'an dud yaouank ingal. Souezhus eo gwelet pegen nebeut a draoù a zo e su Penn-ar-Bed hag er Mor-Bihan a-bezh.

Kreizennoù-dudi

Pouezus-meurbet eo e c'hellfe ar vrezhonegerien yaouank kavout dudi e brezhoneg. Ur skouer eo **An Oaled** eus ar pezh a c'hell bezañ graet war an dachenn-se. Ur **greizenn-dizoleiñ** eo evit ar c'hlasoù divyezhek a-hed ar bloavezh-skol, koulz hag ur **greizenn-vakañsiñ** e-kerzh an hañv. E Treglonoù emañ al lec'hienn greiz, met traoù a vez aozet e lec'hioù all ivez : Landelo, Tremargad, h.a.

N'eus nemet An Oaled o kinnig kement a chomadenoù liesseurt-tre o danvezioù gant un degemer klok. An tuadur da sevel kampoù vakañsiñ e brezhoneg en em astenn e lec'hioù all tamm-ha-tamm memes tra, er bloavezhioù diwezhañ-mañ peurgetket. Abaoe 2004 ec'h aoz ar **COCOPAQ*** ur c'hamp da surfiñ ha da sevel filmoù e Kloar-Karnoed; ar wech kentañ eo e vefe kinniget ur greizenn-vakañsiñ e brezhoneg gant ur strollegezh foran. War ziorren ez a an traoù e kornôg Aodoù-an-Arvor a-drugarez da **dTi ar C'hoadoù** peurgetket. En hañv 2006 eo aet an traoù war-raok er Mor-Bihan ivez gant digoradur ur greizenn-vakañsiñ e brezhoneg e Sant-Visant-an-Oud e bro Redon hag ur chomadenn er Gerveur aozet gant An Oaled.



17 kamp vakañsiñ e brezhoneg evit ar yaouankiz a oa bet dalc'het e-kerzh an hañv 2006 (6 kamp evit ar grennarded en o zouez) met 25 a vefe bet tu da aozañ ma vefe bet trawalc'h a dud stummet gant an DARE* e brezhoneg, hervez an UBAPAR* (gw. ar pennad stern amañ dindan). **354 bugel** a oa bet degemeret er c'hreizennoù-vakañsiñ e-pad hañvezh 2006, da lavaret eo 5,6% hepken eus ar skolidi etre 6 ha 17 vloaz enskrivet en un hentad divyezhek d'an distro-skol 2006. Evit keñveriañ, da ouzhpenn 12% e save ar feur-se e Frañs d'ar memes koulz.

Aozadurioù all a ginnig oberoù e brezhoneg da Verc'her, da Sadorn pe a-hed ar vakañoù bihan; **kreizennoù-dudi hep herberc'h** int. Tachennoù damheñvel ouzh re An Oaled a vez dizoloet ganto. Frammoù emren zo evel **Dizolo** e Roazhon pe **Dudi** e Sant-Brieg. Evit diazezañ abadennoù troskol* eo aet ar c'hevread **KLT*** eus Montroulez da genlabourat gant frammoù arbennik lec'hel. Kreizennoù all stag ouzh ur skol a c'hell kinnig

traoù ivez : ur greizenn-dudi digor da vugale an holl skolioù divyezhek a vez dalc'het gant **Diwan Roazhon** (ar memes tra a oa e **Naoned** betek miz Gwengolo 2005). Mantrus eo e vefe lakaet obererezh ar greizenn-mañ en arvar gant CAF* Il-ha-Gwilen evit an distro-skol 2007 gant an arguzenn ne vefe ket digor ar greizenn da holl familhoù ar c'harter dre ma ya en-dro e brezhoneg.

Kreizennoù-dudi hep herberc'h a ginnig un degemer da vare vakañsoù bihan zo a gaver e lec'hioù zo. Ur sizhunvezh staj war ar c'han hag ar c'hoariva a oa bet dalc'het er greizenn **Amzer Nevez** e Plañvour da vare vakañsoù Pask 2005 da skouer. Evit ar pezh a sell ouzh an aozadurioù foran e c'heller menegiñ **kreizenn-dudi Ti an Holl Landerne** a ginnig obererezhioù e brezhoneg da-geñver vakañsoù zo.

C'hoari pe dañsal a c'hell bezañ un digarez d'ober **un tañva d'ar yezh** evit bugale n'int ket skoliataet en un hentad divyezhek a-hend-all. Gant Kelc'h Keltiek Krac'h **Yaouankiz ar Stêr** e vez aozet stalioù pleustriñ seurt-se.

Stagadenn d'ar gevrat steuñv Stad-Rannvro 2000/2006 war an divyezhegezh

Er stagadenn-se (bet sinet e 2002) e oa bet divizet reiñ harp da ziorren an oberoù e brezhoneg e diavaez ar skolioù. 1 600 714 euro zo bet gouestlet d'ar pal-se evit ar prantad 2002/2006. Maget e oa ar budjed gant ar Rannvro hag an departamantoù.

Ouzhpenn skoazellañ ar c'hevredigezhioù da greñvaat ha da binvidikaat ar c'hinnig he deus roet ar stagadenn-se tro da reiñ lañs d'ur stummadur e brezhoneg war ar buheziñ. Evel-se eo bet savet ar stajoù evit an DABU* hag an DARE* gant an **UBAPAR***. Panevet un DABU* en okitaneg n'eus stummadur all ebet a vefe par ouzh ar rese evit yezhoù bihanniver all Frañs evit poent.

Er fedoù, ez eus bet stummet ur c'hant buhezour bennak etre miz C'hwevrer 2002 ha miz Meurzh 2006, koulz ha seizh danvez rener e miz Gouere 2005. Gant an UBAPAR* e oa bet embannet "Levrig ar buhezour" e 2004 ivez; "Levrig an aozer" a zlefe dont er-maez ac'hann da fin 2007. Ouzhpenn-se ez eus bet embannet ganti plegfollennoù diwar-benn an dudi e yezhoù Breizh; un diaz titouroù war an danvez-se zo enlinenn ivez. Ur bazenn vras war-raok zo bet graet e miz Meurzh 2006 pa'z eus bet enfredet ur vrezhoneger e UBAPAR* da genurzhiañ diorren an dudi e yezhoù Breizh.

Ul lec'hienn a-ratozh zo bet savet da gas danvez d'ar gasourien ha d'ar vuhezourien a-hend-all. Ur forum anvet **A-du di!** zo bet krouet ivez d'ar vuhezourien ha d'ar renerien da eskemmañ o skiant-prenet.

Ur **rouedad kreizennoù Dudi** a yae en-dro e Breizh e deroù ar bloavezhioù 90, met aet e oa da get dre ziouer a vuhezourien hag a renerien. Gant diorren ar skolioù divyezhek eo aet ar goulenn war vrasaat c'hoazh abaoe. Dre ma'z eus eus an DABU* hag an DARE* bremañ, an

dalc'h evit stankaat rouedad ar c'hreizennoù-vakañsiñ hag ar c'hreizennoù-dudi a vo gant an tuta danvez buhezourien ha renerien dreist-holl. Un doare da vroudañ muioc'h ar vrezhonegerien yaouank da zont war an dachenn-se zo ret kavout enta.

Diduamantoù a denn d'ar glad

Un nebeud diskouezvaoù a ginnig abadennoù ha gweladennoù e brezhoneg d'ar vugale. Graet e vez war an amzer skol peurliesañ, gwir eo, met un digarez eus ar re wellañ eo evit ar re yaouank da welet ez eus brezhoneg en diavaez eus ar skol.

Ar glad sevenadurel eo zo diskouezet gant **Mirdi Breizh** e Roazhon, **Mirdi ar Vezhinaerien** e Plougerne, **Mirdi ar Paludoù-holen** e Bourc'h-Baz, **Ekomirdi Sant-Degan** e Brec'h, pe c'hoazh **Skolig al Louarn** e Plouvien. Glad an natur hag an endro a vez lakaet da dalvezout gant **Ti ar C'hoadoù** er Chapel-Nevez, **Greoù Broadel** an Henbont, **Mirdi ar Bleiz** er C'hloastr-Plourin, **Skol ar C'hleuzioù** e Pouldouran, skourr **Eau et Rivière de Bretagne** en Oriant, **Addes** er Menez Are pe c'hoazh gant tiez-feurm pedagogel zo. War dachenn ar sevenadur skiantel, n'eus nemet **Kreizenn ar Son** e Kawan a ginnig ur wenodenn dizoleiñ divyezhek evit ar poent.

Gweladennoù e brezhoneg a c'hell bezañ kinniget (ma vez goulennet) gant aozadurioù eus an diavaez pa ne vez den ampart ebet d'en ober e diabarzh un diskouezva.

Arzoù ha sportoù

Stalioù pleustriñ war an arzoù a vez kinniget e brezhoneg e lec'hioù zo met liammet e vez an danvez gant ar yezh peurliesañ. Stalioù pe stajoù c'hoariva a vez aozet gant strolladoù zo pe kevredigezhioù. Kanañ e brezhoneg a vez desket d'ar vugale ivez. Ur staj e brezhoneg war an telennañ zo bet dalc'het e Plouneour-Menez gant ar gevredigezh **Hent Telenn Breizh** e 2006.

N'eus stal reoliek ebet war un danvez arzel distag diouzh ar yezh avat (tresañ, kizellañ, seniñ). Un diouer zo war an dachenn-se e gwirionez; n'eus nemet ar gevredigezh **Miks Diviks** he deus savet stajoù e brezhoneg war danvezioù diouzh doareoù ar grennarded evit ar poent : hip-hop, tekno, ska, rock, graf (met siwazh e seblant kousket ar gevredigezh-se evit ar poent). **Eus ar pep pouezusañ eo avat e c'hellfe ar re yaouank pleustriñ an oberoù a blij dezho ar muiañ en ur implijout o yezh.**

Kement all a c'heller lavaret eus tachenn ar sportoù. War-bouez ur bodad "mell-droad" hag un tournamant tennis-taol bloaziek bet krouet gant **Kentelioù an Noz**, n'eus nemet gant sportoù hengounel e vez kavet tro da bleustriñ e brezhoneg ha c'hoazh e chom treut-kenañ ar c'hinnig-se. Ma lezer a-gostez an implij eus gerioù brezhoneg er c'hoari e-unan, n'eus nemet e **Ti ar Gouren** e Berrien e veze dalc'het abadennoù gouren e brezhoneg met n'eus ket ken diouto abaoe 2004. 45 fichenn bedagogel e brezhoneg zo bet embannet gant ar **FALSAB*** (kengevredigezh poellgerioù ar c'hoarioù hag ar sportoù hengounel) evit ar skolioù kentañ derez hag eil derez.

Mantrus eo e vefe ken goulo tachenn pleustr ar sportoù e brezhoneg pa ouzer pegen bras e c'hell bezañ plas ar sport e buhez ar re yaouank. Un dra vat e vefe e kasfe un aozadur evel an UBAPAR* an traoù war-raok war an dachenn-se. Da gentañ e vefe ret diorren ur c'hinnig evit ar sportoù poblekañ : mell-droad, judo, jiminas, pe c'hoazh kiaiak ha sportoù-mor. Tu a vefe da ginnig oberiantizoù e brezhoneg a-hed ar bloaz dre genemglev etre meur a gumun : bro Vrest, bro An Oriant ha bro Kêr-Wened a vefe lec'hioù a-feson d'ober taolioù-esae.

Gouelioù hag abadennoù all

Ur wech an amzer e vez aozet **gouelioù** a-ratozh evit ar vugale a gomz brezhoneg ("Gouel Yaouankiz", "Gouel Rouzig", "Gouel Louarnig", "Peskiq Ebrel", "Pardon ar Vugale", "Tro Heol", "Gouel ar Vugale", "Bugaleaj e brezhoneg").

Kenstrivadegoù a vez aozet evit ar vrezhonegerien yaouank ivez (evel "Lavar ar Vro", "An Arvoriadoù", "An Eog", "Devezh ar Park").

Evel-just eo pouezus evit ar sell o deus ar vugale war ar yezh e vefe roet dezho tro da **arvestiñ ouzh abadennoù** e brezhoneg. Kevredigezhioù lec'hel a aoz seurt traoù a-wechoù (**Sten Kidna** en deus graet war-dro abardaevezhioù kontadennoù ha lennadennoù e brezhoneg da skouer) met stankoc'h e kenaozont abadennoù gant sikour kevredigezhioù a vent rannvroel evit kinnig filmoù bevaat* pe c'hoariva.

Klozadur darnel

Oberoù dudi a vez kinniget e brezhoneg d'ar re yaouank e lec'h pe lec'h. Met kerse eo gwelet ne vez ket bastet d'an holl ezhommoù, pell alese. Pouezus-kenañ eo reiñ tro d'ar re yaouank d'ober gant ar brezhoneg e degouezhioù a seurt-se koulskoude. E gwirionez, ma n'o devez ar vugale un darempred gant ar yezh nemet er skol e vo diaesoc'h dezho ober un implij sokial eus ar yezh en ur mod naturel da c'houde.

Un toullad broioù zo ma vank ur c'hinnig dereat enno daoust m'eo diorroet mat ar skolioù divyezhek enno

(bro Kêr-Wened, bro an Oriant, bro Treger-ha-Goueloù pe bro Vontroulez da skouer); splann eo koulskoude e vefe peadra da sevel raktresoù dudi a-hed ar bloaz er broioù-se.

A-hend-all, n'eo ket liesseurt a-walc'h an oberoù dudi e brezhoneg. N'eus kinnig reoliek ebet a bled gant un arz pe gant ur sport bennak hep liamm ebet gant glad ar vro ha n'eus, koulz lavaret, netra a vefe diouzh c'hoantoù ar grennarded.

Dudi evit an oadourien

Diduamantoù a denn d'ar glad

An darn vrasañ eus ar beilhadegoù a sell ouzh ar glad sevenadurel pe ouzh istor ar vro. Pourmenadennoù ha baleadennoù a vez aozet ur wech an amzer e lec'hioù zo ivez ; troet int war an dizoleiñ pinvidigezhioù an natur ha glad ar vro. Troiadoù aveliñ a seurt-se a vez aozet gant kevredigezhioù oberiant a-hend-all daoust ma c'hoarvez e vefe krouet kevredigezhioù gant ar pal-se hepken (**Dait tre** e Banaleg da skouer). Devezhioù dizoleiñ Bro-Leon e brezhoneg war droad, en tren ha war vag a vez aozet e Montroulez gant **KLT*** e kenlabour gant ar gevredigezh **A fer et à flots**.

Gweladennoù e brezhoneg a vez kinniget a-wechoù e mirdioù pe e kêrioù zo (gw. p. 92).

Stajoù e brezhoneg a vez aozet war danvez ar glad hag an natur gant kevredigezhioù kentelioù noz a-wechoù : da skouer, chanterioù ekologel a vez savet gant **Skol an**

Amzer da Zont e Ploue. Kement-se a vez graet gant diskouezvaoù ivez : **Ti ar gwanan hag ar merien** er Faoued, ha **Ti ar C'hoadoù** er Chapel-Nevez.

Stalioù pleustriñ war danvezioù e-leizh

An darn vrasañ eus ar stalioù pleustriñ a vez kinniget d'an dud deuet a bled gant un danvez liammet ouzh glad ar vro e mod pe vod. Pleustriñ war ar c'hoariva pe ar c'han a c'heller ober peurliesañ ; raloc'h e vez kavet tro da zeskiñ dañsa, kanañ pe seniñ e brezhoneg. Merzet eo bet an hevelep tra evit ar pezh a sell ouzh ar vugale, met brasoc'h e seblant bezañ ar striv da ginnig oberoù "boutinoc'h" d'an oadourien.

Oberoù distag eus ar glad hag eus ar yezh hec'h-unan a vez kinniget d'an oadourien e lec'hioù zo neuze. Emañ ar gevredigezh **Kentelioù an Noz** e Naoned e penn a-raok an dachenn-se. Gant **Dizolo** e Roazhon, pe **Sten Kidna** en Alre e vez aozet stalioù lies o danvez. Keginañ pe liorzhañ

e brezhoneg a c'heller ober e Kerne izel gant **Mervent** a-hend-all. Nebeut a frammoù all a ya war an hent-se evit ar poent siwazh; ha raloc'h c'hoazh eo e vefe kinniget stalioù-labour e brezhoneg gant ur framm n'eo ket eus metoù ar buheziñ sokiosevenadurel (ar gevredigezh **STUR** a ginnig kentelioù urzhiataerezh avat).

Klozadur darnel

Un tammig muioc'h a zigarezioù zo gant an dud deuet da gaout dudi e brezhoneg. Gant emglevioù-bro ha gant kevredigezhioù kentelioù noz dreist-holl e vez kinniget dudi d'an oadourien. An dra-se a dalvez eo liammet ar c'hinnig-se gant ar preder deskiñ (pe peurzeskiñ) ar yezh d'an dud ha neket gant ar youl da respont da c'hoant dudi ur gumuniezh vrezhonegerien kement-se. Neoazh, war ar youl da ziorren obererezhioù liesseurt (dudi, prezegenoù, h.a.) e Breizh a-bezh eo diazezet ar **Gevredigezh Vrezhon** nevez krouet.

Ouzhpenn ar beilhadegoù e vez kavet oberoù pe abadennoù dudi liammet strizh gant ar yezh ha/pe gant glad ar vro. Tachennoù all a c'hellfe ober gant ar brezhoneg avat (keginañ, liorzhañ, seniñ, pleustriñ sportoù, h.a.); pouezus e vefe ledañ seurt kinnigoù e Breizh a-bezh.

Traoù zo a vez skignet war ur skeul vrasoc'h eget ar c'hornioù-bro. Troiadoù c'hoariva zo abaoe pell evel-just, met koulzadoù bannañ filmoù a vez aozet ivez (teulfilmoù pe filmoù faltazi evel "Marion ar Faoued"). A-hend-all, ur "Skrivadenn" e brezhoneg a vez dalc'het war un dro e muioc'h-mui a gêrioù.

Bed ar Sport

Diouzh un enklask bet kaset gant Ministrerezh ar Sportoù e 2000, nav faotr diwar dek hag eizh plac'h diwar dek er rummad 15/24 bloaz a bleustre embregerezh korf pe sport e Frañs. D'ar c'houlz-se e oa rannvro Breizh e penn ar jeu evit feur an aotreegidi* er boblañs. Gwelet a reer mat pegen bras eo an dachenn-se neuze. Un nebeud traoù zo bet graet da reiñ plas d'ar brezhoneg e metoù ar sport - ouzhpenn e implij hengounel e pleustr ar gouren, met dister a-walc'h int chomet. Unan eus an doareoù gwellañ da lakaat ar yezh war wel eo koulskoude; e-se, strivañ muioc'h da ziorren ar c'hinnig a rankfe bezañ graet.

Ar c'hrogadoù aozet gant **Kentelioù an Noz** (tennis-taol, mell-droad) zo ur skouer a-zoare. Un darempred nevez gant ar yezh a vez krouet aze estreget kinnig un obererezh ouzhpenn e brezhoneg. Mat-kenañ e vefe diazezañ kluboù sport e brezhoneg e kêrioù all hag aozañ etrezo krogadoù digor d'an dud.

Gant ar gevredigezh **La Transléonarde** (a aoz ur redadeg a-dreuz Bro-Leon) e vez graet strivoù evit ober gant ar brezhoneg. Breutadegoù e brezhoneg etre sportourien a vez aozet gant ar gevredigezh ivez. Un darvoud all eo ar **Randorade** a vesk ar bale gant yezh ha sevenadur Breizh. Ul levr heñchañ divyezhek a vez embannet bep bloaz d'an degouezh-se.

Kampionad bed ar marc'h-houarn war hent a oa e Ploue e 2000. Ur panellerezh teiryezhek klok (brezhoneg, saozneg, galleg) a oa war al lec'h hag implijet e oa bet ar

brezhoneg evit kemennadennoù ha displegadenoù zo. Displegadenoù divyezhek a oa bet ivez da vare tennad **Tro Frañs** 2004 eus Sant-Brieg da Gemper. Mat e vefe da seurt traoù bezañ graet seul taol ma tremen Tro Frañs e Breizh. Evit ma vefe ur panellerezh ha kemennadennoù divyezhek da-geñver an tennadoù-se e vefe ret sevel ur c'henemglev par d'an hini zo bet sinet e 2006 etre Tro Frañs hag **Ofis Publik an Euskareg**. Gallout a ra ar Rannvro en goulenn digant aozerien an doare darvoudoù sport-se.

Ar c'humunioù hag ar c'humuniezhoù kumunioù an hini zo e karg eus sevel, terkañ ha merañ an **aveadurioù sport foran***; dezho da soñjal e c'hellont ledañ o folitikerezh yezh d'ar poent-se. Rouez-tre eo an aveadurioù* sport divyezhek e gwirionez, n'eus nemet stad ha poull-neuial an Oriant, pe c'hoazh poull-neuial Gwengamp zo staliet panneloù divyezhek enno. E Karaez e kaver muioc'h a lec'hioù d'ober sport en un en-dro divyezhek : Plijadour, ar greizenn varc'hegezh hag an dachenn golf. Un **aveadur prevez** eo ar golf-se, bruderezh divyezhek zo bet skignet gantañ hag ambrouget eo bet gant Ofis ar Brezhoneg evit aozañ e banelloù divyezhek.

Evit ar pezh a denn d'ar c'hazetennoù, ur pennad divyezhek a oa e pep niverenn eus ar gelaouenn **Sport Breizh**. Abadennoù sport zo bet displeget e brezhoneg er skinwel : un nebeud krogadoù mell-droad war TV Breizh gwechall ha redadeg war varc'h-houarn Tro Bro Leon 2007 war lec'hienn Genrouedad France 3 Ouest.

Buhez speredel

Implij ar brezhoneg en iliz

Ober an eskoptioù evit ar brezhoneg

Pemp eskopti a glot o bevennoù gant re an departamantoù zo e Breizh hiziv an deiz. Pep hini eus eskoptioù kornôg Breizh zo bet savet gantañ ur bodad a bled gant ar brezhoneg : bodad "Yezh ha sevenadur Breizh" eskopti Kemper ha Leon, kuzul "Feiz ha sevenadur Breizh" eskopti Sant-Brieg ha Landreger, met gant Eskob Gwened eo e oa bet embannet an atiz splannañ, pa oa bet skignet ul lizher-eskob, e dilt "Un nevez-amzer evit sevenadur Breizh : un dae evit an Iliz" e 2003. An teul divyezhek-se a vroud holl servijoù an Iliz da vezañ "war evezh evit reiñ d'ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh ar plas zo da vezañ roet dezho el lidoù". Broudet eo "Bodad-labour an Eskopti evit ur Bastorelezh e Brezhoneg" da gendelc'her da strivañ war dachenn al liderezh hag ar c'hatekiz (ur post-labour zo bet krouet da labourat war an tachennoù-se peurgetket). Met estreget an dra-se, hag en tu all d'un atiz arouezel a-bouez-kenañ, n'eus ket bet tapet kalz a zivizoù pleustrek a ya a-du gant ar brezhoneg.

Dreist-holl eo nec'hus merzout n'eus stummadur ebet war ar brezhoneg e kloerdioù eskoptioù Breizh. Koulskoude ne vefe ket diaes kinnig da nebeutañ un tañva d'ar brezhoneg eno. Met n'eo ket harpet ar mennozh-se daoust d'ar youl embannet a sav a-du gant ar brezhoneg. Hiziv an deiz, n'eus nemet pevar beleg dindan 50 vloaz e Breizh a-bezh a oar brezhoneg. Gant sifroù evel-se eo splann emañ teñval amzer-da-zont al liderezh brezhonek ma ne vez ket divizet stummañ ar gloer war ar brezhoneg.

Labour ar bed kevredigezhel evit kas ar brezhoneg war-raok

E metoù ar relijionoù ivez e vez kaset ar brezhoneg war-raok gant strivoù kevredigezhioù pe kumuniezhioù damheñvel.

Gant ar gevredigezh **Emglev an Tiegezhioù** e vez aozet kampoù katekiz da skouer. Ar gelaouenn "Imbourc'h" a bled gant prederouriezh, doueoniezh, h.a. a vez embannet ganti ivez.

Un ti-embann eo ar gevredigezh **Minihi Levenez** koulz hag ur gumuniezh prederiañ ha pediñ e brezhoneg.

Palioù heñvel zo gant ar gevredigezh **Santez Anna Gwened** en eskopti Gwened : kas war-raok al liderezh e brezhoneg. Ganti ez eus bet embannet teulioù hag un devezh stummadur war al liderezh e brezhoneg a vez aozet ganti bep bloaz.

Adsavet eo bet kendalc'h ar **Bleun-Brug** e 2005 evit lidañ kantved krouidigezh ar gevredigezh e Sant-Nouga. Difenn ar yezh hag ar feiz eo pal ar Bleun-Brug met un ugent vloaz bennak zo ne gase ket en-dro obererezhioù ken.

Tiegezh Santez Anna zo ur gumuniezh feizidi katolik a bled gant yezh ha sevenadur Breizh ha ganti e vez aozet devezhioù eskemm ha pediñ e brezhoneg.

Oferennoù

Pep a stumm brezhonek levr an oferenn o deus eskoptioù kornôg Breizh. Gant ur bodad labour etre-eskopti skoazellet gant Ofis ar Brezhoneg eo bet azasaet e brezhoneg peurunvan "**Ordinal an oferenn**"* (da vezañ aotreet gant ar Vatikan a c'houlenn e vefe un destenn unvan evit pep yezh).

War-bouez Roazhon, n'eus nemet e Breizh-lzel e vez lidet oferenoù e brezhoneg ur wech an amzer. Un darn vat eus an ofisoù-se a vez dalc'het da vare an hañv a-drugarez d'ar pardonioù niverus ha d'ar gouelioù folklorel a vez d'an amzer-se. Ur renabl eus an oferenoù-se a c'heller kavout war lec'hienn **Eskopti Kemper ha Leon** ha war hini **Eskopti Sant-Brieg ha Treger**. Ezhomm a vefe koulskoude eus ul lec'hienn arbennikaet war an danvez-se hag a c'holofe Breizh a-bezh. N'eus nemet ul listenn-skignañ ("brezhonegeniliz" dalc'het gant **Emglev an Tiegezhioù**) a glask mont war an dachenn-se evit ar poent.

Siwazh, n'eus nemet e Trelevenez e vez dalc'het oferenoù brezhonek bep sizhun (d'ar Merc'her ha d'ar Sadorn da noz) ; en un nebeud lec'hioù all e c'heller klevet un oferenn vrezhonek bep miz pe bep eil miz d'ar gwellañ (Lannuon, Landreger, Kemper, Landerne). Stankoc'h e vez implijet ar brezhoneg en ilizoù avat dre ar c'hantikoù hengounel.

Katekiz

An doare nemetañ evit brezhonegerien deroù an XX^{vet} kantvet da vezañ kelennet e brezhoneg ha neuze da zeskiñ lenn en o yezh e oa ar c'hatekiz. Rouez eo an troioù da gaout kelennadurezh war ar relijion gristen e brezhoneg hiziv an deiz ; graet e vez gant parrezioù Gwengamp, Brelevenez (Lannuon) ha Landerne, pe dre ur c'hamp bloaziek a bad ur sizhun e Landreger. E lec'hiadoù zo en hentad divyezhek katolik e vez kinniget katekiz e brezhoneg memes tra (n'eus sifr resis ebet war ar poent-mañ met brasjediñ a ra ar gevredigezh Dihun e vez graet katekiz e brezhoneg e tost ul lec'hiad divyezhek prevez diwar bevar, ar pezh a sellfe ouzh un eizh kant bugel bennak). Gant Job an Irien e vez kinniget katekiz e brezhoneg da grennarded ar c'helenn dre soubidigezh e Penn-ar-Bed.

Gant **Emglev an Tiegezhioù** ha **Minihi Levenez** e vez embannet levrioù katekiz pe levrioù a denn d'ar relijion evit ar vugale. War ar stern emañ danvez pedagogel evit ar c'hatekiz e brezhoneg gant **Bodad-labour Eskopti Gwened evit ur Bastorelezh e Brezhoneg** hag ar gevredigezh **Dihun**. An dra-se a zlefe aesaat diorren ar c'helenn relijiel e brezhoneg.



Plas ar brezhoneg er relijionoù all

Hiziv an deiz n'eus koulz lavaret plas ebet d'ar brezhoneg er relijionoù er-maez eus ar gatoligiezh. Koulskoude, brezhoneg a oa e metoù ar **protestantiezh** e hanterenn gentañ an XX^{vet} kantved c'hoazh : skolioù divyezhek protestant a oa e Breizh betek ar bloavezhioù 30 zoken. E 2004 e oa bet embannet un adweladenn eus troidigezh ar pastor Ar C'hoad eus an Testamant Nevez lakaet e peurunvan.

Eil relijion Breizh e tle bezañ an **Islam** moarvat, met n'eus netra e brezhoneg war an dachenn-se evit ar poent. N'eus nemet roudoù eus ar brezhoneg er **reizhkredenn** : menegoù brezhonek a oa er gelaouenn "La Bretagne orthodoxe".

E metoù an **ezoteregezh*** e ra berzh ar yezh gant an drouized (pe an nevezdrouized). An ober gant ar brezhoneg zo unan eus pennaennoù **Goursez Breizh**.

Klozadur darnel

Stag e chom sell an Iliz war ar brezhoneg ouzh tiriad Breizh-Izel c'hoazh. Ret eo lavaret eo kreñvoc'h pouez an hengoun er metoù-se eget e metoù all. Traoù a vez graet e Roazhon ur wech an amzer memes tra er bloavezhioù diwezhañ-mañ (oferennoù brezhonek hag un aluzenerezh evit ar studierien vrezhonek).

En Iliz ivez eo gant aozadurioù kevredigezhel pe hiniennoù e vez kaset ar yezh war-raok, dreist-holl. Merzout a reer e krog urzhaz an eskoptioù da sammañ diarbennoù resis pe resisoc'h e-keñver ar brezhoneg memes tra. Met techet eo implij ar brezhoneg en ilizoù da vezañ stag ouzh ar pardonioù ha gouelioù an hañv c'hoazh. Estreget reiñ d'an dud un tañva d'ar brezhoneg dre c'hlad ar c'hantikoù zo d'ober, diorren al liderezh hag ar c'hatekiz er yezh-se (e-ser harpañ diorren an deskadurezh divyezhek en hentad prevez katolik) a dalvez lakaat an Iliz da gemer perzh hi ivez e lusk sevenadurel Breizh.


Buhez sokial ha prevez Klozadur

Ur youl greñv da lakaat ar brezhoneg da dalvezout war dachenn ar vuhez sokial ha prevez a glever muioc'h-mui abaoe deroù ar bloavezhioù 2000. War liesaat eo aet ar c'hinnig dudioù hag arvestoù (kanerien nevez, strolladoù c'hoariva nevez, filmoù ha heuliadennoù advouezhiet). Frammoù nevez zo bet krouet da gas ar brezhoneg war-raok war tachennoù resis, re all a grog da gemer ar brezhoneg e kont en o oberoù ha gounid o defe, evit mont pelloc'h ganti, o heuliañ skouer an UBAPAR* hag Eskopti Gwened o deus krouet postoù-labour a-ratozh.

Daoust d'an araokadennoù nevez e teu splann ar mankoù war wel : skorted rouedad ar magourioù divyezhek hag ar servijoù d'an dud e brezhoneg, peuzamvoud ar seveniñ filmoù e brezhoneg, berrentez a greizennoù-dudi hep herberc'h, diouer a stal reoliek a ginnigfe un

danvez hepken hag a vefe distag eus glad ar vro, dienez war dachenn ar sport. Rummad ar grennarded zo dibourvez a-walc'h ouzhpenn-se, kement evit al levrioù, an dudi hag ar stummoù sonerezh a zedenn anezho. Kalz a frammoù (lec'hel peurgetket) zo da grouiñ evit bastañ d'an holl ezhommoù.

A-drugarez da labour ar bed kevredigezhel (pe diwar youl hiniennoù) dreist-holl eo e vez graet araokadennoù er metoù-mañ c'hoazh. An ezhomm mallusañ a vefe, eus un tu, gounit e kemerfe frammoù arbennikaet war tra pe dra ar brezhoneg e kont muioc'h-mui, hag, eus un tu all, e liesafe ar pennadurezhioù lec'hel o oberoù politikel fetis. Er fedoù e verzer e krog an traoù da fiñval d'al live-se ; ret e vo mont da vat gant an hent-se evit ober araokadennoù a-bouez ha digeriñ tachennoù nevez.



E m b a n n

Poltrud an embann e brezhoneg. Ha ledan a-walc'h eo ar c'hinnig ?

Al levrioù

Petra a embanner e brezhoneg ?


An niver a levrioù brezhonek¹ embannet bep bloaz a sav, well-wazh, da 80 titl, da lavaret eo 6% eus ar pezh a embanner e Breizh². Ur c'hresk bihan a oa bet merzet e 2003 a-raok un digresk bras e 2004. Gallout a reer displegañ an dra-se eus un tu gant klozadur embannadurioù An Here hag eus un tu all gant cheñchamant skipailh Kuzul-rannvro Breizh. Ar cheñchamant-se en deus lakaet embannadurioù zo da vezañ ampellet abalamour m'eo bet daleet ar skoaziadoù a-wechoù.

¹ Pa gomzer eus levrioù brezhonek e reer anv eus levrioù e brezhoneg penn-da-benn met ivez eus levrioù divyezhek.

² Hervez ar C'huzul-rannvro e vez embannet 1300 titl e Breizh bep bloaz.

Emdroadur an niver a ditloù deuet er-maez diouzh o rummad etre 2000 ha 2005

Tro-dro 80 titl a vez embannet e brezhoneg bep bloaz. Digemm a-walc'h eo an niver-se. Kempouesoc'h e teu da vezañ dasparzh al levrioù embannet evit an oadourien, ar grennarded hag ar vugale.



Evit an oadourien eo an div drederenn eus al levrioù embannet etre 2000 ha 2005; techet eo an dreistpouez-se da vont war zigreskiñ avat. En enep, kresket eo lodenn

al levrioù evit ar grennarded hag evit ar vugale e-touez al levrioù embannet e brezhoneg : tost d'ul levr diwar zaou e 2005 tra ma oa unan diwar bevar e 2000. Ur mank a zo aze c'hoazh avat hag ur striv zo d'ober evit broudañ an embannerien hag ar skrivagnerien da embann ha da grouiñ e brezhoneg evit ar rummad oad-se, evit ar grennarded vrezhonek peurgetket rak niverusoc'h int bremañ.

Bras eo lec'h ar romantoù e-touez al levrioù embannet e brezhoneg : 40% eus ar pezh a embanner e brezhoneg a zo romantoù e gwirionez³ (e-skoaz 20% eus al levrioù embannet e Frañs).

³ Ar siffr-mañ, koulz hag ar re a zeu da-heul, zo tennet eus un enklask kaset da benn gant servij Arsella ar brezhoneg e 2004, hizivaet e 2006.

Levrioù evit an oadourien

War-dro 50 titl evit an oadourien a zeu er-maez bep bloaz. Oberennoù lennegel int dreist-holl. Romantoù eo tost un drederenn eus al levrioù bet embannet etre 2000 ha 2005; levrioù deskiñ ar yezh pe levrioù a denn d'ar yezhoniezh a ya d'ober un drederenn all. Treut a-walc'h eo ar c'hinnig c'hoazh evit ar pezh a denn d'an arz, d'ar vuhez pemdeziek pe da skiantoù an den, koulz hag evit ar bannoù-treset.

Levrioù evit ar grennarded

Treut da vat eo ar pezh a zeu er-maez evit ar grennarded (dek titl bep bloaz dre-vras). Levrioù-skol eo un darn fetis eus an embannadennoù-se ouzhpenn-se. Ur c'hinnig a grog da ziwanañ gant al labour kaset da benn gant embannerien zo, evel **Bannoù-Heol**, evit embann bannoù-treset a glot gant ar pezh a blij d'ar yaouankiz, evel "Titeuf" da skouer. Lañs en deus roet **TES*** d'ur rummad nevez evit ar grennarded e 2005 ivez. Gant "**Priz ar yaouankiz**" krouet gant **FEA*** e 2004, eo aet war-raok ar c'hrouiñ evit ar grennarded hag an niver a romantoù embannet ivez : trizek romant pe danevell zo deuet er-maez evel-se e 2004 ha 2005, da lavaret eo an hanter eus al levrioù lennegezh deuet er-maez etre 2000 ha 2005.

Levrioù evit ar vugale


An darn vrasañ eus ar pezh a embanner evit ar vugale (57%) a zo lennegezh ivez. Levezonet-tre e oa an embann evit ar vugale gant **An Here** betek 2004, gant e serridigezh eo bet kemmet ar gennad-se. Embannerien all a zo oberiant war an dachenn, evel **Bannoù-Heol, Delioù** ha **Keit Vimp Bev**. A-drugarez d'o labour e chom stabil a-walc'h an niver a ditloù embannet evit ar vugale : 15 titl embannet e brezhoneg pe en div yezh bep bloaz. Kalz breskoc'h eo an traoù bremañ koulskoude pa vez sammet an darn vrasañ eus al labour gant tud a-youl vat en-dro tra ma oa ur skipailh a vicher e ti An Here.

A-benn digreskiñ koust an embann eo krog **Keit Vimp Bev** da genlabourat gant tiez-embann e Frañs dre ar gevredigezh **Coopelingua** evit kenembann levrioù da-heul ar c'henlabour zo abaoe 2001 evit kazetennoù. Tri levr zo deuet er-maez evel-se e deroù 2006 e brezhoneg, en okitaneg, e katalaneg hag en euskareg. Lakaat o barregzhioù e boutin a ro an tu da greskiñ an niver a ditloù embannet e yezhoù bihanniver.

Nevezentioù a embanner dreist-holl : 84% eus al levrioù embannet e brezhoneg, e-keñver 51% eus ar pezh a vez embannet e Frañs a-bezh.

Skripañ a reer muioc'h a levrioù brezhonek eget na droer diwar ur yezh all : **an div drederenn eus al levrioù embannet zo bet krouet war-eeun e brezhoneg**. Splannoc'h c'hoazh eo an tuadur-se evit **al levrioù divyezhek gant 81% a grouidigezhioù**. Gant-se eo anat an diouer a levrioù eus al lennegezh etrebroadel bet lakaet e brezhoneg. Ul lodenn eus al levrioù brezhonek evit ar vugale zo troet diwar yezhoù all memes tra.

1 300 skouerenn a vouler well-wazh eus pep **titl e brezhoneg**. Sevel a ra an niver da **2 400 skouerenn** evit **an titloù divyezhek**. Etre 300 ha 15 000 skouerenn (evit geriadurioù zo da skouer) a vouler e gwirionez. An hentennoù deskiñ hag ar geriadurioù eo a vez gwerzhet ar muiañ.



Piv a lenn e brezhoneg, petra eo boazioù lenn ar vrezhonegerien ?

Evit diorren an embann e brezhoneg eo pouezus lakaat ar pezh a vez embannet da glotañ gant c'hoantoù lenn an dud. Diwar c'houlenn Rannvro Breizh e oa bet kaset un enklask da benn gant KRLB* e deroù 2005 diwar-benn boazioù lenn ar vrezhonegerien evit gouzout petra e oa an ezhommoù na veze ket bastet dezho.

Hervez ar studiaden-se e c'hortoz al lennerien, koulz ar re yaouankañ hag an dud deuet, levrioù savet en ur brezhoneg eeun hag aes da lenn. Arabat eo memes tra e chomfe dibourvez ar vrezhonegerien ampartoc'h c'hoant ganto da lenn levrioù a-feson a-fet danvez. Ezhomm a zo eus ur politikerezh treiñ efedus peurgetket evit ma teufe al levrioù er-maez war un dro e galleg hag e brezhoneg.

Liammet eo al lenn e brezhoneg ouzh ar skol : eno e vez dizoloet al levrioù brezhonek gant ar vugale hag ar grennarded. Ezhomm o deus bugale ar skolioù-mamm da gaout muioc'h a albomou gant frazennoù eeun. Bugale ar skol gentañ n'int ket boas da lenn er gêr. Bannoù-treset, marvailhoù, mojennoù ha romantou gant istorioù a glot gant o oad ha gant o frederioù a vank dezho.

Techet eo ar grennarded da lenn e galleg kentoc'h eget e brezhoneg. Liammet eo ar stad-se ouzh an diouer a ditloù, met ivez ouzh o live brezhoneg hag ouzh statud ar yezh er gevredigezh. Gwell eo gant an hanter eus ar skolajidi lenn e galleg hag embann a reont ne blij ket dezho lenn e brezhoneg. Evit 40% eus ar skolajidi n'eo ket uhel a-walc'h live o brezhoneg, ar pezh a c'hell displegañ perak ne blij ket dezho lenn e brezhoneg. Met abeg pennañ an dra-se, evit doare, eo ne glot ket ar pezh a vez embannet gant o c'hoantoù lenn. Un ezhomm bras a zo neuze da ziorren ar c'hinnig evit ar grennarded : teullevrioù, romantou modernoc'h hag a bled gant ar gevredigezh a vremañ, bannoù-treset, pe c'hoazh teulioù war ar sport.

Hervez al levraouegerien, n'eus ket kalz a oadourien a lenn e brezhoneg, ha ned a ket an niver a lennerien war an oad war gresk hervez al levrdiourien.

E dibenn 2005 e oa bet kaset un enklask da benn war al lenn e bed ar studierien gant Kuzul ar Brezhoneg e skolveur Roazhon. N'int ket lennerien oberiant-kenañ hervez disoc'hoù an enklask : an darn vrasañ a lenn etre unan ha pemp levr ar bloaz, romantou ha danevelloù dreist-holl. N'eo ket al live yezh a vir ouzh ar studierien da lenn muioc'h rak n'eus nemet 30% anezho a gav anezhañ re uhel. An dalc'h eta zo gant ar seurt levrioù kinniget hag ar skignañ anezho dreist-holl.

Skignañ : gwellaat pazenn diwezhañ an embann

An diouer a skignerien a vicher

Unan eus kudenn pennañ an embann eo ar skignañ. Gouestlañ a ra an embannerien o startijenn d'an embann rik ha neket da heuliañ ha da werzhañ o levrioù. Kevredigezhioù zo eus an darn vrasañ eus an tiez-embann brezhonek, gant tud a-youl vat ez eont en-dro. Gant an hanter eus an embannerien e vez fiziet ar skignañ en ur skigner a vicher (**Coop Breizh diffusion**). An hanter all a skign e-unan. Evit kenurzhañ ha diorren gwerzhioù daouzek ti-embann brezhonek ez eus bet krouet ur post animatour skoazellet gant Kuzul-rannvro Breizh. Ur c'hammed kentañ eo evit gwellaat skignadur al levrioù brezhonek. Postoù all par da hemañ zo ezhomm evit diorren da vat gwerzh al levrioù.

Al levrдиоù : al lec'h kentañ evit skignañ al levrдиоù

Diaes-kenañ eo kavout levrдиоù e brezhoneg er-maez eus ar c'hêrioù bras ma vez miret ur plas d'al levrдиоù brezhonek el levrдиоù bras hag eus levrдиоù arbennikaet war danvez Breizh. Brasjediñ a reer ez eus 25 a levrдиоù dizalc'h a ginnig ingal levrдиоù e brezhoneg, da lavaret eo 5% eus al levrдиоù dizalc'h e Breizh. Dizingal eo dasparzh al levrдиоù-se e Breizh : an hanter anezho zo lec'hiet e Penn-ar-Bed, ur c'hard all er Mor-Bihan hag ar peurrest en tri departamant all.

Ar Genrouedad a vez implijet muioc'h-mui evit reiñ lañs d'ar werzh levrдиоù e brezhoneg ha mont a-enep an diouer a lec'hioù gwerzhañ. Daoust ma n'eo ket gwall ziorroet ar werzh levrдиоù brezhonek enlinenn, un nebeud levrдиоù a glask tizhout er mod-se muioc'h a dud. Un embregerezh, **BZH5.com**, en deus krouet ur stal war ar Genrouedad a ginnig kement tra bet embannet e brezhoneg pe dost.

Rouedad al levraouegoù

Reiñ a ra al levraouegoù an tu da gavout levrдиоù e brezhoneg evit tud n'hallont ket prenañ levrдиоù brezhonek aes. Un digarez eo da reiñ levrдиоù zo da anavezout (d'an deskidi peurgetket) ha da stummañ lennerien nevez. Albomoù evit ar yaouankiz a vez amprestet an aliesañ. Start eo d'al levraouegoù gouzout petra zo nevez embannet e brezhoneg koulskoude. Ur roll skignañ a ginnigfe urzhiañ enlinenn a vefe mat krouiñ da ziskoulmañ ar gudenn-se. Gallout a rafe an tiez-kêr pinvidikaat dastumad brezhonek o mediaouegoù o tennañ splet eus ar goulenn tematek bloaziek a c'hellont ober digant an DRAC*.

Ar saloñsoù hag ar c'houlzadoù brudañ : lec'hioù eus ar c'hentañ evit kinnig al levrдиоù

Buheziñ a ra ar **saloñsoù** bed al levrдиоù ha harpañ a reont kenwerzh al levrдиоù brezhonek. Gant an diouer a skignañ el levrдиоù eo ar saloñsoù lec'hioù eus ar c'hentañ evit kinnig, skignañ ha gwerzhañ al levrдиоù-se. Tro-dro 60 festival pe saloñs levrдиоù zo e Breizh. **Gouel al levrдиоù e Breizh e Karaez** zo emgav pennañ an embann e brezhoneg. Ar saloñs "**E brezhoneg**" e Begerel a ranker menegiñ ivez. Ha pa vefe bihanoc'h, **Festival Gwened** ha hini **Gwenrann** a vir ur plas d'al levrдиоù brezhonek ivez.

Diwar atiz an embannerien vrezhonek e oa bet roet lañs d'ar **c'houlzad "Miz ar brezhoneg"** e 1998 gant Coop Breizh a-benn lakaat al levrдиоù brezhonek war wel el levrдиоù ha sachañ evezh an dud dre-vras war ar pezh a embanner e brezhoneg. D'en ober e vez kinniget, evit miz Here, un dibab levrдиоù da stalioù n'int ket boas da werzhañ seurt oberennoù. Dre ziouer a genurzhiañ war dachenn al levrдиоù brezhonek e chom bihan levezon ar c'houlzad-se c'hoazh.

Diwar atiz Ofis ar Brezhoneg e oa bet roet lañs da "bemzektevezh" an embannerien e Breizh e 2005 da vare **ar c'houlzad "Lire en fête / Lenn laouen"**. Reiñ a ra an tu da zizoleiñ ar pezh a embanner e Breizh, e brezhoneg peurgetket, ha d'en em gavout gant skrivagnerien hag embannerien.

Roet e oa bet lañs d'ur meizad nevez, diwar skouer ar Sant Jordi e Katalonia ma profer ul levr e katalaneg d'ar c'houlzad-se : **profañ ul levr e brezhoneg da vare Gouel Erwan**. Pal an darvoud-se a oa reiñ lañs d'ar werzh levrдиоù e brezhoneg. Met n'en deus ket graet berzh c'hoazh ar meizad-se ha n'eo ket bet dalc'het en-dro. Diaes eo reiñ lañs d'ur c'hiz a seurt-se hep kaout ur c'henurzhier evit ur c'houlzad brudañ a-vras ha hep kevelerien bennañ bed al levrдиоù.

Ur framm arbennikaet war ar skignañ levrдиоù brezhonek zo ezhomm krouiñ

Embannet he deus Rannvro Breizh en he skrid politikerezh yezh e vefe skoazellet muioc'h skignañ ha brudañ al levrдиоù e brezhoneg. **KRLB*** eo ar framm a oa bet meneget evit bezañ karget eus ar gefridi-se. Ul labour kelaouiñ a ra evit ar mare. Reiñ a ra da anavezout d'an dud ar pezh a zeu er-maez e brezhoneg dre he lec'hienn Genrouedad ha dre he c'hazetenn **Pages de Bretagne / Pajennoù Breizh**. A-hend-all, klask a ra buheziñ an embann e brezhoneg. Un heuliad tri devezh stummañ zo bet aozet evit oberourien al levrдиоù e brezhoneg e 2005 ha 2006.

Ezhommoù arbennik zo d'an embann brezhonek liammet ouzh kudennoù resis n'eus ket anezho e galleg. Strizh-tre eo publik al lennerien c'hoazh ha poan en deus da gavout e walc'h gant ar pezh a ginniger dezhañ. Da ziskoulmañ ar gudenn-se ez eus ezhomm-groñs da fiziout teul an embann e brezhoneg en ur framm dereat en ur reiñ palioù dezhi. Diwar skouer Kuzul al Levrдиоù e Kembre, **Cyngor Llyfrau Cymru / Welsh Books Council** e labourfe ar framm-se evit diorren an embann e brezhoneg o reiñ lañs d'ur programm treiñ levrдиоù eus al lennegezh etrebroadel gant ur galv da ginnigoù peurgetket.

Ar c'hazetennoù

Ar c'hazetennoù brezhonek

Un dek kelaouenn bennak e brezhoneg a c'haller lenn hiziv an deiz.

Krouidigezh **"Ya!"** e 2005, ar sizhuniek kentañ e brezhoneg war paper, eo an darvoud pouezusañ eus ar bloavezhioù diwezhañ e bed ar c'hazetennoù moarvat. Miziek eo mareadegzh voutinañ ar c'hazetennoù brezhonek. Al lennerien n'int ket niverus a-walc'h evit ma c'hallfe un embregerezh prevez en em lakaat da embann ur gazetenn bemdeziek e brezhoneg. Hep sikour ar galloudoù foran n'haller ket krouiñ ur gazetenn bemdeziek pe sizhuniek en ur yezh bihanniver. Mont a ra en-dro Ya! gant harp skoaziadennoù foran hag ur skipailh kazetennerien, a-youl vat an darn vrasañ anezho.

Betek ar bloavezhioù 2000 e veze kinniget **kelaouennoù evit an oadourien** dreist-holl. Kelaouennoù lennegel ha sevenadurel eo ar c'helaouennoù-se : **"Al Liamm"**, **"Hor Yezh"**, **"Imbourc'h"**, **"Brud Nevez"** hag **"Al Lanv"**.

Keleier eus Breizh hag eus ar bed a-bezh a vez kinniget gant **"Bremañ"**. Splann a-walc'h eo an ezhomm o deus ar c'helaouennoù da lakaat emdreiñ o stumm hag o danvez evit derc'hel en amzer.

Abae 2000, ouzhpenn ar gelaouenn lennegel **Aber**, ez eus bet krouet **c'hwec'h kazetenn evit ar vugale hag an oadourien yaouank**. Ne oa kinnig ebet d'ar mare-se evit al lennerien yaouank. Gant **Keit Vimp Bev** ez eus bet krouet kelaouennoù e brezhoneg evit ar vugale neuze : **"Louarnig"**, **"Rouzig"** ha **"Meuriad"** evit ar grennarded. Krouet e oa bet ivez daou drimiziek all e 2002 : **"Ar Gripi"**, ur gazetenn skiant-faltazi, ha **"Bara gwin"**, ur gazetenn "people". N'eo ket padet pell an div gelaouenn-mañ siwazh, meret e oant gant skipailhoù a-youl vat, met testenian a reont eus an ezhomm eus kelaouennoù a-ratozh evit ar rummadoù yaouank. Da echuiñ, roet en deus **TES*** lañs d'ur gelaouenn graet gant ar skolidi evit ar skolidi, **"Taboulin"** a-benn respont da c'houlenn ar c'helenn divyezhek a ya war ziorren.

4 Steuziet eo ar gelaouenn vizek-se e deroù 2007, met erlec'hiet ez eus bet "Ya! an dudi" outi, ul levrig eizh pajenn ouzhpennet d'ar sizhuniek Ya!.

An embann kazetennoù e brezhoneg zo meret gant tud a-youl vat dreist-holl (88% eus an dud er metoù-se). War greskiñ eo aet an niver anezho abaoe 2000 zoken. Un dra vat a ziskouez ez eus tud mennet da gas an dachenn-se war-raok, met ur stad arvarus eo ivez ken bresk e c'hell bezañ seurt skipailhoù. Koulskoude, dont a ra ar c'helaouennoù a zeu er-maez an aliesañ a-drugarez da genurzhierzh tud a vicher. War vicherelaat eo aet an embann kelaouennoù eta, n'eo ket aet ken pell hag an embann levrioù avat.

Dre goumanant e vez gwerzhet ar c'helaouennoù e brezhoneg dreist-holl (84%). Tennañ splot a ra ar c'helaouennoù-se eus rouedad skignañ al levrioù brezhonek ha pa vefe bihan ar rouedad-se c'hoazh : al

levrdioù arbennikaet, al levraouegoù a zegemer un dalc'had e brezhoneg hag ar gouelioù. Met ne oar ket Yann Vreton ez eus anezho pa ne vezont ket kavet er rouedad skignañ boutin. Re vihan eo ar marc'had evit arc'hantaouiñ ur skignañ er stalioù.

Chomet eo stabil an niver a goumanterien abaoe 2000 evit an darn vrasañ eus ar c'hazetennoù. Un digresk bihan zo bet evit un nebeud kelaouennoù zoken. An niver keitat a goumanterien evit ur gazetenn e brezhoneg zo tro-dro **430 koumanter**. Hiziv an deiz eo **Ya!** a vez lennet ar muiañ : **tizhet he deus ar miliad a goumanterien**.

An niver keitat a skouerennoù moulet evit ur gelaouenn e brezhoneg a zo **515 skouerenn**. Stabil eo an niver a skouerennoù moulet evit ar prantad 2000/2005, ar pezh a dalvez ne zeu ket a-benn ar c'helaouennoù da zesachañ lennerien nevez a-walc'h evit kreskiñ da vat. Embannadurioù Keit Vimp Bev evel Ya! pe e gazetennoù evit ar vugale a hañval klotañ gwelloc'h gant ezhommoù a vremañ ar vrezhonegerien. Ar Genrouedad zo un doare modern da gelaouiñ an dud e brezhoneg a-hend-all, ha berzh a ra (gw. ar pezh a denn da **"vBremaik"**, p. 118).


Plas ar brezhoneg e bed ar c'hazetennoù dre-vras

Un dek kazetenn c'hallek bennak a embann pennadoù-skrid e brezhoneg ingal.

Rubrikennoù e brezhoneg a gaver en div gazetenn bemdeziek rannvroel a vez skignet a-vras e Breizh. War gil eo aet ar plas roet d'ar brezhoneg e pajennoù **"Ouest-France"** koulskoude : e embannadenn Breizh velestradurel "Dimanche Ouest-France" e chom ur rubrikenn sizhuniek a ginnig un tañva d'ar brezhoneg ; met e deroù 2006 e oa bet lamet kuit ar bajennad bannoù-treset a oa anezhi abaoe 2004. Diouzh an tu all, reiñ a ra **"Le Télégramme"** ur plas brasoc'h d'ar brezhoneg bremañ : abaoe 2002 ez eus ur rubrikenn bemdeziek, **Spered ar Yezh**, hag a zispleg un dro-lavar vrezhoneg e galleg hag ur rubrikenn sizhuniek, **Spered ar Vro**, hag a ginnig poltredoù.

E-touez ar c'hazetennoù sizhuniek emañ ar **"Poher Hebdo"** a ginnig ur bajennad e brezhoneg gant keleier ha pennadoù-kaoz, pe **"Le Trégor"** a ginnig ur pennad-skrid e brezhoneg bep sizhun. Ur bajennad a-bezh e brezhoneg zo e **"Le Courrier du Léon"** ha **"Le Progrès du Finistère"** ivez.

Kelaouennoù miziek pe drimiziek arbennikaet war ar sevenadur pe ar gevredigezh a ginnig e brezhoneg pennadoù-skrid pe rubrikennoù berr pe berroc'h, evel **"Armor Magazine"**, **"Ar Men"**, **"Hopala"** ha **"le Peuple Breton"**. Kinnig a rae ar gelaouenn **"Sport Breizh"** ur pennad meur a bajenn dezhañ e brezhoneg. Reiñ a ra an tu d'ar brezhoneg da vont er-maez eus ar bed sevenadurel rik. Kinnig a ra ar gelaouenn vizek **"Breizh Mag"** ur pennad-skrid savet e brezhoneg ivez



Kregiñ a ra ar strollegezhioù tiriadel da zigeriñ o embannadurioù d'ar brezhoneg ivez. Kelaouenn nevez Kuzul-rannvro Breizh, "**Bretagne ensemble / Breizh a-gevret**", a ginnig, ouzhpenn ar pennad-stur en div yezh, ur pennad e brezhoneg ivez. Eus tu an departamantou e tigor departamant Penn-ar-Bed ur bajennad sevenadurel en e gelaouenn d'ar brezhoneg. Kemend-all en deus

graet departamant Aodoù-an-Arvor e 2006. N'eus pennad-skrid ebet en embannadurioù an tri departamant all en enep. Ur plas zo roet d'ar brezhoneg en o c'hannadig-kêr gant tiez-kêr zo ivez. Niverusoc'h-niverusañ int zoken, a-drugarez da Ya d'ar brezhoneg, ar c'houlzad kaset da benn gant Ajañs Diorren Ofis ar Brezhoneg.


Piv a embann e brezhoneg ?

Lec'hiadur an embannerien o deus embannet ul levr d'an nebeutañ pe kelaouennoù etre 2000 ha 2006

E Penn-ar-Bed emañ diazezet an div drederenn eus an embannerien. Gwelet a reer ez eus muioc'h a embannerien en Il-ha-Gwilen (e Roazhon) eget en Aodoù-an-Arvor pe er Mor-Bihan.

52 framm a embann levrioù pe kelaouennoù e brezhoneg zo bet renablet e Breizh evit ar prantad 2000/2005, da lavaret eo ur c'hard eus embannerien Breizh. Daou framm e-maez Breizh o deus embannet levrioù brezhonek etre 2000 ha 2005.

An niver a levrioù embannet a gemm kalz eus an eil embanner d'egile. Daou embanner o deus embannet ouzhpenn 75 titl brezhonek e-kerzh ar prantad 2000/2005: **Emgleo Breiz** ha **TES***. Embannet eo bet an hanter eus al levrioù gant pevar embanner : **TES***, **Emgleo Breiz**, **Keit Vimp Bev** hag **An Here**. 20% eus an embannerien hepken o deus embannet ouzhpenn dek titl e-kerzh an hevelep prantad. Ha tremen un drederenn eus an embannerien o deus embannet un titl hepken en ur ober c'hwec'h vloaz.



Merzout a reer ez eus ur c'hard eus an embannerien hag a zo frammet evel **embregerezhioù**, ur statud hag a glot gant obererezh an embannerien. Neoazh, an darn vrasañ eus an embannerien (65%) a labour e framm **ur gevredigezh hervez lezenn 1901**. Gant se ez eus tud a-youl vat eus an darn vrasañ eus kenlabourerien an tiez-embann (69%). Kement-se a gadarna ar perzh en deus an emsav en embann e brezhoneg c'hoazh. War greskiñ ez a an niver a dud a genlabour gant an embannerien abaoe 2000, an dud a-youl vat koulz hag ar c'hopridi.


Politikerezh skoazell ar strollegezhioù foran

Roet e vez skoaziadennoù foran d'an embann levrioù dreist-holl : resev a ra div drederenn eus ar skoaziadoù hag an drederenn a chom a ya da gazetenoù. Diouzh ar raktresoù kinniget eo an dasparzh. Emeur c'hoazh gant ur politikerezh ingalañ arc'hant ha sikour raktresoù deuet gant hiniennoù pe kevredigezhioù. N'eus ket ur politikerezh lakaat palioù ha broudañ da gas oberoù da benn, dre galvoù da ginnigoù da skouer. War an dachenn-mañ e verzer c'hoazh un diouer a genurzhiañ (labour FEA* e Penn-ar-Bed a c'hell bezañ meneget memes tra).

Dasparzh ar skoaziadennoù (en €) roet d'an embann e brezhoneg etre 2000 ha 2005 dre strollegezh foran

Kuzul-rannvro Breizh eo ar strollegezh obero-riantañ evit skoazellañ an embann e brezhoneg : reiñ a ra 80% eus ar skoaziadennoù. Penn-ar-Bed eo an departamant a ra ar muiañ war an dachenn-se ha war greskiñ ez a e ober. N'en deus ket Kuzul departamant al Liger-Atlantel skoazellet an embann e brezhoneg war-eeun e-doug ar prantad studiet.

| | |
|----------------------------|-----------|
| Stad | : 53 400 |
| Departamant ar Mor-Bihan | : 77 372 |
| Departamant Il-ha-Gwilen | : 15 000 |
| Departamant Penn-ar-Bed | : 301 965 |
| Departamant Aodoù-an-Arvor | : 79 397 |
| Rannvro Breizh | 1 780 947 |



Skoazelloù ar Stad

Dre ar **CNL*** hag an **DRAC*** e ro ar Stad skoaziadennoù d'an embann brezhonek. Evel se e c'hall al levraouegoù-kêr kaout sikour evit ur goulenn tematek bep bloaz ; ar brezhoneg, da skouer, a c'hellfe tennañ gounit eus an dra-se. Hogen ne oa bet graet goulenn ebet a seurt-se gant an DRAC* e 2005. Ezhomm zo da gelaouiñ an tiez-kêr eus kement-mañ neuze.

Degas a ra an DRAC* un harp hollek d'an tiez embann ha d'al levrioù a sav ar goulenn ivez. Ezhomm zo da vrudañ ar skoazelloù-se (d'al levrdiourien peurgetket) evit diorren ar skignañ levrioù e brezhoneg hag an embann.

Erfin, abaoe 2004 e c'hall ar font skoazell evit an embannadurioù sizhuniek rannvroel ha lec'hel reiñ skoaziadoù d'ar c'helaouennoù er yezhoù rannvroel.

Politikerezh Rannvro Breizh evit an embann

Adreizhet en doa Kuzul-rannvro Breizh e bolitikerezh skoazell d'an embann e 2001. Tennet en deus digant Skol-Uhel ar Vro ar galloud da ingalañ skoaziadoù war an dachenn-se. Gant ar Rannvro e vezont roet war-eeun enta.

Da-heul he steuñv Politikerezh yezh he deus kinniget Rannvro Breizh lakaat e pleustr ur stignad a-ratozh evit harpañ an embann brezhonek e 2006. A-benn efedusaat ar stignad-se e roer ar skoaziadoù d'an embannerien a genlabour gant ur skigner a vicher. Daou zoare skoazell a zo :

- an eil a zeu eus budjed ar politikerezh yezh : "skoazelloù evit al levrioù" eo.
- egile a zeu eus budjed politikerezh an armerzh : "skoazelloù evit an embregerezhioù" eo neuze.

Embann Klozadur

Evit kas an embann brezhonek war-raok eo krog an embannerien hag ar strollegezhioù foran da brederiañ evit gouzout hag-eñ e klot ar pezh a embanner gant ar pezh a c'hortoz al lennerien. Levrioù skrivet en ur brezhoneg eeun hag aes da lenn a c'houlenn an deskidi, koulz ar skolidi hag an dud deuet. Pouezus eo respont d'ar goulenn-mañ peogwir eo un arguzenn greñv evit gwerzhañ levrioù. Kontant e vefe an deskidi-se da brenañ levrioù evit gwellaat live o brezhoneg.

Ur striv zo bet graet er bloavezhioù diwezhañ-mañ evit embann levrioù evit ar grennarded. Diorroet eo bet an embann evit ar rummad-se gant "Priz ar Yaouankiz" ha stignad skoazell departamant Penn-ar-Bed evit an embannerien.

Kreñvaet en deus Kuzul-rannvro Breizh e bolitikerezh evit an embann e brezhoneg e 2006 o kreskiñ e berzh er c'houst embann. Re nevez eo ar stignad-se evit ma vefe priziet an disoc'hoù anezhañ.

Kehentiñ gwelloc'h diwar-benn o skoaziadoù a zlefe ober ar strollegezhioù foran (ar Rannvro ha departamant Penn-ar-Bed peurgetket).

Ar Rannvro a arc'hantaou 50% eus koust ar fardañ evit al levrioù e brezhoneg ha 25% evit al levrioù divyezhek. N'hall ket ar stignad-se skoazellañ adembannadurioù levrioù a vremañ da lavaret eo levrioù bet embannet evit ar wezh kentañ nebeutoc'h eget 50 vloaz zo. Tremenet eo skoazell arc'hant ar Rannvro eus 20% (a-raok 2006) da 50%.

Abaoe 2000 ez eus un dekvedenn eus ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant ar Rannvro zo aet d'an embann. Kresket eo bet eus an hanter ar skoaziadoù roet d'al levrioù e-kerzh ar seizh vloaz diwezhañ, tra m'eo bet daougementet budjed ar brezhoneg e-keit-se.

Kuzul departamant Penn-ar-Bed a grog da vezañ oberiant war dachenn an embann

Ouzhpenn ar skoazell degaset gantañ d'an embannerien en deus Kuzul-departamant Penn-ar-Bed savet ur stignad evit broudañ an embannerien da embann levrioù e brezhoneg evit ar rakkrennarded (troidigezhioù ha krouidigezhioù) : un dregantad eus ar c'houst e kemer an departamant e karg. C'hwezek levr a oa deuet er-maez gant skoazell ar stignad-se e 2005. Divizet en deus an departamant kenderc'hel gant an hent-se. Koulskoude, ha pa en defe daougementet e skoaziadennoù d'an embann e-pad ar prantad 2000/2005, ne ouestl departamant Penn-ar-Bed nemet 3% eus e vudjed evit ar brezhoneg d'an ober-se.

Evit broudañ an embannerien hag ar skrivagnerien da embann ha da grouiñ e brezhoneg evit ar re yaouank e kemer perzh Penn-ar-Bed er genstrivadeg "Priz ar Yaouankiz" aozet gant FEA*. Mat e vefe d'an departamantoù all diskouez un emouestl kevatal d'an nebeutañ.

Evit ar pezh a denn d'ar sifroù, sac'het ha re vihan e chom ar produerezh levrioù : n'eus nemet 80 titl embannet bep bloaz (war-dro 225 titl a vez embannet e kembraeg, 1 500 en euskareg hag 8 000 e katalaneg).

E bed ar c'helaouennoù ez eus bet un darvoud a bouez gant krouidigezh ar gazetenn sizhuniek e brezhoneg **Ya!**. Deuet eo da vezañ ar gelaouenn vrezhonek lennet ar muiañ gant tremen 1000 koumananter. Daoust d'ar berzh-se e chom bihan pouez an embann kazetennoù e brezhoneg abalamour d'an niver izel a lennerien a zo bet techet da ziskenn er bloavezhioù diwezhañ zoken.

Un taol fall eo bet freuz-stal An Here evit bed an embann (evit ar vugale peurgetket) hag evit al labour kaset da benn war ar yezh. Diskouez a ra eo bresk stad an embann e brezhoneg hiziv an deiz.

N'eo ket diskoulmet kudenn ar skignañ a-hend-all, unan eus dalc'hoù pennañ an embann brezhonek. Ret eo gouestlañ nerzh, labour hag arc'hant dezhi. Disheñvel-mik eo stad ha kudennoù an embann brezhonek diouzh re an embann gallek. Ret eo eta e vefe brezhonegerien gopret en ur framm bennak d'ober war o zro. **Cyngor Llyfrau Cymru / Welsh Books Council** Kembre a ziskouez an hent da vezañ heuliet da strollegezhioù Breizh.



Mediaoù

Un doare a-feson da lakaat ar brezhoneg er vuhez pemdez eo ar mediaoù.

Peseurt birvilh a zo gant ar mediaoù kevredigezhel?

Daoust hag-eñ e ra ar mediaoù publik o lodenn ?

Testennoù ofisiel dave

Resisaet eo e lezenn ar 1añ a viz Eost 2000 a denn da frankiz ar c'hehentñ e rank ar mediaoù publik talvoudekaat glad yezhel ar rannvroioù.

Meneget eo ar yezhoù rannvro e kaier kefridioù ha kargoù Radio France : "La société [...] veille à ce que les sta-

tions locales contribuent à l'expression des langues régionales".

Gant an hevelep tro spered eo meneget ar yezhoù rannvro e kaier kefridioù ha kargoù France 3 : "La société contribue à l'expression des principales langues régionales parlées sur le territoire métropolitain".

Produiñ kleweled e brezhoneg

Oberourien ar produiñ kleweled e brezhoneg

Kevredadoù produiñ kleweled e brezhoneg

Birvidik a-walc'h eo ar produiñ kleweled e Breizh. Tro-dro ugent stal a zo hag a brodu teulfilmoù ha filmoù bevaat* dreist-holl. 16 stal o deus produet filmoù e brezhoneg e-kerzh ar prantad 2000/2005. **Kalanna Production**, dreist-holl, zo arbennikaet war an dachenn-se. Ur stal all, **JPL Films**, a brodu muioc'h e brezhoneg eget honnezh c'hoazh abaoe m'eo bet fiziet enni ober war-dro an abadenn "Mouchig-Dall" evit **France 3 Ouest** e 2006. N'emañ ket ar produiñ kleweled e brezhoneg e-touez obererezh pennañ ar stalioù-produiñ all : 7 diwar ar 16 n'o deus produet nemet ur film e brezhoneg etre 2000 ha 2005. Gant sevenidigezh an heuliadenn "Leurenn BZH" e tlefe perzh **Pois Chiche Films** er produerezh klewelet

brezhonek kreskiñ kalzik e 2007.

Er-maez eus darvoudoù pe festivalioù ma vezont bannet er salioù sinema e vez skignet ar produioù klewelet brezhonek dre ar skinwel. Teir chadenn a zo gouest da skignañ anezho c'hoazh : France 3 Ouest, TV Breizh ha TV Rennes 35 (chadennoù lec'hel all evel Télénantes a ya war an dachenn-se ivez).

Ar produiñ hag ar skignañ dre ar Genrouedad a ya war ziorren abaoe un nebeud bloavezhioù. Krouet ez eus bet chadennoù enlinenn a skign danvez e brezhoneg. "Skinwel Web" zo anezhañ war lec'hienn **An Tour Tan** abaoe 2003 : ur magazin miziek eo, ennañ danvez e brezhoneg ha/pe e gallek. Gant **TV-Tregor** e vez kinniget un nebeud abadennoù e brezhoneg. E miz Kerzu 2006 e oa bet roet lañs da **vBrezhoweb**, ul lec'hienn gelaouiñ brezhonek ma vez kinniget "Webnoz", un abadenn skinwel vizek e brezhoneg. Raktresoù all zo a c'hellfe

dont da wir a-raok pell, evel "Dibikouzh", un abadenn evit ar vugale kinniget gant luskerien vrezhonek, a zo war ar stern gant An Tour Tan. Ouzhpenn-se, an darn vrasañ eus abadennoù brezhonek France 3 Ouest a c'heller pellgargañ war lec'hienn ar chadenn publik abaoe an diskar-amzer 2006.

Daoulagad Breizh ha Gouel filmoù Douarnenez

Brudañ ha skignañ ar sinema hag ar c'hleweled e Breizh eo pal ar gevredigezh-mañ. Kenaozañ a ra Gouel filmoù Douarnenez gouestlet d'ar pobloù minorelaet. E 1983 e oa bet krouet kenstrivadeg Breizh a-benn brudañ krouidigezh klewelet breizhek ar bloavezh (e 2007 eo bet paouezet gant ar genstrivadeg-se). Kinniget e vez ar produadur e brezhoneg d'ar c'houlz-se ivez. Mont a ra d'ober 15% eus ar filmoù kinniget er genstrivadeg dre-vas. Teulfilmoù zo eus peder fempvedenn eus ar filmoù-se. Met **ken dister eo ar produadur ma n'eo ket bet roet priz "Gouel ar filmoù"** (a ya gant ar film gwellañ e brezhoneg) **abaoe 2003**.

A-benn respont d'an diouer a **stummañ** war micherioù ar c'hleweled e brezhoneg e oa bet soñjet gant Daoulagad Breizh hag ar GRETA* reiñ lañs d'ur stummadur evit dont da vezañ filmskriver ha filmaozer ur film e brezhoneg. N'eo ket bet degemeret ar raktres e steuñv rannvroel ar stajoù (daoust m'eo bet rakwelet an ober-se e steuñv politikerezh yezh ar Rannvro) ha dilezet eo bet da c'houde.

INA* Atlantique

Degemer a ra INA* Atlantique dielloù klewelet publik "ar c'hornôg bras" produet gant France 3 ha Radio France abaoe ar bloavezhioù 60. Mirout a ra an holl abadennoù skinwel brezhonek abaoe o c'hrouidigezh neuze, da lavaret eo ur sammad a 2 000 eurvezh a ya d'ober 7% eus an abadennoù miret evit rannvro Breizh. 3 000 eurvezh a abadennoù skingomz zo ouzhpenn-se.

Karget eo an INA* da virout, da saveteiñ ha da skignañ ar glad-se. Evit ar mare ne ra nemet mirout. Poent-bras eo saveteiñ ar glad-se gant an niverelaat ha lakaat anezhañ e-kerz an holl. N'haller ket mont da sellet ouzh dielloù an abadennoù brezhonek war al lec'hienn Genrouedad digoret e 2006 da skouer.


Dizale, "ur benveg evit ur c'hleweled divyezhek e Breizh"

Krouet e oa bet ar gevredigezh Dizale e fin 1998 a-benn kas ur raktres kleweled e brezhoneg war-raok. Heñchet eo bet hec'h obererezh war-zu an advouezhiañ. Pal Dizale a zo seveniñ kement goulenn a zo gant ar chadennoù skinwel ha tiez-embann skoroù klewelet. E 2002 e oa bet kefridiet Dizale gant Kuzul-rannvro Breizh da verañ an advouezhiañ : kinnig raktresoù, tuta an aktored hag an deknikourien hag ober war-dro ar renerezh arzel.

Petra a broduer e brezhoneg ?

Emdroadur hollad ar produadur klewelet e brezhoneg en eurvezhioù eus 2000 da 2005

Krouidigezh TV Breizh he deus lakaet ar produadur brezhonek da greskiñ kalzik, daoust m'eo digresket un tamm da-heul cheñchamant linenn stur ar chadenn brevez.



Da dost 50 eurvezh e save ar produadur kleweled brezhonek e 2005, harpet ma oa en e gresk gant Dizale. **Lieskementet eo bet dre dri e-skoaz ar bloavezh 2000** a-drugarez d'an advouezhiañ a ya d'ober an darn vrasañ eus ar produadur-se. En enep, pa seller ouzh ar produadur orin hepken, da lavaret eo ar pezh zo bet krouet e brezhoneg war-eeun, e weler eo **chomet stanket**.

An advouezhiañ e brezhoneg

Tremen 85% eus ar pezh a zo bet produet e brezhoneg etre 2000 ha 2005 zo abadennoù advouezhiet. Evit ar skinwel dreist-holl e advouezhier filmoù evit ar mare. Savidigezh ar chadenn TV Breizh he deus roet lañs d'an advouezhiañ e brezhoneg da vat. Filmoù bevaat* evit ar vugale zo bet advouezhiet da gentañ adalek 2001. Da-heul cheñchamant strategiezh TV Breizh e 2004 avat (gw. p.110) eo aet an advouezhiañ war-zu ar filmoù faltazi kentoc'h (setu perak eo digresket an advouezhiañ er bloavezh-se) : filmoù produet evit ar skinwel da gentañ, heuliadennoù evit ar skinwel da-heul koulz ha filmoù sinema.

War-dro 46 eurvezh programmoù a vez advouezhiet bep bloaz abaoe 2000. Filmoù bevaat* evit ar vugale zo bet graet dreist-holl (88%) etre 2000 ha 2005, da lavaret eo war-dro 200 eurvezh programmoù evit ar vugale.

Ur skigner all a grog da c'houlenn programmoù advouezhiet e brezhoneg abaoe 2003 : France 3 Ouest evit he abadenn "Mouchig-Dall".

Ouzhpenn ar skinwel eo deuet Dizale ha Daoulagad Breizh a-benn da skignañ filmoù er salioù sinema abaoe 2004. Gant an troiadoù-se e oa bet roet an tu d'ur 6 500 bugel bennak, da lavaret eo tremen an hanter eus ar skolidi divyezhek, da sellet ouzh filmoù brezhonek er sinema e 2007. Ar soñj a zo da ginnig kemend-all d'an dud deuet ha da grouiñ ur gwir rouedad skignañ. Kroget eo bet gant ar film "Marion ar Faoued".

Ar produerezh kleweled orin (gw. ivez p. 92)

Dasparzh ar produadur kleweled orin (en eurvezhioù) dre rummad etre 2000 ha 2005


Filmoù pedagogel ha teulfilmoù a ya d'ober ar produadur orin e brezhoneg dreist-holl.

Filmoù faltazi : 42 mn

Filmoù bevaat : 1h44mn

Teulfilmoù : 18h14mn

Filmoù pedagogel : 22h48mn



Bihan e chom ar produadur kleweled orin e brezhoneg : **war-dro eizh eurvezh programmoù kleweled hepken** zo bet produet ha kinniget d'an dud bep bloaz etre 2000 ha 2005. Programmoù pedagogel (savet gant **TES*** ha **Blaz Production**) eo an hanter anezho. Er-maez eus se e vez produet teulfilmoù evit an oadourien dreist-holl (teir eurvezh diwar eizh). Evit echuiñ, n'eus bet produet nemet div eurvezh hanter filmoù bevaat* ha filmoù berr etre 2000 ha 2005.

Ur mank bras a zo war an dachenn-se evit ar vrezhonegerien yaouank peurgetket. Sevenidigezh an heuliadenn faltazi "Leurenn BZH" evit TV Rennes 35 e 2007 a zo un araokadenn a bouez (ha raktresoù all a zo). Brezhonegerien yaouank prederiet gant an diouer-se o deus savet ar gevredigezh **Setu** gant ar c'hoant krouiñ, strollañ, frammañ ha skignañ raktresoù klewelet e brezhoneg (dre ur blog peurgetket). Ar memes doare preder zo gant ar re a zoug raktres **Gwagenn.TV** e Roazhon : kinnig abadennoù krenn e brezhoneg en un doare sizhuniek ha reiñ ar gaoz da vrezhonegerien yaouank eus Breizh-Uhel peurgetket.

Ar skoazell foran

Sinet e oa bet ur c'hendivizad diorren etre ar Stad, ar CNC* ha Rannvro Breizh evit ar wezh kentañ e 2003 a-benn diorren ha kenurzhiañ o oberoù war dachenn ar sinema hag ar c'hleweled. E-touez ar c'hwec'h ahel pennañ e kaver ar skoazell d'ar produiñ e brezhoneg ha d'an advouezhiañ. Gant ar c'hendivizad-se eo termenet ar skoazell roet gant ar Stad hag ar Rannvro d'ar c'hleweled. Daoust da se n'eus bet graet koulz lavaret netra evit ar brezhoneg gant ar CNC* hag an DRAC* etre 2003 ha 2006.

Degas a ra departamant Penn-ar-Bed dreist-holl hag hini ar Mor-Bihan en un doare arouezeloc'h ur skoazell d'ar c'hleweled ivez. Gant Penn-ar-Bed e vez degaset 97% eus harp an departamantoù d'ar stalioù-produiñ. Koulskoude, bihan e chom emouestloù an departamantoù e-keñver re ar Rannvro pe re ar Stad zoken.

Ar Stad


Ar CNC* a ver kont skoazell arc'hant ar Stad da c'hreanterezh ar sinema ha da hini ar c'hleweled. 100 000 € eo an hollad bloaziek keitat bet roet evel-se d'ar produerezh kleweled e brezhoneg etre 2000 ha 2006. N'en deus ket ar c'hendivizad sinet etre ar Stad hag ar Rannvro degaset kalz cheñchamantoù d'ar skoaziadoù roet d'ar brezhoneg.

Kuzul-rannvro Breizh

Ur politikerezh skoazell d'ar c'hleweled a gas Kuzul-rannvro Breizh da benn. Da dremen 400 000 € e sav ar sammad roet well-wazh d'ar c'hleweled e brezhoneg bep bloaz etre 2000 ha 2005.

Emdroadur keñveriet budjed hollek ar c'hleweled ha budjed ar c'hleweled e brezhoneg e kontoù Rannvro Breizh (en euroioù) eus 2000 da 2005

Daougementet eo bet ar budjed gouestlet d'ar c'hleweled e brezhoneg etre 2000 ha 2005 tra m'eo distroet budjed hollek 2005 ar c'hleweled d'e live e 2000.



Doare skoazellañ betek 2005

Degas a rae Rannvro Breizh ur skoazell d'ar produiñ kleweled e brezhoneg dre ur font skoazell arbennik, ar Fonds d'Aide à la Création Cinématographique et Audiovisuelle (FACCA), betek 2005. Pevar doare skoazell a oa : ur skoazell evit ar skrivañ evit an oberour, ur skoazell evit diorren ur raktres, ur skoazell evit produiñ ha seveniñ ar film hag ur skoazell evit an advouezhiañ e brezhoneg.

Doare skoazellañ abaoe 2006

Divizet he deus Rannvro Breizh lakaat e plas ur stignad a-ratozh evit harpañ diorren ar brezhoneg er c'hleweled. D'en ober he doa krouet, e 2006, ar FALB*, ur font skoazell d'ar c'hleweled e brezhoneg a zo anezhañ evit harpañ ha kas war-raok ar produerezh klewelet e brezhoneg ne vefe ket skoazellet gant ar FACCA*. 500 000 € eo ar sammad gouestlet d'ar font-se gant ar Rannvro ha dre ma c'hell raktresoù all bezañ sikouret gant ar FACCA* atav e vefe un tamm uheloc'h ar budjed gouestlet d'ar c'hleweled hiviziken.

Klozadur darnel

Dalc'het eo ar produiñ klewelet gant ar skignañ. Hogen n'eo ket kresket ar prantadoù gouestlet d'ar produadur e brezhoneg gant ar skinwel a zo e skigner pennañ. Gant-se n'eo ket aet ar produerezh klewelet orin war ziorren etre 2000 ha 2005.

Araokadennoù zo bet graet evit liesaat an doare da skignañ ar produadur brezhonek. An troiadoù aozet gant Daoulagad Breizh ha Dizale a ro an tu d'ar vrezhonegerien yaouank da welet filmoù e brezhoneg. Bouetaet eo ar skignañ-se gant an advouezhiañ zo aet war-raok kalzik. Ur vammenn evit an embann DVD*où eo ivez. Ezhomm he deus ar vammenn-se da vezañ nevezet evit ma kendalc'hfe an troiadoù er salioù sinema peurgetket.

Advouezhiet ez eus bet traoù nevez e brezhoneg abaoe 2002 : filmoù faltazi hag heuliadennoù skinwel. Ouzhpenn degas danvez da sellet d'ar vugale eo talvoudus-kenañ e vefe danvez evit an holl. Talvoudus eo evit pinvidikaat ar yezh en ur zegas troiennoù ha gerioù arbennik nebeut anavezet da skouer.

Mennet eo Kuzul-rannvro Breizh da harpañ muioc'h ar c'hleweled e brezhoneg. Lakaet en deus e plas ar FALB*, ur font a-ratozh evit skoazellañ ar produiñ e brezhoneg, e 2006. Re nevez eo an doare skoazellañ-se evit ma c'hallfed priziañ anezhañ c'hoazh.

N'eus ket c'hoazh ur politikerezh sklaer gant Rannvro Breizh evit ar pezh a denn d'an teknologiezhoù nevez daoust d'an tem-se bezañ meneget e testenn he folitikerezh yezh. Lañs he deus S4C* - ar chadenn skinwel kembraek - war an dachenn-se : filmoù hag abadennoù a bep seurt da bellgargañ digoust, ul lec'hienn emzeskiñ (learnons4c), h.a. Ur skouer vat da heuliañ eo. dre-vras e hañval ar Genrouedad bezañ danvez enni da ziorren kalzik he flas war dachenn ar c'hleweled war verr dermen. Raktresoù zo e-leizh, lod anezho a vesk ar skingomz hag ar skinwel. Kalz traoù talvoudus a vefe tu da sevel : kentelioù emzeskiñ dre bodskignañ*, abadennoù etreoberiat* evit ar skolioù divyezhek, h.a.

Ar skinwel e brezhoneg

An abadennoù brezhonek kinniget

France 3 Ouest

Etre 2000 ha 2006 eo chomet stabil ar c'hinnig abadennoù brezhonek skignet gant France 3 Ouest : aet eo ar c'hinnig war zigresk rak chomet e oa an abadenn "Dumañ Du-se" a-sav e 2001, met adkresket eo bet war-lerc'h gant krouidigezh an abadenn vrezhonek evit ar vugale "Mouchig-Dall" e 2003 ha gant kresk an "Taol Lagad".

1e40mn a abadennoù brezhonek a vez skignet gant France 3 Ouest bep sizhun, da lavaret eo 15% eus he frogrammoù rannvroel (kael programmoù 2006/2007). 30% eus ar pezh a brodu France 3 Ouest zo programmoù e brezhoneg. Dre he lec'hienn Genrouedad e skign France 3 Ouest he abadennoù brezhonek ivez.

Krouidigezh an abadenn skinwel gentañ e brezhoneg evit ar vugale eo bet darvoud pennañ ar bloavezhioù diwezhañ. An abadenn nemeti e Frañs graet evit ar vugale en ur yezh rannvroel eo "Mouchig-Dall". Berzh a ra an abadenn - a bad etre 15' ha 21' - e-touez ar vugale daoust ma vez cheñchet an eur skignañ alies. Kevatal eo heklek "Mouchig-Dall" da hini an abadennoù evit ar vugale skignet war ar rouedad broadel.

C'hoarvezet ez eus bet cheñchamantoù evit abadennoù brezhonek an dibenn-sizhun : "Red an Amzer" zo bet rannet e meur a lodenn e 2005 ha muioc'h c'hoazh e 2006. Liesseurtoc'h eo ar programmoù bremañ met n'eo ket bet kresket hollad an niver a eurvezhioù ; lodennet ha strewet eo bet an abadennoù, ar pezh a c'hellfe bezañ arvarus evit derc'hel o arvesterien.

N'eus nemet e Breizh velestradurel e resever abadennoù brezhonek France 3 Ouest abaoe distro-skol 2002. N'eo ket bet astennet en-dro d'al Liger-Atlantel abaoe daoust d'ar stourm kenurzhiat gant ar c'henstroll **Du breton dans ma télé ! / Brezhoneg ' barzh an tele !** en deus bet skoazell ar CSA*, dilennidi, tiez-kêr (hag en o zouez ti-kêr Naoned) ha Kuzul-rannvro Breizh.

Krennet e vez ingal hollad eurvezhioù an abadennoù brezhonek evit abegoù lies, darvoudoù sport peurvuiñ. Adskignet e vez teulfilmoù ha magazinoù e-kerzh an hañv ma vez graet un troc'h gant an abadennoù brezhonek.

N'eo ket France 3 Ouest ur chadenn rannvroel, ur chadenn publik gant diskrogadennoù rannvroel ne lavaromp ket. War adkreizennañ ez a he frogrammoù abaoe fin 2005. Savet eo koskor ar skourr a-enep an dra-se hag harpet eo bet e stourm gant ar C'huzul-rannvro en ur mennad degemeret a-unvouezh.

Mont a ra an tuadur nec'hus-se a-enep ar pezh a c'hortozer a-berzh ur chadenn rannvroel publik e gwirionez. Gallout a rafe an tuadur-se lakaat an abadennoù brezhonek en arvar. Neoazh, gant ar Gevrat Raktresoù 2007/2012 e fell d'ar Rannvro marc'hata evit ma vefe astennet amzer skignañ France 3 Ouest.

TV Breizh

Krouet e oa bet TV Breizh e 2000 gant ar c'hoant dont da vezañ ur chadenn hollek divyezhek prevez ha diorren greanterezh ar c'hleweled e Breizh. En aner he deus strivet renerezh ar chadenn (skignet dre ar fun* hag al loarell*) evit gounit e c'hellfe ar Vretoned sellet ouzh TV Breizh evit netra. Seul daol en deus nac'het ar CSA* e vefe skignet TV Breizh war ar rouedad hertzian pe dre an SND*, ar pezh en deus lakaet ar chadenn da cheñch he linenn stur penn-da-benn d'an distro-skol 2003. Dre ma ne oa ket tu da dizhout arvesterien Breizh (n'eus nemet 12% eus tiegezhioù Breizh zo e-tailh da resev ar chadenn) hag a-benn gounit pellarvesterien ha lakaat ar chadenn da vezañ splotus ez eus bet lakaet heuliadennoù ha filmoù skinwel e plas ar programmoù breizhek. Goude ar cheñchamant linenn-se ne chome nemet un eurvezh magazinoù da Sadorn ha da Sul (lenno 26 munut e brezhoneg gant "Tro War Dro") hag ar c'heleier pemdeziek "Aktu Breizh" gant ur gelaouadenn vrezhonek.

Tizhet eo bet ar pal e-keñver an niver a bellarvesterien a sell ouzh TV Breizh : deuet eo da vezañ an trede chadenn a vez sellet ar muiañ outi gant ar fun* hag al loarell* hag an hini gentañ e-touez ar mammoù zoken. Da-heul eo chomet TV Breizh a-sav gant an abadennoù evit ar vugale ha neuze gant an advouezhiañ heuliadoù bevaat e brezhoneg a oa bet diorroet kalzik a-drugarez d'ar chadenn betek-henn. Divizet ez eus bet advouezhiañ abadennoù evit an holl kentoc'h. E 2004 he doa kroget TV Breizh da skignañ filmoù advouezhiat e brezhoneg neuze. Daou film skinwel da gentañ ("Marion ar Faoued" e 2004 hag an "Afer Sezneg" e 2005), heuliadennoù da eil ("Perry Mason" adalek fin 2004 ha "Columbo" da-heul adalek miz Gwengolo 2006) hag ar film sinema kentañ advouezhiat e brezhoneg, "Lañselod", e 2006 adarre.

Neoazh, war zigreskiñ eo aet an niver a brogrammoù brezhonek war TV Breizh dre-vras. E 2006 e chom "Tro War Dro" an abadenn nemeti e brezhoneg. Staliet ez eus bet un emgav sizhuniek (pe dost) e prime time d'ar Merc'her da noz gant an heuliadennoù. Peurliesañ e vez kinniget an amzer e brezhoneg ivez. Skignet e vez **div eurvezh abadennoù brezhonek bep sizhun** (c'hwec'h eurvezh ma kemerer e kont an adskignadennoù), da lavaret eo un tammig muioc'h eget France 3 Ouest ha da eurvezhioù dereatoc'h evit an dud. Nebeut a vrezhoneg a chom bremañ e gwiskañ ar chadenn a oa divyezhek en deroù.

Ha pa vefe bet digresket an niver a brogrammoù brezhonek war TV Breizh eo chomet heñvel ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant ar chadenn. Aet eo an arc'hant-se d'an advouezhiañ. 3 milion a euroioù he deus postet TV Breizh en abadennoù brezhonek abaoe he c'hrouidigezh.

TV Rennes 35


Kinniget e veze un abadenn viziek (13') e brezhoneg gant TV Rennes e 1999 ha 2000. N'eo ket bet kendalc'het ganti met ur raktres all zo war ar stern evit an distro-skol 2007 avat : an abadenn "TV Roazhon 35", ur magazin evit ar vrezhonegerien yaouank. Arc'hantaouet eo bet "Leurenn BZH", un heuliadenn filmoù berr a ya d'ober un tamm eus "TV Roazhon 35", gant ar FALB*. Pouezus eo kaout abadennoù brezhonek skignet e Breizh-Uhel evit ar vrezhonegerien a zo o chom eno. Ouzhpenn-se eo skignet TV Rennes 35 gant ar rouedad hertzian abaoe 2006, da lavaret eo e c'hall bezañ gwelet en departamant a-bezh pe dost.

Ganet ez eus bet ur skigner nevez e bed ar skinwel e 2005: **TéléNantes** an hini eo. Ur chadenn lec'hel publik eo : harpet eo gant kêr Naoned, Meurgêr Naoned ha Kuzul-departamant al Liger-Atlantel. Dleout a rafe TéléNantes aozañ ha diorren programmoù tost d'an Naonediz. Dleout a rafe ar brezhoneg kaout ur plas bennak en he c'hael programmoù 2007/2008 pa vo adskignet ganti ar sitkom "Leurenn BZH".



Emdroadur ar c'hementad bloaziek a abadennoù brezhonek (en eurvezhioù) skignet gant pep chadenn eus 2000 da 2005

Gwelet a reer, goude an digresk trumm a zo bet da-heul cheñchamant linenn stur TV Breizh, e kresk un tamm kementad an abadennoù skignet, met an adskignadennoù zo kaoz dreist-holl.



Lodenn ar strollegezhioù foran ha penaos diorren ar c'hinnig

N'eus koulz lavaret nemet Kuzul-rannvro Breizh a harp ar skinwel e brezhoneg. Er-maez eus ar skoaziadoù arc'hant roet d'ar produiñ kleweled brezhonek eo skoazellet France 3 Ouest gant Kuzul-rannvro Breizh dre ur c'hendivizad bet sinet e 2000. Stabil eo chomet ar skoaziadoù diwar neuze. Dleout a rafe an emglev gant France 3 bezañ adkempennet evit lakaat da greskiñ an abadennoù brezhonek. Evit doujañ da skrid he folitikerezh

Klozadur darnel

Nebeutoc'h a abadennoù brezhonek a c'halled sellet outo er skinwel e 2006 eget e 2000 : nebeutoc'h eget **peder eurvezh** brezhoneg a oa skignet bep sizhun neuze pa oa tro-dro da **bemzek** e 2000. Kiladenn TV Breizh war dachenn ar programmoù breizhek hag e brezhoneg zo kaoz dreist-holl. Stabil eo chomet an abadennoù brezhonek kinniget gant France 3 Ouest d'ar memes koulz. TV Breizh a chom ar chadenn skinwel a skign ar muiañ bep sizhun memes tra.

Ledanaet eo bet ar c'hinnig programmoù skinwel gant an SND* abaoe 2005. Un dro wenn eo bet avat evit ledanaat ar c'hinnig abadennoù brezhonek daoust da dTV Breizh bezañ aet war ar renk. Un abeg e-touez re all eo evit ma ne vefe ket bet tizhet pal kentañ TV

yezh e tlefe ar C'huzul-rannvro kevraouiñ gant France 3 Ouest gant tri fal : kreskiñ an niver a abadennoù brezhonek, gwellaat ar produerezh klewelet evit ar vugale ha skignañ e Breizh a-bezh.

Dilezet eo bet ar raktres eizh chadenn niverel hertzian rannvroel gant ar gouarnamant. N'eus nemet ar raktres korsat, **Via Stella**, a zo bet kaset da benn. Sinet e oa bet ur c'hendivizad palioù ha danvezioù etre ar Stad, France 3 ha Strollegezh Korsika e 2006 evit en ober. Divizet he deus Bodadeg Korsika arc'hantaouiñ ar skinwel-se gant ur budjed a 3 000 000 €, da lavaret eo 11 € dre annezad. Reiñ a raio an tu da c'hennad klewelet Korsika da ziwanañ.

Digoret he deus krouidigezh Via Stella an hent d'ar **chadennoù publik rannvroel**. Reizh e vefe e vefe grataet kemend-all d'ar Vretoned¹. Dleout a ra ur raktres a seurt-se bezañ douget gant dilennidi Kuzul-rannvro Breizh evel m'eo bet graet e Korsika. Ma azasaer da Vreizh ar sammad arc'hant dre annezad gouestlet gant Bodadeg Korsika da Via Stella e vefe ret postañ 34 milion € ma jeder evit Breizh velestradurel. Pell emeur diouti gant emouestl bloaziek Rannvro Breizh evit ar c'hleweled hag ar skinwel e brezhoneg (550 000 €).

¹ Da gas ar gouezeleg war-raok e vo roet lañs d'ur chadenn skinwel enlinenn (arc'hantaouet gant fontoù publik) e Bro-Skos d'an diskar-amzer 2007 evit nebeutoc'h eget 60 000 yezher oberiant*.

Digoridigezh an SND* n'he deus ket roet tro da grouiñ muioù a abadennoù breizhek hag e brezhoneg. Da c'hortoz, hiniennoù ha kevredigezhioù eo o deus degaset nevezenti war dachenn ar skinwel brezhonek er bloavezhioù diwezhañ. **Ar Genrouedad** - hentad aes, marc'had-mat ha modern da skignañ - zo bet implijet kalzik gant ar re-se d'en ober (gw. lec'hiennoù Gwagenn.TV pe Brezhoweb da skouer). Gwir eo eo pouezus evit an dazont ez afe ar brezhoneg war an dachenn-se hep gortoz, met arabat e vefe dilezel doareoù hengouneloc'h ar skinwel evit kement-se.

Breizh bezañ ur chadenn brevez **divyezhek**. Deuet eo ar chadenn-se a-benn koulskoude da ledanaat ar c'hinnig programmoù ha da stummañ tud a-vicher evit ar c'hleweled brezhonek.

Krouidigezh ur **gwir chadenn rannvroel publik divyezhek e Breizh** a dal ouzh ur gudenn arc'hantaouiñ hag ouzh un diouer anat a youl bolitikel. Evit dont a-benn anezhi e rank ar C'huzul rannvro astenn e c'halloudoù, da lavaret eo goulenn ma vefe kresket e veli war ar c'hleweled ha ma vefe roet dezhañ an arc'hant rekis. N'eus nemet an araokadenn-se a roio an tu da zougen ur raktres a vent gant hemañ ha da ginnig erfin ur chadenn divyezhek e Breizh, pal bet kadarnaet gant skrid politikerezh yezh ar Rannvro.

Ar skingomz e brezhoneg : araokadennoù ha diaesterioù

Ar c'hinnig : stad ar skingomz vrezhonek

Bevennet eo ar vandenn FM* implijet e Breizh : 400 frekañs roet gant ar CSA* zo korvoet gant 89 skingomz. N'eus nemet 12% eus ar frekañsoù-se zo fiziet e skingomzioù a zigor ul lodenn bras pe vrasoc'h eus o frogrammoù d'ar brezhoneg. E-touez ar frekañsoù-se n'eus nemet un darn vihan-tre (6%) a zo korvoet gant skingomzioù a skign e brezhoneg hepken. War an dachenn deknikel eo dav derc'hel kont ne c'hell ket ar skingomzioù a skign abadennoù brezhonek tizhout kenkoulz ar boblañs hag an darn vrasañ eus ar skingomzioù publik pe brevez : n'int ket pinvidik a-walc'h evit paeañ al lec'hioù skignañ dleet.


Dasparzh ar frekañsoù diouzh ar c'hementad roet d'ar brezhoneg er programmoù kinniget e 2005/2006

An darn vrasañ eus ar frekañsoù roet d'ar skingomzioù a skign abadennoù brezhonek a vir ur plas bihan d'ar yezh a-benn ar fin (un eurvezh pe ziv e brezhoneg bep sizhun hepken).

Programmoù e brezhoneg penn-da-benn (etre 40 ha 60 eurvezh bep sizhun) : 6%

Ul lodenn vihan eus ar programmoù e brezhoneg (nebeutoc'h eget 3 eurvezh bep sizhun) : 48%

Ul lodenn vat eus ar programmoù e brezhoneg (etre 20 ha 30 eurvezh bep sizhun) : 46%



Daou rummad skingomzioù a skign abadennoù brezhoneg e Breizh : ar **rummad A**, ar skingomzioù kevredigezhel a ya en-dro gant skoaziadennoù foran, hag ar **rummad B**, ar skingomzioù publik a rank skignañ brezhoneg hervez o c'haier kargoù. 54% eus ar frekañsoù a skign brezhoneg zo fiziet er skingomzioù publik met ne ginnig an div skingomz-se nemet 10% eus an holl brogrammoù brezhonek skignet e Breizh, daoust ma skignont e Breizh a-bezh.

Er rummad A emañ ar skingomzioù kevredigezhel lec'hel krouet evit kinnig programmoù e brezhoneg ha diorren plas ar yezh er skingomz : an div skingomz a skign e brezhoneg hepken, **Arvorig FM** ha **Radio Kerne**, krouet da ziwzhañ. Kavout a reer ivez div skingomz lec'hel all a ginnig ul lodenn vat eus o frogrammoù e brezhoneg, **Radio Kreiz Breizh** ha **Radio Bro Gwened**. Er rummad-se e renker skingomzioù ar rouedad RCF* ivez, **Radio Rivages** ha **Radio Sainte-Anne**.

N'eus skingomz kenwerzhel ebet a skign e brezhoneg evit ar poent.

Ret eo d'ar skingomzioù goulenn ingal digant ar CSA* an aotre da skignañ a dalvez evit pemp bloaz. Evit pemp skingomz "brezhonek" e oa dibenn an aotre-se e miz Mae 2007. Un digarez e oa evit ar skingomzioù all da c'houlenn frekañsoù nevez ivez. Goulennoù lies a oa bet graet enta met n'eus nemet Radio Kerne ha Radio Bro Gwened o deus bet. Nebeut a frekañsoù nevez a oa da vezañ roet evit kalz a c'houlenn e gwirionez, ha, gant se, ne oa ket kalz a spi evit ar skingomzioù-se da gaout o gwalc'h.

E Penn-ar-Bed emañ ar c'hinnig liesseurtañ : an hanter eus ar frekañsoù aotreet eno d'ar rummad A zo korvoet gant skingomzioù a skign brezhoneg.

Er Mor-Bihan eo brasoc'h kementad ar frekañsoù roet d'ar skingomzioù a ro ur plas d'ar brezhoneg en o frogrammoù (20% eus frekañsoù ar Mor-Bihan) eget en Aodoù-an-Arvor (11% eus frekañsoù Aodoù-an-Arvor). En Il-ha-Gwilen n'eus nemet ar skingomz publik a skign un tammig bihan a vrezhoneg en e brogrammoù. An abadennoù kinniget gant studieren war gwagennoù **Radio Campus** a zo chomet a-sav e-kerzh ar bloavezh 2005/2006. El Liger-Atlantel, n'eus nemet ur c'hinnig kevredigezhel gant **Alternantes FM**; n'eus bet morse plas ebet evit ar brezhoneg war **France Bleu Loire Océan**.

Ar brezhoneg war ar gwagennoù : dizingal eo ar c'hinnig diouzh ar vro

Tost da 200 eurvezh a abadennoù brezhonek (**hep kontañ ar programmoù sonerezh rik**) a veze skignet bep sizhun e 2005/2006. Aet eo an niver hollek a abadennoù war greskiñ abaoe 2001 a-drugarez d'ar skingomzioù kevredigezhel ha d'an abadennoù adskignet dre an eskemmoù etre ar skingomzioù. Stabil a-walc'h eo an niver a abadennoù kinniget gant ar skingomzioù foran met un digresk a zo bet e 2006.

90% eus an abadennoù a vez kinniget gant ar skingomzioù lec'hel kevredigezhel.



Dasparzh an niver a eurvezhioù brezhonek skignet dre skingomz e 2005/2006


Skignañ a ra an div skingomz vrezhonek an hanter eus an holl brogrammoù kinniget e Breizh hag ar peder skingomz pouezusañ a gemer perzh er rouedad a skign ar peder fempvedenn eus an holl brogrammoù.

Bihan eo plas ar skingomz publik war ar gwagennoù (10% eus ar programmoù) daoust ma vez goloet Breizh a-bezh ganti.


Eskemmoù a vez graet etre skingomzioù zo a-benn gwellaat o c'hinnig programmoù : c'hwec'h skingomz diwar zek a gemer perzh tamm pe damm er rouedad-se. N'eus nemet skingomzioù RCF* ha re Radio France ne gemeront ket perzh enni.

Dizingal eo plas ar brezhoneg war ar vandenn FM* diouzh ma vezer o chom e Kemper pe e Felger. Pell emeur diouzh ur c'hinnig skingomz vrezhonek a c'holofe tiriad Breizh en e bezh. Ur c'hinnig lec'hiet eo c'hoazh ha dizingal a-walc'h eo diouzh al lec'h : n'eus nemet en ul lodenn eus Kerne ha Leon ma c'haller selaou skingomzioù brezhonek gant **Arvorig FM** ha **Radio Kerne**. Brasjediñ a reer e c'hallfe ur Breizhad diwar eizh selaou ur skingomz hollvrezhonek a-hed an deiz (hag ur brezhoneger diwar dri hepken).

Eurvezhioù skignet bep sizhun (an niver hollek : 196e10mn)



Eurvezhioù produet bep sizhun (an niver hollek : 101e23mn)



- Radio Sainte-Anne
- Radio Rivages
- Plum FM
- Alternantes FM
- Radio Bro Gwened
- Radio Kreiz Breizh
- Arvorig FM
- Radio Kerne
- France Bleu Armorique
- France Bleu Breiz Izel


Takadoù goloet gant doareoù lies ar skingomzioù brezhonek e 2006

Dizingal-kenañ eo goloadur an tiriad gant ar c'hinnig skingomz vrezhonek c'hoazh.



Peseurt abadennoù a c'haller selaou e brezhoneg

Dasparzh padelezh sizhuniek an abadennoù brezhonek (hep kontañ ar programmoù sonerezh) diouzh ar rum-mad abadennoù



Peder fempvedenn eus an abadennoù skignet a zo pe magazinoù kelaouiñ ha kevredigezhel pe magazinoù sevenadurel; bras eo ar plas roet d'ar c'helaouadennoù. Levezon ar skingomzioù hollvrezhonek a gaver amañ : produiñ ha skignañ a reont teir abadenn bemdez gouestlet d'ar c'helaouiñ.


Abadennoù sonerezh a vremañ a c'haller selaou war ar skingomz ivez. Pouezus eo kinnig seurt programmoù, d'ar grennarded peurgetket, ha diskouez evel-se e c'heller komz e brezhoneg eus traoù distag diouzh danvez Breizh. E gwirionez, ur gudenn a statud zo evit ar brezhoneg gant ar re yaouank n'o devez ket c'hoant lakaat diforc'h etrezo hag o remziad peurliesañ. A bouez eo neuze e vefe kinniget d'an arvesterien dibar-se abadennoù a zedennfe anezho.

Bihan eo ar plas roet d'an abadennoù evit ar vugale war ar gwagennoù c'hoazh met ur c'hinnig nevez o tiwanañ eo. A bouez eo evit brezhonegerien an hentadoù divyezhek hag evit reiñ tro d'o zud da lakaat ar brezhoneg da vevañ en ti. Neoazh, muioc'h eget abadennoù a ro ar gaoz d'ar re vihan ez eus ezhomm da broduiñ abadennoù savet a-ratozh evito, da lavaret eo gant danvezioù diouzh o c'hoant.

Skoazell ar strollegezhioù foran : ur goulenn kreñv a-berzh ar skingomzioù kevredigezhel

Reiñ harp d'ar yezhoù rannvro zo unan eus kefridioù **Radio France**. Rankout a ra savlec'hioù lec'hel France Bleu - a ya en-dro gant taos ar c'hleweled dreist-holl - reiñ ur plas d'an abadennoù brezhonek enta : **France Bleu Breiz Izel, France Bleu Armorique** ha **France Bleu Loire Océan**. N'eus abadenn vrezhonek ebet e France Bleu Loire Océan c'hoazh koulskoude.

Betek 2006, ne'z ae ket sammad an abadennoù brezhonek war greskiñ met stabil e oa. Stadet ez eus bet un adkreizennañ e 2006 : tennet ez eus bet ur prantad a bouez digant ar programmoù lec'hel evit mad un abadenn produet e Pariz. Un digresk bras zo bet evit ar brezhoneg gant kael an distro-skol 2006 a-hend-all : tennet ez eus bet un eurvezh digant abadenn an noz, da lavaret eo un drederenn eus abadennoù brezhonek ar sizhunvezh. Lodennet e-kerzh an devezh eo bet an abadennoù all ouzhpenn.





Ar skingomzioù kevredigezhel a c'hall resev skoaziadoù digant ar Stad dre font harpañ ar skingomzioù (FSER*). Harpet int ivez gant strollegezhioù tiriadel Breizh a gemer perzh er mod-se e diorren ar brezhoneg er skingomz.

Emdroadur dasparzh ar skoaziadennoù foran² roet d'ar skingomzioù kevredigezhel etre 2001 ha 2005 en euroioù

War greskiñ ez a skoazell strollegezhioù tiriadel Breizh : +45% e-kerzh ar pemp bloavezh diwezhañ. Tost daougementet eo bet skoazell Rannvro Breizh ha lieskementet eo bet dre dri ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg er skingomz gant departamant ar Mor-Bihan, tra m'eo chomet heñvel hini Aodoù-an-Arvor.

Kuzul-rannvro Breizh eo ar strollegezh foran a ro ar muiañ d'ar skingomzioù hiziv an deiz (tost un hanter eus an hollad e 2005). Bihan eo c'hoazh lodenn an departamantoù, kevatal da hini ar Stad eo.

² Ne zalc'her ket kont amañ eus skoazell ar c'humunioù.



Ha pa yafe skoazell ar strollegezhioù tiriadel d'ar skingomz vrezhonek war greskiñ, n'eo ket bras a-walc'h c'hoazh evit krouiñ ur skingomz vrezhonek e Breizh a-bezh hervez ar pal bet lakaet gant Rannvro Breizh en he steuñv politikerezh yezh. A-benn tizhout ar pal-se e vefe ret krouiñ ur font a-ratozh evit produiñ abadennoù brezhonek e Breizh a-bezh hag a vefe distag diouzh budjed ar brezhoneg. Diskouez a rafe un diviz a seurt-se an dalvoudegezh ahel politikel treuz a ro ar Rannvro d'he folitikerezh yezh.

Diorren ar c'hinnig : diaesterioù ha diskoulmoù

Ha ret-groñs eo kaout frekañsoù nevez ?

Evit diorren ar skingomz e brezhoneg war verr dermen e ranker fiziout frekañsoù nevez er skingomzioù a skign e brezhoneg ha skoazellañ ar raktresoù nevez. Ezhomm o deus ar skingomzioù lec'hel kevredigezhel eus harp ar strollegezhioù foran hag eus ar Rannvro evit kaout aotre ar CSA*. Diviz ar CSA* da reiñ div frekañs nevez hepken d'ar skingomzioù brezhonek a lak un harz da ziorren o skignañ war ar vandenn FM*.

War grenn dermen e vefe dazont ar skingomzioù (hag ar skinweliou ivez) war ar Genrouedad avat, hervez an dud a vicher. Ar skignañ n'eo ket ur gudenn ken pa reer gant ar gwiad, splann eo. Ar pezh a gont neuze eo kinnig un danvez plijus a-walc'h da zedennañ selaouerien. Pouezus-bras eo da zifennerien ar brezhoneg teurel evezh ouzh an teknologiezhioù nevez evel ma ra lod anezho c'hoazh.

Diorren ar rouedad

Evit ledanaat ar c'hinnig abadennoù e c'haller diorren ar rouedad eskemm abadennoù. Aet eo an div skingomz hollvrezhonek pell en aozadur ar rouedad-se : ouzhpenn eskemmañ programmoù e laka an div skingomz-se o barregezhioù e boutin. Mont a ra ar c'henlabour-se endro gant ar gevredigezh **Brudañ ha skignañ**. Betek-henn n'eus nemet Radio Kerne hag Arvorig FM a zo ezel anezhi. Krouet ez eus bet ur gevredigezh all, **Bann** hec'h anv, gant an div skingomz all a eskemm o abadennoù, Radio Kreiz Breizh ha Radio Bro Gwened. E-kerzh ar bloavezh 2007 e tlefe ar peder skingomz bezañ bodet gant Brudañ ha skignañ.

Harpet eo ar rouedad-se gant Rannvro Breizh, departamantoù Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan, koulskoude n'eus nemet 10% eus budjed ar strollegezhioù tiriadel dre-vras a ya da arc'hantaouiñ ar rouedad-se. Degas a ra ar Rannvro 70% eus ar skoaziadoù roet d'ar rouedad.

Kaout ur pol produiñ abadennoù zo un hent nevez evit diorren ar rouedad a c'hallfe magañ ar skingomzioù a fell dezho skignañ abadennoù e brezhoneg e Breizh a-bezh. Krog eo **Dizale** da brederiañ war ar sevel abadennoù radio prest da vezañ skignet. Savet he deus teir sturabadenn* evit diskouez liesseurted ar programmoù a c'hallfe bezañ kinniget. Bremañ eo kendrec'hiñ ar skingomzioù a skign e brezhoneg d'ober gant an doare nevez-se da labourat.

Al labour evit peurc'holeiñ an dachenn

Betek-henn n'eus radio brezhonek ebet e bro Treger ha Goueloù, hag hi ar vro enni ar feur uhelañ a vrezhonegerien er boblañs. Gallet en defe raktres **Kaouenn FM** klokaat ar rouedad skingomzioù kevredigezhel lec'hel eno. Met korbellet eo bet he zeuliad goulenn frekañs gant ar CSA*. E deroù 2007 eo deuet Kaouenn FM da vezañ **Kaouenn Net** a-benn ar fin : ul lec'hienn perzhiañ ma c'hell an neb en deus c'hoant kinnig danvez klewelet e brezhoneg d'ar wiaderien* all.

Douget ez eus ur raktres all gant ur radio kevredigezhel lec'hel, **Korrigans FM** a skign tro-dro da Wened : krouiñ un abadenn sevenadurel ha kelaouiñ pemdeziek e brezhoneg. Gortoz a ra skoazell ar Rannvro evit reiñ lañs d'an abadenn hag evit enfredañ ul lusker. N'eo ket bet roet ar skoaziadenn arc'hant evit ar poent.

An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg

Stankoc'h eo deuet ar c'hinnig programmoù brezhonek da vezañ, gant an teknologiezhioù nevez ha dreist-holl gant ar Genrouedad (gw. p. 118). Gallout a reer selaou an holl brogrammoù brezhonek kinniget gant ar skingomzioù dre urzhiataer. Skignet e vez war-eeun re skingomzioù kevredigezhel lec'hel ar rouedad war lec'hienn **Stalig** ha kinnig a ra **An Tour Tan** d'ar wiaderien* pellgargañ abadennoù brezhonek Penn-ar-Bed. Gant daou skourr eus France Bleu (Bleu Breiz izel ha Bleu Armorique) e vez kinniget pellgargañ abadennoù brezhonek zo. France Bleu Armorique eo bet ar skingomz kentañ o ginnig podskignañ* un abadenn vrezhonek, "**Sul Gouel ha Bemdez**", adalek miz Mae 2006. Un hent all evit ledanaat ar skignañ ha diorren ar skingomz e brezhoneg eo ar podskignañ*.

Labour Rannvro Breizh evit diorren ar skingomz e brezhoneg

Embannet he deus ar Rannvro he fal e-keñver ar skingomz : kaout brezhoneg skignet war Breizh a-bezh. A-benn tizhout ar pal ha kavout an diskoulmoù he deus kefridiet un den da gas da benn ur studiadenn diwar-benn saviad ar radio e Breizh evit e frammañ, resisaat palioù ar radioioù lec'hel publik, diorren plas ar brezhoneg er pemp departamant ha krouiñ implijoù oc'h en em harpañ war ur gwir radio breizhek.

Prederiañ a ra ar Rannvro war grouidigezh ur rouedad unvan a c'hallfe liammañ ar skingomz publik ouzh rouedad ar skingomzioù kevredigezhel a ya en-dro betek-henn. Evit ma yafe en-dro ar rouedad-se e ranker dibab pe krouiñ ur framm gouest d'he merañ.

Gortoz a reer kalz digant Rannvro Breizh evit diorren ar skingomz e Breizh. Emichañs e c'hallo respont d'an holl ezhommoù rak bevennet eo he galloudoù evit ar poent. Embannet he deus meur a wezh e oa e soñj goulenn e vefe astennet he galloudoù gant ar gwir da arnodiñ (gw. p. 30). Kement-se a c'hallfe harpañ diazevadur ur skingomz vrezhonek evit Breizh a-bezh.

Klozadur darnel

Bihan eo plas ar brezhoneg e bed ar skingomzioù c'hoazh. Ar skingomzioù a skign programmoù brezhonek a ya d'ober un darn vihan-kenañ eus skingomzioù Breizh. Ha rouesoc'h c'hoazh eo ar re a skign e brezhoneg hepken. Gant ar skingomzioù kevredigezhel e vez skignet 90% eus an abadennoù brezhonek. Met skingomzioù lec'hel int, ne c'holoont ket tiriad Breizh a-bezh. N'eus nemet un eizhvedenn eus ar boblañs a c'hall selaou ar skingomzioù hollvrezhonek.

Dilañs a verzer gant ar radio publik : un digresk eus amzer an abadennoù kinniget hag ur c'hinnig a loden-

noù strewet. Dont a ra al lusk eus ar skingomzioù kevredigezhel lec'hel kentoc'h. Strivañ a reont da ledanaat ar skignañ programmoù brezhonek o c'houlenn frekañsoù nevez, o kenlabourat dre ur rouedad, o kreskiñ ar c'hinnig programmoù gant un eskemm abadennoù. Met ezhomm a zo da emdreiñ war-zu an digreizennañ ha da astenn levezon Rannvro Breizh war ar mediaoù evit mont pelloc'h ganti e gwirionez.

An teknologiezhoù nevez, hag ar skignañ programmoù dre ar Genrouedad peurgetket, zo un doare a bouez da ziorren ar c'hinnig en dazont.

Mediaoù Klozadur

Lakaet e vez ar mediaoù en a-raok gant an dilennidi hag ar c'hevredigezhioù sevenadurel evel un elfenn a bouez bras evit diorren ha talvoudekaat implij ar brezhoneg er vuhez pemdez. N'eus ket bet kalz a araokadennoù war dachenn ar mediaoù e brezhoneg etre 2000 ha 2006 koulskoude.

N'eus bet araokadenn ebet evit raktres ur chadenn **skinwel** divyezhek publik, met lakaet eo da bal e testenn politikerezh yezh Rannvro Breizh.

War dachenn ar **skingomz** n'eo ket bet savet ar rouedad skignañ abadennoù brezhonek e Breizh a-bezh. Un damrouedad he deus roet an tu da vrasaat an dolzennad a abadennoù skignet a-drugarez da eskemoù memes tra.

Gounezet ez eus bet tachennoù d'ar yezh war ar **Genrouedad** memes tra : n'eus nemet drezi eo aet ar skignañ war-raok. Un doare evit ar yezhoù bihanniver da ledanaat o skignadur hag o implij er vuhez pemdez eo ar Genrouedad e gwirionez.

D'ar servij publik eo da zougen raktresoù a bouez evel ur chadenn skinwel rannvroel divyezhek pe ur skingomz vrezhonek skignet war Breizh a-bezh. Ne c'hall ket seurt raktresoù bezañ douget gant ar gennad prevez. Prenet ez eus bet skiant gant skouer TV Breizh war an dachenn-se. Stanket eo an traoù hiziv an deiz rak diaes eo d'ar strollegezhioù lec'hel dougen raktresoù a vent vras abalamour d'o budjedoù ha d'o galloudoù re strizh, abalamour d'un diouer a youl bolitikel ivez ha peogwir n'eus ket ur goulenn kreñv pe fraezh a-walc'h a-berzh ar Vretoned.

Ha pa ne vefe ket bet kaset ar raktresoù uhelek-se da benn ez eus bet kinniget danvezioù lies hag a-zoare d'an arvesterien gant ar frammoù a vicher evel Dizale.

Ar Rannvro eo ar strollegezh foran a harp ar muiañ ar mediaoù e brezhoneg (kleweled, skinwel ha skingomz) gant ur budjed a dostae ar milion a euroioù e 2005, da lavaret eo tost ur bempvedenn eus budjed bloaziek ar Rannvro gouestlet d'ar brezhoneg. Eus 57% eo kresket ar rann "mediaoù"-se eus ar budjed rannvroel etre 2002 ha 2005. Koulskoude, ur budjed kalz brasoc'h c'hoazh a vefe ret d'ar strollegezhioù foran gouestlañ da ziorren ur gwir media e brezhoneg.

Teknologiezhioù nevez

Intret eo ar vuhez pemdez gant an teknologiezhioù nevez bremañ.

Rankout a ra ar brezhoneg mont da-heul al lusk-se.

Meziantoù e brezhoneg evit un endro diouzh ezhommoù ar vrezhonegerien

Nerzh labour tud a-youl vat

Gouvezet en deus bed ar brezhoneg tennañ gounit eus diorroidigezh ar **meziantoù frank pe digoust** a-drugarez d'ul labour kaset da benn gant tud a-youl vat dreist-holl.

A-raok 2002 e oa nebeut a draoù war dachenn an ostilhoù stlenn e brezhoneg : **KDE**, un endro burevek dindan Linux a oa bet troet e 1999 (gant tost da 8000 troienn), heuliet gant **Mandrake** (evit Linux c'hoazh) e 2000. War-lerc'h e oa bet troet **Opera** ivez, ur merdeer* lakaet e meur a yezh vihanniver eus Europa gant skoazell Unaniezh Europa. Meziantoù merañ daveennoù levraoueg a oa e brezhoneg d'ar mare-se ivez : **Alexandrie** ha **WinISIS**.

Meur a ostilh brezhonek a c'haller implijout war ar Genrouedad bremañ : kinniget ez eus merdeerioù* digoust war ar Genrouedad evel **Opera**, **Navig** pe **Firefox**. Luskerioù-enklask a gaver war ar Genrouedad ivez : **Altavista** pe **Google**.

E 2003 e oa bet krouet ar gevredigezh **Korvigelloù an Drouizig** zo he fall kas implij ar brezhoneg war-raok war dachenn an teknologiezhioù nevez. Oberiant-kenañ eo war ar c'hrouiñ pe an treiñ meziantoù frank digoust e brezhoneg, bras eo ar sammad labour he deus kaset da benn ha troidigezhioù meziantoù all zo war ar stern. Ar meziantoù diazez a c'haller kavout gant an heuliad meziantoù bureveg **Open Office** peurgetket (meziantoù frank anezho) abaoe fin 2005. Ur skridtreterezh*, un taolennet hag un diafizer (bet pellgarget gant tremen 2000 den e korf pevar bloaz hag a zo bet implijet evit reizhañ skrid levrioù zo) a ya d'ober an heuliad-se. Ur merdeer* Kenrouedad hag ur posteler* zo ouzhpenn evit

klokaat an ostilhoù-se. Skignet eo ar meziantoù frank-se evit netra dre ar Genrouedad ha gant ur CDROM* bet embannet gant Ofis ar Brezhoneg e deroù 2006.

Labourioù all a zo bet kaset da benn war dachenn an ostilhoù stlenn e brezhoneg gant **STUR** peurgetket a zo meur a raktres war ar stern gantañ.

Troet ez eus bet gant Korvigelloù an Drouizig un tregont **c'hoari** bennak war urzhiataer e-touez ar re eeunañ. Un nebeud lec'hiennoù brezhonek a ginnig c'hoarioù ivez met mankout a ra dezho un etrefas* hoalusoc'h ha danvezioù danzeetoc'h dre-vras. An dalc'h war an dachenn-se eo bezañ gouest da azasaat diouzhtu e brezhoneg ar produioù nevez a zeu er-maez ; ar pezh a c'houlenn amzer hag arc'hant.

Un diorren heñchet gant Ofis ar Brezhoneg

Gant an Ofis e oa bet ambrouget an darn vrasañ eus ar raktresoù meneget er rannbennad a-raok. Meziantoù all, evel **Skype** (ur meziant frank a c'haller, gantañ, pellgomz pe flapañ evit netra dre ar Genrouedad) a oa bet troet e brezhoneg gant an Ofis e-unan.

E gwirionez, birvilh zo war dachenn an teknologiezhioù nevez e Breizh ma kaver barregezhioù e-leizh. Gant **TermBret**, kreizenn dermenadurezh Ofis ar Brezhoneg, e oa bet aozet ur c'hendiviz war an teknologiezhioù nevez hag ar brezhoneg e 2006. Ennañ e oa bet bodet evit ar wech kentañ kumuniezh ar stlenneg e brezhoneg a-benn ober tro ar raktresoù, gwelet an ezhommoù a zo ha broudañ ar c'henlabour.

Ouzhpenn al labour treiñ meziantoù frank a rank bezañ kendalc'het, unan eus daoù bras da zont a vo kinnig d'ar vrezhonegerien stummoù brezhonek eus ar meziantoù kenwerzhel a vez implijet ganto war ar pemdez. Kement-se a dalvez skoulmañ darempredoù padus gant **Microsoft**, an embregerezh pennañ war an dachenn-mañ. Goude daou vloavezh a strivoù a-berzh an Ofis harpet gant prezidant Kuzul-rannvro Breizh ez eus bet sinet ur c'henemglev a bouez bras evit mont war an tu-se etre Microsoft, Rannvro Breizh hag Ofis ar Brezhoneg d'an 28 a viz Ebrel 2007. Tud a vicher ar framm diwezhañ-se a genaozo hag a gaso al labour azasaat da benn. Da gentañ e vo kinniget ur stumm divyezhek eus ar pack Office (an termenoù brezhonek a zeuio war wel e lagadennoù), met ar raktres a vefe kinnig ur stumm e brezhoneg hepken diwezhatoc'h.

Klask a ra an Ofis brudañ al labourioù bet graet war dachenn ar stlenneg ha broudañ an dud da implijout ar binvioù-se. Neoazh, frammoù a vicher a vank evit kas al labour war-raok war dachenn an teknologiezhioù nevez. Ezhomm zo neuze da grouiñ e-barzh an Ofis ur servij aratozh a vo gouest da heuliañ ar gennad-se a emdro dizehan ha da ambroug ar strivoù graet war ar Genrouedad gant ur gumuniezh brezhonegerien a-youl vat.

Ar genrouedad, ur benveg evit diorren plas ar brezhoneg er gevredigezh

Daoust ma vank binvioù evit en muzuliañ resis eo anat e kresk an niver a bajennoù brezhonek war ar Genrouedad. O sellet ouzh an niver a bajennadoù enno ar ger "brezhoneg" daveet gant al lusker-enklask Google, da skouer, e verzer eur tremenet eus un nebeud miliadoù e 2002 da veur a vilion e 2006.

Un doare da skignañ gwelloc'h ar brezhoneg

Ar skingomz

Ar skingomz eo en deus tennet splot da gentañ eus an doare nevez-se da vezañ skignet.

Abaoe 2001 e skign hag e tiellaou **An Tour Tan** abadennoù ar skingomzoù kevredigezhel lec'hel skignet war dachenn Penn-ar-Bed. Gant lec'hienn An Tour Tan e vez skignet abadennoù Radio Kerne war-eeun abaoe deroù 2005 a-hend-all. Ul lec'hienn all, **Radio Stalig**, a skign war-eeun abadennoù skingomzoù kevredigezhel lec'hel abaoe miz Gwengolo 2004 (met ne vezont ket diellaouet).

Lakaet e vez enlinenn **keleier France Bleu Breizh Izel** e brezhoneg. Adskignet e vezont war lec'hienn ar skingomz. Daou radio publik Breizh velestradurel (France Bleu Breizh Izel ha France Bleu Armorique) a ginnig podkastañ* un darn eus o abadennoù brezhonek a-hend-all.

Ar skinwel

Diorren a ra ivez an abadennoù skinwel dre ar Genrouedad : un toullad nevezenti zo deuet war an dachenn-se e-kerzh ar bloavezh 2006/2007.

France 3 Ouest da skouer a adskign he holl abadennoù brezhonek dre he lec'hienn Genrouedad abaoe an diskaramzer 2006. Hag un nevezenti zo bet gant ar chadenn publik e miz Ebrel 2007 : un abadenn sport displeget e brezhoneg a oa bet skignet war-eeun enlinenn, redadeg war varc'h-houarn Tro Bro leon 2007.

Implijet e vez ar Genrouedad evit skignañ "**Skinwel-web**" ivez abaoe miz Meurzh 2003, un abadenn vizek divyezhek krouet gant **An Tour Tan** evit bezañ skignet war ar Genrouedad hepken. Dielloù an holl abadennoù a c'haller gwellet war al lec'hienn ivez.

E miz Kerzu 2006 ez eus bet roet lañs da "**Webnoz**", un abadenn nevez e brezhoneg a vez skignet ur wech ar miz war-eeun war ar Genrouedad hepken. Diellaouet e vez an abadennoù war al lec'hienn **brezhoweb.com**.

Ganet e oa bet e deroù 2007 **Kaouenn Net**, ul lec'hienn da vodañ enrolladennoù son ha video e brezhoneg. Sevel un diaz klewelet graet gant an holl hag az aio dreist d'ar bevennoù bro eo ar pal.

E deroù 2007 e oa bet ganet ivez **Gwagenn TV**, ur chadenn vrezhonek a c'heller pellgargañ pe sellout enlinenn. He fal eo kinnig ingal sujedoù krenn e brezhoneg. Ar c'hoant eo reiñ ar gaoz da vrezhonegerien yaouank reter (ha diavaez) Breizh peurgetket, koulz ha d'an deskidi.

Raktresoù all e brezhoneg a zo war-nes diwanañ war ar Genrouedad. Gant An Tour Tan peurgetket ez eus war ar stern un abadenn evit ar vugale : "Dibikouz".

Ar c'hazetennoù

Diwar atiz skipailh **Bremañ** ez eus bet roet lañs, e miz Genver 2004, d'ur gazetenn digoust, **Bremaik**, a vez embannet war ar Genrouedad hepken. Bep Lun e vez kinniget ennañ pennadoù berr diwar-benn ar sport, ar sinema, an dudi, ar vuhez pemdeziek. Ur miliad bennak a lennerien a zeu war al lec'hienn bep sizhun. Ur gelaouenn bemdeziek enlinenn eo a vank bremañ.

Digoret en doa **Ouest-France** e vlog d'ar brezhonege 2006 : e-pad pevar miz e oa bet lakaet enlinenn, ur wezh ar sizhun, ur pennad e brezhoneg troet gant servij Treiñ an Ofis.

Diouzh e du en doa paouezet **Le Télégramme** da skignañ e ziverradennoù elektronek pemdeziek eus keleier ar bed, Frañs ha Breizh; troet e veze e brezhoneg gant an Ofis abaoe miz Ebrel 1999. Divizet he deus ar gazetenn ne c'halle ket kenderc'hel da bourchas ur servij a seurt-se d'ar wiaderien* evit netra, ne vern e peseurt yezh e vefe. Ur benveg kelaouiñ e oa da gentañ koulz hag ur benveg pedagogel a-feson da eil.

Pourchas a ra an **Agence Bretagne Presse** nevez krouet pellskridoù diwar-benn ar brezhoneg peurgetket. War ar Genrouedad e kaver ar servij digoust -se.

En Europa e oa bet krouet, e 2000, un ajañs-kelaouiñ enlinenn arbennikaet war ar yezhoù bihanniver, **EuroLang**, diwar atiz Burev Europa evit ar Yezhoù Implijet Nebeutoc'h.

An darn vrasañ eus ar c'helaouennoù e brezhoneg o deus savet ul lec'hienn Genrouedad a-benn kinnig o embannadurioù. Peurvuiañ n'eo nemet ur c'hinnig eus ar gazetenn met kinniget e vez gant lec'hiennoù zo pellgargañ niverennoù kozh ar c'hazetennoù pe pennadoù-skrid zo, evel war lec'hienn ar gazetenn **Bremañ**.

An dafar yezhel enlinenn


E-kerzh ar bloavezhioù 2000 ez eus bet bastet da ezhommoù ar wiaderien* c'hoant ganto kaout dafar yezhel evit ar brezhoneg. Da gentañ ez eus bet lakaet enlinenn bankoù roadennoù gerioù diwar danvez bet embannet a-raok war paper : geriadur F. **Favereau** ha lec'hienn **Preder**. E deroù 2006 ez eus bet krouet daou venveg a-ratozh evit ar Genrouedad : **TermOfis** (diaz termenoù arbennik erbedet gant kreizenn dermenadurezh an Ofis, ennañ tremen 30 000 pennger e 2007 c'hoazh) ha **Geriadur.com** (ur geriadur enlinenn aozet gant STUR, ennañ tremen 20 000 anv-kadarn e 2007).

Mankout a ra c'hoazh war ar Genrouedad ur geriadur klok gant termenadurioù evit kinnig teñzor ar brezhoneg.

Bezañs ar brezhoneg war ar Gwiad


An niver a lec'hiennoù Kenrouedad en ur yezh vihaniver renablet gant Open Directory Project e miz Mae 2006

Bihan-kenañ e chom an niver a lec'hiennoù a gaver e brezhoneg : a-boan 250 lec'hienn.



Kinnig a ra Open Directory Project ur c'hatalog klok a-walc'h eus ar pezh a zo e brezhoneg war ar Genrouedad. Lec'hiennoù krouet gant kevredigezhioù pe hiniennoù gouestlet d'ar brezhoneg pe a denn d'ar yezh a gaver da gentañ. Ur c'hard eus al lec'hiennoù a gaver e brezhoneg war ar Gwiad a denn d'ar vuhez sevenadurel (strolladoù sonerezh peurgetket). N'eus ket kalz eus ar gouelioù hag eus ar festivalioù lies zo e Breizh a ginnig lec'hiennoù e brezhoneg koulskoude.

Dasparzh al lec'hiennoù e brezhoneg diouzh ar rummad



Nebeut a lec'hiennoù personel a gaver e brezhoneg c'hoazh; un nebeud blogoù zo memes tra, pe c'hoazh lec'hiennoù tematek a denn d'ar c'heginañ, d'ar buheziñ dudi evit ar vugale, da filmoù bevaat* Japan (Breiz atao fansub), hag ul lec'hienn bornografek zoken hag a ginnig... kentelioù brezhoneg! **Nireblog**, ul lec'hienn krouiñ blogoù troet e brezhoneg e 2007, a sikouro da liesaat al lec'hiennoù personel brezhonek moarvat. Gant ar memes youl e vefe mat d'an hentadoù divyezhek ambroug ar c'hrouiñ blogoù e brezhoneg gant o skolajidi da skouer.

N'eo ket gwall vras plas ar yezh war ar Gwiad war dachenn an armerzh. Ne gaver e brezhoneg nemet lec'hiennoù un nebeud embregerezhioù sinet ganto Ya d'ar brezhoneg peurliesañ.

Bihan e chom plas ar brezhoneg e lec'hiennoù an ensavadurioù hag ar strollegezhioù foran ivez. Eus tu ar c'humunioù, ur pemzek ti-kêr bennak a ginnig pajennoù zo e brezhoneg war o lec'hienn Genrouedad bremañ (Gwened peurgetket), met n'eus nemet daou a ginnig ur stumm divyezhek klok : ti-kêr Karaez-Plougêr ha hini Pleskob. Penn kentañ un emdroadur eo. N'eo ket divyezhek lec'hiennoù an departamantoù na hini ar Rannvro.

Evit echuiñ, kalz a zale zo e-keñver an deskiñ brezhoneg enlinenn a-hend-all, nemet lec'hienn **Kervarker** a ginnig kentelioù brezhoneg evit ar c'hallegerien, ar saoznegerien, ar spagnolegerien hag an alamanegerien.

Peseurt implij eus ar brezhoneg el lec'hiennoù ?

Disheñvel eo ar plas roet d'ar brezhoneg diouzh al lec'hiennoù : lec'hiennoù zo a zo e brezhoneg hepken pe liesyezhek, re all a ginnig un nebeud pajennoù e brezhoneg, re all c'hoazh - hag int gouestlet d'ar brezhoneg koulskoude - zo e galleg hepken pe gant ur plas arouezel evit ar brezhoneg. E-touez al lec'hiennoù brezhonek, n'eus nemet unan diwar bemp zo savet evit ar vrezhonegerien hepken. Lec'hiennoù a denn d'ar c'helaouiñ, d'ar stlenneg, d'ar bedagogiezh pe blogoù int dreist-holl. War greskiñ ez a an niver a lec'hiennoù e brezhoneg hepken ; arouez ur gumuniezh yezh oc'h en em stummañ eo.

Plas ar brezhoneg el lec'hiennoù a implij ar brezhoneg

An tri c'hard eus al lec'hiennoù-se a ginnig ur stumm e brezhoneg penn-da-benn.


E brezhoneg hepken 19%

Ur plas arouezel evit ar brezhoneg 3%

Un nebeud pajennoù e brezhoneg 14%

An darn vrasañ eus ar pajennoù e brezhoneg 9%

An holl bajennoù e brezhoneg (lec'hiennoù liesyezhek) 55%




Emañ ar brezhoneg da vat e **Wikipedia**, un holloueziadur enlinenn, digor, digoust, frank a wirioù ha liesyezhek krouet e deroù 2001. Kenskriveret a-stroll eo Wikipedia hag a zo e-touez an ugent lec'hienn gweladennet ar muiañ war ar Gwiad. Ne ra plas ar brezhoneg nemet kreskiñ enni a-drugarez da 54 "wikipedour" a-youl vat, 22 anezho o vezañ oberiant da vat. Lakaet o deus ar brezhoneg da vezañ an 50vet yezh enni tremen 10 000 pennad war wikipedia e dibenn 2006. Al lec'hienn vrasañ e brezhoneg

eo deuet Wikipedia da vezañ : ouzhpenn daou vilion a c'herioù brezhonek diwar-benn temoù lies-tre zo enni. Reiñ a ra danvez evit an holl (skolajidi, liseidi, studierien, emzeskerien,...).

Plas yezhoù bihanniver zo war Wikipedia (diouzh an niver a c'herioù) e miz Mae 2006

Ar yezh keltiek kentañ war Wikipedia eo ar brezhoneg (dirak ar c'hembraeg).



CDROM*où, DVD*où kinniget e brezhoneg

Bihan eo ar pezh a c'haller lenn ha gwelet e brezhoneg war skoroù nevez evel ar CDROM* hag an DVD*. Nevez-flamm eo an doare-se da embann e brezhoneg ; gant hentennoù deskiñ ar yezh en deus kroget. "**E brezhoneg pa gari**" gant **Stumdi** eo bet an hentenn deskiñ kentañ evit an dud bet embannet e stumm un DVD* evit ur yezh rannvroel e Frañs. Eus e du, **Dizale** a labour evit diorren an embann DVD*où dudi e brezhoneg abaoe 2003. Embann a ra traoù e brezhoneg koulz evit an dud deuet hag ar vugale. Pemp DVD* a zo bet embannet evel se evit ar vugale hag unan eus an daou film bet advouezhiet e brezhoneg evit ar skinwel, "**An Afer Sezneg**", a gaver en gwerzh.

Kinnig a ra **TES*** un dibab kasedigoù VHS* evit ar skolioù c'hoazh : tresadennoù-bev evit ar re vihan, teulfilmoù bet skignet war ar skinwel. Kas a ra raktresoù CDROM* ha DVD* da benn hiviziken : azasaat hentennoù deskiñ peurgetket.

Koust embannadur un DVD* a zo ur skoilh evit diorren ar skoroù nevez-se e brezhoneg : hervez ar CNC* e ranker moullañ mil skouerenn da nebeutañ evit dont a-benn da dizhout ar c'hempouez ekonomikel. Evit embann seurt skoroù eo ret lakaat barrezhioù e boutin ha diorren ar marc'had.

Teknologiezhioù nevez Klozadur

A-drugarez d'ar Genrouedad eo bet digoret tachenn an teknologiezhioù nevez d'ar brezhoneg er bloavezhioù diwezhañ. Pouezus eo, e gwirionez, e c'hallfe ar vrezhonegerien kaout binvioù e brezhoneg dre ar Genrouedad (binvioù yezh evel geriadurioù, bankoù termenoù ha binvioù stlenn) ha gallout seurfiiñ e brezhoneg hepken.

Ur media a-zoare (ha ret-holl bremañ) evit skignañ ha diorren ar yezhoù bihanniver eo ar Genrouedad rak drezi e c'haller fonnusaat al labour kaset da benn war un diazez lec'hel. Gwir eo evit ar skingomzoù lec'hel e brezhoneg peurgetket a c'hall evel-se tizhout selaouerien all n'eus forzh pelec'h e vefent. A-bouez eo bezañs ar brezhoneg war ar Genrouedad evit ar vrezhonegerien yaouank a zo boas d'ober gant ar media nevez-se. Talvoudus eo ivez evit liammañ an diaspora brezhonek ouzh Breizh ha reiñ an tu dezhañ da gemer ur perzh fetis e buhez ar gumuniezh. Skouer Wikipedia a ziskouez e c'hell ar Genrouedad bodañ tud strewet e Breizh hag er bed a-bezh da genober evit ar yezh.

Resisoc'h e Breizh, ar Genrouedad zo un doare da gas raktresoù da benn hep bezañ dalc'het gant kudennoù arc'hant na gant divizoù pennadurezh ebet (ar CSA* da skouer). Un arouez talvoudus evit priziañ startijenn ur yezh ha youl e yezherien da gas anezhi war-raok eo neuze. Ouzhpenn ar Genrouedad eo bet azasaet buan-kenañ ar brezhoneg ouzh ar stlenneg a-drugarez da labour hiniennoù a vag fiziañs e dazont o yezh. Ur souezh eo merzout plas dereat ar brezhoneg er stlenneg e-keñver yezhoù all ar bed pa ouzer e pe stad emañ war tachennoù all.

Ur gudenn a chom gant ar meziantoù troet e brezhoneg memes tra : peurliesañ e ranker bezañ kelaouet mat evit gouzout eus pelec'h pellgargañ an droidigezh ha penaos lakaat anezhi da c'hoari. Mirout a ra ouzh ar meziantoù-se da vezañ implijet kement hag e c'hellfent bezañ. Diouer a ra c'hoazh ur bajenn a-ratozh evit brudañ an teknologiezhioù nevez e brezhoneg.

Tapet ez eus bet dale gant ar brezhoneg e-keñver yezhoù bihanniver all ivez. Splann eo an troc'h etre yezhoù rannvro Frañs ha re Spagn pe Breizh-Veur da skouer. Met buan e emdro an traoù : kalz en deus kresket an niver a bajennoù brezhonek war ar Genrouedad er bloavezhioù tremenet da skouer.

Ar pezh a gaver e brezhoneg zo disoc'h labour kevredigezhioù pe hiniennoù betek-henn. Harp ar strollegezhioù foran zo ret evit frammañ an dachenn ha mont pelloc'h ganti bremañ. Ezhomm zo treiñ ha reneveziñ ingal binvioù stlenn ha lec'hiennoù Kenrouedad (o kregiñ gant re ar strollegezhioù foran o-unan) evit talvoudekaat ar brezhoneg. Hogen bihankenañ eo budjed ar strollegezhioù foran gouestlet d'an teknologiezhioù nevez evit ar mare. Pol kevezusted Breizh ar Skeudennoù & ar Rouedadoù a harp Rannvro Breizh da skouer : ouzhpenn degas nevezentioù teknik e venn ar pol-se lakaat ar pouez war ar c'hrouiñ servijoù ha danvezioù niverel talvoudus. Met peseurt plas zo roet d'ar brezhoneg gant ar pol-se a zo meneget e steuñv Politikerezh yezh ar Rannvro ?

B e d a n a r m e r z h

Estreget al labour e brezhoneg a ya war ziorren, bed an armerzh a rank kreñvaat c'hoazh e ouestladur e dazont ar yezh.

Ar brezhoneg e marc'had al labour

E-kerzh an nevezamzer 2006 en deus graet servij Arsellva Ofis ar Brezhoneg un enklask war "Ar postoù-labour hag ar brezhoneg". Savet e oa bet ur c'houlennaoueg enni tri c'hraf pennañ : stad an traoù d'ar 1añ a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg), ar pezh a c'hellfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat e vefe brezhonegerien warno met zo tud divrezonek warno ha pere eus an dud-se zo stummet war ar brezhoneg), ar pezh a c'hellfe bezañ a-benn 2010 (brasjedadenn izel ha brasjedadenn uhel). Ouzh **an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer** (KILA) en deus sellet an enklask; kement-se a dalvez eo brasoc'h an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.


Kaset e oa bet ar c'houlennaoueg-se d'ur pevar c'hant framm bennak (kevredigezhioù, embregerezhioù, strollegezhioù foran, h.a.), frammoù a ouzer e enfredont pe e c'hellfent enfredañ brezhonegerien. A-benn ar fin e sav feur ar respontoù da 38,2%, met ret eo gouzout eo bihan a-walc'h ar feur-se gant ar strollegezhioù foran a ra tremen un drederenn eus ar frammoù goulennataet : 20,4% a respontoù hepken pa sav ar feur da 49,4% evit ar peurrest eus ar frammoù. Ha dre m'hon eus graet e-doare da gaout respontoù an holl frammoù a bouez war an dachenn-se e c'hellomp lavaret eo gwirion ar sifroù a embannomp amañ.

Nav c'hant post-labour brezhonek e 2006

Diskouez a ra an enklask e oa e 2006 **un 900 post-labour KILA* bennak** warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg.

Dasparzh ar postoù-labour diouzh ar rumm micher ha dre zepartamant d'ar 1añ a viz Genver 2006

War ar gartenn-mañ e weler da gentañ levezon diorren ar c'helenn divyezhek (ar pezh a zispleg pouez dreist Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan), met lodenn ar bed kevredigezhel micherelaet zo heverk en Il-ha-Gwilen.



Notenn : a-vent gant an niver a bostoù e pep tiriad eo pep kalc'h

Tost an tri c'hard eus ar postoù-se a denn d'ar c'helenn evel-just : nav diwar zek anezho zo postoù skolaerien pe kelennerien eil derez, hag ar peurrest zo postoù stummerien evit an oadourien, kelennerien an deskadurezh uhel pe c'hoazh skoazellerien-vamm. Rummadoù bras all eo ar merañ frammoù (er bed kevredigezhel peurgetket : renerezh, sekretouriezh, kontouriezh, karget a gefridi), ar sevenadur (da lavaret eo metoù ar buheziñ sevenadurel, met tremen un drederenn eus ar postoù-se a denn d'ar yezh hec'h-unan : troourien, dastumerien, h.a.), pe c'hoazh ar mediaoù (kazetennerien, luskerien abadennoù). Ispriziet e c'hellfe bezañ bet ar sifroù koulskoude evit ar greanterezh, an artizanerezh, ar c'henwerzh hag ar yec'hed, koulz hag evit ar melestradur foran (n'en deus ket respontet kalz).

War an tiriad e verzer pouez dreist Penn-ar-Bed ur wech ouzhpenn. Ar pep dedennusañ koulskoude eo meizañ dibarderioù Il-ha-Gwilen : eno emañ en e liesseurtañ an dastumad postoù-labour ha tost-tre eo pouez an departamant-se ouzh hini Aodoù-an-Arvor. N'eo ket kenkoulz stad al Liger-Atlantel : an troc'h melestradurel a ziaesa kalz an diorren war pep tachenn ha, gant se, e rank alies ar vrezhonegerien mont da zepartamantoù all Breizh evit kavout fred.

Estreget ar postoù-labour zo brezhonegerien warno e kaver, gant enklask an Arsella, roadennoù war an niver a bostoù a vefe talvoudus e vefe brezhonegerien warno. Diouzh ar respontoù a zo bet e vefe tremen ur c'hant anezho.

En holl **e sav an niver a bostoù-labour a rankfe bezañ brezhonek en tu all da vil.** Ha c'hoazh n'eus bet embannet sifr ebet gant metoù an deskadurezh war an niver a dud a vefe spletus stummañ war ar brezhoneg eviti. Gouzout a reer ez eus ezhommoù bras koulskoude.

Pemp bloaz a-raok hon enklask ne oa nemet un 330 post-labour bennak gant ar c'helenn divyezhek, da lavaret eo ez eus bet **ur c'hresk a 78% war an dachenn-se** (589 post zo bet kontet evit ar bloavezh-skol 2005/2006), ar pezh a ziskouez **ez eus lañs bras gant al labour e brezhoneg.** Brav a-walc'h eo ar feur-se, gwir eo, met pell-tre emeur bremañ eus ar 1000 post bennak rakwelet d'ar mare-se evit 2006. Ahend-all, spi bras a oa d'ar mare-se ez afe kalz an traoù war-raok war dachenn ar mediaoù brezhonek ivez ; met plas ar brezhoneg war TV Breizh zo aet war zigresk a-benn ar fin hag un darn eus ar postoù bet krouet er skingomzoù kevredigezhel a-drugarez d'ar c'hevratoù implij yaouank zo lakaet en arvar bremañ.


Etre 1250 ha 1650 post-labour brezhonek a-benn 2010 ?

Kalz diaesoc'h eo, evel-just, embann sifroù evit an niver a bostoù-labour KILA* a c'hellfe bezañ brezhonegerien warno en amzer da zont. Un darn vras eus responderien an enklask n'o deus ket embannet o soñj war ar c'hrafmañ, pe dre ma kav dezho eo diasur o dazont betek re, pe dre ma ne oa ket e kefridi ar re o deus respontet ober muioc'h eget stadañ an traoù, pe dre ma ne vo ket ret gouzout brezhoneg evit ar postoù emaint e soñj krouiñ.

An div drederenn eus ar postoù-labour bet renablet e 2006 a dalvez evit skolaerien pe kelennerien eil derez. Daoust ma n'eus ket bet respontoù en enklask evit ar pezh a denn da zazont ar c'helenn e c'heller ober div lakadenn : **ar vrasjedadenn uhel** evit an niver a gelennerien e 2010 a glotfe gant ezhommoù ar pal embannet e Politikerezh yezh Rannvro Breizh evit an niver a skolidi divyezhek (20 000 a-benn 2010)¹, **ar vrasjedadenn izel** a glotfe gant ur c'hresk bloaziek keitat eus an niver a skolidi divyezhek e pep hentad hag a vefe par d'ar pezh zo bet er bloavezhioù diwezhañ. Gant ar brasjedadennoù-se e c'heller klokaat ar roadennoù ha kinnig ar grafik amañ da-heul.

1 Ar vrasjedadenn uhel-se zo bet graet diwar disoc'hoù al lodenn "Martezeadennoù war an emdroadurioù a c'hellfe kas da 20000 skolidi divyezhek a-benn 2010" en teuliad "An distro-skol en hentadoù kelenn divyezhek - Bloavezh 2006/2007" (Arsella ar brezhoneg, p. 17-22)

Sifroù sammet ar postoù-labour a oa anezho e 2006 gant ar rakweladurioù krouiñ ac'hann da 2010



Etre 1250 ha 1650 a bostoù-labour KILA* brezhonek a vefe e 2010 hervez an disoc'hoù-se. Bras-kenañ eo an diforc'h etre ar vrasjedadenn izel hag ar vrasjedadenn uhel (eus tachenn ar c'helenn e teu an diforc'h-se dreist-holl ; ma tenner ar postoù skolaerien ha kelennerien eil derez e vefe etre 115 ha 230 post-labour ouzhpenn). Ahend-all, gant stignad an implijoù yaouank oc'h echuiñ er mare-mañ ez eus riskloù ne vefe ket ken e 2010 eus postoù-labour a oa anezho e 2006. Ret eo kavout doareoù

da zerc'hel an implijidi-se koulz hag o skiant-prenet neuze. Sikour ar galloudoù foran (rannvroioù, departamantoù) a vo a bouez bras war an dachenn-se. A-hend-all, tachennoù zo a c'hellfe krouiñ kalzik a bostoù brezhonek er bloavezhioù da zont, evel ar c'hreizennoù dudi hag ar magourioù.

Ledanaat ar c'hinnig labour

Dister a-walc'h e seblant bezañ plas ar vrezhonegerien c'hoazh war dachenn ar greanterezh, an artizanerezh hag ar c'henwerzh (daoust ma c'hell ar sifr bezañ bet ispriziet evel m'hon eus lavaret). N'eus nemet pa vo talvoudekaet an ober gant ar brezhoneg, evit skeudenn an embregerezhioù hag en darempredoù gant ar pratikoù, e c'hall an niver a bostoù-labour brezhonek mont war-raok er metoù-se.

Kentoc'h eget enfredañ brezhonegerien barregezhioù ganto e fell da embregerezhioù zo enfredañ tud varrek hag a oar brezhoneg. Eno emañ an dalc'h ivez.

Eus o zu, ar strollegezhioù foran o deus ezhommoù dezho o-unan : skoazellerien-vamm da gentañ-penn hag implijidi all ar skolioù, met ivez brezhonegerien evit ar mediaouegoù pe ar servijoù d'an dud. Kumunioù zo o deus kinniget pe a ginnig d'o implijidi heuliañ ur stummadur dibaouez war ar brezhoneg.

Araokadennoù zo bet graet war dachenn ar stummañ abaoe 2002, e gwirionez. War liesaat ez a ar raktresoù stummadurioù arbennikaet e brezhoneg ivez (gw. ivez ar pennad sterniet "Ar stummerezh dibaouez" p. 80).

N'eo ket anavezet a-walc'h c'hoazh e c'hell ar brezhoneg degas fred d'an dud. Kreñvoc'h-kreñvañ eo ar youl da gas ar brezhoneg war-raok e bed al labour koulskoude.

"Broudet e vo ar skolidi da vont war **micherioù brezhonek er-maez eus bed ar c'helenn** (koulz ha deskiñ brezhoneg en hentadoù teknikel)" eo kinnig testenn Politikerezh yezh Rannvro Breizh evit ar pezh a denn d'ar stummadur micherel. Siwazh, poan o deus ar raktresoù stummadurioù zo war ar stern da zont da wir betek-henn.

Poan en deus an AVAL* da anavezout ar brezhoneg

Nac'het e oa bet kemennoù divyezhek brezhoneg-galleg gant AVAL* Brest e dibenn 2005. War al lezenn Toubon e oa bet diazezet an nac'hadenn-se daoust ma vez degemeret gant an AVAL* kemennoù unyezhek saoznek a-wechoù ha daoust ma ne vir ket al lezenn-se a ober gant ur yezh all ouzhpenn ar galleg. Sturiadoù* hag a sav a-du gant ar brezhoneg zo bet roet da-heul gant prefederezh Breizh.

N'emañ ket ar brezhoneg e-touez ar yezhoù anavezet a c'heller menegiñ war ar fichenn bersonel p'en em enskriver en AVAL* atav. Kement-se a ziskouez mat ne oar ket an Ajañs ez eus ur vammenn implijoù gant ar brezhoneg. Ret e vo labourat evit ma vefe gant an AVAL* ur servij ambroug an dud a glask fred e brezhoneg. Da c'hortoz e kinnig Stumdi ur servij a-ratozh d'e stajidi gozh abaoe an distro-skol 2006. Dre frammoù dedennet gant ar yezh ez eus tu da embann kinnigoù labour a denn d'ar brezhoneg ivez : e kazetennoù (Bremañ, Armor Magazine), pe e lec'hiennoù Kenrouedad (Stumdi, Ofis ar Brezhoneg, DAO*).

Ar brezhoneg er stalioù hag en embregerezhioù

An doare kentañ da reiñ plas d'ar yezh en embregerezhioù a rankfe bezañ **dre implij ar brezhoneg etre an implijidi**. Evel-se e vez graet e lec'hioù zo, dre youl an implijidi o-unan pe dre ma kav d'an implijer ez eo an anaoudegezh eus ar brezhoneg un abeg enfredañ ouzhpenn. Neoazh, n'eus nemet skolioù, kevredigezhioù, skingomzoù ha kazetennoù arbennikaet war ar yezh a ya en-dro e brezhoneg penn-da-benn.

Ar pep pouezusañ evit skeudenn ar yezh, moarvat, eo e vefe kinniget un **degemer e brezhoneg** d'ar pratikoù. Ret eo kreskiñ an niver a oberidi vrezhonek neuze. Ouzhpenn an implijidi gouest d'ober gant ar yezh dija eo talvoudus soñjal stummañ ar re n'int ket brezhonegerien c'hoazh : pe gant ur **stummadur dibaouez**, pe gant kentelioù kinniget gant ar Poellgor Embregerezh. A-hend-all, da venegiñ zo ar raktres europat "Mona Lisa" a venn sevel ur benveg deskiñ dre an teknologiezhioù nevez evit stummañ an implijidi war ar yezhoù bihanniver war o lec'h labour. Mat e vo heuliañ diorroadur ar benveg-se ha gwelet penaos e lakaat da dalvezout evit ar brezhoneg.

Un diaester a chom gant ar brudañ siwazh : skoemp-kenañ eo gouzout pelec'h e c'heller bezañ degemeret e brezhoneg (titouroù a c'heller kavout e levriegoù sinerien Ya d'ar brezhoneg dre diriad). Un araokadenn zo bet memes tra war an dachenn-se e deroù 2007 : diwar skouer Kembre ez eus bet roet lañs gant Ofis ar Brezhoneg d'un arouez nevez, "Spilhennig", ur spilhenn a ro tro d'ar vrezhonegerien d'en em anavezout. An implijidi vrezhonek a c'hell dougen ar Spilhennig evit ma yafe ar pratikoù e brezhoneg ganto.

An embregerezhioù a ra war-dro **servijoù** (bankoù, pellgehentiñ, treuzdougen, h.a.) a c'hell strivañ d'ober gant ar brezhoneg (skoazellañ seurt raktresoù zo unan eus kefridioù pennañ servij Treiñ-Alliañ an Ofis). Da skouer, war dachenn ar bankoù, ar **CMB*** a ginnig chekennaouegoù divyezhek d'e bratioù abaoe 1982 (un 10 000 chekennaoueg bennak zo bet roet gantañ e 2005) ha kement all a ra **Kef al Labour Douar** e Penn-ar-Bed abaoe 2002. E brezhoneg e c'heller leuniañ ar chekennoù divyezhek-se koulz hag e galleg ; da lavaret eo e c'hellfe

mat-tre ur bank divizout skignañ seurt chekennaouegoù d'e holl bratikoù (ha n'eo ket d'ar re a c'houlenn hepken). A-hend-all, un taol-esae en deus graet ar CMB* gant bilhedaouerioù az a en-dro e brezhoneg peurgetket adalek 2001; astennet eo bet an dra-se d'e holl vilhedaouerioù en diskar-amzer 2005.

Dileuriañ ar servij foran

Alies e vez fiziet en embregerezhioù prevez ober war-dro servijoù publik gant ar strollegezhioù foran (dasparzhañ dour, treuzdouden-kêr, h.a.). E-barzh he folitikerezh yezh e c'hell ur strollegezh ober e doare ma vefe dalc'het kont eus ar brezhoneg er c'hendivizad dileuriañ ar servij publik. Eus o zu e c'hell an embregerezhioù, diwar o lusk o-unan, kinnig servijoù divyezhek. Evel-se he deus divizet **ajañs Brest Compagnie des Eaux (Kompagnunezh an Dour)** lakaat divyezhek an dielloù a vez kaset ganti d'an tiez-kêr.

Dre ma vezont darempredet bemdez gant an dud ez eo ar stalioù lec'hioù eus an dibab da lakaat ar brezhoneg war wel dre ur **panellerezh divyezhek**. **Ar stalioù bras** eo ar re gentañ o deus meizet e c'hell an dra-se pinvidikaat o skeudenn. **Super U Gwern-ar-Sec'h** bet digoret e deroù 2006 zo ur skouer vat eus ar pezh a c'heller ober (totemoù, panelloù e diabarzh ar stal, porzh-servij, logell luc'hskeudenniñ). Er bloavezhioù 90 e oa bet kroget gant al lusk-se, dre banelloù divyezhek dreist-holl hag a zo bet staliet e stalioù bras eus strolloù disheñvel pe e pretioù prim.

A-wechoù e vez lakaet panelloù divyezhek gant **aveadurioù dudi (Golf Karaez** zo ur skouer a-feson) ha gant **ar stalioù bihan** ivez. Pegsunioù a-ratozh a vez roet gant Ofis ar Brezhoneg da sinerien an emglev Ya d'ar brezhoneg; kinniget int bet d'an holl genwerzhourien e kumunioù zo. Koulskoude ne vez ket gwelet ar panelloù-se gant kement Breizhad zo, rak staliet e vezont kentoc'h gant kenwerzhourien a denn o zachenn da zavez Breizh (stalioù-levrioù, tiez-krampouezh, h.a.). Ral eo e vefe kavet roud eus ar brezhoneg er stalioù "tal an ti" a-hend-all. Ar pep gwellañ evit ma vefe gwelet ar yezh gant an holl eo c'hoazh e vefe brezhonek pe divyezhek **talbenn ar stalioù**. Seurt traoù zo bet graet en un nebeud kumunioù (Lannuon, Louergad, h.a.) met n'eus nemet e **Karaez** ma'z eus bet graet gwir araokadennoù gant emouestl an ti-kêr a ginnig ur skoaziadenn a-ratozh d'ar genwerzherien a nevesa o rakstal.

Implij ar **skoroù kehentiñ** divyezhek a rank mont war ziorren ivez : dleout a rafe bezañ graet bep taol gant ar frammoù sevenadurel (ar pezh na vez ket graet) hag aliesoc'h gant ar re all. Evel gant ar strollegezhioù foran, un toullad traoù a c'hell bezañ savet en div yezh gant an embregerezhioù : **folenn ginnig**, kartennoù-bizit, paper talbennet, pedadennoù, **lec'hienn Genrouedad**. Aes ha marc'had-mat eo ar seurt oberoù, met re nebeut e vez graet c'hoazh.

Bruderezh divyezhek a vez graet, diouzh an degouezh, e gouelioù sevenadurel zo pe e kazetennoù breizhek zo, met ral-kenañ eo e vefe skignet a-vas. Skouer ar vrudfolenn* a vez embannet gant **Produet e Breizh** hag **Intermarché** bep bloaz abaoe 1999 da-geñver "Gouel Erwan" (tost da zaou vilion a skouerennoù e 2006) eo an dra nemetañ a c'heller menegiñ amañ. Skritelloù bras dezho menegoù e brezhoneg a weler gwech an amzer (evel ar skritell "Plijadur penn da benn" liketet e Pariz gant **Produet e Breizh** e 2007). **Bommoù bruderezh e brezhoneg** a veze skignet gant **TV Breizh** e deroù ar chadenn brevez-se met n'eo ket padet pell. Betek-henn n'eus plas ebet evit ar brezhoneg e skoroù ar **bruderezh war al lec'h gwerzhañ** a-hend-all.

Heverkoc'h eo an traoù a vez graet war dachenn **ar seveniñ pakañ** a-benn ar fin, ha pa vefe rouez ar skouerioù. Evit ar poent ez eo merkoù evajoù peurgetket a sav tikedennoù divyezhek.

Splann eo ez eus ezhomm eus embregerezhioù kehentiñ barrek war an divyezhegezh hag a ginnigfe d'o fratikoù enframmanñ anezhi en o skoroù kehentiñ adalek ar penn kentañ. Neoazh, embregerezhioù zo e Breizh a labour ingal en div yezh war goulenn pe a vefe prest d'en ober. **Ul levrig-heñchañ da c'houzout penaos ober gant an divyezhegezh war o zachenn** a vank d'an embregerezhioù ivez marteze.



Ya d'ar brezhoneg



D'ar 5 a viz Here 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad "Ya d'ar brezhoneg". E miz Mae 2006 e oa bodet 579 a oberourien gevredigezhel hag armerzhel gant an Ofis en-dro d'un dra eeun : ober gant ar brezhoneg er mont en-dro pemdeziek.

Dasparzh 579 siner Ya d'ar brezhoneg dre rummad e miz Mae 2006

Daoust m'eo bras plas ar bed sevenadurel (ur c'hard eus ar sinerien) ez eo e bed an armerzh emañ ar brasañ niver eus sinerien Ya d'ar brezhoneg (258 siner, da lavaret eo 44,6% eus an hollad).

Un enklask a oa bet graet e-touez ar sinerien d'an diskar-amzer 2005. Skoazellañ sevenadur Breizh ha kas ar brezhoneg war-raok eo abegoù pennañ ar sinadurioù. Tud zo koulskoude o deus sinet evit embann e oa tomm o c'halon ouzh ar yezh hep ober nemeur a dra da c'houde. Un darn vat eus ar sinerien, neoazh, o deus strivet evit diorren ar brezhoneg. Diouzh disoc'hoù enklask 2005, e roll an traoù kaset da benn gant ar responterien e teu da gentañ, en urzh : ar c'hehentiñ, ar panellerezh hag an degemer. Stummañ ar c'hopriddi war ar brezhoneg a zeu da ziwezhañ.

Berzh bras Ya d'ar brezhoneg eo ivez bezañ lakaet ar brezhoneg er-maez eus bed ar sevenadur. Egin un diorren a bouez evit dazont ar yezh eo. Siwazh, an Ofis n'en deus ket peadra (a-fet budjed hag a-fet nerzh labour) evit gellout mont ken pell hag e vefe ezhomm war an dachenn-se.



Bed an armerzh Klozadur

Gant un 900 post-labour KILA* bennak ha, gant se, tremen ur miliad a vrezhonegerien implijet **e c'heller lavaret eo ar brezhoneg unan eus embregerezhioù bras Breizh**. Ha **lañs zo gant an embregerezh-se**, war ar marc'had, dre ma kresk buan an niver a bostoù ennañ.

En amzer da zont e tlefe an niver a dud implijet gant an embregerezh "brezhoneg" kenderc'hel da greskiñ. Splann eo e chomo bras lodenn ar c'helenn e-touez micherioù al labourerien-se, met daou dra a c'hellfe degas emdroadurioù a zo diaes da briziañ c'hoazh :

→ Eus un tu, muioc'h-mui a dud oberiant ampart war ar brezhoneg a zeuio er-maez eus an hentadoù divyezhek (pe eus ar stummadurioù evit an dud deuet), ha lod anezho gant ar c'hoant da vont war vicherioù estreget tachenn an deskadurezh.

→ Eus un tu all, kredapl bras e vo muioc'h-mui a embregerezhioù e Breizh a verzo ar pezh a c'hell ar brezhoneg degas dezho. Un arouez a-zoare eus kalite o servijoù pe o produioù e c'hell bezañ an divyezhegezh, koulz hag un doare aes da gadarnaat o dibarded en ur marc'had a ya war vedelaat*.

Gant an daou duadur-se o c'hoari asambles gant c'hoant ar Vretoned tomm ouzh o yezh ez eus arguzennoù a lak da soñjal e c'hellfe plas ar brezhoneg (ha gant se implij ar vrezhonegerien) mont war ziorren kalzik war tachennoù all estreget hini ar c'helenn. Evit dont a-benn anezhi e vefe ret lakaat an AVAL* da anavezout ez eus ur marc'had al labour e brezhoneg.

Bevennet eo c'hoazh an implijoù brezhonek d'an deskadurezh (tost an tri c'hard eus ar postoù) **ha d'ar bed kevredigezhel** e gwirionez. Ezhomm zo ez afe al labour e brezhoneg war ledanaat. Neoazh, estreget ar c'helenn, metoù ar sevenadur hag ar mediaoù peurgetket a lak brezhonegerien lies o barregezhioù da labourat.

N'eus ket kalz a embregerien o deus santet ar gounid o defe gant ar brezhoneg evit ar poent. Gwall zistank eo an implij eus ar yezh e bed ar c'henwerzh da skouer. Hag en tu all d'an implij arouezel e vefe ret diorren ar c'hehentiñ e brezhoneg.

Diwar atiz hiniennoù c'hoazh pe diwar broud ar penna-durezhioù lec'hel d'ar gwellañ tout eo e vez roet ur plas d'ar brezhoneg war tachenn an armerzh. Ha peurliesañ e chom an oberoù-se tra embregerezhioù a denn o danvez da Vreizh. Gant se eo rouez dre-vras an degouezhioù ma vez kavet roud eus ar yezh er vuhez pemdeziek war tachenn an armerzh. Koulskoude e stader ez eus bet un emdroadur hag a ya war an tu mat (kinnig brezhonek bilhedaouerioù ar CMB* a vez gwellet gant an holl da skouer). E-kerzh ar pemp bloaz tremenet ez eo ar panellerezh a zo aet war-raok dreist-holl; n'eo ket kresket nemeur implij ar yezh war al lec'h labour avat.

Boas eo an dud da vevañ en ur bed unyezhek gallek. Kement ha kas ar yezh war-raok eo dav krouiñ ul lusk diorren. Ar pezh a dalvez kreskiñ ar gwask sokial eus un tu ha broudañ an embregerien d'ober traoù eus un tu all. Abeg bezañ an emglev Ya d'ar brezhoneg hag ar bodad "armerzh, sevenadur ha yezh" eus **Breizh-Diawel** (Bretagne Prospective) eo. Met n'eo ket kreñv a-walc'h ar gwask diabarzh e metoù an embregerien daoust d'ar c'hevreadoù pe kevredigezhioù breizhek a zo. Re vihan e chom c'hoazh emouestl hag atiz frammoù evel **Produet e Breizh, Ensavadur Lokarn** pe **Klub Embregerezhioù Breizh** (hemañ diwezhañ arbennikaet war plas ar yezh en armerzh) daoust d'un emdroadur war an tu mat.

Met en abeg da betra e strivfe an embregerezhioù da ginnig traoù en div yezh ma ne denn ket o zachenn da yezh pe da sevenadur Breizh ? Un arouez eus kalite ar servijoù pe ar produioù e tlefe bezañ ober gant an divyezhegezh e-giz ma c'hoarvez e Kembre. Da greskiñ lealded ar pratikoù ha da zegas pratikoù nevez e c'hell ar c'hinnig en div yezh talvezout ivez.



B i l a ñ s h o l l e k

Peseurt emdroadurioù a zo bet etre 2002 ha 2007 ?

Daoust d'ar gwask diavaez ha diabarzh e chom heñvel an **diouer a statud lezennel evit ar yezhoù rannvro** er Stad c'hall.

Lakaet eo bet war wel gant an danevell-mañ un **emouestl politikel** a-berzh ar pennadurezhioù lec'hel avat. Ar brezhoneg a grog bremañ da vezañ un ahel treuz er politikerezhioù, ar pezh ne oa ket pemp bloaz zo c'hoazh (steuñv Politikerezh yezh Rannvro Breizh eo skouer splannañ an emdroadur-se). Daoust d'an araokadennoù, strizhded barregezhioù ar pennadurezhioù lec'hel e Frañs koulz hag ur serten abafder politikel a vir ouzh an argerzh-se da vont ken pell ha ken buan hag a vefe ezhomm. Tachennoù zo a chom boud gant ar brezhoneg c'hoazh, tachennoù all a vez krignet tamm-ha-tamm zoken.

Ur skouer klok eus an tuadurioù-se eo hini ar c'helenn, ar benveg nemetañ a c'hell degas yezherien nevez war grenn dermen. Daoust ma kendalc'h an niver a skolidi divyezhek da greskiñ a vloaz da vloaz eo gorrekoc'h-gorrekañ an emdroadur. A-hend-all, war zigresk eo aet an niver a zeskidi e tost an holl zoareoù all da gelenn brezhoneg abaoe 2002. **Gant ur bilañs ken nec'hus** e ranker kavout doareoù azasaet evit reiñ ul lañs nevez d'ar c'helenn, e gwirionez. Bodadoù karget da brederiañ war ar c'helenn brezhoneg hag e brezhoneg zo bet savet abaoe deroù ar bloavezhioù 2000 (Kuzulioù Akademiezh ar yezhoù rannvro, da skouer, pe ar Bodad labour war ar Politikerezh yezh e Rannvro Breizh), met ne c'heller nemet stadañ n'eo ket bet gwellaet stad an traoù gant ho labour ha n'eus hini ebet anezho en defe diazezet ur preder hollek o lakaat palioù resis da bep doare kelenn a-benn tennañ ar brasañ gounit eus e zibarderioù. Araokadennoù zo bet war an tu-se e departamant ar Pireneoù-Atlantel, da skouer, m'eo bet fiziet en Ofis Publik an Euskareg steuñvekaat ar c'helenn euskarek, kinnig kartenn al lec'hiadoù war an diazez-se ha merañ anezhi.

Ar youl greñv da vont pelloc'h ganti he deus degaset gwelladennoù e bed ar brezhoneg abaoe 2002 memes tra. A-drugarez d'**ar frammañ** eo aet metoù arbennik zo war efedusaat : diorroet ez eus bet kevredigezhioù pe kevreadoù a-ratozh evit kas ar yezh war-raok war dachenn pe dachenn; re all o deus astennet kalzik o emell war ar yezh. Aet eo metoù ar brezhoneg war **vicherelaat** ivez. Eus an implijoù yaouank en doa tennet gounit peurgetket, dre m'eo stag c'hoazh diorren ar yezh ouzh ar bed kevredigezhel; gant diwezh ar stignad-se, unan eus daoù ar brezhoneg er mare-mañ eo derc'hel

ar skiant prenet evel-se. Eus e du en deus labourer start Ofis ar Brezhoneg da astenn plas ar yezh er vuhez pemdez. Ul lusk frouezhus en deus gouezet krouiñ oc'h emouestlañ oberourien armerzhel ha strollegezhioù foran dre an emglev Ya d'ar brezhoneg betek lakaat embregerezhioù liesvroadel evel Microsoft ha kerioù bras evel Brest e-barzh ar jeu (kement-se ne oa ket bet graet biskoazh).

Seul splannoc'h e teu war wel ar mankoù neuze. E bed an embann da skouer e vank c'hoazh ur gwir steuñv da gas ar brezhoneg war-raok evit al levrioù hag ar c'hazetennoù. Muioc'h a embannadennoù brezhonek zo ezhomm, ha diskoulmoù zo da gavout da gudenn **ar skignañ**. Ar mediaoù a dal ouzh ar gudenn-se int ivez : krennet eo bet da Vreizh velestradurel tachenn skignañ programmoù brezhonek France 3 Ouest, n'eo ket deuet a-benn TV Breizh da vezañ skignet da holl geodedourien Breizh ha tost digemm eo rouedad skignañ an abadennoù skingomz brezhonek e-keñver 2002. N'eus nemet liesseurterd ar programmoù a zo bet gwellaet un tamm er bloavezhioù diwezhañ, met an niver a eurvezhioù skignet er radio zo tost heñvel ouzh hini 2002 hag aet eo war-gil er skinwel dre-vras. Dreist-holl e verzer an tech a zo gant ar mediaoù publik er mare-mañ da chom boud gant ar brezhoneg, da adkreizennañ o frogrammoù ha da vruzunañ an abadennoù a oa dija kentoc'h eget krouiñ emgavioù nevez. N'eus bet graet netra c'hoazh evit ma vefe skignet brezhoneg gant ur media bennak war Breizh a-bezh.

E gwirionez ez eo war ar Genrouedad dreist-holl eo aet plas ar brezhoneg er mediaoù war greskiñ abaoe 2002. Rak tachennoù zo a verzer ez eus danvez enno evit **dazont tost ar brezhoneg**. Birvilh a zo war dachenn strategel an **teknologiezhioù nevez** peurgetket : en ur ober un nebeud bloavezhioù en deus gounezet ar brezhoneg un tamm plas war ar Genrouedad hag er meziantoù.

Dre-vras e chom liammet strizh araokadennoù ar brezhoneg ouzh lusk hiniennoù ha kevredigezhioù hag ouzh ijinouriezh yezhel Ofis ar Brezhoneg. Daoust dezho bezañ kizidikaet bremañ ouzh kudennadur dazont ar yezh, poan o devez c'hoazh ar pennadurezhioù foran da lakaat o holl barregezhioù hag o holl levezonioù da c'hoari evit kenurzhiañ ha kas da benn ur gwir politikerezh diazezet war palioù resis.

I m b o u r c ' h e r e z h

Ha koulz eo c'hoazh da saveteiñ ar brezhoneg ?

Kadarnaet eo bet poltred Yann vrezhoneger diwar disoc'hoù enklask an EBSSA*, "Étude de l'histoire familiale". Neoazh, estreget tud ouzhpenn 50 vloaz o chom war ar maez e Breizh-Izel ez eus tud yaouank brezhonek o chom e kêr e Breizh a-bezh, ha ganto e vez kaset ar yezh war-raok dreist-holl. Danvez an danevell-mañ a sav a-du gant an evezhiadenn-se.

Diwar sifroù ar yezherien dre rummad oad bet gant an EBSSA* e c'heller brasjediñ ez eo etre 6000 ha 6500 brezhoneger a varvo bep bloaz betek 2020. N'eo ket ken bras ar sifr hag an 10000 pe 15000 a vez embannet a-wechoù met ken mantrus all eo pa soñjer en niver a yezherien nevez stummet e memes koulz. Deomp betek penn ar preder gant ur studiadenn imbourc'h a roio ur soñj resisoc'h eus petra a c'hello bezañ stad ar brezhoneg en dazont.

O kemer sifroù an EBSSA* evel diazez ha diwar an anaoudegezh prenet ganeomp evit ar pezh a sell ouzh an doareoù da gaout yezherien nevez e c'hellomp sevel ur patrom jedoniel eeun ha klok war un dro. Pal ar patrom-se eo diskouez war peseurt tu ez aio an niver a vrezhonegerien diouzh an darvoudoù a vo. Evit diazezañ anezhañ e ranker kemer e kont an niver a yezherien gozh a varvo bep bloaz hag ober lakadennoù war an niver a vugale a zesko brezhoneg gant an hentadoù divyezhek (ha peseurt feur eus ar skolidi CM*2 a vo brezhonegerien e gwirionez betek fin o buhez) koulz ha war an niver a yezherien a zeuio dre ar c'helenn d'an oadourien. Diwar-se e c'heller ijinañ **tri senario dave** da lakaat ar patrom da dalvezout.

Senario izel, "an dichal" :

Lakadennoù : Muioc'h-mui e c'horreka kresk bloaziek an deskadurezh divyezhek. En abeg d'an diouer a ginnig divyezhek en eil derez ha da ezvezañs ar yezh er vuhez prevez ha sokial, peder fempvedenn eus ar skolidi CM*2 divyezhek a goll o brezhoneg a-raok bezañ ugent vloaz. Dister eo an niver a yezherien degaset gant ar c'hentelioù noz. Goude ur prantad e krog ar Vretoned da goll fiziañs e dazont ar yezh. War-dro 2030 e krog an niver a vugale skoliataet en hentadoù divyezhek da zigreskiñ.

Disoc'h : Kenderc'hel a rafe an niver a yezherien da zigreskiñ betek ar bloavezhioù 2060 da nebeutañ. War-dro 20000 e stabilafe an niver a vrezhonegerien d'ar mare-se marteze, met penaos e talc'hfe ur yezh - hag a vefe desket nebeutoc'h-nebeutañ - gant ken nebeut a yezherien ? Riskloù bras zo gant ar senario-se ez afe ar brezhoneg da get a-raok fin an XXIvet kantved.

Senario etre, "gant ar red" :

Lakadennoù : Gorrekaat a ra kresk ar c'helenn divyezhek goustad, met an niver a skolidi a ya war-raok atav. En abeg da blas re dreut ar brezhoneg en eil derez hag er vuhez pemdez, n'eus nemet un drederenn eus ar skolidi CM*2 divyezhek a c'heller c'hoazh ober brezhonegerien anezho pa vezont ugent vloaz. Ar c'hentelioù noz a zegas well-wazh ur 400 yezher ampart ouzhpenn bep bloaz.

Disoc'h : Kenderc'hel a rafe an niver a yezherien da zigreskiñ betek nebeutoc'h eget 50000 e fin ar bloavezhioù 2050. Mont a rafe war greskiñ da c'houde, met stabilaat a rafe war-dro ur 70000 yezher bennak e fin an XXIvet kantved sur a-walc'h.

Senario uhel, “diorren dalc’het” :

Lakadennoù : A-drugarez da genemglevioù savet etre an ensavadurioù e kendalc’h poblañs an hentad divyezhek da vont war-raok. An tri c’hard eus ar skolidi CM*2 divyezhek a zalc’h gant ar brezhoneg d’an oad gour. War greskiñ ez a an niver a yezherien degaset gant ar c’hentelioù noz. Aesaet eo kement-se gant ur plas brasoc’h-brasañ d’ar brezhoneg er vuhez prevez ha sokial. Tamm ha tamm, e c’heller komz en-dro eus un treuzkas er familhoù gant un darn eus ar Vretoned.

Disoc’h : Kenderc’hel a rafe an niver a yezherien da zigreskiñ betek nebeutoc’h eget 90 000 e-tro 2040. Mont a rafe war greskiñ da c’houde. A-raok fin an XXIVvet kantved e vefe tizhet en-dro an niver a yezherien bet stadet e 1999.

Ar senarioioù-se a dalvez da gaout mennozhioù resisoc’h eus ar pezh a c’hello bezañ en dazont. Evel bremañ, elfennoù all zo da gemer e kont evit priziañ stad ar brezhoneg e pep degouezh.

Peseurt feur eus poblañs Breizh a ouio brezhoneg, da skouer ? Rakweladennoù nevesañ EBSSA* Breizh a lak e vefe war-dro 3,66 milion a dud o chom e Breizh velestradurel a-benn 2050 (da lavaret eo war-dro 5 milion a dud o kontañ al Liger-Atlantel); ar pezh a dalvez e tostafe feur brezhonegerien ar senario etre da 1% hepken eus poblañs Breizh d’ar c’houlz-se.

Met pouezusoc’h c’hoazh eo en em soñjal war **peseurt skiant eus ar yezh** o do ar vrezhonegerien-se ha **peseurt sell** o do warni. Tost holl vrezhonegerien 2050, n’eus forzh pegen niverus e vint, a vo brezhonegerien “desket” : tud a ouio lenn ha skrivañ e brezhoneg hag a vo mennet da gas anezhañ war-raok. Setu, abegoù zo da soñjal e vo kreñvoc’h lusk ur yezh komzet gant, da skouer, un 50 000 den mennet evit gwir (ha pa ne vefent nemet 1% eus poblañs ar vro) eget hini ur yezh komzet gant 270 000 den met tremen 90% anezho kentoc’h distrivant en he c’heñver.

Gant an tuadurioù a stader hiziv an deiz e vefe lec’hiet dazont ar brezhoneg etre ar senario izel hag ar senario etre : pe ez afe ar yezh da get da vat pe e talc’hfe met gant

nebeutoc’h a yezherien eget bremañ. Ar senario uhel a glot kentoc’h gant un dazont ma vefe tizhet ar palioù lakaet gant bed politikel Breizh. Al lusk a vremañ ne hañval ket bezañ start a-walc’h d’en ober (re vihan obererezhioù ar strollegezhioù foran c’hoazh, re strizh o barregezhioù, re wan o c’hrog war an ensavadurioù all), met piv a oar penaos e vo a-benn dek vloaz...

Dreist-holl e ranker merzout **n’eus hini ebet eus an tri senario-mañ a ro tro da rakwelet e vefe saveteet ar brezhoneg evel yezh kumuniezh**; d’ar gwellañ e vefe adkavet an niver a yezherien a oa dek vloaz zo a-benn ur c’hantved. **Ret-groñs eo mont gant ur pevare senario** a yafe dreist d’ar senario uhel neuze. N’eo ket un dra dibosupl gant un emouestl gwirion a-berzh ar pennadurezhioù er budjedoù, er c’helenn, er mediaoù, er vuhez foran. Da skouer ma vefe kemeret war greñn dermen diarbennoù da hollekaat ar c’helenn brezhoneg er skol, evel ma c’hoarvez dija lec’h all e Frañs, e c’hellfe ar yezh kavout e nevezadur evel m’eo c’hoarvezet en Euskadi hag e Kembre.

Digor eo c’hoazh an dazont eta, met diouzh an araokadennoù a vo graet e-doug an dek vloaz a zeu e kemero ar brezhoneg unan eus an hentoù-se da vat. Ret eo ober e doare ma vo an hini gwellañ.

K l o z a d u r h o l l e k

Petra ober evit suraat dazont ar brezhoneg ?

Yezhourien zo a lavar ez ay da get da nebeutañ un hanter eus 6 000 yezh bennak ar bed ac'hann d'ar bloavezh 2100. Daoust hag-eñ e c'heller magañ spi c'hoazh e achapfe ar brezhoneg diouzh an tonkad-se, hag eñ renket dija gant an UNESCO* e-touez ar yezhoù en arvar bras da vervel ? **En arvar bras emañ**, splann eo. Torret eo "ekosistem" kozh ar yezh, an treuzkas er familhoù n'a ket en-dro ken, unan eus skoilhoù brasañ he dazont eo. **Neoazh, n'emañ ket ar brezhoneg en un enkadenn dizesper c'hoazh.** Evit derc'hel en amzer-da-zont e rank ar yezhoù bezañ diouzh ar vuhez vodern, tremen dre zoareoù kehentiñ a vremañ, bezañ komzet gant tud yaouank ha bezañ douget gant ar gevredigezh. N'eo ket dibourvez ar brezhoneg war an tachennoù-se ; abegoù zo da lavaret n'eo ket graet e stal dezhañ c'hoazh eta.

E gwirionez, ezhomm he deus kevredigezh Breizh e chomfe bev he yezh. Anavezet eo pegen kreñv eo identelezh Breizh, hag anat eo plas ar yezh en dibarded-se. Abaoe kendalc'h Johannesburg e 2002 e tegemerer ar sevenadur evel unan eus ahelioù an **diorren padus** gant ar soñj eo dre ar sevenadur e c'hell ar c'hevredigezhioù chom kenstag peurgetket.

En anv "kengred ar rummadoù kenetreze" e ranker diorren ar brezhoneg hag ober gantañ hiziv an deiz e doare ma c'hello ar remziadoù da zont ober kemend-all d'o zro.

N'heller ket lavaret eo bet cheñchet tonkad ar yezh e-kerzh ar pemp bloavezh tremenet : emdroadurioù nec'hus a stader zoken (war dachenn ar c'helenn hag ar mediaoù peurgetket) met war emskiantekaat ez a ar gevredigezh (hag ar bed politikel neuze) eus an arvar m'emañ ar yezh. Un araokadenn alc'hwez eo an dra-se, he heuliad eo ez a war efedusaat an oberoù kaset evit ar brezhoneg. Neoazh, evit ma vefe gant ar yezh un "ekosistem" nevez a dalvezfe d'un "dalc'hadusded yezhel" **eo splann e ranker kenderc'hel da vrasaat ar peadra gouestlet dezhi, da vodañ an nerzhioù ha da frammañ ar strivoù. Divizoù zo da gemer diouzhtu evit suraat dazont ar brezhoneg.**

Abaoe dekvedoù emañ ar gevredigezh keodedel oc'h en em aozañ evit ma vefe ar brezhoneg ; ret eo bremañ

mont dreist d'an emouestloù hiniennel, dreist da stern ar metoù sevenadurel ha kevredigezhel evit mont pelloc'h ganti. War an tu-se ez a ar politikerezhioù yezh a grog da vezañ lakaet da dalvezout gant strollegezhioù foran Breizh. Evit dazont ar brezhoneg e vo pouezus-meurbet emouestl ar bed politikel, an ensavadurioù, pe c'hoazh an armerzh. **Ret eo anavezout ar brezhoneg evel ur sistem klok e gwirionez : ne c'hall ket mont war-raok war un dachenn resis ma n'ez a ket war-raok war an tachennoù all war un dro.**

Da gentañ, politikerezhioù yezh a ranker hollekaat ha kas donoc'h. Evit ma vefent efedus ez eus diazezoù ret ne c'heller ket lezel a-gostez. Unan anezho zo kaout **un anaoudegezh pizh ha hizivaet eus an niver a yezherien.** Ar roadennoù klokañ zo (EBSSA*, 1999) a grog da vezañ kozh bremañ. Skrivet eo mat e skrid politikerezh yezh Kuzul-rannvro Breizh eus 2004 e vefe goulennet digant an EBSSA* lakaat goulennoù war ar yezh en niveridigezh. Siwazh, e 2007, n'eus bet graet netra c'hoazh war an dachenn-se. Un diazez all eo **kreñvaat benveg politikerezh yezh Breizh**, Ofis ar Brezhoneg. En em ziorroet mat eo ha tu zo da lavaret bremañ en deus tizhet ar palioù bet lakaet da vare e grouidigezh. Met evit kas ar yezh pelloc'h atav e rank an Ofis kenderc'hel da vrasaat e oberoù hag, evit en ober, en deus ezhomm da vezañ sikouret muioc'h (perzh an departamantoù a c'hellfe bezañ larkoc'h da skouer). Un diazez ouzhpenn eo d'ar strollegezhioù foran kaout **barregezhioù bras a-walc'h.** E-ser ober e-doare ma vefent ledanaet (o lakaat da dalvezout ar gwir da arnodiñ peurgetket) e c'hell ensavadurioù Breizh gouestlañ muioc'h a nerzhioù da ziorren ar brezhoneg panevet dre genemglevioù. Breizh a c'hello sevel kenlabourioù frouezhus o heuliañ skouer kornioù-bro all e Frañs [Euskadi, Korsika, h.a.).

War an dachenn e chom **ar c'helenn** ar vammenn bennañ a yezherien nevez. Diorren anezhañ kalz muioc'h zo retholl neuze evit mirout ar yezh. Ur pal zo bet lakaet evit ar c'helenn divyezhek gant Kuzul-rannvro Breizh e 2004, evit ar wech kentañ ; un araokadenn a bouez bras eo. Kement ha bezañ efedusoc'h en dazont avat e vo ret lakaat palioù resis **evit pep doare kelenn** a-benn tennañ ar brasañ gounit eus e zibarderioù. An diazez eo evit **steuñvekaat** da vat ha dre ar munud diorren ar c'helenn brezhoneg hag e brezhoneg. **Frammañ ha kenurzhañ mat strivoù ar**

gevelerien lies a ranker ober neuze ; skouer kenemglevstern ar Pireneoù-Atlantel a zlefe magañ preder pennadurezhioù Breizh.

Uhelek e rankfe bezañ palioù ar strollegezhioù foran pa varc'hatont gant an ensavadurioù all : diorren rouedad al lec'hiadoù divyezhek evit ma vefe hollekaet ur c'hinnig tost da lec'h annez ar gerent, hollekaet an tañva (level ma c'hoarvez e lec'h all e Frañs) evit m'en defe kement skoliad e Breizh un darempred bennak gant ar brezhoneg, diwall e vefe kempoell diorren an doareoù kelenn en eil derez hag ar pezh a zo er c'hentañ derez, h.a. Ouzhpenn diorren e ranker diwall ouzh kalite ar yezh komzet gant ar re yaouank, ar pezh a dalvez da gentañ penn kavout doareoù da lakaat muioc'h a gelennerien da vont d'ar c'helenn brezhonek, dezho ul live yezh a-zoare. Kenderc'hel da harpañ ar c'helenn d'an oadourien zo ret ober ivez : diarbennoù a-zoare en deus kemeret Kuzul-rannvro Breizh (en e zalc'h emañ ar stummañ), met pouezus eo bremañ dont a-benn da lakaat an niver a zeskidi deuet da greskiñ a-galz.

Ur bilañs etre eo hini **an embann** hag **ar mediaoù** : diaesterioù zo hag a denn d'**ar frammañ** ha d'**ar skignañ**. Ezhomm zo da frammañ bed an embann e brezhoneg ha da lakaat palioù dezhañ. Ezhomm zo ivez e skignfe ur media bennak e brezhoneg war Breizh a-bezh tra ma ya kentoc'h war-gil plas ar yezh er radio hag er skinwel publik. Daoust ma oa embannet fraezh ar youl-se e skrid Politikerezh yezh ar C'huzul-rannvro, n'eo ket aet an teuliad-se war-raok tamm ebet. Gant ar Genrouedad emañ kalzik a chadennoù skinwel lec'hel o tiwanañ koulskoude.

Digor frank eo tachenn an **teknologiezhoù nevez** d'ar brezhoneg bremañ, ret eo mont pelloc'h ganti. Dreist-holl e ranker frammañ muioc'h an dachenn-se kaset war-raok gant hiniennoù kentoc'h betek-henn. Krog eo Ofis ar Brezhoneg da sammañ ar gefridi-se, met ezhomm zo e kroufe ur servij a-ratozh (gant ma vefe roet dezhañ peadra d'en ober).

dre-vras ez eus un ezhomm bras da gehentiñ diwar-benn ar yezh ha da vrudañ ar pezh a vez graet. Strategel-kenañ eo an aferioù skeudenn er bed a vremañ. Priziet eo ar brezhoneg gant ar gevredigezh hiziv an deiz, met ezhomm he deus bezañ emskiantekoc'h eus e dalvoudegezh. Pouezus-bras eo neuze e vefe talvoudekaet muioc'h ar yezh er **vuhez pemdez** hag e **bed al labour**. D'en ober, **bed an armerzh** a vefe mat dezhañ ober muioc'h gant ar brezhoneg (en doareoù kehentiñ, er panellerezh, er mont en-dro, h.a.) : evel un arouez eus kalite ar servijoù pe ar produioù e c'hell ar c'hinnig en div yezh lakaat kreskiñ lealded ar pratikoù ha degas re nevez ; eunoc'h e vo da Yann Vreton adperc'hennañ ur yezh diskouezet muioc'h-mui neuze.

Rak arabat eo d'ar Vretoned fiziout dazont ar brezhoneg er skol hepken, arabat eo dezho lakaat pep tra war chouk ar strollegezhioù foran kennebeut, na kontañ war emrousted un nebeud stourmerien. E dalc'h Yann Vreton emañ dazont ar brezhoneg da gentañ penn ; ret eo d'un darn vrasoc'h eus an 92% a Vretoned a soñj dezho ez eo ret mirout ar brezhoneg kompren ne vo ket miret hepto. Deskiñ ar yezh e-unan ha reiñ tro d'e vugale d'ober kemend-all eo ar pep gwellañ, hag an emouestl kentañ hag eeunañ da gaout eo reiñ da c'houzout e c'houlenner muioc'h a vrezhoneg war pep tachenn.

Gant ar pennadurezhioù emañ ar varregezh da ziorren kalz bezañs ar yezh er gevredigezh. War-raok ez a ar preder-se, met pouezus eo frammañ muioc'h an oberoù bremañ, dezho da vezañ efedusoc'h. Ret eo neuze kenurzhiañ politikerezhioù liveoù lies ar velestradurezh (eus ar Stad d'ar c'humunioù), bodañ a-zevri an ensavadurioù barrek war pep tachenn, lakaat palioù uhelek hag ober e-doare ma vint tizhet.

Levrlennadur

- Akademiezh Roazhon (emb.), 2005. Evaluation de la langue bretonne dans les classes de CM2 des filières bilingues (Enseignement public, Enseignement catholique, Ecoles Diwan) - Résultats et analyse. Roazhon, 58 pajenn.
- Bihannig G., 1997. Douaroniezh Breizh - Ar Vro hag an armerzh. Ar Releg-Kerhuon, 222 bajenn.
- Bœuf, J-L., 2003. Décentralisation et expérimentations locales, La Documentation française. Pariz, 120 pajenn.
- Bœuf J-L. ha Magnan M., 2004. Les Collectivités territoriales et la décentralisation. Pariz, 152 bajenn.
- Broudig F., 2003. L'opinion des Bretons concernant leur langue. Bulletin de la Société Archéologique du Finistère, Banaleg, 132, 435-445.
- Bwrdd yr Iaith Gymraeg / Welsh Language Board (emb.), 2001. Canllawiau dylunio dwyieithog / A guide to bilingual design. Kerdiz, 44 fajenn.
- Chalheat M., 2003, Les Fonds structurels européens. Pariz, 101 bajenn.
- Cherel A., 2003. L'Économie du livre en Bretagne : l'édition et les réseaux du livre. Kounskrid Mestroniezh Douaroniezh, Skol-veur Breizh-Uhel, 105 pajenn.
- Clanché F., 2002. Langues régionales, langues étrangères : de l'héritage à la pratique. INSEE Première, Pariz, 830, 4 fajenn.
- Dalgalian G., 2000. Enfances plurilingues - Témoignage pour une éducation bilingue et plurilingue. L'Harmattan, Pariz, 169 fajenn.
- Daoulagad Breizh (emb.), 2002. Brezhoneg war ar skramm - Ur rentañ-kont war ar c'hrouiñ brezhoneg er c'hleweled. Douarnenez, 21 bajenn.
- EBSSA* (emb.), 2002. Côtes-d'Armor - Atlas démographique départemental. Roazhon, 34 fajenn.
- EBSSA* (emb.), 2002. Finistère - Atlas démographique départemental. Roazhon, 34 fajenn.
- EBSSA* (emb.), 2002. Ille-et-Vilaine - Atlas démographique départemental. Roazhon, 34 fajenn.
- EBSSA* (emb.), 2002. Morbihan - Atlas démographique départemental. Roazhon, 34 fajenn.
- EBSSA* Breizh (emb.), 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 bajenn.
- EBSSA* (emb.), 2000. Populations légales - Recensement de la population de 1999 - Côtes-d'Armor. Pariz, 21 bajenn.
- EBSSA* (emb.), 2000. Populations légales - Recensement de la population de 1999 - Finistère. Pariz, 18 pajenn.
- EBSSA* (emb.), 2000. Populations légales - Recensement de la population de 1999 - Ille-et-Vilaine. Pariz, 21 bajenn.
- EBSSA* (emb.), 2000. Populations légales - Recensement de la population de 1999 - Morbihan. Pariz, 17 pajenn.
- EBSSA* (emb.), 2000. Evolutions démographiques 1982-1990-1999 - Données définitives - Loire-Atlantique. Roazhon, 34 fajenn.
- Eusko Jaurtitzita / Gobierno vasco / Gouvernement Basque (emb.), 2003. Euskararen jarraipena III / III La Continuité de la langue basque. Vitoria-Gasteiz, 56 pajenn.
- Eysseric V., 2005. Le Corpus juridique des langues de France. Pariz, 92 pajenn.
- Films en Bretagne (emb.), 2004. Propositions pour le développement du soutien à la production audiovisuelle et cinématographique en Bretagne. An Oriant, 40 pajenn.
- Gourvès F-M., 2003. Un nevez-amzer evit sevenadur Breizh : un dae evit an Iliz. Eskopti Gwened, Gwened, 16 pajenn.
- Guieysse M., 1936. La langue bretonne. Nouvelles éditions bretonnes, Kemper, 263 fajenn.
- Héran F., Filhon A. ha Deprez C., 2002. La dynamique des langues en France au fil du XXe siècle. Population & Sociétés, Pariz, 376, 1-4.
- Kervoas Y-E., 2006. Al levriou e brezoneg evid ar vugale. Brest, 222 bajenn.
- KRLB* (emb.), 2006. Ar skoazelloù d'an embann e Breizh. Kemper, 95 pajenn.
- Kuzul Armerzhel ha Sokial Rannvro Akwitania (Emb.), 2006. Langues et cultures d'Aquitaine / Las lengas e kulturak d'Aquitania / Akitaniako hizkuntzak eta kulturak. Bourdel, 251 bajenn.
- Kuzul Sevenadurel Breizh (emb.), 2002. Premier bilan d'étape du volet scolaire et universitaire de la Convention Additionnelle au Contrat de Plan Etat-Région 2002-2006 sur le bilinguisme français breton à la rentrée de septembre 2002. Roazhon, 17 pajenn.
- Le Boëté I., 2003. Langue bretonne et autres langues : pratique et transmission. Octant, Roazhon, 92, 18-22.
- Levy D. ha Ramonet M., 2007. La population bretonne à l'horizon 2030. Octant, Roazhon, 108, 5-11.
- Moreau J., 2002. Administration régionale, départementale et municipale. Pariz, 311 pajenn.

- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. An divyezhegezh en ho kumun. Roazhon, 18 pajenn.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2006. Distro-skol en hentadoù kelenn divyezhek - Bloavezh 2006/2007. Roazhon, 22 bajenn.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Enklask war an embann e brezhoneg. Roazhon, 16 pajenn.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2002. Evit ur panellerezh divyezhek a-zoare. Roazhon, 4 fajenn.
- Ollivro J., 2000. La Bretagne en l'an 2000 - Diagnostic et tendances prospectives. Roazhon, 106 pajenn.
- Parlamant Europa (emb.), 2006. Rapport sur un nouveau cadre stratégique pour le multilinguisme. Strasbourg, 14 pajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), 2005. Budget primitif 2005. Roazhon, 388 pajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), 2005. Contrat pour la Bretagne - Deuxième point d'étape. Roazhon, 51 bajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), 2005. Contrat pour la Bretagne - La nouvelle politique territoriale. Roazhon, 54 fajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), 2005. Les grands axes de la politique culturelle du Conseil régional de Bretagne - Rapport de session - novembre 2005. Roazhon, 73 pajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), 2004. Pour une vision stratégique, partagée et ambitieuse de la Bretagne. Roazhon, 34 fajenn.
- Rannvro Breizh (emb.), eus 2000 da 2005. Recueils des actes administratifs. Roazhon, eus an niverenn 254 d'an niverenn 352.
- Rannvro Breizh (emb.), 2004. Ur politikerezh yezh evit Breizh. Roazhon, 11 pajenn.
- Renault A., 2005. Boazioù lenn ar vrezhonegerien. Kemper, 31 bajenn.
- Strollegezh Tiriadel Korsika (emb.), 2006. PRDF "Lingua è cultura corsa" - Plan de développement de l'enseignement de la langue et de la culture corses et de son apprentissage tout au long de la vie. Aiacciu, 35 pajenn.
- Ti ar Vro Kemper hag Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2006. An divyezhegezh en ho kumun. Kemper, 12 pajenn.
- Wallian G. ha Keramprant M-F., 2005. Dispositif d'initiation au breton dans les écoles primaires publiques du Finistère - Connaissance, impact, intérêts et souhaits. Brest, 66 pajenn.
- Wurm S.A. (emb.), 2001. Atlas of the World's Languages in danger of disappearing. Canberra/Pariz, 209 fajenn.

Mammennoù liesseurt

- ADUM
- Agence Bretagne Presse
- Al Levrig
- Amt für Sprache und Kultur im Elsass / Office pour la Langue et la Culture d'Alsace
- An Oaled
- Bremañ
- Bwrdd yr Iaith Gymraeg / Welsh Language Board
- Centre Interrégional de Développement de l'Occitan
- CFP* Aradon
- CFP* Brest
- CFP* Gwengamp
- CMB*
- CSA*
- Cyngor Llyfrau Cymru / Welsh Books Council
- Daoulagad Breizh
- Dastum Breizh
- DDEC* ar Mor-Bihan
- DDEC* Penn-ar-Bed
- Departamant al Liger-Atlantel
- Departamant Aodoù-an-Arvor
- Departamant ar Mor-Bihan
- Departamant Il-ha-Gwilen
- Departamant Penn-ar-Bed
- Deskadurezh Stad
- DGLFLF*
- Dihun
- Divskouarn
- Div Yezh
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh al Liger-Atlantel
- Ensellerezh akademiezh Aodoù-an-Arvor
- Ensellerezh akademiezh ar Mor-Bihan
- Ensellerezh akademiezh Il-ha-Gwilen
- Ensellerezh akademiezh Penn-ar-Bed
- ESSM* Sant-Brieg
- Euskal Herria
- FALSAB*
- Films en Bretagne
- France 3 Ouest
- Institut d'Estudis Occitans hag e gevrennoù
- Kelenn
- Kevread departamant ADMR* Penn-ar-Bed
- KRLB*
- KSDS*
- Kuzul Akademiezh Roazhon ar yezhoù rannvro
- Kuzul Stad
- La Documentation Française
- Le Télégramme
- Llywodraeth Cynulliad Cymru / Welsh Assembly Government
- Mercator
- Mervent
- Ministrerezh an Deskadurezh Stad
- Mirdi Breizh
- Ouest-France
- Pennospital* Douarnenez
- Rannvro Akwitania
- Rannvro Arvern
- Rannvro Breizh
- Rannvro Broioù-al-Liger
- Rannvro Lengadog-Roselhon
- Rannvro Midi-Pyrénées
- Rannvro Provence-Alpes-Côtes-d'Azur
- Rannvro Rhône-Alpes
- Rektoriezh Naoned
- Rektoriezh Roazhon
- Sened
- Skol ar Gellennerien
- Skol-veur Breizh-Izel
- Skol-veur Breizh-Uhel
- Skol-veur Gatolik ar C'hornôg
- Strollegezh Tiriadel Korsika
- Tan ha Dour
- TES*
- Ti ar Vro Kemper
- UBAPAR*
- UDARPA* 29
- UGB*
- Ya!

Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour

Eil danevell hollek
war stad ar brezhoneg

Arsellva ar brezhoneg

2 0 0 2 - 2 0 0 7

Ar pep retañ evit kas ur yezh war-raok eo kaout ur sell klok ha pizh war he stad. N'eo nemet war an diazez solut-se e c'heller sevel politikerezhioù yezh gwirheñvel hag efedus. Bastañ d'an ezhomm-se evit ar brezhoneg eo kefridi servij Arsellva Ofis ar Brezhoneg. An danevell gentañ, bet embannet gentañ e 2002, he deus sikouret da cheñch an doare da bleidiñ gant dazont ar yezh.

An eil danevell hollek-mañ a zeu bremañ da nevesaat diagnostik stad ar brezhoneg. D'en ober, sokioyezhoniourien an Arsellva o deus tennet splot eus ar skiant bet prenet ganto abaoe an danevell gentañ. Taolet o deus ar brasañ evezh ouzh an emdroadurioù diwezhañ (deuet etre 2002 ha 2007 peurgetket) hag ouzh dibarderioù broioù disheñvel Breizh. Troet o deus o selloù ivez war-zu an diavaez (skouerioù talvoudus da lakaat da dalvezout e Breizh) hag an dazont (an emdroadurioù a c'heller gortoz en dazont tost).

Klokoc'h, donoc'h, pishoc'h (ha divyezhek) eo ar stumm nevez-mañ a-benn bezañ ur benveg efedusoc'h da vezañ lakaet etre daouarn ar re a venn kas ar yezh war-raok.



Ofis ar Brezhoneg
8 bis straed Félix Faure
29270 Karaez-Plougêr

Pgz : 02 98 99 30 10
Plr : 02 98 99 30 19

www.ofis-bzh.org

25 €

ISBN: 978-2-914841-18-4

